

J. Guilleminou

J. Guilleminou




Archives et bibliothèque diocésaine de Quimper et Léon

Document numérisé
Source : <http://catholique-quimper.cef.fr/diocese/bibliotheque-et-archives.html>

2011

Feiz ha Breiz



MEULEUDI AR MABIG JEZUZ

Ar Werc'hez, *eme Izaiás*, a zougo hag a c'hano eur Mab hag a vezo anvet Burzudus, Doue, Krenv.

War e zilhad, *eme zant Yann*, e vezo skrivet: Roue ar Rouaned hag Aotrou an Aotroued.

E zaoulagad, *eme Levr ar C'heneleiz*, a vezo kaeroc'h eged ar gwin hag e zent gwennoc'h eged al laez.

E c'halloud, *eme ar roue David*, a en em skigno eus an eil mor d'egile hag eus ar ster betek pennoù pella ar bed; holl rouaned an douar hen azeulo hag holl boblou an douar hen servicho.

134 vloaz goude ha kemm ebel atao !

Breman ez eus pevarzek vloaz ha c'houec'h ugent edo ar Republik kenta o klask lakaat he galloud d'en em astenn war ar Frans a-bez ha war ar broiou stag outi, tu ha tu, an Alzas ha Breiz.

Den ne c'hello hiken niveri mat a-walc'h an torfejou heugus a reas ar wrac'h koz-ze evit lakaat an dud da blega d'ezi. Kement hini a gave an distera abeg en he oberou pe en he c'homzou a oa graet gantan; ne voe ket a-walc'h d'ezi zoken klask trabas ouz an dud: en em gemeret a eure ivez ouz o yezou.

Bertrand Barère de Vieuxac (1) eun dispac'her euzus, harpet gand eskob touer Blois, H. Gregoire, hag eun toullad ailhoned all ker fall hag hen, a c'houlennas d'ar 27 a viz genver 1794 ma vije graet tra pep tra evit diskar raktal an holl yezou, komzet dre ar rouantelez, nemed unan: ar galleg. Henman hepken a dlle beza anavezet hiviziken evit beza yez unik ar Vro: « *la langue nationale* ». Ar yezou all, hag e oa eun tregont bennak anezo, ne jome ganto nemed eun dra da ober: klask eur c'hornig didrouz, en eun tu bennak, en andor, da vervel.

Setu aman petra en devoa Barère da damall d'ar brezoneg ha d'ar yezou all a varne eveldan

(1) Ginidik oa eus a Darb (1735-1841); kaset oa bet evel kannad da Bariz gant ar Pyreneou-Uhela er b. az 1792.

J. Guillemin

d'ar maro: « *Le fédéralisme et la superstition parlent bas-breton; l'émigration et la haine de la République parlent allemand; la contre-révolution parle italien, et le fanatisme parle basque. Brisons ces instruments de dommage et d'erreur. Il vaut mieux instruire que faire traduire, comme si c'était à nous à maintenir ces jargons barbares et ces idiomes grossiers qui ne peuvent plus servir que les fanatiques et les contre-révolutionnaires* ».

Pevarzek vloaz ha c'houec'h ugent a zo tremenet abaoe; ar Republik kenta hag an eil a zo bet diskaret; n'eo ket bet tanet kalz daoulagad ar Vretoned o ouela d'ezo; an trede a zo breman o vlenia kar ar C'houarnamant; war he meno, ne varvo ket; ar pezh a zo sur eo n'he deus ket gelllet trec'hi gouenn.

Selaouit kentoc'h: en Alzas e oa teir pe beder gazetenn moulet en alamaneg, ha n'eo ket souez, p'eo gwir 85 dre 100 eus tud ar vro-ze ne gomzont, nemed alamaneg, kenetrezo, ken alies ha bemdez. Difenn a zo deuet eus a Bariz d'o moula ken. Tud an Alzas o deus youc'het hag en o ano an A. Seltz en deus skrivet, da ober e glemmou, d'an A. Poincare, ar ministr bras a zo e penn ar C'houarnamant.

Evit Poincare, evel evit Barère, n'eus nemed eur yez hag he defe gwir da veva e Frans: ar galleg; setu aman, ger evit ger, petra lavar: « *Quels que puissent être, en effet, la richesse, la saveur et le charme des dialectes germaniques, celtiques, basques ou romans usités dans ses provinces, la France n'a jamais connu qu'une seule langue na-*

tionale, celle dans laquelle trouve son expression, ce génie français, fleur de la synthèse de nos particularismes nationaux ».

Sperejou sebezus evelato eo ar C'hallaoued; ne gavont mat nemed o zraou o-unan; ar galleg a zo eur yez kaer met n'eman ket e-unan; 18.000 all dishenvel dioutan a zo komzet eus an eil penn d'egile d'ar bed; an 18000-ze, ha goude ha ma ne vefent ket ker kaer na ker pinvidik hag hen, o deus gwir da veva evelato, emichans ?

B. Barère a daole dismegans war hor yez; R. Poincaré her golo a vleuniou, met ar varnedigez a zougont warni a zo henvel; mervel a dle.

Pennadureziou a zo, re alies, siouaz, hag e lec'h kemeret skouer war ar Mestr bras a ro d'ezo e c'halloud, ha n'eo nemet furnez ha karantez, a en em harp kentoc'h war an nerz eged war ar furnez.

Ar pezh a zo sur, eur pennad a zo, a gleiz hag a zehou, ne glasker, dre gaer pe dre heg, nemed eun dra, peurvouga ar brezoneg en hor genou.

Embannomp eta, krenfoc'h eget biskoaz, gwiriou hor yez.

Ar Vretoned a zo e Breiz 1500 vloaz a zo hag o gwir kenta evel Bretoned eo ar gwir da gomz brezoneg, dre ma 'z aint, eus an eil penn d'egile d'ar bed, ha d'hen deski d'o bugale en o c'heriou hag en o skoliou. Mat eo d'ar Vretoned deski traou all, da heul,... met ar brezoneg a dle tremen *da genta*; ar gwir-ze en deus ha den ebet, nag e Breiz nag e Pariz, n'hel lammo digantan. Ma karfe an holl wir Vretoned en em voda da youc'hal da gement Judas a zo en dro d'ezo: « Ar brezoneg eo hor yez, — yez hon tud koz, — ar gwella skoued hon eus da ziouall hor feiz, ha rak-se, gand a reoc'h n'it ket da glask

trabas outan ken! » Ar gomz-ze, evel komz ar C'hrist gwechall a lakafe, ne vefe ket pell, da goueza a-stok korf d'an douar, ar C'hallaoued a zo klask hon diskar koulz hag hor c'henvroiz reuzeudik a ro an dourn d'ezo hag a venn gounit arc'hant o werza o Breiz !

**

Kaeroc'h hon eus da ober. Red eo d'eomp dont a-benn, hep dale, da lakat hor yez da veza anavezet evel yez *vroadel Breiz*.

Ne c'heller kaout e Frans, eme an A. Poincaré, nemed eur yez vroadel, unan hepken: « *une seule langue nationale* ».

Ha perak? Broiou all a zo koulsgoude hag o deus meur a hini ha ne 'z a ket falloc'h an traou enno eged aman: er Beljik ez eus diou hag er Suiz ez eus teir.

Er Beljik ez eus diou yez, « *nationales* » o diou: ar galleg hag ar flamankeg; er vro ma komz an dud flamankeg, ar flamankeg a dremen da genta war holl baperou ar C'houarnamant hag ar galleg da eil hag er vro all, ar galleg a deu da genta hag ar flamankeg da eil; en hent-se e kaver an tu da ober ker brao d'an eil yez ha d'eben.

Er Suiz ez eus teir yez vroadel: an alamaneg, ar galleg hag an italianeg: 70 dre 100 a gomz alamaneg, 22 dre 100 a gomz galleg ha 5 dre 100 a gomz italianeg.

Ha p'eo gwir er Suiz, bro a 3.315.443 e c'heller kaout teir yez vroadel petra virfe ouz Alsasiz hag ouz Breiziz da gaout diou?

Ne c'heller kemeret evit yezou broadel, eme an

A. Poincare, nemed ar yezou a zo komzet en tu-man da harzou ar vro « *exclusivement à l'intérieur de nos frontières* »!

Sebezus eo klevet eun hevelep tra o koueza eus genou eun hevelep den.

Ma vije diouz an dra-ze e vije, ar Beljik n'he divije ket gellet kaout yez vroadel ebet rak ar galleg a zo komzet e Frans, hag er C'hanada hag ar flamankeg a zo komzet er Holland, e traon an Afrik hag e Hanter Noz ar Frans; nak ar Suiz, ken nebeut, n'he divije ket gellet kaout yez vroadel ebet, p'eo gwir an Alamaneg eo yez vroadel an Alamagn; ar galleg hini ar Frans hag an italianeg, hini an Itali!

Evit beza mat eo red kaout, en eur Stad, ken alies a yez vroadel hag a bobl dishenvel a zo ennni o veva; a hent all e vo trouz atao en em tu pe du, rak ar poblou bihana koulz hag ar re vrasa o deus gwir da viret o yez. Ma tigouez gand an dra-ze en em gaout, neuze, pelloc'h, e kredimp n'eman ket ken ar C'hallaoued o klask hon *divrezonega*, ha ne welan ket petra o defe ar re-man da goll o tremen, eun tamm, diouzomp; met tud a zo ha ne anzavont ket buan o faziou ha goude m'o diskouesfet d'ezo gand ar biz.

Gand a raimp da vihanan, daoust d'ar gourdrouzou, arabad eo d'eomp kaout aoun oc'h embann hor gwir, rak n'eus nemet an hini ha n'en deus ket a aoun hag a vefe gouest da ober aoun d'ar re all.

Y.-V. PERROT.

Buhez an Tad Julian Maner

Jezuist ha misioner (1606-1683)

I

Ar bloaveziou kenta (1606-1625)

Mikael an Nobletz, o welet e tostae d'ezan ar gozni, skuiz, dinerzet, o sonjal e teufe avel fall da freuza ar pez en doa graet, a hirvoude hag a bede an Aotrou Doue da gaout truez ouz Breiz.

« Va Doue emezan, n'ankounac'hait ket ar bro-mesa hoc'h eus graet d'in, breman zo 17 vloaz, da zigas eun Tad Jezuist da labourat ganen ha war va lerc'h er vro-man a zo beuzet, eur pennad zo, e tenvalijenn ar maro... Mamm a drugarez, hoc'h eus va diwallet abaoe va bloaveziou kenta, kinnig va goulenn d'ho Mab Jezus, ma vezin selaouet, rak gloar ho Mab ha silvidigez an eneo eo a glas-kan ».

A vec'h en doa peurc'hraet e bedenn, ma klevas eur vouez o lavaret d'ezan: « It da Gemper, da sko-Iaj an Tadou Jezuisted. Eno eman an hini a zo dibabet gant Doue evit ho sikour ha kenderc'hel ar misionou e Breiz. Ar yaouanka eo eus ar gelennerien ».

Kement-man a dremene e miz du 1630, e Douarnenez. Antronoz, mintin mat, Mikael en em lakae en hent da vont da Gemper. Digouezet e ti ar Jezuisted, e c'houlennas mestr-kelenner ar pempvet klas. Dont a reas eun Tad yaouank n'en doa c'hoaz nemet 24 bloaz, doare vat d'ezan, merk ar zantelez war e zremm. An Tad Maner oa, Mikael an Nobletz

ne jomas ket pell gantan; ne lavaras ger d'ezan eus ar pezh a anaveze a-berz Doue, ne gomzas ket eus ar misionou, eus ar fizians en doa d'e welet o tont en e lec'h.

Eur ger bennak divarbenn karet ha servicha Doue, setu hepken ar pezh a voe etrezo en derveze. A-walc'h oa evit Mikael. Beza gwelet an Tad Maner, gouzout ez oa unan dibabet gant Doue da genderc'hel ar misionou, an dra-ze a garge e galon a levenez, hag eürus bras oa o tistrei da Zouarnenez.

An hini a dlle beza roet gant Doue da zerc'hel lec'h Mikael an Nobletz a zeuas er bed d'ar 1 a here 1606, e Sant-Jorj-Reitembault, eur vourc'h vras eus eskopti Raouzou, var harzou Breiz hag an Normandi. Gwelet a c'heller c'hoaz eul lodenn eus an ti m'eo bet ganet ennan an Tad maner.

Izaak Maner oa e dad hag e vamm Gabriela Deloris. N'oant ket pinvidik, met kristenien vat, karantezus, a ranne gand ar paour an arc'hant a c'hounezent gand o zammig kemm-werz. O ziegez a voe benniget gant Doue a roas d'ezo eleiz a vugale. An tri genta a oa tri baotr; da c'houde e teuas diou verc'h. Ar c'hosa, Julian, a varyas d'an oad a 12 vloaz. Ar gerent a roas an hano a Julian d'ar c'henta paotr a c'hanas d'ezo, da c'houde, ha deiz e vadiziant e voe vouestlet ganto da Zoue evit beza beleg.

Savet en eun ti kristen, gant kerent a oa kristenien eus an dibab, Julian Maner a zantas abred en e galon karantez Doue, ha bihanik c'hoaz e roas d'ar vugale eus e oad kenteliou ha skoueriou santel. Boda a rae ar vugale vihan eus ar vourc'h hag ez ae ganto e prosesion, var diou renk, betek

Kroaz al Lenn. Eno o lake var o daoulin hag e lavare eur bedenn pe e kane eur c'hantig. A-wechou all e vezent kaset gantan d'an iliz; en iliz e pigne er gador da lavaret ar Bater, an Ave, ar Grede.

Diouz ar mintin, pa zone klóc'h an oferenn, e rede d'an iliz hag e kleve an oferenn gant joa.

D'e nao bloaz e resevas e Fougères sakramant ar Gonfirmasion.

O welet Julian ker mat da bedi, ker santel, eur beleg eus ar barrez a lavaras d'ar gerent: « Me em eus c'hoant deski latin d'ho mab, rak hennez a zo danvez eur beleg ennan ». Ar gerent a voe laouen, rak n'o doa ken c'hoant nemet gwelet o mab o vont da veleg. Abenn eun nebeut amzer ar paotr a voe kavet desket a-walc'h evit beza laket e skolaj ar Jezusted e Raouzou. D'e 14 vloaz edo er pe-vare klas. Labourat mat a rae ha mat oa ive da bedi; digemeret e voe e Breuriez ar Werc'hez Vari.

Skolaj Roazou a oa brudet meurbet; 1500 bennak a oa ennan a skolaerien. Julian Maner, spe-red lemm, mat da boania, a oa unan eus ar re wella en e glas. Hag o veza m'oa ive habask, leun a vadeléz, oa karet gand an holl. Kement-se a roe tro d'ezan d'ober vad d'ar skolaerien all. An darn vrasa eus ar skolaerien a veve e ker, n'ez eant d'ar skolaj nemet evid ar c'hlas, ha kement-se n'eo ket mat mat. Ar vugale hag an dud yaouank a dle beza taolet evez varno gand o c'herent pe gand o mистри. Ma vezont lezet o-unan, emaint e riskl d'en em goll. Julian Maner a welas endro d'ezan meur a dra fall, hag e poanias da zistrei divar hent an droug ar re o doa eur vuhez diroll. Ma wele etre daouarn unan bennak eul levr divalo, e lavare d'e-

zan e zevi. Pellaat a rae ive diouz an ostaleriou ar re a veve gantan, hag oc'h ober evelse, o rei skouer vat hag aliou mat, e komansas da zavetei eneou.

E Dad kovesour, o welet e zantelez, a c'houlennas eun deiz digantan ha ne garfe ket beza misioner. « Nag a eneou, a lavare ar beleg, a zo kollet a-hont, dre n'eus ket a visionerien a-walc'h. » — « Va digemerit e Urz ar Jezuisted, a respontas ker-kent Julian, hag ez in war nij da gas sikour d'ar bayaned ».

Er c'houlse an Tad Koton, Jezuist eus Paris, ensellour ar skoliou, a zeuas d'ober eun dro da skolaj Raouzoun. Julian Maner a yeas d'e gaout da c'houlenn beza digemeret en Urz. O welet eun den yaoutank stummet ker brao, doare ker santel d'ezan, an Tad Koton a lavaras : « Digemeret e vezot pa garot. N'hoc'h eus nemet mont da Baris da leandi ar Jezuisted, e sant Jermen ».

Julian Maner, laouen holl, a c'houlennas aotre e gerent. Poania a rankas evit kaout e c'houlenn. Met kerkent ha ma voe aotreet, ec'h en em lakeas en hent etrezek Paris.

Y. U.

Ar Zantig Du



Eur gwall daol a c'hoarvezas gwechall gand eur roue eus a Vreiz. Ar Zaozon a oa deuet d'ezan ha koll a reas ganto. E gêr veur a gouezas etre o daouarn hag eur reuz spontus a voe graet enni. Ti ar Roue ne voe ket espernet, hag eun tamm brao a gempenn a voe graet d'ezan. Eur bern paperiou koz a voe kavet hag an ofiser bras a roas urz d'o c'has da Vro-Zaoz:

— « Eun tamm-boued dispar, emezan, evit spe-rejou lemm an dud desket du-man. »

Unan eus an doktored, goude beza graet eur gwall grogad war eur baperenn goz-koz, a deuas abenn da zistripa kement-man:

— « Eur wech bep kant vloaz, Roc'h Trevezel, e Breiz Vihan, a zigor he beg, epad eur c'hard eur, d'an deiz kenta eus a loar veurz, war an tól a greisdeiz. An hini en defe eur galon dispoint a-walc'h da vont en he c'heo, a gavfe eur mellad tenzor bras. Met c'hoari buan, avat a ranker, rak, ar menez a deu da zerri krenn eur wech aet ar c'hard eur ebou, hag an dra-ze evit kant vloaz adarre. Ouspenn-ze, an tenzor n'hell beza kavet nemet gant eur paotrig hag a achu d'ezan e bem-zek vloaz en deiz-se. Den all ne welfe seurt. »

« Sed aman, avat, eme an doktor, ha n'eo ket fall; gwelomp peur e tigor ar menez e veg... Met, er bloaz-man eo eün hag eün... Hag hepdale e'hoaz, rag emaoamp e fin miz c'houevrer... Petra rin-me ? Mont ? chom hep mont ? »

Pell a-walc'h e voe hon den evid ober e zonz.

« Deomp, a lavaras hen, a benn ar fin. Talvezout a ra an taol. »

Neb n'avantur netra,

Na koll, na gounit ne ra !

Pignat a reas war eur vag ha dao da Vrest: eur gêr vras a oa anezi neuze kenkouls ha breman. Hor paotr a gonte d'an neb a gare, e oa deut d'ober gweladenn da Vreiz ha c'hoant bras d'ezan da gaout unan bennak da ober hent gantan. Mont a rae da zellet ouz ar vugale hag ar yaouankiz, da vat, o c'hoari war dachennou hag henchou ker. Goulenn a rae diganto peur e oant ganet. Ne oa ket aes kaout unan mat da vont da c'houilia ar roc'h; a-bouez klask, koulskoude, e kouezas plomm war eur c'hrennard a echue d'ezan e 15 vloaz, da loar Veurz: Loranz, e ano. Eur pôtr a zoare a oa anezan; e vamm a oa eun intanvez paour a-walc'h gant eun tammig kemwerz « legumaj » hepken evid en em denna.

An doktor saoz a ginnigas d'ar vaouez eun dournad mat a arc'hant hag houman en distro a roas d'ezan he faotr, epad eur miz, amzer a-walc'h da ober gantan eur valeadenn gaer.

Setu-int en hent. Mont a rejont dre Blouziry, Sizun, ha Komanna. Hep dale e oant e tal Roc'h Trevezel, d'an devez kenta eus al loar veurz... Da c'hortoz kreisteiz an daou dremenriad a lakas eur c'hornad butun, e traon ar roc'h; o lagad a c'helle muzula Bro-Leon a-bez, adalek Kastell-Paol, tre betek Lok-Maze Penn-ar-bed.

Ne oa ket kalz a amzer da goll. Ar Zaoz a zisplegas, piz ha piz, da Loranz dre belec'h trei ha distrei; e labour ne oa ket re ziaes: mont en toull, kerkent ha ma vije digor ar roc'h, furchal, prim ha prim, dre gement korn, ha dilamma, buan er mêz, gand ar pezh en dije kavet. Grig ebed, avat, diwarbenn ar riskl bras a oa da veza tapet e faout ar roc'h, ma vije bet divalo gant e droiou.



Gant taol kenta an Angelus e bourc'h Komanna e voe klevet egiz eun tarz kurun-spontus. Eur faout a oa e kreiz ar Roc'h: ne oa ken nemet mont ebarz. Ar pez a reas Loranz, ken dispont ha tra. Rak n'eo ket kalon a rae diouer d'ezan. D'arzelladenn genta, netra ne skoas gant lagad ar paotr. Tammig ha tammig, e kement-se, an denvalijenn a golle eus he nerz ha Loranz a welas dirazan eur melli bern avalou. Tanva a reas unan anezo. Ne oa ket re fall; teurel a reas e zent war eun eil hag eun trede. Neuze e teuas da welet e oa eur gambr all adrenv hag enni per eus ar vegenn. Eur c'hovad mat a reas hon pôtr eus ar re-man. Berr a-walc'h e kave e amzer, emichans, rak ne oa ano ebed gantan c'hoaz da zont war e giz na da furchal evit mat pa zraskas ar menez adarre... Sarret ar Roc'h !! Eur c'hard eur a oa edo Loranz en toull.

Lavaret peseurd penn a oa war ar zaoz ermêz ne dalv ket ar boan. Ne oa louzou ebed ouz eur seurt taol. Kenkoulez e oa mont kuit. Setu an doktor d'ar gêr. N'en doa c'hoant ebed da vont da gas kelou ar maro da vamm Loranz. War Vontroulez e fustas dioustu ha gant ar c'henta hag a gavas e tec'has da Vro-Zaoz, bihan e galon ha tenval e benn.

Epad an amzer-ze, Loranz paour, en e doull tenval, kaer en doa hopal ha lenva, ne z'ae ket gwelloc'h an traou gantan. Aet skuiz o klemm, abenn ar fin, ec'h en em zonzas: « N'emaon ket o vont da vervel dioustu c'hoaz... Kavet e vo per hag avalou evit eur c'hrogadig mat. Piou oar, marteze e teuyo eur c'hristen bennak da doulla warnon. Allo, ma fôtr, eun tammig kalon ! »

Ober a reas Loranz, eus e wella, evid astenn ar bevans. Met allaz! Dont a ra fin d'ar boued eur mare bennak egiz da hep tra. E oa ar paotr o tastum an aval diweza pa zantas eun tamm koad o tarc'hoi gant e zourn. Her flac'hota a reas, penn da benn. « Skeudenn eur zant a vefe lavaret, eme Lauranz ». E oa e zourn war e zremm, pa glevas eur vouez :

Lamm-an-Nec'h

Petra ' fot d'ec'h?

— Va c'has ermez eus an toull-man, a respontas ar pôtr hep marc'hata. Ha kerkent e oa ermez, azezet war ar roc'h, beuzet gant sklerijenn an heol benniget. Ar zant a oa gantan etre e ziouvrec'h.

— O sant galloudus, c'houi hag ho peus save-teet d'in ma zamm buhez, trugarez d'eoc'h, trugarez; met n'hellfec'h ket va c'has da di va mamm? »

Ha Loranz da floura d'ezan e benn:

Lamm-an-Nec'h
Petra ' fot d'ec'h?

— Mont da Vrest, da di va mamm
Kerkent e oa dirak stalig e vamm, e Rekouvrans
Brest.

Mont a reas en ti. Ar vaouez paour a gredas kaout eun tasman dirag he daoulagad. Eviti Loranz a oa maro ha lenva a-walc'h a rae d'ezan. Pa c'hellas dastum en dro he zamm spered mat ha selaou he mab o konta e blanedenn, ar vamm a zournaz a bep seurt traou a-eneb ar Zaoz fallakr :

Grit peoc'h war an den-ze, eme Loranz. N'en deus ket hol laosket gant netra. Gwelet a reoc'h bremaik.

— O sant galloudus, me a garfe kaout eur bern arc'hant.

Kerkent edo an arc'hant war an dól.

— O sant mat, me a garfe kaout eun ti nevez. Raktal kaset an ti koz da glask pesked er mor bras hag ar vamm gant he fotr o trei hag o tistrei ebarz eun ti nevez-flamm, brao ha kempenn.

— Setu ni pinvidik, eme Loranz, C'houi, mamm, tól-labour ebet ken; dilhad kaer war ho kein. C'houi zo breman intron. Me a zo aotrou. Red e vo d'in mont d'ar skol ha mont a rin. Ne garfen ket beza warlerc'h gant bugale an dudchêntil nag evit an deskadurez nag evit netra. »

Ar zantig du a rae burzudou bras eta. Ne oa nemet floura d'ezan e benn hag ho poa digantan ne vern petra.

Ar vamm baour aet da intron ne bakas ket an toniou bras, d'an tol kenta. Eur mare bennak



koulskoude e teskas rodal he lostenn e giz ar re all. Loranz, er skol a c'hoarie prim. Deski mat a rae. E aotrou bras a rae ive. Hag eur bern mignoned a stoue dirag ar steredenn nevez. Echu gantan e driouec'h vloaz, e lavaras d'ar zant sevel d'ezan etal Roc'h Trévezel eur maner ken kaer hag hini Roc'h Voriz pe ar Penhoad. En eur ober eun nosvez, e voe gwelet ar c'hastell o tont ermez eus an douar gant e douriou hag e vogeriou. Loranz hag e vamm a vevras brao eno e mesk ar splanderiou.



Mat e oant ouz ar beorien hag o ano a oa benniget gant an holl. Pa zavas gant ar pôtr yaouank c'hoant bras da zimezi e taolas e zibab war eur plac'h yaouank eus eur maner demdost eno: eur verc'h vat ha kerent renket... Mat ez' eas an traou: Dimezi da gaout!

E Plouneour-Menez e voe an eured hag eun eured, me respont d'eoc'h!.. Evet e voe, an dra-man n'eo ket geier, 500 barrikennad win; implijet e voe 100 karrad kig eus a bep seurd. Tad koz tad kuniv va mammig koz a oa eus an abadenn ha gant houman em eus klevet ar pez a dremenas.

An intron nevez a oa eur vaouez kempenn; kalz urz en dro d'ezi. Loranz n'en doa lavaret morse netra dirazi diwarbenn ar Zantig du. Henman a oa en eur c'hornig tro eus e gambr oc'h en em gem-penn. Eun dervez ma oa aet Loranz d'ar chase, an intron a gouezas he daouarn war ar zant.

Petra 'eo an tamm koad brein-man? emezi. Loranz a dlefe heñ teurel kwit; gortoz ma rin d'an Aotrou eur zapaturadenn vrag.

Hag hi roi urz d'ar plac'h da vont d'ar chapel da gerc'hat ar zant Loranz nevez a oa enni. Setu ma rankas ar zantig du rei e zilez ha tec'het kwit dirag unan all bravoc'h da welet ha da gaout.

— Gañt, eme an Intron, ma teu ar pilhaouer, c'houi a roio ar zant koz d'ezan hag ho po marteze eun nebeud gwenneien!

Loranz, distro eus ar chase ne wele liou ebed ken eus ar zantig. Kemend a zroug a 'z eas raktal ennan ma kinnigas rei lopou d'an intron. Ar pilhaouer, dre eun tol chans, ne oa ket aet pell, setu ma teuas e denzor d'an ôtrou d'ar ger. Met pa c'hoanteas Loranz, goude, kaout, n'ouzon dare petra, e voe respontet d'ezan:

Lamm an Nec'h, n'hellan mui netra evidoc'h. Gouest oun bet epad pemp bloaz. Tennet eo diganin va nerz, breman. Mont a ran d'ar Roc'h en dro. Chans da unan bennag da lakat an dourn warnoun abenn kant vloaz aman. Graet e vo d'ezan egiz d'eoc'h. Ne 'z an ket kuit va unan avat. Mont a ran ganin ho kastell hag ho tenzoriou. Ne c'homo ganeoc'h nemed ho meritou hag hoc'h oberiou mat. Met n'ho peus kef da gaout kerse d'ho tanvez kollet. Pa vezoc'h distroet en dro d'ho renk kenta,

c'houi labouro kalonek, hag ho po eureusted padusoc'h eget an hini a dennan hirio diganeoc'h.




Abenn an dervez warlerc'h, diouz ar mintin, kastell ha liorzou a oa skubet holl-rac'h diwar beg ar Menez. Ne chomas nemed eur verouri vihan ; Loran a stagas da labourat he douar, bec'h ebed war e spered. D'ober petra en em chala? Konforti a reas ivez e vamm hag e bried hag o zri e vevjont eurus-bras diouz o micher nevez. Bugale a deuas da laouennât an ti ha morse Bennoz Doue ne dec'has diwarnan. Ne oa kerse ebed ken da denzoriou ar zantig du, nijellet kwit ken buan!

G. M.

BERVEN

En hanter 'n hent, koulz lavaret, etre Kastell-Paol ha Lesneven, war unan eus noasa hag edusa



Gwaregeler a enor Berven

tosennou Gorre-Leon, eman Berven. Tour he chapel a weler hag e vezer c'hoaz pell dioutan; dis-henvel a-grenn eo diouz e amezeien, ha, diouz eur gwel, e lavarfed e vefe kar tost da douriou ar Spagn ha da Giralda Sevilla.

Ne anavezer netra ebet war Verven a-raok ar XVI^{es} kantved. An A. Loth a lavar ez eus bet eur zant Bervenn pe Berthgwynn hag a oa eskob e Llandaff, e Kembre.

War a lavar ar re goz ez eus bet Menec'h Ruz o chom e Berven. E Meaz-Minihy eo ez edont o chom. Breman ez eus tri ugent vloaz e weled c'hoaz pennadou eus a vogeriou iliz koz ar venec'h-ze; ar vein-ze zoken a zo bet kemeret abaoe da zevel fraou all.

Er bloaz 1563 e tigouezas burzudou ha pareansou en dro d'ar feunteun a rede e kichen ar c'hroazhent. Kement-se, eme an Tad Kyrill ar Penneg a zihunas feiz tud ar vro hag en eur vodadeg a rejont er bloavez-ze, d'an 18 a viz gouere, ec'h en em glevjont da zevel eur chapel en enor d'ar Werc'hez. Ar chapelig-ze, anvet ar Penity, a zo c'hoaz en he sav, e tu ar c'hreizteiz d'ar chapel vras ha kement a dud a deuas da bedi enni ha profou ker bras a rojont d'ar Werc'hez ma voe gellet staga da zevel eur chapel all, kalz kaeroc'h ha kalz brasoc'h, hep dale, p'eo gwir an tour a zoug eo bet graet er bloaz 1567.

War a leverer, ar re a oa o labourat war ar chapel o devoa mil boan o kaout o bevans; n'oant ket evid kaout laez hag an diouer-ze oa an hini m'en em glemment ar muia anezan. Eur baourez eus a Gervojan ha n'he devoa nemed eur veoc'h a gemeras truez outo hag a roas d'ezo kement banne laez a c'helle kaout: tra souezus, daoust pegen niverus e oant, ar veoc'h a roe laez a-walc'h d'o maga holl ha setu perak e voe livet skeudenn ar veoc'higvat-se war lambrusk ar chapel; gwasas pezas a zo, unan pe unan eus personed Gwitevede en deus la-

ket lemmel ar skeudenn-ze da heul kalz a re all hag a oa bet livet ivez war al lambrusk.

Eur chapel vras ha kaer eo chapel Berven; an tour, dreist-holl, a zo dispar; henvel mat eo ouz hini Roskov ha red eo ma vijent bet graet gand an hevelep mestr. War dal an tour e weler eur skoued bet torret gant hailhoned an Dispac'h; daoust da ze; e c'heller anaout warnan c'hoaz evelato, armou aotroned Kervaon a oa o chom e maner ar Seiz Ploue bet anvet diwezatoc'h maner ar Maillé.


Gwaregeier a enor a zo atao, a-zioc'h an teir dor henvel a zigor hent da vont er vered; ar voger a ra an dro d'ar vered a zo eur skaon vaen outi d'ar bardonerien da ziskuiza.

Ar pezas a zo a gaera er chapel eo ar c'heur hag ar speurenn a ra an dro d'ezan hag e weler war he banellou ar Vadalen, gant he fodad louzou c'houez vat: santez Barba, gant he zour; santez Jenovefa, gant he goulaouenn; santez Apollina gant he zurkez a zalc'h krog c'hoaz en dant emaeer o paouez tenna d'ezi; santez Agatha, gant he bleo fuilhet war he diouskoaz hag he c'hleze; sant Berthele, gand e gountell; sant Jalm, gand e vaz a bardoner; sant Andre, gand e groaz; sant Paol, gand e gleze; sant Per, gand e alc'houez; war an talbenn e kaver ar C'hrist, stag ouz ar groaz, ar Werc'hez ha sant Yann, a bep tu d'ezan; a-zioc'h an nor e lenner 1601.

Er c'heur ez eus skebell kaer kizellet e dero kallet ar vro. An aoter vras a zo e maen; eur c'heo a zo dindanni hag e oa dereziou da zisken ennan gwechall; aotroned Kerham, war a greder, a vez e sebeliet eno; an dud a lavar zoken ez eus eun hent

dindan zouar hag a en em gav eno hag a deue eus a gastell Keryann.

E chapel an tu kleiz d'an aoter vras eman Itron Varia Verven, eur Werc'hez hag a zoug he mabig hag a zo, en he sav, war eun hanter loar, gant bannou alaouret a-dre he he c'hein, eur rozenn e penn pep hini anezo; en daou du d'ezi eman skourrou gwezenn Jesse ha wat stalafou an armel eman enni an Itron Varia ez eus kizellet taolennou tennet eus an Aviel hag e fisklerier enno buhez ar



Chapel Berven

Werc'hez adalek deiz ar c'helou mat betek gini-velez he Mab.



I. V. Verven

E chapel an tu dehou eman sant Alar gand eur morzol en e zourn hag eul loenig, en e gichen; war banellou an armel e weler taolennou da ziskleria buhez eskob Noyon ha dreist holl istor ar marc'h e trouc'has sant Alar e c'har outan d'hen houarna aesoc'h a-ze hag hini an tan gwall a vougas dre e beden-nou.

Ar skeudennou e vez pedet ar muia dirazo c'hoaz eo an Itron Varia a druez a zo er c'heur hag a zav, er vann, eur galon treuzet gant tri gleze, an Drinded ha san-tez Katell. Ne gaver skeudenn sant breizat ebet er chapel gaer-ze; nann hini, ha koulsgoude sant Herve a zo bet ganet, harp eno, e parrez Gwitevede, e maner Lanrigour, — a anver breman Lanrioul, — el lec'h ma 'z eus c'hoaz eun dachenn zouar hag a anver atao beredig sant Herve.

Itron Varia ar Peniti a zo lezanvet Itron Varia an Delivrans ha kalz tud, dre ar vro a-bez, a deu d'en em erbedi outi. War ar c'hoad a c'holo mogerioù he chapel hag a zo bet livet er bloaz 1676 e weler briadou bleuniou a bep seurt liou. En tu dehou eman santez Anna, gand ar Werc'hez hag ar Mabig Jezuz.

Ar bardonerien o deus lezet er chapel-ze merkou eus o anaoudegez vat. Itron al Leskoet, eus a Gastell Kernaou, e kichenik Lesneven, o veza ma ne c'helle bale nemet gant branellou a deuas di da bardona hag a voe parëet da vat; lezel a eure he branellou er Penity hag o c'haout a raer eno atao.



Maner Kerham e Gwitevede

Epad amzer drist an Dispac'h, dreist-holl, e miz meurzh 1793, e tigouezas traou skrijus e Berven ha tro-war-dro.

Gwasket e oa neuze ar Vretoned gant paotred Pariz en eun doare sebezus; tennet e oa diganto o beleien; laeret e oa madou o ilizou; kresket e oa o zailhou; kement tra a werzent a rankent da rei koulz lavaret evit netra; met, ar pezh o lakeas da vont anezo o unan oa al *lezenn nevez graet evit kas o zud yaouank da zoudarded*: betek neuze ne 'z ae da zoudarded nemed ar re a gare ha breman e c'houlennet diouz ar yaouankiz mont holl a-bell, ha dioc'h-tu, da zervieha Gouarnamant Pariz.

Bro-Leon a nac'has a-grenn plega d'al lezenn-ze : « Ni, eme baotred Kastell-Paol, a 'z aio laouen da zoudarded, ya, ma vezomp lezet en hor bro!

Ar banniel gwenn a voe staget e beg tour Berven hag an tan a zigoras, adalek Lannilis tre betek Kastell-Paol.

An A. Caroff, bet person e Gwitevede, war ar paperou a zo chomet eus e zilerc'h a lavar en deus anavezet an toer koz a oa bet pignet, p'edo c'hoaz yaouank flamm, e beg tour Berven da staga outan ar banniel gwenn.

An daou a oa e penn ar re a glasse enebi ouz an Dispac'h oa Yann Brigent, maer Gwitevede hag Olier Mesguen, barner a beoc'h.

Yann ar Rouz hag e vreur Job a veze o redet ar vro, var varc'h hag o kas an urziou; Paol Inizan eus a Winevez a roe an dourn d'ezo ivez, eus e welta; eur mab bihan d'ezan. Lan, eur beleg, a zavas eul levr war an dispac'h, a anvas *Emgann Kergidu*; al levr-ze, skrivet kaer, n'eus ennan koulz lavaret nemet *marvailhou*, hag a dalv nebeud a dra pa vez c'hoant da c'houzout an istor, e gwirionez.

Gwelet a raer c'hoaz, e kichen Meskantou, ar groaz e pigne, war he chichen, Yann Brigent, da gelenn e dud; siouaz, tapet e voe, dre laer, d'ar 24 a viz meurzh 1793, e Berven, gand ar general Canclaux, (1) a oa deuet fenez, eus a Landerne gand soudarded ha kanoliou; an 300 den a oa dindan e urziou a dec'has hag e chomas e-unan penn etre daouarn ar C'hallaoued.

Canclaux a yeas neuze da Gergidu; mall oa d'ezan en em gaout rak anez soudarded ar C'halva-

(1) Eur gall, bet ganet e Paris, er bloaz 1740 ha marvet eno er bloaz 1817.

dos a deue eus a Gastell-Paol d'e ziambroug a oa graet ganto; neuze ar C'hallaoued a zailhas gand o armou gwenn war ar Vretoned: ar re-man pa n'o devoa ket a armou evit stourm evelse a rankas plega. C'hoüec'h eur bennak e oa bet padet ar stourmad; eleiz a Vretoned a gouezas eno o tifenn o gwiriou hag o frankiz.

D'ar 27 a viz meurz ar peoc'h a oa sinet etre ar jeneral Canclaux ha Gwitevede. Berniou arc'hant a voe red rei d'ar C'hallaoued; Gwitevede ha Sant Noug a hepken a rankas rei 13.632 lur, ar pez a dalvesfe, da nebeuta, dek gwech muioc'h en deiz a hizio. (1) Holl gloc'herien ar vro a voe kaset d'ar prizion evit beza sonet kloc'h ar brezel; ar c'hleier a voe diskennet eus an touriou; ha doriou an touriou a voe mansonet.

Yann Brigent a voe dibennet, war blasenn vras Lesneven, d'an 23 a viz ebrel warlerc'h ha chapel Berven a deuas da veza eur c'hazarn d'ar zoudar-


(1) Setu aman petra rankas rei ar parrezioù all.

Plouguerne ha Treimenac'h.....	11.000	lur.
Gwiniventer	9.000	
Plouzeniel	7.000	
Gwiseny	7.000	
Kerlouan	5.000	
Kernilis ha Lanarvily	500	
Sant Fregan	250	
Sant Servez	250	
Plouénan	2.000	
Plouvorn	13.000	
Plougoulm	13.450	
Sibiril	9.000	
Trelaouennan	600	
Plouescat	6.000	
Cleder	13.450	

ded a veze o vont hag o tont etre Brest ha Kastell-Paol; ar zoudardez-ze a reas tan er chapel ha gwelet a raer c'hoaz an duad chomet eus o dilerc'h ouz traon darn eus ar pilieri.

Eur maer ker kalonek ha Yann Brigent hag a roas e vuhez o klask difenn frankizou Breiz a zolleet sevel eun dra bennak en e enor, da vihanan, e Berven, evit ma chomo anavezet e vrud hag e ano, da virviken, etouez ar Vretoned.

G. P.



Tour Berven

Pajennad Breuriez-Veur ar Brezoneg

An den eurus Glaoda Laporte, skrivet e galleg gand an aotrou Saluden, ha trôet e brezoneg gand an aotrou Chapalain, Brest, mouleret ar C'hastell, 4.

**

En e brezegenn d'ar *Vleun-Brug*, d'an 13 a wengolo, e lavaras an aotrou abad Gantois ar c'homzou-man: « Breiz, petra a dleit da gaout a-benn adsevel Breiz? — Da genta, eur yez vrezonek unvan; — d'an eil, eul lennegezh vrezonek diouz an amzer-vreman, enni dreist-holl peziou-c'hoari ledan a spered ha frank a ratoz; — d'an trede, *ijinou-kaer dtouanet diouz ene Breiz*, er penn kenta eur sonouriez peurvreizek; — da ziweza, eur *gelennadurzh vrôadel d'ar vugale*, gouest da zihuni en o c'hreiz ene Breiz ha da enaoui en o spered meizidigez reiz o Istor gwirion.

Meuli a dleomp an aotrou Chapalain evit beza taolet dourn da zeveni an eil eus ar mennadou-ze: sevel eul lennegezh vrezonek diouz an amzer-vreman. Dre drei e brezoneg eul levr a bouez en deus graet diouz pinvidikaat hag uhelaat hol lennegezh vrôadel.

A zo gwell, meizet mat en deus e tleer gwiska ar menozioù-breman e gerioù stummet diouto. N'en deus ket kilet rag ar gerioù dereat-se, o vont d'o c'hask er yez lennek pe zoken ouz o c'hroui e-unan, da skouer: evit « délibération du conseil municipal » *kuzuliadeg ti-ker*, « supérieurs » *prioted*, « Assemblée Constituante » *bodad kenreizek (kenreiza kentoc'h)*, « cavalcade » *marc'hekadenn (marc'hekadeg kentoc'h)*, « élection » *dilennerez (hogen dilennadenn pe dilennadeg « une élection »)*, « protestation » *enebiez (hogen enebadenn, enebadeg « une protestation »)*, « utopistes » *sorc'hennerien*, hag all.

**

Pa drôer galleg e brezoneg ez eus da ziwall piz diouz troiou ha doareoù gallek na zereont tamm ebet ouz hor

yez-ni. An aotrou Chapalain n'en deus ket her gwelet a-walc'h hag eno eman si e labour.

Da genta, ar gevreadurezh (syntaxe), pouezusa tra a zo en eur yez, p'en em sked enni ene ar Ouenn. Urz ar galleg, stummet diouz spered ar c'hallegerien, eo ar pezh a hanvent « l'ordre logique »: ar ger-rener (sujet) da genta. Urz ar c'heltieg, — hon « ordre logique » -ni, — eo ar *verb da genta*. El lavarennou-suj (subordonnées) eo en em ziskouez en o splanna an daou urziadur dishenvel-se. Hogen, e pep pajennad, kouls lavarout, eus al levr nevez e welomp urz ar galleg e lec'h hon urz keltiek. Pounnerat taol d'ar yez ma teufe ar wall-skouer-ze da veza heuliet! Setu aman skouerioù: *holl e lavaront an eskob hanvet er c'hiz-se a vo chismatik (e lec'h e vo chismatik an eskob.)*, *lavaret a reer d'ezo ar feiz a zo gwall-gaset (e lec'h eman gwall-gaset ar feiz)*, *kredi a heller unan bennak en do keuz (e lec'h en do keuz unan bennak)...*

Ouspenn m'eman ar verbou harluet diouz o lec'h reiz hervez hon urz vrezonek, e reer d'ezo kenglota diouz doare ar c'hallegerien en eneb adarre da voaz ar brezoneg: *N'oant ket heb aon renerien an Departamant (e lec'h n'oa ket...)*, *n'int ket disant ouz al lezenn ar veleien (e lec'h n'eo ket...)*, hag all.

Reiz an hanoioù ivez a zo distreset pen-da-benn diouz skouer doare an hanoioù gallek: an *Dispac'h vras (e lec'h vras)*, an *urz... ennan (e lec'h enni)*, ar *ward vrôaded (e lec'h ar ward brôadel)*, *diou gae (ad) soudarded (e lec'h daou...)*. A-wechou e vez graet eur ger eus an diou reiz war eun dro en hevelep frazenn: ar *c'houarnamant... d'ezan*, ar *Bobl douget dreizan e-unan*.

**

Eur gwall-bleg hag a denn, evel an distresa kevreadur, da zismantra ar yez eo an ober a-dreuz gand an araogennou. Ker pouezus pe dost eo rôll an araogennou e brezoneg hag e saozneg, pouezusoc'h a galz ha reisoc'h eged e galleg. Ne oar ket al levr nevez ober gand an araogennou: *evit a gemer e lec'h ouz, diouz*, diouz giz ar c'hallegerien pa lavaront « un remède pour la toux » e lec'h « *contre la toux* ». Eus a deu gantan ivez e lec'h *diouz*, bepred diwar skouer ar C'hallaoued: *eus e du e lec'h diouz e du* evel e galleg « de son côté ».

Verb-hano pe hano-verb a ra Kembreiz eus an « infinitif », dre ma 'z eus anezan en hor yezou brezonek eur gwir hano henvel ouz an hanoioù all. Evel dirag an hanoioù, lakaat diragan, eta an araogennou dishenvel diouz an dro-venoz a zo c'hoant da verka: dre (pe war-bouez) labourat e leuer gouziek, gant striva e teot d-benn, a-greiz pedi e vanas kousket, war ziskenn ez a an hent, hag all. Ne wel ket an aotrou Chapalain ar reolenn-ze, ha hi ker splann koulskoude; ac'hano eur gwall-bleg da lakaat bepred, ne vern penaos e ve tro ar menoz, en eur dirag an hano-verb: *Glac'haret en deus bejeien Sant-Loiz en eur henvel eur beleg digunvez* (e lec'h dre henvel...) Merka daou dra graet a-gevret setu eno roll en eur dirag an hano-verb, da skouer: *lenn en eur gerzout*. Eur gwall-fazi eo ober gand en eur er-maez eus an impli-ze.

**

Eun hir a hent hon eus d'ober, evel ma welit, kent dont d'ar pal a verk d'eomp an abad Gantois: sevel eur yez unvan da venveg eul lennegez uhel. Rak kenta kammed d'ober en hent-se eo skriva reiz. Ha n'eo ket graet c'hoaz ganeomp ar c'henta kammed-se! A-raok pep tra diskomp, eta, *skriva reiz!* Ha, dreist-holl, diwallomp da c'hallekaat hor c'heltieg!


F. VALLEE.

-: M O N A :-


Andante.



War lez ar ster, he zreid en dour,



A-ze-zet war ar c'hia-zenn flour, Eun a-bar-



daez, Mo-na Daou-laz, Oa er prad, din-dan ar gwern glaz,

War lez ar ster, he zreid en dour,
Azezët war ar c'hlazenn flour,
Eun abardaez, Mona Daoulaz,
Oa er prad, dindan ar gwern glaz.

Truezus ha stouet he fenn,
Oa ar plac'hig, gant he anken;
An daerou eus he daoulagad
'Steredenne war geot ar prad.

War ar skour eun evnig bihan
Lavaras neuze, dre e gan:
— N' strafuilhit ket an dour plac'hig,
Er giz-se, gant ho taou droadig.

Rak n'hellin mui gwelet va skeud,
Na stered an oabl ken nebeud:
Selaouit pedenn an evnig,
N' strafuilhit ket an dour, merc'hig!

Monig a lavaras neuze
D'an evn a gomze er stumm-ze:
— N'as be doan, an dour strafuilhet,
Hep dale pell 'vez sklaer ha net;

Met, siouaz! en deiz ma teuis,
El lec'h-man gant Yannig Karis,
An hini am eus re garet,
A! neuze ez oa d'it laret:

O! na strafuilhit ket, Yannig
Kalon hag ene ar plac'hig,
Ne vint ket glan, ne skeudint ket
Ar stered, an heol benniget.

F. V. an Uhel.

Keleier ar Miz

Kendalc'h Kenvredigez Broiou Frans

D'an 2, 3 ha 4 a viz Kerzu edo e Pariz bodadegou meur ar « *Fédération régionaliste française* »; renet e oant gend an A. Justin Godart, senatour. An A. Schuman hag an A. Muller a gomzas en ano al Lorren hag an Alzas hag a ziskouezas pegement a gemm a oa etre ar broiou-ze ha broiou all ar Frans ha pebez fazi oa klask o gouarn gant lezennou henvel mil ouz lezennou ar rest eus ar Republik.

An A. Victor Basch, kelenner er « *Sorbonne* », Rener « *La ligue des droits de l'homme* », a glaskas enebi ouz an daou brezegeger-ze: « *Ar Republik, emezan, une et indivisible*, ne vo ket evit gouzanv traou evelse... ha neuze ma vez desket diouz yez en Alzas, Alzasiz a vo desketoc'h eged ar Fransizien all... »

Ha pa vefent, daoust hag eur pec'hed e vefe ?

An A. Marcel Guyesse hag an A. Markiz de l'Estourbeillon a zisklerias ne ehanje ket ar Vretoned d'en em glemm ken na vije selaonet o goulenn ha roet d'ezo ar frankizou o deus ezomm evit gellout beva ha bale war roudon o zud koz.

Eur breizad yaouank hag a oar difenn gwirioù e yez

Al lizer-man a zigouezas ganeomp e penn-kenta ar miz tremen.

Ar Mans, 4 a viz Kerzu 1927.

AOTROU RENER,

N'em eus ket ankounac'haet c'hoaz ar pezh ho peus lavaret d'eomp e retred Lesneven ha setu perak e teuan da c'houlenn ouzoc'h degas d'in eun nebeud sklerijenn war dalvoudigezh hor brezoneg.

Setu aman perak: aman, er 117, emeomp eun toullad mat a Vretoned ha, na petra 'ta, e komzomp atao, e brezoneg, n'eo ket hepken hep mez, met zoken gant lorc'h. Kement-se ne blij ket kalz da baotred Pariz na da re ar

Mans hag, eun deiz, int deuet da ober eun tanteziad war-nomp ha darn eus hor mistri, a-du ganto, a oa zoken eno zouez. C'hoant o devoa da zifenn ouzomp komz brezoneg ken etreze, war zigarez ma n'eo ket eur yez emezo, met eur « patois ». N'eo ket eur briz yez, eme ni, eo hor brezoneg, met eur yez eus ar re reisa hag a vez desket n'eo ket hepken e skolioù meur Frans met e meur a skol veur all eus an Europ ha zoken eus an Amerik.

Gaou, eme ar C'hallaoued, ar brezoneg ne vez ket desket, e nep lec'h, ha ne c'hell ket beza, p'eo gwir ar Vretoned o-unan n'int ket gouest d'en em glevet eus an eil kanton d'egile.

An dra-ze, eme-ni, ne vir ket en deus ar brezoneg e c'hrammadeg, evel ar galleg; setu aze petra hon eus lavaret.

Ha ne c'hellfec'h ket rei d'eomp skridoù da lenn, war hor yez, ma c'hellimp diarbenn gwelloc'h c'hoaz enebourien hor bro.

E. G.

Mat kenan ho peus respontet d'an drabaserien-ze. Ar brezoneg a zo eur yez, eus ar re gaera, hag a zo pec'hed e lezel da vont da goll ha nann eur « patois » pe eur « jargon » pe eun « dialecte » evel ma lavar paotred Pariz.

En deiz ma ouezo ar C'hallaoued petra eo al « *Liberte* », en deiz m'hel lakaint nebeutoc'h, war o mogerioù, ha muioc'h en o lezennou, e lezint ar Vretoned da zeski o yez en o skolioù evel m'eman o gwir ha neuze e c'hellint en em glevet brao bras, ken etrezo, eus an eil penn d'egile da Vreiz.

Ma chomfed 100 vloaz hep deski ger galleg ebet e skolioù Frans, met Gallaoued Paris ha re Orleans ne c'hellfent ket en em glevet.

Brezoneg a-walc'h a vez desket e skolioù meur Roazon ha Pariz, met keit ha ma ne vo ket desket en holl skolioù Breiz, — er re vihan ha kreñn koulz hag er re vras, — arabad eo d'eomp chom en habaskder; gwir hon eus da veza selaouet war gement-se ha selaouet e vezimp, rak ne roimp peoc'h ebet ken a vo roet d'hor brezoneg e Breiz ar renk a zo dleet d'ezan da gaout, da lavaret eo ar c'henta.

Eur vamm hag a lavar he mea culpa

Goude beza lennet war *Feiz ha Breiz* miz kerzu prezegenn an A. Breurec, eur vamm a skriv d'eomp kement-man :

P., 18/12/27.

AOTROU RENER,

... Ho *Feiz ha Breiz* a lennan eur pennad a zo ha brao kenan her c'havan ; prezegenn an A. Breurec, dreist holl, a gavan hep par. Biskoaz hor beleien n'o deus desket d'eomp evelse hon deveriou e kenver hor bro, rak anez, birviken, n'em bije graet ar fazi am eus graet e lakat va bugale da zeski ar c'hatekiz gallek.

Breman e welan, sklêr, ar pezh ne welen ket betek hen, e raer eur gaon bras n'eo ket hepken ouz ar vro met ivez ouz ar relijion he-unan pa glasker divrezonega eur bobl evel hon hini.

Va bugale gosa n'o deus desket nemed ar c'hatekiz gallek, met va re yaouanka ne zeskiñt nemed an hini brezonek.

Va mab kosa a zo serjant e Pariz ; breman oun en em laket da skrivañ d'ezan ivez e brezoneg ha setu aman peira en deus respontet d'in raktal : « N'oufec'h ket pegement a blijadur am eus bet o kaout ho lizer diveza ; hennez, avat, a oa c'houez vat ar gêr gantan ; pignet oun d'an nec'h d'hel lenn, eno, a vouez uhel, vunan, ha c'hoarzin am eus graet gantan, — e brezoneg, — gwalc'h va c'halon. »

Kenavo d'eoc'h, Aotrou Rener, ha bennoz Doue d'eoc'h, a greiz kalon evid ar sklerijen a zougit dirazomp hag a ziskouez d'eomp, ker splann, hent ar Re Goz, hent ar Vro.

M. Y. A.

Goulenn a reomp digant Doue ma vo, edoug ar bloaz nevez-man, eleiz a vammou, o tigeri o daoulagad d'ar wir sklerijenn, evel ar vamm vat-man ; neuze ar bloaz 1928 a vo eur bloavezh mat evit Breiz rak eur vro a vez savet pe ziskaret, dreist-holl gant he mammou..

Y. V. P.

Kevrenn ar Vugale

Va mignoned vihan,

Warlene, kement ha m'oac'h bet fur, ar Mabig Jezuz en doa roet d'eoc'h ho kalanna en eur lakat digeri evidoc'h eur bengenn e park bras *Feiz ha Breiz*.

En deiz all, eur big, eun tamm mat a c'hlabous ganti, a zo deuet da lavaret d'in ne dliec'h kaout kalanna ebet er bloaz-man, nemet eur wialenn e vefe evid o tiarbenn dre ma oac'h bet drouk : « Ha « pase » sur oun, emé ar big, eus ar pezh a lavaran. »

Morse ne blijas d'in kredi d'ar red komzou kement « Mari Big » a welan hag a glevan o ragachat war va hent, hag atao, araok barn eun afer e fell d'in klevet da nebeuta daou daol kloc'h.

Dre-ze, va mignoned, em eus galvet gand eur zutadenn eun toullad laboused all da glevet ganto o ali diwar ho penn.

Eur melegan, — me gred eo diwar dro Lesneven pe... Zantez-Katell, — a lavaras raktal gant e vouez flour : « Ar pezh a lavar ar big a zo gaou, eur gaou bras evel tour Kreizker ha toull evel dan. Me a ana-vez mat ar vugale hag a deu da lavaret deoc'h eo bet ar Vretoned hag ar Vretonezed vihan, e doug ar bloaz 1927, fur kenan, fur eus ar re fura. Mat int bet da bedi ha da zenti ; karantezus int bet an eil e kenver egile ha mat da luskellat o breudeur hag o c'hoarezed bihan. Pa vezent o tiouall ar zaout, morse n'o deus o lezet da vont da laerez. C'hoari o deus graet ive a galon vat pa veze ar

mare, ha n'o deus ket morse graet tamm « trich » en eur c'hoari, o nann !... Ar Mabig Jezuz a zo ker kontant anezo, sur a-walc'h, hag eus bugale e amzer... Eur wialenn a zigasfe d'ezo d'o c'halanna? o! ne raio ket!... Dont a raio gantan eur wialenn, sur! ya, da gas da strakal kement pig fall a deu da zutal traou diwar benn va mignoned vihan. »

Evelse e komzas ar melegan, eun tammig rost ennan oc'h achui. Al laboused all a lavaras : ya, pep hini en e yez hag holl a galon vat.

Trawalc'h em oa klevet ha kloza ris ar prosez o lavaret e kavo bugale Vreiz o c'halanna e *Feiz-ha-Breiz*. Hag ar c'halanna-ze a bado e doug ar bloaz. Bep miz, e *Feiz-ha-Breiz*, e vezo eur c'horn hag a vezo ho korn d'eoc'h, bugale, eun dachenn hag a vezo ho tachenn d'eoc'h.

Ha petra gavo'c'h en dachenn-ze ?

Noc'h eus nemet lenn *Feiz-ha-Breiz* bep miz hag e weloc'h. Warlene, e miz Genver, oa bet lavaret deoc'h ar pez a vefe graet evidoc'h. Gant al labour-ze eo e vezo kendalc'het. Evit trouc'ha berr, kaout a reoc'h e « *Kevrenn ar vugale* » kement a c'hell ober vat ha plijadur d'eoc'h.

Daou dra hepken a c'houlennan ouzoc'h : *da genta*, ma kavit eun dra bennak, brao ha mat, da lakat e « *Kevrenn ar vugale* », digasit-hen d'in: digemeret mat e vezo.

D'an eil, lezit ive ho preudeur hag ho c'hoarezed vras da vont bep an amzer da zellet ouz ho tachenn ha da ober zoken eun dro vale warnezi ; meur a dra a gavint eno ive da bennaoui. Meur a dra a vezo ha ne zellint nemet ouz ar re vihan ; met

meur a dra a vezo hag a zello ive ouz ar re grenn ha zoken ouz ar re vras, evel ma vezo an divina-dennou ha meur a genstrivadeg all marteze.

Breman e lezan ar « Melegan » da gana d'eoc'h e zon diwar-benn *Lizig, Prinsezig an Dour*, hag e lavaran d'eoc'h kenavo ar miz a zeu en eur reketi deoch : Nedeleg laouen, kalanna fonnus, eur bloavez mat, kals a re all ouspenn hag ar baradoz da zivez ho puhez.

Re ziwezat !

E lez rouaned Bro-Zaoz, p'oa beo ar Roue Edouard VII, ar brinsed vihan a veze digemeret ouz taol vras o zud, met dindan boan da veza laket e pinijenn e rankent chom sioul, hep lavaret eur ger.

Eun dervez, e Buckingham Palace, a greiz lein, an eil eus paotred prins Kymre a lavaras :

— O! Tad koz!

Ne gredas ket peurlavaret e gomz, rak ar roue, ken drouk ha tra, a drouc'has warnan :

— Ar vugale ne dleont lavaret ger ebet pa vezont ouz taol.

Ar pred a gendalc'has, met pa en em gavjot gand ar frouez, Edouard VII a gemeras truez ouz ar paotr bihan en devoa klasket lavaret eur ger hag a c'houlennas outan :

— Petra edos o vont da lavaret bremaik?

— Netra, Tad koz, re ziwezat eo breman.

— Re ziwezât ! ha perak 'ta ?

Ar c'hrouadur a zirollas da lenva :

— O! Tad koz, emezan, eur prenv a oa etouez ho saladenn... ha breman n'ema mui.

Divinadennou Miz Genver

- I. — Distagit d'in gand eur ger krenn
Piou 'zoug e gig war e groc'hen ?
- II. — Piou 'ya da genta d'ar marc'had
An daelou en e zaoulagad ?
- III. — P'eo gwir oc'h paotred hag a oar
Larit pet pluenn 'zo er yar ?
- IV. — Pa 'z oc'h paotred hag o deus fri
Piou 'zo furch difurch dre an ti ?
- V. — Piou an intron aet da vatez
Kollet ganti bleun ha perlez ?

EUN NEBEUD ALIOU

1°) Kement a zell ouz kevrenn ar vugale a dle beza degaset d'an ao. Guillou, kure e Plouider Bro-Leon.

2°) Divinadennou miz genver a zigor kenstrivadeg an divinadennou evit 1928.

3°) Responchou an divinadennou a dle degouezout a benn an 20 eus pep miz da zivezata. O degas d'an adres lakaet uheloc'h.

Etre Bugale

Louizaig. — Petra 'z peus sonj da c'houlenn ouz ar Mabig Jezuz d'az kalanna ?

Jobig. — O! n'oun ket nec'het. Goulenn a rin ma vo prenet d'in *Feiz ha Breiz* bep miz.

Feiz ha Breiz

Eun tenzor ez peus kavet !

Paotred yaouank, pa vezoc'h o vont da zimezi, taolit evez mat piou da gemeret da hanter-tiegezh, en aoun da gaout keuz warlerc'h, pa vezo re zivezat :

Gwell eo beza laouen, war ar vein o kana
Eget n'eo azeza, war ar an aour da lenva.

N'it ket da gemeret da bried eur verc'h rok ha dichek, eur gamambre ha ne gomz brezoneg, nemet diwar fae, unan ha n'he deus doujans ebet evit he zud :

A-raok lammet, gouez e pe lec'h,
en aoun da derri penn pe vrec'h !

Gwechall goz, eur paotr yaouank eus a Athena, hag a veze er skol gand eun doktor brudet, a roas da anaout d'e vestr edo o vont da zimezi dizale :

— Ha petra he deus an hini a c'houlennes, eme an Doktor ?

— Koant eo, eme ar paotr, lore'h ennan.

Ar mestr a verkas raktal eur pikol zero war e daolennsklent.

— Ha goude, emezan ?

— He zud a zo brudet bras !

An Doktor, kerkent, a lakas eur zero all war e sklentenn.

— Pinvidik eo !

An Doktor a lakas eun trede zero.

— Desket kaer eo !

An Doktor a skrivas eur pevare zero ha meur a hini all c'hoaz d'e heul.

— Ha gand an dra-ze, eme an den yaouank eo eur
vaouez hegarat evel ma n'eus ket kalz.

Kerkent an Doktor a lakas an niverenn 1 dirak ar zeroioù
en doa skrivet a-raok hag o trei warzu an den yaouank e
tiskouezas d'ezan an niver en doa breman, war e sklen-
tenn, hag a oa estlammus:

— Gwelet a res, emezan; eun tenzor ez peus kavet:

Gwell eo karantez leiz an dourn
Eged aour melen leiz ar fourn.

Furnez ar re goz.

A N H A D A

Daou ejen ruz, lart, digailhar,
A-hont a jach war an alar :
Kevred ez eont, o fenn izel
Hag eur c'hlaourenn diouz o muzell.

Roget e gein gant ar zoc'h lemm
An douar ne daol ket eur c'hlemm,
Anaout a ra eo euz e c'hloaz
E sav eost alaouret bep bloaz.

Harpet war ar gloued, e welan,
En e zourn eur bodig balan
Ar paotr o heulia, war e bouez,
An daou ejen sentus d'e vouez.

Ar mestr a stard en e zaouarn
Pogennou an alar houarn
Ha, dindan eun heol tomm-bero,
En teil gwak, e toull e ero.

An tad-koz, eun den a vicher,
Tronset gantan e davancher,
A stlap had melen da havi
E gwele ledan an irvi.

Ha ruihet warnan an douar,
Evel eur vantellig klouar,
An had aour sebeliet eno
Ar goanv, e peoc'h, a dremenno.

Glaou, erc'h, grizilh, barrou-avel
A ray dispac'h war e gavell,
Met hen, d'an thanv, flamm ha dare,
Kaeroc'h a zavo adarre.

Da gorf, d'ar vered, eun dervez,
A vezo douget da c'hourvez,
Met, evel an had, e havo
Hag en e holl sked e savo.

Warnan, araok diskenn aze,
E koezo taoliou marteze,
Hag ar boan en e izili
Sur a veno meur a c'houli.

An naon, ar sec'hed, ar brezel
Ennan a blanto o c'hizell
Hag ar c'hlenved, breur ar maro
Dindan e vorzol e flastro.

Dalc'h mat d'az feiz evelato,
Kouisk ar bez ne bad ket ato :
Rag, eun deiz, da Vro an Eled
O nijal e vezi gwelet.

J. L'HELGOUALCH, M. M. D.

Buhez an Tad Julian Maner

Jezuist ha misioner (1606-1683)

II

E helelenni ar Jezuisted e sant Jermen hag e La Flèche (1625-1630)

En em gavet e Paris, ez eas da c'houlenn digor e ti ar Jezuisted. Met an Tad karget eus ar Jezuisted yaouank ne felle ket d'ezan e zigemeret, rak n'en doa klevet hano ebet anezan. An Tad Koton en doa ankounac'haet skriva. « Va lezit da vihana, a c'houlennas Julian, da vont d'ar chapel da lavarret eur bedennig ». Aotreet e voe, hag e pedas eno kalonek an Aotrou Doue ha sant Jozef. Selaouet e voe e bedenn. « Chom a c'hellot, a lavaras an Tad Rener, betek ma vo deuet respont an Tad Koton ».

Ar respont a zigouezas, ha Julian Maner a jomas en ti-ze da zeski beza Jezuist. Laouen oa, eürus bras. « Er baradoz, emezan, oun en em gavet. Rak, peseurt kemm a zo etre buhez ar zent en Nenv hag ar vuhez a renomp aman? Adori, meuli Doue, setu petra ra ar zent. Met ni a ra evelse ive ».

Senti a rae ouz ar reolenn en traou distera evel er re vrasa; e spered a veze ato teret ouz Doue, pedi a rae kalonek, hag e pinvidikae bemdez e ene o prederia var vuhez e Vestr. Hor Zalver Jezuz-Krist.

Doue a ro e c'hrasou d'ar re o goulenn. Ar re a lak o foan d'en em zantellaat ne vezont ket le-

zet gand o nerz o-uman. Doue a skuilh varno gant plijadur e sklerijenn. An Tad Maner a voe frealzet gand Doue er mare-ze eus e vuhez, evel m'en deus skrivet. Ar Werc'hez ive, e Vamm vat, en em ziskouezas d'ezan epad e gousk hag a gargas e galon a beoc'h santel.

Goude daou vloaz tremenet oc'h en em brepari, ec'h en em vouestlas da Zoue evid eun nebeut bloaveziou. Rak evelse e ra al Leaned. Da genta ec'h en em vouestlont evid eun nebeut bloaveziou ha divezatoc'h e c'hellont en em vouestla evid o buhez penn da benn.

Goude e vouestl, Julian Maner a voe kaset da ger La Flèche da studia ar brederouriez hag ar skianchou sakr. Eur skol vras ha brudet o doa eno ar Jezuisted. An ti-ze, skler eo, a zo bet laeret evel kalz re all, hag hirio eo d'ar gouarnamant.

Ar Breur Maner a studio gwella ma c'hello, nann evit beza brudet dirag an dud evid e zeskadurez, met evid anaout gwelloc'h e Zoue ha gellout ober muioc'h a vad d'an eneo. Skrivet en deus evelhen var gement-se: « Me a studio evid en em zantellaat ha gellout eun deiz santellaat va nesa. Evel ma z'an da bedi pa vezan galvet gand ar c'hloc'h, evelse ive ez in da studia pa zono ar c'hloc'h, evid ober ato bolontez Doue. O pedi ne zonjin ket er studi, met o studia ne zilezin ket ar zonj eus a Zoue, pedi a rin alies evit gellout deski gwelloc'h. Doue a fell d'ezan e ven santel ha desket. Evit-se me a implijo mat an amzer merket evid ar bedenn hag ar studi. Ne vezo ket tenval va fenn ma welan re all o vont em raok. Me o meulo hag a lavaro: « Setu aze tud hag a raio divezatoc'h enor d'hor C'hompagnunez. Ma teskan gwelloc'h eged ar re all, e lec'h

klask meuleudi, me a drugarekaio Doue, rak digantan e teu pep furnez ».

Mont a rae ar studi var araok. Endro d'ezan ez oa kalz a re all, lemm o spered ive, mat ive da labourat, hag e veze striv alies etrezo. Bep sizun e vezent laket da genstriya war gement a veze bet displeget dirazo, ha bep miz e veze eur genstrivadeg diesoc'h c'hoaz, dirag an holl vistri. Goulennou a veze graet outo, hag e rankent respont, displega, euna brao an traou.

Ar Breur Maner en em denne mat ato. Deski a rae ar pez a gare. Met daoust da ze, ne gemere tamm lorc'h ; ato e chome izel a galon, ato troet ouz ar bedenn, leun a garantez evit Doue.

En amzer-ze eo en deus skrivet ar c'homzouman : « En dervez diveza eus eisevetez ar Zakramant, e wellis skler n'eo hol draou ar bed nemet moged; tremen a reont buan. Doue hepken a zo peurbadus, hag evid e garet en Nenv, e ranker beza e garet war an douar. War-ze, e kounnar ouz mignoned ar bed, e lavaris a vouez uhel : « Ha diskiant a-walc'h e vezo ato ar bed d'en em staga ouz ar pez a dremen ha da zilezel Doue, an Hini ne dremen ket? » Nebeut amzer goude em boa ker bras glac'har d'am fec'hejou, m'oa evel fraillhet va c'halon. »

Nebeut amzer goude, d'ar 15 a viz gouere, e sante en e galon c'hoant bras da c'houzanv eun dra bennak evit Doue. Epad an deiz oa entanet a garantez evit Doue. Lenn a reas ar c'homzouman skrivet gand an abostol sant Yann : « An neb a jom er garantez a jom e Doue, ha Doue a jom ennan. »

Met, petra eo karet Doue? » N'eo netra all nemet

senti ouz e gomzou. » Hag e reas ar bromesa da brederia bemdez var gomzou Doue ha d'o heulia beteg ar maro.

Epad ma veze e retred, e figore muioc'h c'hoaz e galon da c'hras Doue. Eur wech, o prederia war ar wirionez-man : « Da eur ar maro e vezo c'hoant da veza renet eur vuhez santel meurbet », e lavaras ennan e-unan. « Tizout a rankan beteg ar vrasa santelez ». Hag epad m'edo evelse o prederia war ar maro hag anken ar maro, ar Werc'hez en em ziskouezas d'ezan da lavaret e vefe en e gichen da eur ar maro. Hor Zalver ive a ziskouezas d'ezan, e kreiz eur sklerijenn lugernus, peger bras digemer a vije graet, goude e varo, d'eur Jezuist chomet fidel d'e holl zeveuriou. « Laouen bras, a skriv ar Breur Maner, frealzet holl, me a reas le da labourat eus va holl nerz evit beza henvel ouz Jezuz-Krist. »

Evit-se e ranko gouzanv gant habaskted an holl boaniou, distaga e galon diouz traou ar bed, beza santel, glan, en em ziwall diouz ar pec'hed ha dreist pep tra diouz ar pec'hed hudur.

Alies e La Flèche e teue kelou eus misionou an Azi, an Amerik, renet gant Jezuisted. Al liziri a veze lennet dirag an holl er zal-debri. A-wechou e teue misionerien da gomz eus o misionou, da lavaret oa kaer an eost, met bihan niver an eosterien.

Ar Breur Maner en doa ioul da vont da visionou an Amerik. Met e vistri, pa voe echu gantan e studi var ar Brederouriez, e gasas da skolaj Kemper. N'en doa ket c'hoaz resevet an Urziou sakr.

Y. U.



ITRON VARIA AR MENE-HOM

Eul leo vihan diouz bourc'h Ploudiern, e tu an hanter-noz, war eun uhelenn hag a zo izelou-c'hik koulsgoude eged ar c'herniou a zo tu ha tu d'ezi, e kaver eur chapel gaer d'ar Werc'hez, kement hag eun iliz parrez, hag e raer anezi Itron Varia ar Mene-Hom.

War a lavar ar re goz, ar chapel genta a zo bet savet eno a voe savet gand ar Roue Marc'h, eun den pinvidik mor hag a oa mestr war Vro-Gerne a-bez adalek Menez Arre betek Penn-Marc'h. Kestell en doa e Lezarskoued, e Plonevez-

Porzay, e Prad-ar-Rouz, e Penharz, hag e enezenn Sant-Mark, e kichen Pont 'n Abad. Eun ti all en doa c'hoaz, war lein Mene-Hom, e c'helle anezan gwelet e zouarou eus an eil penn d'egile. Daoust pegen troet oa ouz ar Werc'hez ha pegen mat oa ouz ar paour, e tec'has meur a wech diwar hent ar furnez, hag e varvas trumm, eun nozvez, e kreiz e zizurziou, amzer d'ezan, a vec'h, da zavel e spered warzu Doue ha da c'houlenn digantan e bardon. E ene a oa o vont da goueza en ifern, met ar Werc'hez a bedas evitan hag an Aotrou Doue a zelaouas he fedenn:

— P'eman an traou evelse, emezan, ar Roue Marc'h ne 'z ay ket d'an ifern, met eur binijenn galet a ranko da ober; e ene a jomo er bez a zo savet d'e gorf ha gouzanv a ray ennan holl boaniou ar Purgator ken na c'hello eun den, en e zav, gwelet diwarnan tour ar chapel en deus savet en hoc'h enor en tu all d'ar menez.

Ar Roue Marc'h a oa bet sebeliet tost d'e vaner; etre e vez hag ar chapel e oa eul lanneg yras; eur grugellad vein ha douar, a voe savet, hervez giz an amzer, war e relegou, met daoust pegen uhel e oa an dosenn, n'oad ket evit gwelet diwarni beg tour ar chapel. Ar Werc'hez a gavas, brao bras, an tu d'he uhelaat, e berr amzer. Eun nebeud deiziou goudeze, eur paour a oa o treuzi ar menez, a jomas sebezet o kaout war e hent eun itron gaer, eul kostenn c'hilaz alaouret ganti hag a zouge war he barlenn, eun dra bounner bennak; goulenn a eure an aluzen diganti:

— Her rei a rin d'it, emezi, laouen a-walc'h, gant ma teui da genta da leunia da zac'h a vein ha d'o stlepel el lec'h a ziskouezin d'it.

Ar c'hlasker-bara a zentas hag a yeas da heul an Itron gaer betek bez ar Roue Marc'h; houman a ziskargas eno ar varlennad vein a zouge; p'en devoe graet ar paour kemend all, an Itron, d'e dru-

garekaat a roas d'ezan eur pezh aour nevez flamm :

— Ha breman, eme an Itron, bep wech ma tremeni dre aman, e tigasi ganez eur zac'had mein hag e liviri da gement paour a gavi war da hent ober eveldout.

— Hen ober a-walc'h a rin, Itron, eme ar paour, met perak e c'houlennit ouzin ober eun hevelep tra ?

— Evit savetei ene ar Roue Marc'h ha ne dle beza saveteet nemet pa vo gellet gwelet, diwar



Porz gwered I. V. ar Mene-Hom.

e vez, beg tour ar chapel a zo en tu all d'ar menez. Ar Roue Marc'h, p'edo war an douar, gwechall, a oa mat d'ar beorien; roit eta d'ezan, breman, ken alies a vaen hag a damm bara ho peus bet digantan, gwechall; bezit dinec'h, mar her grit, ar Werc'hez ho tigollo.

Hag e tec'has. Ar paour a gredas eo an Itron Varia he-unan eo en devoa gwelet. Ober a eure ar pezh a oa bet goulennet digantan; ar beorien hag an dremenidi a reas eveldan hag, hep dale, ar bez a oa en uhelder goulennet gand an Aotrou Doue : raktal, ene ar Roue Marc'h a nijas d'ar baradoz.

Ar dud a-vreman n'anavezont ket mui ar pezh a dremenas gwechall en o bro rak anez da-ze ne vijent ket bet aet da freuza Bern Mein ar Roue Marc'h, evel m'o deus graet, evit dresa o hentchou ha kloza o douarou; daoust da-ze, chom a ra c'hoaz eur guchenn vraz anezan, en e zav, e traon Menez Kelc'h, demdost da hent Kraozon.

Ar Roue Galon ivez a bignas eun dervez, war Mene-Hom, p'edo o tec'het, gand e vignon Gwennole, diouz ker Iz, beuzet gand e verc'h Ahez.

*Ac'hano, Roue Breiz-Izel,
War e lerc'h a daolas eur zell,
Met e lec'h Iz, gant he dek dor,
Ne welas mui nemed ar mor.*



Daouarou kastell ar Roue Marc'h a oa klozet gand eur vur, hanvet ar *Vur Vein*; pennadou mat anezi a gaver c'hoaz en he sav.

Nebeud a-walc'h a dra a anavezet diwarbenn chapelioù kenta Itron Varia ar Mene-Hom. Hentchou koz, pemp pe c'houec'h, a ya d'ar chapel-ze hag a ziskouez eo darempredet al lec'h-ze oustenn mil bloaz a zo.

Ar chapel vreman a zo bet savet er XVI^{re} kantved hag unan oa eus an teir binvidika a oa neuze e Bro Gerne.

Staga a rejod da labourat war an tour er bloaz

1663; met n'eo bet peure'hraet nemed en amzer an A. Plassart, persoun Plouidiern, er bloaz 1772, evel m'her gweler skrivet, e kampr ar c'hleier.

Gwaregeier ar vali greiz a zo bet savet etre ar bloaz 1574 ha 1591.

Ar pez a gaera a zo er chapel eo an aoteriou bet graet er XVII^{vet} kantved; gwaso pez a zo eo bet kuzet o liouiou koz gand eul liou melen sklêr en deus o laket da goll kalz eus o zalvoudegez.


Ar zent ivez hag a oa liouiou skedus warno gwechall a zo livet breman, e gwenn, penn-kil-ha-troad hag a zo henveloc'h evelse ouz korfou maro sebeliet en o linseliou-kaonv, eged ouz sent.

A-zioc'h an aoter a zo en hanter-noz eman skeudenn sant Yann Vadezour ha sant Laurans, sant Loeiz hag ar Vadalen.

War an aoter vras eman Itron Varia ar Mene-Hom gant santez Anna, sant Josef ha sant Joakim.

E chapel tu ar c'heisteiz


e weler kizellet kaer, war an aoter, sant Per, o ouela d'e bec'hed, Hor Zalver oc'h



en em ziskouez da Vari Madalen, diskibien Emmaüs hag all.

Kaout a raer c'hoaz er chapel skeudennou sant Laurans, sant Herve, renet gant Gwic'haran, sant Mikael, santez Barba, ha sant Alar.

Ar porz-gwered a zo bet savet er bloaz 1730; kaout a raer warnan skeudenn ar Werc'hez hag hini sant Herve. Ar c'halvar, a zo e kichen, en deus kollet e varch'eien vein hag unanig benmak eus e skeudennou all; war e jichenn e lenner, e lizerennou kaer, eo bet savet er bloaz 1544, endra m'edo Yann an Alonder fabrik.



Feunteun I. V. ar Mene-Hom

Ar re a ya da bardona, da Itron Varia ar Mene-Hom, a bign peurliesa, kement ha beza en em gavet ken tost all, war gern uhela ar menez; eun hanter leo vale a rankont da ober evid en em gaout betek eno; met digollet mat e vezont p'en em gavont war ar Yed, — ar Ged, — ha pa welont ac'hamo Leon ha Kerne a-bez, ker kaer, pa

vez sklêr an amzer, ma teu raktal en o spered komzou ar barz Brizeuk :

*O Breiz-Izel, o kaera bro,
Koad en he c'hreiz, mor en he zrol*

An uhelennou a hanver Mene-Hom a zo diou lodenn anezo ; el lodenn genta ez eus tri gern : ar Yed: 330 metr; Mene Briz, 289 hag ar C'hrec'h 246; en eil lodenn eman ar Reun Vras, 248 m., ar Reun Vihan, 225 m., hag ar Reun Askol, 235 m. Etre ar Reun Askol hag ar Yed eman ar *C'hom*, (ar C'houm), pe an draonien en deus roet e hano d'ar jadennad menezioù a-bez.



I. V. Ar Mene-Hom, a-bell

Ar gern a hanver ar *Yed*, pe ar *Ged* a zigas sonj d'eomp eus an amzer goz pa ranket ober *ged* evid en em ziuall diouz ar Zaazon pe an Normaned ha ne glaskent nemet diskenn e Breiz evit laerez. Dioc'htu ma vezent gwelet o tostaat ouz Brest e veze c'houezet tan e Kelern; kerkent ha ma veze gwelet an tan-man e ranket ober kemend all war Mene-Hom; ha pa veze gwelet hen-

man, kemend all war Garreg an Tan, e Gouezeg. Evelse eo e veze galvet gwechall ar Vretoned da ziarbenn al laeron-vor ha setu perak, atao, etre Kraozon ha Kastellin, lavaret eman « *an tan e Kelern* », a zo lavaret hano eus eur gwall zarvoud a zo tost d'en em gaout.

Mene-Hom, en nevez amzer, a vez alaouret holl pa vez al lann e bleun; en hanv, ar brug a ra d'ezan eur vantell ruz; er goanv, e groc'hen a vez rouz, evel krec'hin ar vesacrien denved.

Darn a gred ez eus bet eun den santel hanvet *Kom* o vev warnan (1) hag o rei d'ezan e hano ha pa vez mogidell ouz e c'helei an dud diwar dro a zo ar c'hiz ganto, atao, da lavaret: — Eman sant Kom oc'h aoza krampouez.

G. P.

(1) Eur chapel en deus e Sant Vic, etre ar menez hag ar mor.

Kenteliou d'ar barz yaouank

(Kendalc'h)

Diou ouenn glotennou zo eta ha ne c'heller ket kemmesk an eil gand eben. 1) Ar re a gengan adaleg ar zillabenn-belost ; 2) Ar re a gengan war ar zillabenn-lost.

Kredi 'ran start ne c'hell den bralla al lezenn-ze na sevel eur werzoniez-klotennou ma ne sent ket outi.

Met gwas a pez a zo, al lezenn-ze a ro taol ar maro d'ar werzoniez vreizek diazezet war ar glotenn. Perak ?

— O yeza ma 'z eo ar brezoneg re baour e klotennou. N'ez eus ket e brezoneg tra-walc'h a c'heriou lies-sillabennek a c'hellfe kengana adaleg ar zillabenn-belost, na tra-walc'h a c'heriou unsillabennek o kengana war ar sillabenn-lost. Klaskit klotennou da « jilgamm, lirzin, disliv, marlonk, morvil, ilboued, kountell, morse » ha kant all; klaskit klotennou da « poell, reo, don, donv, skoulm ». Unan bennak a c'hall beza kavet. Petra a zegouezo en eur barzoneg hir? Dalc'h mat atao e vo kondaonet ar-barz da gevrea an hevelep klotennou: « hir, dir », « dent, sent », hent, kent », « den, ken ». Anzav 'ran e vefed gouest da zével barzonegou berr hep dizenti ouz al lezenn griz. Met eur barzoneg hir, eur pez-c'hoari?... Kémerit n'eus fors pe bez-c'hoari gwerzennet ha niverit pet gwech ec'h en em gav mat ar c'hlotennou. Eur wech war zek ? — N'ouzoun ket.

Ha taolit pled penaos « barrek-gwareg », « genou-difennou », « ment-hent » n'int nemet treuz klotennou. Red eo peurgloza: ar werzoniez-klotennou a zo barnet d'ar maro e brezoneg. Petra da ober ? — Ober heb ar glotenn.

Her gouzout a ran, ar mennadou-ze a zo eun nevezenti, darn a lavaro gwasoc'h c'hoaz, ha setu perak ivez em eus marc'hatet, termet tri bloaz, arak o embann. C'hoant am boa d'o foueza rik. Ha, perak n'hel lavarfen ket ? ne oan ket evit kredi ne vefe ket bet sentet gwechall ouz al lezenn-ze, ene ha kalonenn ar varzoniez-klotennou. Rak-se, pa gouezas etre va daouarn leorig an A. Ernault war an henwerzenn vreizek, e tridas va c'hallon gand ar fizians da ober ar gavadenn-ze. Eun dizouezenn eo a gavis, n'hen nac'han ket : ar werzenn goz a dalveze he merc'h vihan, ma ne oa ket falloc'h. — Gwasoc'h c'hoaz a c'hoarvezas ganen. Laret e voe d'in, a berz eun den gouizieq war hol lennegez hengeltiek, penaos ar c'hiz a damallen — kengan an diou ouenn c'heriou ken-etrezo — a oa lezenn an Hengelted. Ar werzenn a gondaouen :

Eul louarn koz brema zo pell
A gollas e lost er brezel

a oa reiz-tre hervez al lezenn-goz. Ha setu me nec'hetoc'h eget biskoaz. Petra da ober ? — Prederia ? hag em eus graet. Chom hep sevel lezennou nevez, harzou nevez, evel ma voen aliet gand eur brezoneger dispar ? — Tevel ar wironez a vez diaes atao, diaesoc'h c'hoaz pa dle ober vat. Hag ouspenn, n'eo ket lezennou nevez a embannan, nag harzou nevez a zavan; lezennou, harzou kozdouar, ne lavaran ket. Kalit e kavan mont eneb

d'ar Gelted koz. Met ma raent fall? Me ne anavezan seurt diwarbenn o lennegez. Eus eun dra hepken am eus sonj. Bet em eus etre va daouarn, dek vloaz zo, « *les bardes gallois au v^r siècle* »; ha ma ne fazian ket dre ankoumac'h — dek vloaz d'am oad' zo eur gwall bennad amzer — klotennou ar varzed-ze a oa druz ha stank, ken e thie beza eun dudi silaou o froud o krozal war an delenn. Mar d'eo gwir, daoust ha me zo kiriek d'ar brezoneg da veza aet diwar an aroudenn? daoust ha kablus oun ma 'n deus, foranet e zavez a-hed an oadou? — Marteze e vefe mat ivez gwelet ha gwerzoniez ar Gelted a oa diazezet *war ar glotenn, traken*, evel e brezoneg.

Ar pez a zo diarvar eo ne c'hell ket eur werzoniez diazezet war ar glotenn traken kemmesk an diou ouenn-c'heriou am eus komzet diwar o fenn. Ar pez a zo ken diarvar all eo ne c'hell ket ar barz senti ous lezenn striz ar glotennou en eur barzoneg hir. — Red eo klask eun dra bennag all

(*Da veza kendalc'het*).

J. KERRIEN, K. K. S. S.

War dro ar re glanv

Evel ma 'm eus lavaret aman c'hoaz, mat e vije kaout, e pep ti, eur podig-houarn, a zaou litrad, da lakat dour da walc'hi diabarz an den, eur podig emailhet, rak an emailh a zo lampr ha devi alkool a c'hellfed ennan d'e gempenn, araok ober implij anezan.

Ouz ar pod e vezo, diouz eun tu, eur skouarn d'e zalc'her, ha diouz an tu all eun toull d'e istribilha ouz eun tach! E goueled ar pod e vezo eun duellennig houarn e vezo staget outi eur gorzenn-c'homm a eur metr hanter a hirder. E beg ar gorzenn e ranker kaout eur beg gouer evit klenvejou ar merc'hed; ar gwer a zo aes da virvi en dour ha da gempenn. Eur beg all a ranker da gaout evit gwalc'hi goueled ar bouzellou, koulz d'ar re vihan ha d'ar re vras, ha p'eo gwir e c'heller gand an hevelep pod hag ar hevelep korzenn ober vad d'ar chatal, ho pezo eur beg all evid ar chatal.

Pa walc'hit diabarz eun den, taolit evez en aoun da zaotri al linseliou, hag ar gwele ha lakit dindan ar c'hlanvour eul lien koarek pe draou all hag a viro ouz ar gwele da veza louzet.

An dour ne vezo na re domm, na re yen; roet e vezo d'ezan an dommder gourc'herennet gand ar medsin.

Ar pod ne vezo ket laket, na re uhel, na re izel.

Mat eo gedal eur pennad brao, goude debri, a-raok ober eur gwalc'hi da ziabarz eur den, hag an hini a vez graet an dra-ze d'ezan, a zo mat d'ezan dizoura a-raok ma stager gantan.

Ar c'hlanvour a vezo gourvezet war e du dehou; an aesa doare d'ezan da gemeret eo hennez, met alies

a-walc'h e vo red e walc'hi pa vezo gourvezet war e du kleiz pe zoken war leur e gain.

Evit lakat ar beg da veza lamproc'h e vezo laket outan eol, soa, pe amann dizall, ha bountet, hep nerz, met doun a-walc'h kouls goude, betek rei da gredi d'ar c'hlanvour en deus e lounket. Ma n'eo ket lakat ar beg da vont doun a-walc'h, an dour a deuio en dro, hag a c'hlebio ar gwele ; ma 'z eo laket da vont re zoun e c'hell glaza ar bouzellou pe viret ouz an dour da redet. Ar pod-dour, peurlies, a zo ennan roudennou du ha dre zellet outo e ouezit pe e red an dour pe ne ra ket.

Ma 'z eus eun duellenn ouz ar gorzenn, he digorit ; ma ne'z eus ket, o voustra gant ho pizied war ar gorzenn c'homm e lakeoc'h an dour da vont buanoc'h pe c'houestatoc'h.

Gand eun hanter litrad dour ez eus peadra da lakat ar fank da ziskenn d'an traon ; ma vez laket, en dour, diou pe deir loaiad glycerine, nemed muioc'h a-ze a nerz n'en devezo ken. An dour, na petra 'ta, a vezo gwelloc'h ma vez bet bervet a-raok e implija.

A-wechou ar medesin a c'hourc'hemenno ober eur gwalc'hi da ziabarz ar c'hlanvour pa ne c'hell ket henman en em spurji. Lavaret e vezo d'eoc'h petra da lakat en dour pa vezo ezomm da lakat eun dra bennak ennan.


Ma 'z eo gourc'hemennet gwalc'hi eur c'hlanvour gand eol-dibri, eo mat goude beza taolet an eol er pod, lakat ar pod en dour tomam evit klouaraat an eol ha kaout eleiz a habaskter rak an eol ne ray ket buan e labour.

D'ar vugaligou, eur werennad zour, d'ar vugale, diou, d'ar re gosoc'h teir, ha d'an dud en oad, eun hanter litrad, pe war dro, setu ar muzul eus an dour a zo ezomm da walc'hi diabarz eun den.

Ar Medesin.

AR WALENN GOLLET

Gwechall e oa o chom, e parrez Garlan, eun den hanvet Egad Laouenan. Paour oa hag, evit gounit e dammig kreun, ez a da zervezia en tiegeziou dirwar-dro. Eur paotr speredok ha lonc'hus oa hag, en e vleud, e veze pa c'helle lakat an dud da c'hoarzin ; c'hoari a ouie kement a droiou kamm d'an holl ma oad deuet da gredi e ranke beza eur stlabez sorser. Kouls goude, n'oa ket a aoun 'raozan, rak n'en doa graet droug ebet biskoaz da zen, ha, goulenn a raed e ali, pa vezed o klask traou dianket hag alies e kave an tu da goueza warno.



Eun dervez e teujod da lavaret d'ezan e oa kemennet gant markizez Koad-Eozen da vont d'he c'haout d'he

c'hastell. En em lakat a eure raktal en hent: — Daoust ha petra he deus ar Varkizez da c'houlenn diganen ? a lavare outan e-unan en eur bignat krec'h ar Veuzid ; eun dra bennak he deus kollet, hag eman o c'hedal her c'hav-feni d'ez. Aze vat, Egad e rankes c'hoari da louarn, rak ma teus a-benn eus da daol ez pezo eun tamm brao a verz-butun !

A-raok pignat e bali ar c'hastell e kavas, en eur warremm eur mesaer bihan o tiouall e zenved :

— Selaou 'ta, emezan, ne anavezes ket mevelled Koad-Eozen ? Me a zo galvet da vont da gaout unan anezo.

— O ! eo ! eme ar paotr, me o anavez mat ; bez ' eman Per, melen e vlev, teo e gov ha ruz e benn ; Yann, a zo du e vleo, bras ha morlivet ; Melar a zo rouz ha luch.

— Mat eo ! eme Egad hag ec'h en em gavas dizale dirak dor vras ar c'hastell hag e skoas warni.

Eur mevel a deuas da zigeri :

— A ! ta, Yann, penaos ez a ar bed ganeez ? eme Egad, heb aoun da fazia, rak ar mevel a oa dirazan a oa du e vleo ha morlivet e benn ; me a zo bet galvet gant ar Varkizez ; va c'has eta daveti ! »

En eur vont da heul Yann e kavas eur mevel all, melen e vleo ha teo e gof, a oa o skuba an dereziou : — A. 'ta Per !! Ne 'z peus ket re a zec'hed dre aze ?

Pa voe pignet d'ar zolier e kavas eun trede mevel, rouz e vleo, a zelle outan a-gorn :

— A 'ta Melar, kenfart out atao ?

Ar varkizez a lakas Egad da azeza hag a lavaras d'ezan :

— Va den mat, me a zo gwall enkrezet ha marteze c'houi a c'hellfe lemmel an enkreze-se diwar va c'hein. O paouez koll eur walenn gaer a zo warni eur berlezenn brezius, emadoun ; keuz am eus d'ez kenan, rak roet eo bet d'in gant va fried. N'eman ket er ger ha ne zizroio nemed a-benn eun nebeud deiziou. Red eo d'eoc'h kaout va gwalenn d'in a-raok ma teuo en dro, rak ne vefen ket evid anzav outan em eus he c'holllet. Klasket eo bet e pep lec'h ; met klasket hi c'hoaz ; grit tro ar c'hastell ; grit eun enklask war an dud a zo ennan ; lavaret a raer ez oc'h louarn hag e ouezit kaout an traou kuzet. Ma kavit va gwalenn ho pezo raktal 50 skoued en arc'hant gwenn !

Hor gwaz a skrabas e benn. Hanter kant skoued a oa eur berniad mat a arc'hant, met dies e oant da c'hounit. Penaos, kaout eur walenn hag a oa bet troet an ti ' en aner, war an tu eneb, evit he c'hask ? Arabad e oa d'ezan koulsgoude, mont kuit raktal, ha koll evelse an dro gaer en devoa eno da c'hounit arc'hant bras :

— Itron, emezan, eun dra zies kenan, a c'houlennit ouzin aze ; ma kirit e klaskin gwelet ha ma a gavo ho tra, met tri dervez a rankit da rei d'in neuze ; an tri dervez-se a dremenin er c'hastell ; eur gampr a rooc'h d'in ha bemdez da gresteiz e lakeoc'h aozza evidoun eur pred mat a bado betek peder eur dionz ar pardaez. Heb an dra-ze ne vezin ket evid ober netra. Abenn tri dervez aman em eus fizians da c'hellout rei d'eoc'h ho kwalenn. N'oun ket evit lavaret muioc'h d'eoc'h !



Ar varkizez a gavas e komze mat Egad hag a roas he urziou er gegin. An deveziour a voe fichet d'ezan eur gwele gant stel ha stignet kaer.

Bemdez, kerkent ha ma save, ez ae da ober tro a' hiorz,

da aveli e benn há da zellet ouz ar bleuniou ha da gres-teiz ec'h azeze ouz taol hag e veze servichet d'ezan e-unan, eur pred ker mat hag ar gweilla pred eured. D'an deiz kenta, Per eo a deuas d'e zervicha. Hor paotr ha ne oa bet ouz e staonv betek neuze nemet yod silet ha bara du, a zebras gwalc'h e galon : ar pladou hag ar boutailhou a veze goullonderet en e gof bras, ne veze ket pell : ne jomas netra eus e zilerc'h. Pa voe leun e gof, ec'h azezas war eur gador vourret, e sellas ouz Per ha kel laouen ha tra e lavaras d'ezan : — Setu aman tapet unan!

Antronoz e voe graet ker brao d'ezan hag en dervez kenta ; Yann eo a deuas, en taol-man, da zervicha taol.

Pa voe fin gantan da garga, e kroazias e zaouarn war e gof hag o sellet ouz ar mevel e lavaras adarre en eur vousec'hoarzin : — Setu aman tapet daou !

D'an trede dervez, Melar a oa e dro da zervicha. Egad a oa tenval e benn o sonjal e rankje anzav antronoz n'en devoa kavet netra ha dizrei adarre d'e geusteurenn baour. Met ne zebras ket nebeutoc'h evid an dra-ze ; kement ha pevar e tebras ha kement hag eiz ec'h evas ha p'en devoa lounket e c'henaouad ziweza e lavaras da Velar : — Breman 'vat, paotr, em eus o zapet o zri.

A vec'h m'en doa lavaret an dra-ze e voe souezet maro o welet Yann ha Per, hag a oa o selaou a dre kein an nor, o tont a-benn kas er zal hag oc'h en em deurel d'an daoulin, gant Melar, dirazan, en eur lavaret :

— Kemerit truez ouzomp ha n'it ket d'hon diskulia, rak ar markiz a lakafe hor c'hrouga. Ya ! ni eo hon eus laeret ar walen : gwelet a reomp ervat n'oar ket evit kuzat netra ouz eur sorser evelloc'h ; oc'h en em gaout aman dioc'htu ho peus gouezet anaout hon hanoiou ha deuet oc'h buan da c'houzout e oa ni eo hon devoa laeret gwalenn an itron ; ni a zo o vont da rei d'eoc'h ar walenn-ze, met, en han Doue, savit eur vojenn bennak da lavaret d'ar varkizez rak ma oar eo ni al laeron eman graet ganeomp !

Paotr Garlan eo an hini a jomas mantret ; n'en doa komzet nemed eus an tri bred mat en devoa graet ha setu m'en doa lakat an tri aillhon, gant ar gomz-ze, da zont da anzav o laeronsi. Na petra 'ta, pa welas penaos e troe an traou, ne 'z eas ket d'en em werza ha kem dichek ha tra e lavaras :

— N'oc'h mat nemet da ober boued ar groug ho tri, ha ma n'ho plije ket anzavet ho pec'het e vijen bet aet raktal d'ho tiskulia da Itron Koad-Eozen. Met p'eo gwir ho peus gret ne fell ket d'in ober an distera gaou ouzoc'h. Roit d'in ar walenn dioc'htu ha me a gavo an tu da lavaret d'an itron penaos em eus he c'havet hep-diskulia hini ac'hanoc'h, na, zoken, den ebet.

Dem-goude edo ar braoig etre e zaouarn ; kemeret a eure, war an daol, eun tamm minvig a lakas en e c'ho-dell hag hen, ken habask ha tra, warzu al lenn a oa eur c'hoajad gwez o viret outan da veza gwelet eus ar maner. Elerc'h hag houldi a oa eno o neunv war an dour ; en o zouez e oa eun houad dishenvel diouz re ar vro-man, euri houad du, koulz lavaret, gant eur gribell c'hilaz. Egad Laouenan a jachas an houad-ze war lez al lenn en eur stlepel bruzunachou bara d'ezan ha goude beza kuzet ar walenn en eur c'henaouad vinvig hel lakas d'hel lounka.

Neuze e tizroas d'ar c'hastell hag e pignas da gaout ar varkizez :

— Itron, emezan, a drugarez Doue, em eus getlet kaout ho kwalenn, pe, da vihanan, deuet oun da c'houzout e pelec'h eman. Deuit ganen, mar gellit hag e tiskouezin d'eoc'h !

Ar varkizez a yeas d'e heul hag e tiskennjont warzu al lenn :

— Gwelet a rit an houad du-ze, emezan, mat, hennez eo en deus ho laeret. Me a oar 'vat eman ho kwalenn en e gof. En deiz all p'edoc'h oc'h ober eur bale dre aman, eo kouezet diouz ho piz hag al loen fail-ze en deus e lounket ; lakit aman bennak d'e baka, digorit e gof d'ezan hag e weloc'h.

Paket e voe an houad ha lazet ; pa voe digoret e gof d'ezan e voe kavet ar walenn, en he fez, ebarz. Ar varkizez a oa laouen bras :

— Va den mat, emezi da Egad, souezus eo an traou a ouezit ; setu aze 50 skoued hag a zo d'eoc'h ha c'hoaz ho trugarekaan eus ar blijadur ho petus graet d'in hizio ha p'eo gwir va fried a dle en em gaout er gêr war-c'hoaz e vijen laouen ouz ho kwelet o chom d'e c'hortoz evit ma c'hello ivez ho kwelet hag ho trugarekaat da veza kavet va gwalenn, rak breman e c'hellin anzav

d'ezan ar pez a zo en em gavet. Chom a reoc'h n'eo ket ta ?

Egad n'edo ket kalz e chal da jom rak klevet en doa e oa ar markiz eun den drouk ha buan da zifiziout eus an dud. Aoun en doa ne deuje da zizelei e droiou kamm. Ha koulsgoude ne gredas ket lavaret manñ d'an itron hag e chomas.

Antronoz, pa en em gavas an Aotrou, e voe lavaret d'ezan ar pez a oa en em gavet gant gwalenn an itron; raktal e c'halvas Egad da vont d'e gaout.

Aotrou Koad-Eozen a oa en e gampr azezet dirak eun daol a oa warni eur voutailh, diou werenn, eur bistolenn garget, eur plad goloet hag eur bern skouejou :

— Neuze 'ta, va mignon, eme ar markiz, en eur vousc'hoarzin, te eo an hini a gav ar gwalinier kollet e kovou an houldi. Va maouez a jom sebezet dirak da



ouiziegez. Evidoun-me, a-raok kredi en da c'halloud a rank kaout eun testeni all. Sell, evomp ar voutailhad-man, da genta, ha goudeze e livirin ar pez am eus da lavaret d'it.

Eur wech ma voe peur-c'houllonderet ar voutailh :

— Gwelet a res ar plad-ze, eur golo warnan, eme ar

markiz; petra 'zo ebarz; sors'er out hag evelse ne vo ket dies d'it gouzout; mat, unan a zaou ez po, pe eun tenn eus ar bistolenn-man pe ar bern skouejou-ze. Ma lavares ar wirionez, ar 100 skoued a zo d'it, met, ma fazies ez po en da gof eur brunenn hag a gavi kalet da dreisia.

Egad a voe laket ken nec'het hag eur c'hi war eur c'hravaz; ne ouie e pe du trei ma petra da lavaret. Petra c'helle beza er plad-ze? N'oa ket evit gouzout ! Krena a rea evel eun delienn, en dra ma chache ar markiz war e gorn-butun, en eur zellet outan, gand eun aer goapaüs :

— Siouaz ! paourkêz Laouenanig, eme Egad, enn taolman, avat out tapet !

Hag e chomas mantret pa glevas ar markiz o lavaret d'ezan :

— A ! gwelet a ran, breman, e tlees beza eur stlabez sors'er bennak. Ya, eul laouenanig eo am eus tapet er plad-ze evit gwelet ha gouest e vijen da zout a-benn d'az lakat da vont e gaou ; kemer da 100 skoued; evomp eur banne all c'hoaz ha hezomp mignoned vat rak tud ker barrek ha te a zo gwel o c'haout da vignoned eget da enebourien.

Setu aze penaos e c'hellas Egad Laouenan kas gan-tan e 150 skoued, miret e damm buhez ha tremen evid eur paotr gouiziek. Anzavomp, ken etrezomp en devoe muioc'h a chans eged a ouiziegez.

G. P.

KELEIER AR MIZ

Maro an aotrou DOTTIN

Gwasat koll evit Breiz maro an aotrou Dottin ! Gagnet e oa e Liancourt (Oise) e Bro-C'hall, hogen eus eun tiegez a ouenn iswerzoniad. Deut da aotreeg-liziri (licencié ès-lettres) e Roazon, ez eas kerkeñt da Bariz d'en em varrekaat war ar studioù keltiek, dreist-holl dindan an aotrou Darbois de Jubainville e gemeras da zekretour. E dezenn a zoktor-liziri a zavas diwar-benn unan eus diaesa poenchou hor yezadur keltiek, an dibennou-verb en r (les Désinences verbales en r). Goude eur bloaveziad-kelenn e Dijon, setu-hen en-dro da Vreiz, e Roazon, e lec'h ma vevo hiviziken. Hanvet e voe da zeañ (doyen) ar Skol-veur war-lerc'h an aotrou Loth, ha da gelenner eyid ar c'heltieg gand an aotrou Per ar Rous da eil-gelenner. Setu amañ eur roll eus e benna skridou, ar re dalvoudusa d'hor Yez ha d'hor Brôadellez : *Contes Irlandais* 1901, *les Livres de saint Patrice* 1908, *Louis Ennius ou Le Purgatoire de saint Patrice* 1911, *Manuel d'Irlandais moyen* 1913, *Manuel pour servir à l'Etude de l'Antiquité celtique* 1915 (an eil mouladur), *les Anciens peuples de l'Europe* 1916, *la Langue gauloise* 1920, *les Littératures Celtiques* 1924, *l'Épopée Irlandaise* 1925.

A-hed e vuhez n'en deus ket paou-zet an aotrou Dottin da harpa hor brezoneg. E-pad ar brezel e teuas da genlabourer da *Groaz ar Vretoned* a oa manet en he sav hag en em vode en-dro d'ezi an holl Vreiziz wirion. Notennou a rôas d'in hag eeunadennou eyid embann e brezoneg eun diverra eus *Skrapadeg saout Cualnge*, kosa dezrevell-veur (épopé) ar Gelted.

Goude ar brezel e c'houlennas, en hano ar Gwir hag evel eun dra dleet d'ezan goud^o lazadeg kant-miladour a Vretoned, ma vije digemeret ar brezoneg er skolioù. A-du gantan enseller ar skolioù hag holl vistri-skol Treger, en em glevas gand an aotrou Ernault, rener hor *Breuzier-Veur* ar *Brezoneg*, hag e voe savet gant he man

eul *Leur-dourn d'ar vistri*, d'o eeuna en hent an deskadurez diouyezek « Manuel pour l'Etude du Français par les Bretons ». Gwaz a ze, eur flatter en em gavas evit gwerza an aotrou Dottin da Jakobined Pariz. Ha setu kollet pep tra ! Nemet e van ar « Manuel », bet moulet gand ar *Vreuzier-Veur*. Her goulenn digand an aotrou Vallée, ar vistri a venn kerzout en hent reiz.

Daoust d'an taol-ganas-se ne fallgalone ket an aotrou Dottin. Kas war wellaat ar gelennadurez keltiek en dije graet er bloaz nevez-man gant paotred *Breiz-Atao*, re « Foi et Bretagne » hag ar studierien vreizat bodet en-dro da G. Berthon, panevet an Aotrou Doue e c'halvas d'aveñtan d'ar Bed-hont. Fiziens am eus en devo bet eno digand Hor Salver an digemer-mat en deus grataet en e Aviel d'an neb a zifeñn ar Gwir.

F. VALLEE.

Ar Brezoneg e ilizou hor c'heriou

K. 30 a viz Kerzu 1927.

Aotrou,

Eur ger hepken. Klout a reoc'h amañ 13 lur evit *Feiz ha Breiz* 1928.

Pemp bloaz ha daou ugent a zo emañ e K. ha keit-se a zo abaoe ma rankan, pa deu ar zul, ober eul leo hanter, evit mont d'ar barrez tosta da glask oferenn rak n'oun ket evit gouzanv prezegennou gallek ar veleien a zo amañ. Gwechall, pa oan youankoc'h, an dra-ze evidoun n'oa ket nemeur a dra; met breman, sulveziennou a vez, e vezan skuiz maro hag a-wechou zoken e rankan chom er ger ha tremen va sul gand eun oferenn verr, evel oferennou an deizioù pemdez.

Trist eo gwelet ober ruz war ar brezoneg en eun iliz ha n'eus bet nemed arc'hant Bretoned ouz he sevel; n'eo ket ar C'hallaoud hepken o deus ezomm da vont d'ar baradoz ar Vretoned ivez a rank mont di !

An Itron A. G.

Bez 'ez eus, siouaz, parrezioù, hag e vez digaset enno, heb ezomm ebet, ar c'hiz da ober prezegennou gallek, tra ken nemed evit tremen, — evel a lavar ker brao Isvar e « *Breiz* » an 22 a viz genver diweza, — diouz « eur

wrac'h koz bennak ét e tok da dri ugent vloaz pe diouz eur goz strakell « poudre de riz », he flas e Pariz ha nann e Breiz» ha parrezioni all hag emañ ar c'hiz da brezeg e galleg, enno, pell a zo, ha ne daoler ket a bled a-walc'h, enno, war ar Vretoned a zarempred o ilizou, Bretoned ét e kêr hag o deus lezet Doue er gêr, dre ma n'o deus ket kavet, er c'hêriou, an ilizou brezonek a gavent gwechall war ar mêziou.

Ma 'z eo ker stank ar Vretoned difeiz er c'hêriou, daoust ha n'eo ket dre ma 'z eo ker rouez ar veleien-vreizat kar- get eus o eneoù ?

Da Vretoned ar 117

Gennevilliers, 8 a viz Genver 1928.

Paotred yaouank kalonek ha kenvroiz ker,

C'hoant a zo deuet d'in da skriva d'eoc'h eur ger, goude beza lennet, e *Feiz ha Breiz* diweza, al lizer ho peus kaset d'an A. Perrot.

N'oun ket gwall varrek war ar brezoneg, rak n'oun ket en em laket d'hen deski, nemet pa oan deuet da veza koz. Ganet oun bet er bloaz 1866; n'eo ket dec'h eo evel a welit.

Savet oun bet e ker Vrest, eur gêr a-eneb ar brezoneg, a-bell 'zo; d'am 11 vloaz e voen kaset d'ar skolach da Redon ha n'eo ket eno, ken nebeud, eo e c'hellis deski yez va Bro.

Mont a ris goudeze da zoudard er 117 evel doc'h, el lec'h ma kavis Bretoned ha ne oan ket gouest zoken da gomz-ganto evel a rit ken etrezoc'h: eur rann-galon oa evidoun.

Harluet gant trubuilhou ar vuhez pell diouz va Breiz karet, n'oan ket evit kredi ken e c'hellen c'hoaz dont a-benn d'en em vrezonekaat, pa gouezas, eun dervez, (e kêr Sant Malo, lec'h ma tremenen va ehan-labour), va daou-lagad war *Vreiz Atao* hag e welis enni e oa eur c'hen-vroad d'eomp, an Aotrou Weiss, o paouez sevel e Pariz, eur skol evid ar Vretoned ne ouient ket o yez hag o doa c'hoant d'he deski.

D'ar skol-se ez in, a liviris ennoun va-unan, ha dalc'het em eus d'am ger.

Dre garantez evit va bro em eus desket he yez ha tenn eo bet d'in a-wechou mont eus a Asnières, d'ar skol, da Pariz, goude va dervez labour, epad an noz, ha red d'in sevel a-bred, en dervez warlerc'h, evit beza em labouradeg adarre, kerkent hag en deiziou all, koz ha skuiz evel ma oan. Levenez vras am eus bet o lenn ho lizer pa 'm eus gwelet e oa atao, war ar bed, tud eus va gouenn gouest da garout o yez evel m'her gran va-unan.

Ar gwir a zo ganeoc'h; ar brezoneg n'eo ket eun trefoc-dach eo, met ar C'hallaoned n'her c'hredint biken; ar pezh a glaskont eo laza hor yez evit laza pep spered broadel ennomp ha netra ken: o anaout mat a ran, rak da stourm em bevez outo ken alies ha bemdez.

N'eo ket diouziak hepken ez int: displeal int ivez, ar pezh a zo gwasoc'h.

Touellet int gand « o Frans unvan ha ne c'hell ket beza rannet. »

Netra n'eo krenfoc'h eget hor yez-ni, a zo eur yez keltiek, da ziskouez d'ar bed holl ez omp Kelted ha nann Gallaoued.

Eun emgleo a zo bet grêt gwechall etre Breiz ha Bro-C'hall evit kaout peoc'h etre ar diou vro. Unan eus va hentadou, marteze, Loeiz des Déserts, a zo bet penn-abeg eus an emgleo-ze, sinet er bloaz 1532 etre breujou Breiz diouz eun tu ha Roue Bro-C'hall, Fransez I^a, diouz an tu all.

Breiz a gandalc'he da veza mestrez en he zi; lezennou Bro-C'hall a-barz beza laket da dalvezout enni a ranke beza bet kavet mat gant pennou bras ar Vretoned.

Her gouzout a ran, an emgleo-ze n'eo ket bet miret atao, mat a-walc'h, gant Rouaned Bro-C'hall ha torret eo bet gand an Dispac'h, met *an dra-ze, avat, ne doit ket hor gwir.*

A drugarez Doue, Breiz n'eo ket maro ha ne varvo ket! Bugale re vat he deus: kenta tra o deus da ober evid ad-sevel o bro eo studia ha istor ha studia he yez.

Eun diverra eus an istor-ze a gasan d'eoc'h.

Evid anaout hor yez, lennit *Feiz ha Breiz*, *Gwalarn*, « *Breiz* », *Dihunamb ar Skelta Segobrani* ha *Breiz Atao* !

Ha breman, paotred keiz, mall eo d'in tevel, rak skuiz oc'h marteze gant va frezegenn.

Kenavo d'eoc'h holl ha yec'hed mat
Bebet Breiz hag ar brezoneg da virviken

Ho mignon
Emile DES DESERTS,
Laboufadeg Chenard ha Walcker,
Gennevilliers (Seine).

Harpomp hor *Feiz ha Breiz*

P. 13 1. 28.

Aotrou Reñer,

Setu aman 20 lur ha digasit d'in *Feiz ha Breiz* adarre edoug ar bloaz nevez-man. N'emaoun ket a-bred, met pa vez c'houec'h krouadur ez a kemend a c'houezez en o serr hag e vezer berr atao; gwelloc'h e vefe ganen c'hoaz, koulsgoude, tremen gant daou bred bemdez kentoc'h eget chom hep kemeret *Feiz ha Breiz*, hep miz, daoust ma 'z a eul lodenn vat eus va nozvezioù d'hel lenn.

O frota eur gwenneg koz eo e teuer da welet penn piou a vez warnan; o terc'hel hor gwenneien en hor godell, hep rei eul liard d'ar c'hazetennou gall, eo e welimp pebez pennou terval a vezo ouz o renerien: evidoun-me ne roin ket eur gwenneg toull ken d'ar c'hazetennou-ze, keit ha ma vezo hor c'helaouennou brezonek en dienez evel m'e-maint breman.

A-raok harpa traou ar re all; harpomp hon traou hon-unan.
J. PETTON.

E pemzek vloaz

D'an 19 a viz Genver diweza, an A. Rouleau, arc'heskob Quebec, o tizrei eus a Rom, el lec'h m'oa nevez bet grêt kardinal gant Pi XI, a ziskennas e Pariz. Setu aman darn eus ar c'homzou mat a lavaras d'ar C'hallaoued a oa deuet di d'e zalud: « Katoliked ar C'hanada, evit dont a-benn da zigeri, d'ar galleg, doriou skolioù an Ontario, — eur beg-douar hag eman ennan, ar Zaozon hag ar C'hall-

laoued, en eun douezenn, — o deus stourmet epad 15 vloaz. (1) »

O lenn ar gomz-se n'oun ket evit miret da zonjal e stad reuzeudik ar brezoneg, en hor Breiz.

23 vloaz a zo e labour ar *Bleun-Brug*, heb ehan, e Leon, e Treger, e Kerne, e Gwened;

32 vloaz a zo abaoe ma reas, e Lahderne, an A. Buleon, person iliz-veur Gwened, e brezegenn vrudet war « *La langue bretonne, considérée au point de vue religieux, pédagogique, social et national* »;

64 bloaz a zo abaoe ma vez embannet, gant Feiz-ha-Breiz, hep paouez, gwirioù hor yez, e pevar c'horn Breiz, ha gwellaenn ebet hag a dalvesfe ar boan ne weler o tont. Dontou skolioù Breiz-Izel a jom prenet atao ouz ar brezoneg hag ar Vretoned vilhan ne zeskont na lenn, na skriva, er skol, ar yez a zeskont komz, ker brao, war barlenn o mamm, er gêr.

Eun druez eo gwelet eun hevelep tra en eur vro gristen.

Ha perak neuze, a gav d'eoc'h, ne deu ket katoliked Breiz a-benn eus o zaol ?

Daoust ha n'en defe ket o gwir kement a dalvoudegez hag hini katoliked ar C'hanada ?

An hanter muioc'h en deus, rak ma 'z eus diou ouenn jud en Ontario, e Breiz, n'eus nemed unan.

Met katoliked Breiz ne ouezont ket c'hoaz komz uhel a-walc'h; eno eman o fazi; aonik int; dizunanet int; kousket int; maro int; n'eo ket souez eta ne rafed netra evit klask tremen diouto.

Ra gemerint skouer, da vibanan, pelloc'h, war gatoliked ar C'hanada ha ra zifennint, eveldo, war eun dro, o holl gwirioù, re o feiz ha re o yez: ma fle beza penn ar c'hristen-troet warzu an neuv, e dreid a dle beza harpet mat war an douar.

Y. V. PERROT.

(1) Après quinze ans de luttes, n'avons-nous pas obtenu, il y a quelques semaines, la liberté d'enseigner le français dans les écoles de l'Ontario? Croix du 21.128.

KEVRENN AR VUGALE

SENT AR VRO

Ar zent a garit ar starta hag a bedit an aliesa, va mignoned vihan, eo sent ar vro, n'eo ket 'tâ? Mat a rit. Ar zent-se eo ive ar re ho kar ar gwella, ar re a gemer ar muia preder da ginnig ho pedennou da Zoue, ar re ho tiouall gant ar muia aked.

Ar re goz a lavare :

Ma n'hor selaou ket sent hor bro

Ha piou eta hor selaouo ?

selaouo ?

Pedit bepred hag enorit ar « Zent koz o deus graet douar Breiz » hag a zo bet dibabet gant ar Vretoned da batroned d'hor parrezion, d'hon eskoptiou, d'hor bro. Enorit ar zent-se dreist-holl en eur zougen o anoiou gant lorc'h hag en eur o rei d'ho filhored ha d'ho filhorezed vihan pa vezoc'h galvet da veza paeroned ha maeronezed. Lezit neuze a gostez an anoiou « tricolor » a gaver war an « almanagou » (1), pe er romantchou, ha roit d'ar vugale a zougoc'h war maen-font ar vadiziant anoiou sent ar vro. Ne gavoç'h re ebet kaeroc'h, va c'hredit mat. Eur c'hals eus anoiou ar zent-se a zon flour d'ar skouarn evel eur bomm kan eus an dudiusa.

Enorit ive c'hoaz sent ar vro en eur lenn o buhezion. Dre-ze ec'h anavezoc'h anezo gwelloc'h, e weloc'h skleroc'h ar vertuzion o deus heuilhet hag e poanioc'h muioc'h da reiza ho puhez diouz o hini. Kemeret skouer warno eo, hep mar, an doare gwella d'o enori hag ar sura d'hor c'has d'o c'haout d'ar

(1) Sonj a deu d'in eus eun istor. — Eun tad a deuas d'ar 5 a viz mase da lakât bad zi eur mab d'ezan. Tapa a reas eun « almanag » da welet ano ar zant merket evit an deiz-se ha lenn a reas : S. Pi V, pab. Ne oute ket dreist petra verke an niverenn V merket araok ar ger pap. He c'hemeret a reas evit al lizerenn v hag e c'houlennas hevel e ab : *Pivpab*.

baradoz el bec'h ma vezint laouen ouz hon digemet.

Evit ho sikour da anaout gwelloc'h gwella Sent ar vro e savomp er miz-ma evit ar Vretoned vihan.

Kenstrivadeg ar Zent breizat

1) — Pere eo ar zent a zavas an eskoptiou a oa gwechall e Breiz? Lavaret an eskopti a zavas pep sant.

2) — Pehini eo ar zant a ieas da Rom da ginnig d'ar pab gourc'hemennou duk Breiz hag a resevas digant ar pab eur gurunenn aour a roue evit an duk.

3). — E buhez pe seurt sant ez eus hano :

a) eus eur pesk a dalveze da vezur d'ar zant-se.

b) eus eur c'hloc'h kavet e genou eur pesk.

c) eus eur morzol a gouezas war benn ar zant hag hel lazas.

d) eus eur vozad zouar roet e testeni a vignoniach hag a droas en aour.

4) — Pere eo an daou zant breizat yaouanka enoret e Breiz-Izel ?

5) — Pehini eo ar zant breizat a garit ar muia ha perak ?

Aliou evid ar genstrivadeg-man :

I. — Kenstrivadeg *Sent ar Vro* a zo digor da holl vugale ar c'hatekiz, zoken da vugale ar pempvet hag ar c'houec'hvet Pask er parrezion e vez graet enno pemp pé c'houec'h Pask.

II. — War *Feiz-ha-Breiz* — miz meurz e vezo c'hoaz eur goulenn all pe zaou. Ezomm ebet eta da zigas c'hoaz respontchou goulennou ar miz-man, eta.

Eur c'hanfart a zoare

Anavezet em eus, eme dad koz, eul louacher hag a oa eun tarin a baotr, pa veze tommet d'ezan. Eur wech ar zizun e kase tud eus a Lesneven da Vrest en eur pezh wetur vras a oa plas enni da 15 den. Tri marc'h a veze staget outi. A-raok loc'hat e veze eun abadenn ! Eur banne sonn da genta ; kant tro d'e wetur : kant tro all d'ar c'hezeg ; allo, aben ar fin eun taol fouet ha yao en hent. P' en em gaved gand ar c'hrec'h kenta, ar c'hezeg a jome a-zav hag ar charretour a youc'he : — Allo, tudou, diskennit holl.

— Ha perak ?

— Evid espern ar c'hezeg, sur.

Hag e tiskenne an holl. Dal ma veze eun tamm di-naou gand an hent :

— Allo, tudou, a lavare adarre ar pabor, diskennit.

— Ha perak ' ta ?

— A ! gand aon ec'h en em gavfe eun droug ben-nak. En diskennou eo risklus chom er gweturiou.

Hag an dud a ranke diskenn ha bale.

P'en em gaved war ar c'hompez an dud a glaske pignat er wetur.

— « Nann, nann, a lavare ar charretour, baleit. Petra zo kaeroc'h hag esoc'h eget bale war eun hent koumpenn. Ouspenn, mat d'ar yec'hed eo an dra ze.

— Ha peur, neuze, e c'hellimp-ni mont er wetur ? »

— A ! pa jomin a-zav evid eva eur banne ha rei eun tamm kerc'h d'am c'hezeg.

— Han ! bugale, — eme dad koz — petra ho pefe grêt gant kanfarted evelse ?

— O ! ne vijen ket bet nec'het, eme Charlig va breur bihan. Epad ma vije bet ar charretour en os-taleuri, e vijen pignet er wetur ; eun taol fouet ha yao en hent — hag ar pabor a vefe chomet a-dreuz war e vanne.

Melegan.

Pajennad Breuriez-Veur ar Brezoneg

SANT HERVE

Sant Herve skrivet e galleg gand an aotrou Calvez ha trôet e brezoneg gand an aotrou Prigent, sk-udennou gand an aotrou Gwenneg. E Ti-moulerez ar Skridou-mat e Brest.

Si al levr nevez-man eo *al leziregez*.

Da genta, evid *an doare-skriva*. En enep da ali sant Herve ne zent ouz stur ebet, kouls lavarout, pa dremen, evel a-ratoz, eus eur reoladur-skriva d'eun all. Er bajenn genta e welan ar ger « guir » skrivet evel-se diouz giz-distaga Leon, ha pelloc'hik, pajenn 44, « gwir » hervez doare-skriva ar Yez unvan. An daou zon : *w* (a zistager e Leon *u* ha *v* dirag e ha *i*) hag *ou* (distaget hepred *ou*) a vez digemmet mat a-walc'h e penn kenta al levr hag, er penn diweza, emaint dizigemm, skrivet o-daou en hevelep doare (*u*) ; *guir*, *kueza*.

Evid an *h* kemend-all ! *Ha, hep, hervez*, skrivet reiz da genta, a ya pelloc'h da *a, ep, ervez*. Kemeret e vez, da genta, hervez *Reoladur Emgleo ar Skrivagerien*, e evit « son à lui » ha *he* evit « son à elle ». E dibenn al levr setu e trôer penn d'ar vaz : *he* a deu evit « son à lui » hag e evit « son à elle » : sant Herve... en *he* gichen... Eur chapelig... en e c'hichen (pajenn 85).

E-kenver *yezadur* (grammaire) hevelep leziregez ! Gwella perz-mat hor brezoneg eo pa c'hell en em drei diouz menoz-spered pe drivliad-ene, gwella eget ar galleg dre e stummou-frazennou dishenvet hag e zisplegaduriou-verb. Nemet e renk ar skrivagnerien, aes eo gouzout ! anaout da vat ar stummou-frazenna hag an displegaduriou-ze. Hag, ouspenn, ar rannouigoù-verb (particules verbales) m'en em harp ar verb warno. Eun taolig-labour hennez hag a zo re d'ezo, 'm eus aon ! pa reont, zoken er gwella skridou, gand an displegadur dibersonel (conjugaison impersonnelle) hag ar rannig-verb a hogos

e pep lec'h, ha, da heul, red ha ma 'z eo ! er maez a lec'h !
 Henez eo brasa si hon skrivagnerien, re *Buhez sant Hervez* evel ar re-all. A zo gwaz, ar rannig-verb ez a vez trouchet gand ar re-man dre an hanter, ha staget al lost anezi ouz ar verb da heul : *e zeus, e zeas, e lec'h ez eus, ez eas* (evel pa lavarfed e galleg « q u'st, q u'alla » e lec'h qu'est, qu'alla »); *am eus* a vez distreset ganto en *am beus* ha *beza, bout e bet* e penn ar frazennou: *bet en deus bet* e lec'h *beza* (pe *bez'*, pe *bout*) *en deus bet*.

Eur gwall-si c'hoaz, hag hen re voutin, a gavomp ivez en hor 'l vrig : *an dtanaout pinvidigez ha talvoudegez hon araogennou*. Lavaret em eus er miz diweza pegen pouezus eo e brezoneg roll an araogennou. Arabad o diouk-veska ha, dreist-holl ober diouz giz trefoderien Gerne gant *deus* evid *eus*, ouz ha *diouz*.

**

Studou doun a zo bet graet diwar-benn hor sent Vreiz, dreist-holl gand an aotrounez Lothi Duine ha Largillière. Harpet int war eun dro war anaoudegez ar Yez ha hini an Istor. Anat war o labour n'o deus ket oberourien *Buhez sant Herve* heuliet piz a-walc'h o roudou. Da skouer : *Mene-Bre* (*bre* « mont », *Brelevenez* « Montjoie ») n'en deus mann d'ober gant *Menez-Breiz*. Pa zispleger hon Istor, arabad ober eus hor Sent koz « kristenerien » hon tadou, p'edo ar re-man kristen pell a oa pa zigouezjont en Arvorig, o tont a Vreiz-Veur, o bro c'henidik. Dougen dourn ne ve ken da nac'herien hor Broadelez, pa roont da hendadou da Vreiziz, evel d'ar C'hallaoued, ar vriz-C'halianed manet a-ziwarlerc'h ar Romaned, hag a oa en em rôet da bagañez ar re-man, oc'h azeuli evelto Yaou (Jupiter), Merc'her (Mercurius), Gwener (Venus), hag all.

Pep meuleudi d'al labour-enklask diwar-benn skeudennou sant Herve, ha d'an tresadennoù graet anezo gand ar skeudenner ampart an aotrou Gwenneg !

F. VALLEE.

Da reizha er *Bajennad* diweza: e lec'h : ar *Vleun*-lenn: ar *Bleun-Brug* (pajenn 1, eil dilinenna, kenta linenn).

Kenstrivadegou Bleun-Brug 1928

I. — KENSTRIVADEG AR BREZEGEREZ

500 lur a briziou. Ar priz kenta: 200 lur, kinniget gant *Feiz ha Breiz*, a ranko beza roet, en e bez, d'an hini her gounezo.

Ar brezegenn a ranko beza grêt war an danvez-man:

Mikael an Nobletz a zo o vont da gemeret ar vag e Douarnenez evit mont da Gonk-Leon; urz en deus bet da vont diwar douar Kerne; Douarneneziz a zo glac'haret o welet o Zad mat o tec'het diouto. Grit, e diou pe deir bajenn, ar c'himiad en divije gellet eun den yaouank eus a Zouarnenez ober, enn hano e genvroiz, d'ar beleg santelze, d'e drugarekaat eus ar vad en doa grêt e bro. Gerne ha da c'houlenn digantan e vennoz diweza.

II. — KENSTRIVADEG AN A. ROUDOT

200 lur a briziou evid ar studiadennou gwehla savet war an danvez-man:

E parreziou a zo e weler ar brezoneg o koll tachenn gand ar galleg.

Piou eo, er parreziou-ze, ar re a sko ar gwas taoliou gand ar brezoneg ?

Penaos ha pegoulz o deus en em gemeret da ober o fal-lioniou divalo ?

Rei hanoioù ha lavaret, war gement hini a zo da damall, ar wirionez, penn-da-benn, hep damanti, ma chomo testenioù skler hag anat, gouest da lakat da ruzia an dud fallakr a labour a-eneb o bro.

Selaouit mat. — Ar c'henstrivadegou all a vo embannet diwezatoch. C'houec'h miz a zo da ober an diou a em-lannomp hizio.

Kas ar skridou da C'houel Maria Hanter Eost a zeu, da ziwezata, d'an D' Cornic, *Rener ar Bleun-Brug*, Douarnenez.

DIVINADENNOU

DIVINADENNOU MIZ C'HOUEVRER

I. — Skrivit geot sec'h e pemp lizerenn.

Digaset gant M. Dourmap, Plouider.

II. — Alies e vez debret;

Mouzat a oar;

War ar marc'h e vez kavet;

Pep Breizad he c'har.

Digaset gant Yann Perrot, Roskov.

III. — Eur gampr a bevar gorn:

Eur c'haz azezet e pep korn;

Dirak pep kaz, tri gaz;

War lost pep kaz, eur c'haz;

er gampr, ped kaz?

Digaset gant Ronan, lenner Feiz ha Breiz Louven, Beljik.

IV. — Diou vaouez a gerz d'ar marc'had,

O zeod a dro, a dro dalc'h mat:

Ro d'in unan eus da viou

Eme ar genta anezo,

hag hanter muioc'h a viou

Egedout te sur am bezo.

Eben a respontas hep dale:

Ro d'in me unan eus da re

ha me 'm bezo kement ha te.

Ped vi a zo gant pep hini?

Digaset gant Mari Kervella, eus a vourc'h Plougastel.

V. — Fanch Traon-ar-Roc'h, n'eus fors peger yen e vez
ar geany, ne vez morse nemet eun hanter roched gantan
war e gein.

Perag an dra-ze, a gav d'eoc'h?

Digaset gant M. Postec, Sant-Thonan.

Ali. — Digas ar respouchou bep tri miz hepken.

Feiz ha Breiz

Buhez an Tad Julian Maner

Jezuist ha misioner (1606-1683)

E Skolaj Kemper (1670-1677)

Urz ar Jezuisted, nevez savet gant sant Ignas a Loyala, a labouras e pep giz da skigna ha da zifenn ar feiz kristen. Unan eus an traoù talvoudusa o deus gret, eo ar skolachou. E pep korn eus ar Frans hag er broioù all ive o doa skolachou hag e roent enno deskadurez kaer d'ar vugale ha d'an dud yaouank. Mistri oant eus an dibab, ha den ne c'hellfe lavaret ar vad o deus graet. Abalamour da-ze enebourien Doue o deus ato klasket trabas ouz ar Jezuisted, lavaret pep seurt geier divalo enep d'ezo, klasket difenn outo da ober skol.

Skolaj Kemper a voe digoret e miz here 1620. Er penn kenta e voe bodet ar vugale en eun ti roet gant Abad Landevennek, met e 1634 oa savet ar skolaj. Hirio e weler c'hoaz en he zav ar chapel, eur chapel gaer ha bras a zo breman stag ouz al *Lycée*.

An Tad Maner (pe ar *Breur Maner*, rak ne vezo hanvet *Tad* nemet goude e velegiaj) en em gavas

e Kemper dek vloaz goude m'oa bet digoret ar skolaj. Fiziet e voe ennan ar pempvet klas. Kregi a reas kerkent en e labour, hag e poanias d'ober skol d'ar vugale, da binvidikaat o spered dre an deskadurez, hag, araok pep tra all, d'ober d'ezo anaout ha karet Doue. Buan e c'hounezas kalon ar vugale hag e teuas da veza brudet er skolaj.

~ Endro d'ezan ez oa Tadou Jezuisted desket bras ha santel meurbet. N'en doa nemet kemeret skouer varno evit kerzout ive dre hent ar zantelezh.

Unan eus an Tadou-ze, an Tad Bernard, a ran-komp lavaret eur ger divar e benn, rak m'en deus poaniet da zerc'hel an Tad Maner evid ober misionou e Breiz. An Tad Bernard a c'hanas e Razonn e 1585, en eur familh a zoujans Doue. Var c'houec'h vreur, pemp en em roas da Zoue, ha daou a voe Jezuisted. Kaset da genta da Nevers, e reas eno kalz vad ha da c'houde e voe hanvet da zont da Gemper. Nebeut amzer goude beza digouezet e Kemper, ec'h en em lakeas evel e Nevers, d'ober katekiz d'ar vugale, prezegennou d'ar vras, ha buan e voe anavezet ha brudet ; kalz tud a veze o kovez gant an, o c'houlenn beza kenteliet gantan var hent ar zilvidigez.

P'en em gavas ar Breur Maner e Kemper, an Tad Bernard a welas buan pebez spered den oa e vreur yaouank ha peger bras kalon en doa. Alies e komzent etrezo hag e tivizent divarbenn stad truezus Breiz hag an tu da zavetei ar vro-ze. O welet e komprene ar Breur Maner ezommou Breiz, an Tad Bernard a lavare ennan e-unan : « Ha ne vije ket heman an hini a zo galvet gant Doue da gelenñ ar vro-man ? » Hag ec'h alias e vreur da zeski ar brezoneg. Komz a rae d'ezan ive eus ar

vad graet, daou c'hant vloaz a oa, gant sant Visant Fernier, hag a nevez gant Mikael an Nobletz. Met Mikael an Nobletz ne c'helle ket e-unan beza e pep lec'h. Ouspenn-ze, koz oa, brevet e gorf gant ar skuizder, ar binijenn. Poent oa klask unan ben-nak da labourat en e lec'h, evit savetei ar vuhez kristen e Breiz. « Hag e c'hellfec'h lezel kement a emeou d'en em goll, pa vijec'h gouest d'o gounit da Zoue en eur zeski ar brezoneg ? » Ar Breur Maner a responte : « Ober klas, setu va labour breman, hag evit-se deski al latin hag ar gregach. Ma vefe ret d'in deski eur yez all, e karfen deski yez gouezidi ar C'hanada, evit mont d'o zikour. »

An Tad Bernard ne gollas ket fizians. Pedi a reas sant Kaourintin, hag e c'hedas m'en defe adarre tro d'ober an hevelep goulenn d'an Tad Maner.

Er c'houls-se Mikael an Nobletz a gendalc'he e labour e Douannenez. Eun nosvez eus miz du 1630, o veza n'helle ket kousket, o sonjal e stad an emeou e Breiz, o welet pegement a ezomm a oa da brezeg an Aviel, e savas eus e vele, e taoulinas hag e reas ar bedenn-man : « Ho pezet koun, va Doue, eus ar bromesa hoc'h eus graet d'in e Landerne, breman ez eus 17 vloaz. Lavaret ho poa e figasfec'h d'in eur misioner eus Kompagnunez Jezuz evit kelenn gamen ha var va lerc'h ar beg-douarman beuzet e tenvelijenn ar maro. Digasit buan an hini hoc'h eus dibabet. Mamm a garantez, kin-nigit va fedenn d'ho Mab, m'en dezo truez ouzin ha m'am zelaouo. »

Selaouet e voe e bedenn. Klevet a reas eur vouez o lavaret d'ezan : « It da Gemper da skolaj ar Jezuisted. Eno e welot an hini a ro Doue d'eoc'h evit mab. Ar yaouanka eo. »

Hag ez eas, evel m'eo bet lavaret araok.

Nebeut amzer goude ar Breur Maner a yeas, eur yaouez eus miz du 1630, gand an Tad Thomas, da bedi da chapel Ti Mamm Doue e parrez Kuzon, hirio e Kerfeunteun. Dont a reas d'e spered ar zonzj eus eskoptiou Breiz, eus Mikael an Nobletz, eus an ezomm he deus ar vro da veza kelennet, hag o tigouezout er chapel, pa zaoulinas dirak skeudenn ar Werc'hez, e reas ar bedenn-man: « Mamm vat, ma karfec'h deski d'in ar brezoneg, e c'hellfen buan komz ar yez-ze ha gounit d'eo'h serviche-rien. » Distro d'ar skolaj, e lavaras d'an Tad Bernard petra en doa graet, hag e tisklerias e teskfe laouen ar brezoneg, ma vefe roet aotre d'ezan.

An Tadou all eus ar skolaj a enebe ouz c'hoant o Breur Maner, hag heman ne glaskas ket en em zifenn. Met c'houec'h miz divezatoc'h, harpet ato gand an Tad Bernard, e reas e c'houlenn d'an Tad Jacquinot, unan eus Renerien ar Jezuisted. « Aotreet gand an Tad Jacquinot, da zeiz ar Pante-kost 1631, e c'hellis, emezan, d'ar meurs varlerc'h, ober katekiz d'ar bobl. « C'houec'h sizun divezatoc'h e c'hellen prezeg, hep kaout ezomm da skriva ger ebet. »

Setu aze eun dra vurzudus: gellout, e ker berr amzer, komz ha prezeg e brezoneg ! E chapel Ti Mamm Doue eo e komansas ar Breur Maner ober katekiz hag e parrez Kuzon, ha da c'houde e reas ive e Kerfeunteun, Ergue-Armel, Ergue-Gabérik. E daou viz e teskas o c'hredenniou da zaou vil den d'an nebeuta.

Kement-se a rae epad an ehan-skol, rak kenderc'hel a rae d'ober skol er skolaj, hag eun tric'hant bennak en doa en e glas. D'ar zul ha d'an

derveziou gouel eo ez ae d'ober katekiz, diouz ar mintin en eur barrez, d'ar pardaez en eur barrez all, hag ez eas evelse da Lok-Maria, Guengat, Ploare, Pouldavid, Ploneis, Klohars, Sant-Evarzek, Penhars, Plomelin, Pluguffan,

Ezomm a oa d'ober katekiz, rak an dud, emezan, a veve evel chatal. Ha n'eo ket souezus. Pa n'en deus ket doujans Doue, an den a ziskenn izeloc'h eget al loened.

Ar Breur Maner a gave an tu da c'hounit an dud ; gant gras Doue e teske d'ezo buan o c'hredennou hag o lakee da gaout keuz d'o fec'hejou.

E Douarnenez, o veza m'oa kempennet d'ezan an hent gant Mikael an Nobletz, en devoe kalz plijadur o wellet gant pegement a vall e teue an dud da zelaou komzou Doue.

Ober skol da vugale hag epad an ehan-skol mont dre ar parrezioù da zeski katekiz d'an dud, an dra-ze a zo skuizus meurbet, hag ar Breur Maner, d'ezan da veza yaouank, a gollas a nebeudou e nerz, hag, evit krenvaat e yec'hed, e voe kaset gand e vistri da gêr Tours.

Y. U.

Eus an eil emgleo d'eben ⁽¹⁾

Funiculus triplex difficile rumpitur
Eur fun tripl a zo dies da derri !

Bretoned, va c'henvroiz karet,

P'eo bet goulennet ganen ober d'eoc'h eun tamm prezegenn oun bet laket nec'het ; c'houen a zavas em lerou, hag e sonjen : gwelloc'h ' vije ganen ober eun dervez arat ; eünoc'h sur a-walc'h e teuje ganen bommou douar eget bommou prezeg. Koulsgoude mar d'eo red, gwelomp petra c'hellfen d'ober.

Me ' glev lavaret, an aotrou kure du-man a zo eur prezegour mat ; ma klasfen ober evel dan. Hen a laka da genta eur bomm latin ha goudeze hen displeg d'eomp. Me ' ya d'ober evel dan : *funiculus triplex difficile rumpitur*. Petra eo ar c'homzou-ze ?

War a lavar eul leor koz a zo du-man, ar c'homzou-ze a oa skrivet gwechall war eur banniel, banniel labourerien Gwengamp. Rag gwechall a-raok amzer an Dispac'h bras, an holl dud a rae an hevelep micher a oa unanet er memez breuriez. Perak ? evit gellout en em anaout gwelloc'h an eil egile, en em zikour, evit difenn esoc'h o gwiriou, evit deski gwelloc'h o micher. O klevet an eil gant egile penaos ec'h en em den-

(1) Prezegenn graet, el Lykès, e Kemper, gant Sebastian Viol, Renner Syndicat Kerfeunteun, d'an 18 a viz Gwen-golo, da heurgloza « *Sizun al labourerien douar* ».

ment e kavent an tu d'ober evid ar gwella ; rak skiant prena a dalv atao ar gwella (nemet re ger e ve koustet).

An holl vreurieziou-ze a zo bet diskaret gant pôtrez ar Reveulzi. Perak ! evit dont esoc'h a-benn da naska an dud, ha d'ober ganto ar pez a garjent. Eun den e-unan petra eo dirag ar c'houarnamant ? eun netra ; e vouez ne vezo na selaouet, na klevet, el lec'h ma vije kant, mil kant mil o krial, holl a-unan, neuze e vije taolet evez ; neuze e vijent selaouet.

Mat ! en deiz hizio, ar breurieziou-ze eus an amzer wechall a zo o tont en-dro. Chench ano a zo graet d'ezo, gwir eo : lod a ra anezo : emgleo ; « *syndicat* » ; « *mutuelle* » ; « *société* » an drama ; « *société* » an dra-ze ; me a ra anezo holl breurieziou ; an ano-ze a gavan kaeroc'h eget hini all ebet, rak en eur vreuriez an holl a dle beza evel breudeur.

Hirio ar breurieziou-ze o zo o tont en-dro. Gwelit paotred ar c'heriou, labourerien ar staliou-bras, an uzinou, ar vistri-skol, an dud e karg dindan ar c'houarnamant, paotred an hentchouhouarn, holl an dud-ze a zo syndiket, o deus savet breurieziou evit en em zikour, evit gwellaat o stad, ha red eo hen anzañ, mont a ra mat o labour ganto war raok. Pa zavont o mouez, tud ar c'houarnamant o deus aoun, a gren hag a ro d'ezo kement a c'houlennont.

Pet gwec'h, epad ar bloaveziou diveza-man, n'ho peus ket gwelet berrât o amzer labour ha kreski o fae ? seul nebeutoc'h e labouront ha seul hirroc'h int paet. I eo a zo hizio hor mistri ; ganto eo gouarnnet hor Bro.

Ne jom warlerc'h nemet eur rumm dud, an dud diwar ar meaziou, al labourerien douar, ar goueriated. N'eus ket ezomm da veza souezet ma welit teurel ar bec'h warno: seul-vui e labouront seul-vui e taoler tailhou warno. Ar pezh a gerer a reer d'ezo rak n'o deus koulz lavaret den d'o difenn. A drugarez Doue, dihuna a reont. Ar pezh ho peus gwelet ha klevet aman epad ar zizunman hen diskwez sklear d'eoc'h. Poent oa. Ezomm o deus ar goueriated, d'en em glevet, d'en em unani ma ne fell ket d'ezo beza laket, bemdezpad, da varc'h-limon ouz kar ar c'houarnamant.

Petra da ober, neuze a lavaroc'h din. E daou c'her, setu ama ar pezh a zo mat, hag a ve red da ober en holl barrezioù diwar ar mez.

Yann ha Mari a zo dimezet

Yann ha Mari, daou zen yaouank a zoare vat, a zo bet eureujet dec'h. Ema achu ar friko, emaint laket o daou e penn o zammig tiegez. Petra vanko d'ezo da lakat o ziegez da vont mat en dro? peurvuia, atao kouls lavaret, daoust pegen drus e vez bet o argoulou e vanko d'ezo arc'hant. O ! gouzout a ran, doare vat o deus, ha kaout a raint arc'hant es a-walc'h. Er c'herioù ez eus Bankou ar pezh a gerer, tiez kaer, enn dudi o gwelet; e pep parrez, kouls lavaret, ez eus ivez eun noter, a vo eur blijadur ganto rei arc'hant d'eoc'h. Ya ! met pa glaskoc'h en em zizleá, c'houi, sur a-walc'h, ho pezo nebeutoc'h a blijadur. Mont da c'houlenn arc'hant d'ar Bankou, pe digant notered, a zo mont da brena kig digant chas ar gigerien, a lavare

va zad koz, gwechall, hag hirio me gred n'eus ket nemeur a chenchamant !

Petra d'ober neuze ! En ho kichen ez eus eun tiek, 15, 20 vloaz 'zo, e penn e diegez ; dastumet en deus eun toulladig brao e wenneien, a zo kousket e korn e arbell. Ne gredit ket mont da c'houlenn digantan ! Marteze e vezoc'h diarbennet ? Gwir eo ? Perag 'ta ne zavit ket en ho parrez eur *C'hef da bresta*, eur « *C'haisse Rurale* » a zo henvel ouz ar « *C'haisse d'épargne* ». Eno tud ar barrez a laka o arc'hant dibres ; kement a interest o deus evid o arc'hant evl er « *C'haisse d'épargne* » ; alies zoken muioc'h. Eno ivez tud ar barrez a zo eun tamm herr en arc'hant a gavo da bresta, hep mizou ebet, hag an hanter nebeutoc'h a interest da baeá eget e ti eun noter, pe en eur bank bennak.

Kerfeunteun n'eo ket eur barrez gwelloc'h eged ar re all eus an eskopti ; met 30 vloaz 'zo he deus eur « *C'haisse Rurale* ». Morse den n'en deus kollet eur gwenneg ganti. Millionou ha millionou a zo tremenet dreizi, p'eo gwir paotr ar yalc'h a lavare din dec'h e tostea ouz e dri million etre mont-hadont, netra ken nemet abaoe an deiz kenta a viz genver 1927. Dre eno, ar c'halz-vuia eus koueriated ar barrez o deus prenet o c'her, hag an dervezourien, niverus kenan, o deus, koulz lavaret holl, o zammik ti hag eul liorz da heul. Mar d'oc'h fur, savit eur *C'hef da bresta*, e pep parrez...

Arc'hant o deus ezomm da gas o ziegez en dro !

D'eomp larkoc'h ; va daou zen yaouank o deus eun tiegez, o deus arc'hant etre o daouarn. Petra

o deus da ober breman evit kaout eost mat, ha lakat o douarou da dalvezout evel m'eo red? E labourat hag e drempa : an douar a zo re goz d'ober goap anezan. Ma ne roit netra dezan ne roio netra d'eoc'h. Ezom o deus eta eus benvia-chou, mekanikou, trempjou, ludu hag all. E pe lec'h e kavint? Er c'heriou adarre ; er staliou bras. Ya, met, hen lavaret am eus deoc'h holl baotred kêr a zo syndiket, o deus en em glevet war o fri-ziou, ha ne roont ket o marc'hadourez war goll, pell ac'hano; va c'hredit, savit eta en ho parrez eur *syndicat* etre labourerien douar. Eno c'houi gavo da brena kement ho peus ezomm war dro ho tiegez; evit eur priz onest, ar priz a dalvezont e gwirionez. Eno c'houi gavo trempjou, ha n'o devezo ket hepken liou ha pouez al ludu met ivez « vertuz » ar gwir ludu.

Met gwall gollou a en em gav

Kerzomp pelloc'h c'hoaz. Labourer eo o douar gant va daou bried yaouank. Eost mat a zo er parkeier. Emaint e tro d'ober eur bloaveziad eus ar re wella, ha da c'hellout lakat eur gwenneg bennag a gostez evit sikour sevel an aeligou a zegaso Doue d'ezo divezatoc'h. Siouas! en deiz all an diou gazeg, diou gazeg a briz, a zo aet, dre laer, war ar melchen. Kroget ar gwent enno, unan a zo maro; evid ar bloaz-man, kollet o holl foan gant va daou bried ma n'o deus ket bet ar skiant da asuri o loened er « *Mutuelle-Betail* ». E pep parrez, war ar mêz, e tlefe beza eur « *Mutuelle-Betail* ».

Ha gwall zarvoudou!

An dichans a zo kouezet war diegez Yann ha

Mari. Petra zervich d'eoc'h, ar chans hag an dichans a ya hag a zeu, war ar mêziou evel er c'heriou. En deiz all eta, o vont da gerc'hat eur c'harrad lann, ar mevel bras a zo bet torret e c'har d'ezan, brao c'hoaz pa n'eo ket bet lazec'h. Hervez al lezennou a zo hirio d'ar mestr eo paea ar medisin, al louzeier, an « operasion » hag eur « bansion » pa vez tro, d'an holl dud mac'hagnet en eur labourat evitan. N'eus ket da lavaret nann, paea a rannoc'h! Asurit eta ho servicherien; eun dra red eo, pe c'houi a vezo rivinet, pa zonzoc'h an neubeuta hag evit hen ober diviz, savit en ho parrez, ken etrezoc'h, eur « *Mutuelle-Accidents* », eun asurans darvoudou.

Paour keaz Yann, c'hoaz eun taol dichans kouezet warnout. O tont d'ar gêr, eus ar marc'had, e kav e diegez, troet en eur bern ludu: an tan-gwall. Rivinet adarre ma n'en deus ket bet a skiant da asuri e diegez ouz an tan. E pep parrez e tle beza eur « *Mutuelle-Incendie* », eun asurans tan.

Evit gellout herzel eo red d'ezo en em harpa war o c'henvroiz

Caisse Rurale, Syndicat, Mutuelle-Accidents, Mutuelle-Betail, Mutuelle-Incendie, pemp emgleo, pemp-breuriezh hag a dlefe beza savet e kement parrez a zo war ar mêz; a hent all al labourer-douar ha pa ve en e aes, pa zonzjo d'ezan ez a e diegez en-dro, evid ar gwell, a c'hell beza rivinet.

C'houi a lavaro din: n'eo ket red sevel an holl breurieziou-ze er parrezioù p'eo gwir er c'heriou ni gav kement a zo red evid an dra-ze. Ya, gwir eo, e kêr, e kavfoc'h Bankou, Kompagnuneziou Asurans, n'eus forz pegement. En hor c'hichen, e

Kemper hepken ez eus eun 30 Kompagnunez bennak; Bankou n'eus forz pegement, ha bemdez e saver re nevez, ha tiez, me lavar d'eoc'h, n'eo ket mez o gwelet. Hag an dud a zo er Bankou ha Kompagnuneziou-ze a vez gwelet bemdez o redet, war ar mêziou, gant kirri dre-dan ken lugernus hag an heol e-unan; ar pezh a ziskouez sklêr awalc'h n'eo ket re fall ar vicher. Ha c'houi a gav d'eoc'h, tud diwar ar mêz, an arc'hant a roomp d'an aotrouned-ze ne ve ket koulz etre hon daouarn d'eomp-ni, p'eo gwir eo bet gounezet ganeomp?

Penaos sevel ar breurieziou-ze hag o c'has endro? Netra aesoc'h. Kerfeunteun n'eo ket gwelloc'h parrez eged eun all. N'eus ket enni desketoc'h tud eget e parreziou-all. Savet he deus, pell-ze, ar pemp breuriez-ze hag evit c'hoaz n'em eus klevet nikun eus ar re a zo enno, (hag ez eus kalz tud), hag o dije bet da glemm anezo; holl avat e welont ar vad a reont.

Gounidegez a gavimp e pep giz oc'h en em harpa an eil war egile

Ar pemp breuriez-ze a dlefe beza savet en holl barreziou ha setu aman parag:

1) — Abalamour m'int gwelloc'h marc'had, kalz, eget ar C'hompagnuneziou, hag ar Bankou, pe an Notered. Kemeret arc'hant eus ar C'hef da bresta, pe en em asuri en eur « *Mutuelle* », a zo, ne gredan ket fazia kalz, an hanter gwelloc'h marc'had eget mont er c'heriou da glask. Eun dra bennak eo en amzer hirio m'eo ken ker an arc'hant hag an asuransou.

Perak int gwelloc'h-marc'had! abalamour, hervez e lezennou ar vro, n'eus ket a dailhou warno, ha netra kouls lavaret da baea vit o c'has endro.

2) Abalamour gant ar breureziou-ze hon arc'hant a jom er vro, er barrez, e c'hellomp her c'haout pa garomp; morse ne vez kollet, e lec'h e Kompagnuneziou kêr; an arc'hant a ya keit, awechou, ma ne gav mui an hent da zont d'ar ger, ha ne c'heller ket e gaout pa vez c'hoant. Gwelloc'h c'hoaz: ma vez renet mat Asuransou ar barrez, e teuiet hep dale da veza pinvidik ha neuze e c'heller bihanaat priz an asurans pe zoken o rei evit netra. Kement-se a vez graet e meur a lec'h, dreist-holl evit asurans an tan-gwall, e lec'h an arc'hant paët d'ar C'hompagnuneziou a zo arc'hant kollet.

3) — Gant Asuransou ar barrez, an dud diwar ar maez ara o aheriou o-unan, ken etrezo; ezomm ebet da vont da gaout aotrounez eus Paris, Marseille, Zurich pe ne oar den a be lec'h, ha pa lakaint o fri en hon afferiou n'her graint ket evit netra, va c'hredit.

4) — Asuransou ar barrez a laka muioc'h a garantez etre an dud. Pa en em welint en o bodadegou, e teuint d'en em zikour, rak mad unan a zo mad egile. Ma c'hellit diouall hoc'h amezeg diouz eun droug bennak, diouz an tan pe eun darvoud all bennak, e rit vad d'ezan ha kement all d'eoc'h hoc'h-unan rag hoc'h arc'hant koulz hag e hini eo a dleo paea an darvoud-ze.

5) — Asuransou ar barrez a roio muioc'h a zeskadurez d'an dud diwar-benn o stad; o klevet en ho podadeg ar re zesketoc'h egedoc'h, koulz hag o

kounto hoc'h unan ar pezh ho peuz gwelet, e teuoc'h, a neubendou, da veza barrekoc'h war o stad.

6) — Kaeroc'h c'hoaz, hag aman eman va ger diveza: asuransou ar barrez n'int ket hepken eun dra vat, eun dra red int. Perak? Evit ma c'hellou an dud diwar ar maez difenn o gwiriou. Stad al labourer-douar a zo start, tenn, poanius, er miz, dre beb amzer, labour eus ar mintin betek an noz, n'eo ket eiz eur labour eo avat ! Abaoe ar brezel eo bet eun tammig bennag gwellaet hor stad, met siouaz tenna hor beuz graet warnomp gwarizi an holl. Ni hag a zo o c'hounit bara d'an holl eo a zo tamallet da veza kaoz d'ar « bara ker ». A bep tu e kinniger d'eomp hor gwaska. Gwelit azalek hirio, kement a werzomp diwar ar miz a zo bihanaet e briz; kement a brenomp a zo atao ken ker pe geroc'h. Petra da ober: en em glevet, en em unani. Sevel e pep parrez breuriezioù etre al labourerien-douar, staga ar breuriezioù-ze holl ouz « *Office Central* » Landerne; eno ez eus tud a volonteiz vad, tud a benn, tud gouizieki hag hon difenno. Pa c'hellint komz en ano 100.000 labourer-douar e vezint klevet ha selaouet. Di e rankomp mont pe ni gouezo adarre en toull izela. Evel ma lavare ar re goz a jomo atao guir:

War ar miz e vez savet an houidi,
Hag e ker ez eont da zibri.

Eur skouer eus ar pezh a c'hell an emgleo ober

Lennet em eus, en istor Breiz, war dro ar bloaz 1380, en amzer an duk Yann IV, hon tadou koz, war zigarez m'oa o duk re vignon d'ar Zaizon, o


doa hen taolet er miz eus ar vro; an dizurz a oa etre holl rummou tud Breiz: noblansou, beleien, komversanted, koueriated; ne c'hellent ket mui en em glevet; mont a rea, fall mantrus, an traou gant hor Bro; Roue Bro-C'hall, Charlez V, a wele gant joa an dizurz-ze. Digas a reas e zoudarded e Breiz, war zigarez lakat ar peoc'h ha kement hag ober e tisklerias e vije stag hor Bro hiviziken ouz Bro-C'hall: e vije gouarnet gant Gallaoued; e paejet an tailhou d'ezo hag e plegjed d'o lezennou. A drugarez Doue daoulagad ar Vretoned a zigoras neuze, o welet pebez danjer a oa evito; raktal e rejont peoc'h etrezo; golver a rejont en-dro o duk; holl ec'h en em vodjont en dro d'ezan hag a vouez uhel e tilsklerijont da Roue Bro-C'hall e felle d'ezo chom digabestr hag en em c'houarn o-unan, hervez o lezennou, hag o gizioù koz. Charlez V, roue Bro-C'hall o welet ar Vretoned, *holl a-unan*, sounn en o sav, ne gredas ranna ger ebet ken; Breiz a jomas digabestr.

— Setu aze eur skouer eus ar pezh a c'hell an emgleo ober.

Epad ar brezel, ni Bretoned a zo bet taolet warnomp ar bec'h pounnerra, ni dreist-holl tud diwar ar miz eo hor beuz kalz, muioc'h eget rumm dud all ebet, skuillet hor goad. Gwir hor beuz eta kement ha muioc'h eget n'eus forz piou da zével hor mouez. Met ma ne vez nemet unan aman, unan ahont o krial ne vezo ket selaouet, Red eo en em unani. Eun neudenn zo aes da derri; kant-mil neudenn, a ra eur gordenn ha ne dorr ket: *unvaniez a ra nerz; funiculus triplex difficile rumpitur. Amen.*

AR MAB :-


Savet e Bro-Wehed



Gwech - all, va mamm ga - ret, Me 'meus bet pli - ja-



dur, Pa ve - zen lus - kel - let, c'houi a ga - ne d'ho krou - a-



dur, Gwech - all, va mamm ga - ret, Me 'meus bet pli - ja - dur.

II

Da vintin pa zaven
Me 'm eus bet plijadur
Pa laren va fedenn
C'houi 'bede gant ho krouadur,
Da vintin pa zaven
Me 'm eus bet plijadur.

III

Epad holl va buhez
'Vit m'em bo plijadur
C'houi 'gant d'in bemdez:
Kamit, kamit d'ho krouadur,
Epad holl va buhez
'Vit m'em bo plijadur.

Miliner C'houec'h fourn ar Waremm

En unan euz parrezioù didrouz ar C'hap Sizun, e Kerne, er vro zispar-ze, kelc'het kazi holl gant ar mor bras, e oa bet ganet ha badezet, breman zo eur pennad amzer, Lommig ar Rouz, an hini am eus c'hoant da gonta e istor. Kreski ha bleunia a reas evel eun hunvre, dindan heol bero an hanv, kerkoulz dindan gwall amzerioù ar goanv, o tremen bep eil.

Koll a reas e vamm ez-yaouank, hag er bloaz naonteg kant pemzek, e kreiz reuz ar brezel braz, e dad a gavas ar maro war dachen an emgannou, en eur zifenn e vab muia karet. Kalon ar paotrig, a vennas neuze ranna gant ar c'hilac'har gand ar c'helou-ze a waskaz kement e spered, en eur greski muioc'h mui e enkreiz, o velout e oa dilezet e-unan penn war an douar-noaz.

Evelato, kendele'her a reas e vuhez e ti e gavell, hag e kreiz e ganvou, a-dreuz e zaelou c'houero a vugel, ne ehane da veuli ha da garout, al lochenn-ze toet gant balani, a jome a-zav warlerc'h e dud.

Bemdez, en eur zistrei euz e zervez labour, ne gave den d'e gennerza, nemed e gazig du chomet da ziuall an ti.

Petra 'ta, a vire ouz Lommig, da lavarout kenavo d'e vro, d'e di ha d'e gazig du, evit mont da c'hounit e vara, duhont d'ar c'herioù bras?

Netra, nemed e galon a vreizad.

Ya, e galonig me zo sur, a vije bruzunet, m'hen dije ranket dilezet kaerder ar meziou, houlz ha c'houez vat ar bleunioù; mui tamm levenez evitan; e ziouskouarn a deuje da veza pounner, hep kan dudius an eostig; e zaoulagad ivez a gargje a zaelou, ma ne welje ket mui tour e illiz parrez; ne vije ket ken neubeud yec'hed ebet evitan, heb ear fresk ar mor glas, ha dreist holl, ne oa ket evit dilezel e vestrezig

muia karet, e amezogez, Lizig, rouanez e galon ; hi hepken, oa evitan gwir berlezenn ar vro, gant he zal gwerc'h, hanter gelc'het gant he bleo melen, rodellek, a rae dezi beza kurunet ; he zroad a oa ken skanv, ma ne zeblante ket diskuiza, nemeur, war an douar ; he mouez tener a oa dudius da glevet o tiskana ; zoken he c'hoef dantelezet, a rae anezi eur gwir Vreizadez.

Ya, kaer oa Lizig dindan he naontekvet nevez amzer, ha petra bennak ma oa kaer, an dra-ze ne vire ket outi da veza kempenn, hag aketuz d'he labour, Emichans, an dra-zè a reas da Lommig mont d'he goulenn da bried, digant he c'herent. E gwirionez ne oa ket diou galon d'en em garout kement, met, siouaz rebechet e voe dezan krak ha berr, e baourentez ha ne zeree ket diouz e renk, eur plac'h yaouank fur ha pinvidik, evel ma oa Lizig, daoust d'ar garantez a oa etrezo. Koulskoude, e voe lavarèt dezan, m'hen dije bet eur vilin, hag hanter kant skoed ouspenn, ne vije digarez ebet da jom hep rei dezan dourn Lizig, rak Lizig, war lavar ar vamm, a ranke dimezi gant eur miliner.

War ar geriou-se, daoulagad glas Lizig a deuas da veza leun a zaléou. En em denna ' rankas en eur c'horn d'o c'huzat, hag evit dizonjal holl he muia karet.

Lommig, daoust d'e velkoni, ne lavaras grik, o kwitat treujou ti e vuia karet, nemet en em lakat a eure da zonjal, ha da gredi hep eil ne c'hellje biken kaout Lizig evit pried, rak n'oa ket gouest da zevel, nag eur vilin zour, nag eur vilin avel, gand ar pemzek skoed ha tri ugent, a oa en e c'hodellou. Divezat oa, pa gemeras penn an hent da vont d'ar gêr en deiz-se. Chom a reas er vourc'hadenn dosta, da rannella gant kamaraded, kenseurtes e yaouankiz, m'oarvat evit klask dizonjal ar birou, a oa o waska e galon. Ankounac'hêt en doa, e ranke tremen dre « Doull ar Roc'h » evit tizout e lochenn.

A vec'h en em gavet, el lec'h gouez-se, eno ha ne glever en noz, nemed kan glac'harus ar gaouenn, pe eul lapous-noz bennak, m'en em gavas gantan eun den koz, baro louet d'ezan.

— Noz vat, conotr, a lavaras Lommig, en eur gre-na gant ar spont, d'en em gaout trumm gant eun den en noz.

— Noz vat, Lommig, a respontaz raktal an hini koz ; penaoz en em gav ganez, ma fôtr, beza d'an eur man, o tremen, da-unan penn, al lec'h gouez man ?

— Trugarez, ma conotr mat ! n'ouzon ket, penaoz displega deoc'h frailh va c'halon ; va unan emaoen war an douar noaz ; va buhez, a zo peuz henvel, ouz al lec'h gouez-man. Bez 'ez eus koulskoude, eur steredenn, o para em flanedenn ; eur galonig a zo, hag a c'hellfe, laouennât va zrubuilhou, met, siouaz ar garantez-se, a zo dalc'het pell diouzin, dre ma 'z eus c'hoaz tud, hag a zo stag o c'halon ouz madou ar bedman, evel ar brennig ouz kerreg an ôd, dre ma 'z eus tud hag a gred eo red kaout aour da ruilha, evit beza eurus. Evit-se m'oarvat, pennher ar C'houec'h fourn, a vir ouzin karantez e verc'h Lizig ; hirio zoken, en deus lavaret d'in trumm, e rankan sevel eur vilin, evit daouhanteri va buhez, gant hini e verc'h. En aner ; ne ouezan ket c'hoaz, e pelec'h eman ar mên kenta. Koll a ran va nerz-kalon, rak, ma foan a zo dister, ha dreist holl va yalc'h a zo goullou ; ne jom siouaz ganen, goude trei va godellou war an tu eneb, nemed pemzek skoed ha tri ugent.

— Gwir eo, va mabig, met krog hep marc'hata er stur ; goulenn skoazell da amezeien, hag e arrui e penn da labour. Rak an oll e Breiz, gwazed ha merc'hed, bras ha bihan, a vezo laouen o tigas pep hini e ven ; an holl vansonerien, a zo o rei brud d'hor c'horn-bro, gant o orz hag o c'hizell, ne varc'hatint ket, evit rei dit harp ha sikour ; rak em amzer d'in pa veze meneg, da zevel eun ti d'ar paour, eun iliz d'ar zent, eun tour pe eun ti-skol d'ar barrez, dre vi-

hierou eo, e kinnige an dud, o foan hag o feadra ; chom a ra atao brud war o lerc'h, a dreuz ar c'hant-vejou ; goulennit testeni digant an ilizou meur, digant touriou Sant Kaourintin ha dre Vreiz a-bez. Beteg ar brezelour breizad, ar Gwesklen, o veza bet harluet gant e enebourien, e kreiz tenvalijenn e brizon a zisklerias, ne oa ket eur vreizadez o c'houzout neza, ha ne vije ket laouen o rei eur gigellad evit e zasprena ! Rak-se kemerit fizians, ma mab.

— Ya, ma eontr, kaer e oa beva, e Breiz en o amzer, met eur pennad-zo, n'eus mui an hevelep karantez en hor bro ; kalon an nesa, a zo deut da veza yen sklas, d'an deiz hirio ; koumoull du a zav etre an amezeien zoken ; an Aotrou Doue, ne deu ket ken da veachi dre amian, evel gwechall gant e vignon sant Per. O amzer dremenet ! Peur e teuo endro ?

— Faziâ res, ma Lommig kêz ; chom a ra c'hoaz, a walc'h a had breizad hag a c'hoëll kristen. Te, da unan, a zo eur skouer d'an holl ; kavet em eus en dro-man, an hini a c'hedan mil bell-zo ; me da zikouro e peb amzer ; peb galloud a roan dit. Kemer va gwialenn, hanter zebet gant an amzeriou, ha gant he urz, e c'helli, gouestadik, sevel da vilin, kaer, met dereat, en eur zalc'her sonj euz ar c'hrenn-lavar

Kalon an den a zo c'hoantus,

P'he deus bet gwenn e c'houlenn rus !

Da vestrezik Lizig, a ranno ganez, poaniou ha levenez he c'halon ; o taou e teuoc'h da veza skouer ar vro, rak-se kendalc'h va mab !..

Eur miz goude, epad ma nije, eskell gwenn, milin ar C'houec'h fourn, gant kant tro ar munud, e voe benniget eured Lommig ha Lizig, e kreiz ar brasa levenez. Ar re ne nac'hont na Doue nag o bro a dro mat an traou ganto, ato !

M'hen asur d'eoc'h, mar bevan ugent vloaz ac'han, e vezin laouen o tont da gonta d'eoc'h fin va istor.

Beg-ar-Raz, 18-1-28.

C. C. C.

Kenteliou var al labour-douar

Panez ha karotez

Ar panez a gar an douar pounner ha fetis ; en douar skanv eo gwelloc'h hada karotez.

Roet e vezo d'ezo an temps a vez roet d'ar rabez, da lavaret eo :

20 karrad teil.

300 lur super pe gaoc'h-houarn.

100 lur potas klorek.

100 lur azot soudek.

Pe c'hoaz 300 lur wano graet gand ar penn-tiegez, evel hon eus lavaret kentoc'h.

Evid ar panez, koulz hag evid ar rabez, e vezo troet doun an douar ha kempennet a-zoare, rastellet zoken, a-wechou ; ne aliomp den d'hen ober kouls-goude, met red e vezo freuza ha krana [roulouerat] an douar, diou pe deir gwech.

Arabad eo hada re abred ar panez ; war va meno, ar gwella koulz d'hen ober eo miz ebrel.

Ar gouennou panez

Ar panez hir. — Had ar ouenn banez-ze eo a vez hadet peurliesâ ; an had panez dibabet e Brest, gand an A. Bihan, a zo eur peuz-gouenn [sous-race] vat anezo.

Panez ar Forest. — Ar re-man a zo eur peuz-gouenn ivez eus ar panez hir.

Ar panez hir penn kleuz. — Er panez-ze, an deliou e lec'h beza, war eun uhelenn, a zo e kreiz eun toulig, war benn ar c'hwizienn ; ken hir hag ar panez all eo panez ar ouenn-ze ; met tefoc'h int ha n'eus ket founusoc'h egeto.

Ar panez hanter hir a Wernesey. — Eur ouenn vat tre, berroc'h eged ar re all hag eo, martezé, ar ouenn wella da c'hounit.

Evel m'hon eus lavaret, eur wech kempennet mat an douar, ar panez a vez hadet gand an haderez, evel ar rabez; pemp santimetr ha daou ugent a vezo lezet etre ar roudennoù; 10 pe 12 lur had a vezo red lakat e pep dervez arat.

Pell e vez ar panez o kreski, er penn kenta; dioc'htu ma vezo gwelet ar roudennoù o c'hlasvezi e vezo mall o c'houennat pe gand an tranch pe gand ar c'houennerez dre gezeg.

Rouesaet e vez ar panez pa vezont teir deliennet, en eur lezel eun troatad (30 santimetr), etre pep hini, evel evid ar rabez; red eo o rouesaat gand evez.

Diou wech all c'hoaz e vezo c'houennet ar panez; mar d'int hadet a-roudennoù, ne vo ket kement-se a zale oc'h ober ar c'houennerez gand an tranch.

Atao, koulz lavaret, e vez dastumet ar strev-panez da rei d'ar chatal, evel re ar rabez. Eun dra fall eo ha kement-se a vir ouz ar gwriziou da greski. An deliou panez koulsgoude a zo eur boued mat kenan hag a dalv kement hag ar gwriziou; mat eo o dastum, met red eo hen ober, an diwezata, ar gwella.

Diaes ha labourus eo tenna ar panez; koulsgoude mar d'int hadet a roudennoù ne vezo ket ker poanius; pa vezo kavet eur ouenn banez, o devezo o fenn er mêz eus an douar, ne vezo ket diaesoc'h o zenna eget tenna ar garotez.

Ar panez ne vezont ket tennet holl, en eun taol, evel ar rabez pe ar garotez; tennet e vezont aneboudou rak krenv int ouz ar skourn ha dizec'ha a reont er mêz eus an douar.

Ar garotez n'int ket koulz d'ar chatal hag ar panez, met ne deuont ket da ger ker, ken nebeut..

An douar skanv ha trezok eo an hini a blij d'ezo ha pa blij o douar d'ezo e roont eostou ker founnus pe founsoc'h eged ar rabez.

Ar gouennou garotez

Ar garotez gwenn, glas o fennou. Ar ouenn-ze eo an hini a ro ar gwella eostou; an hanter anezo, pe dost, a zo er mêz eus an douar; aes int evelse da denna.

Karotez dibabet Orthes; berroc'hik eged ar re all; tefoc'h ha dounoc'h en douar; eur ouenn vat tre ivez.

Ar garotez melen; darn a lavar int magusoc'h eged ar re wenn; n'ouzoun ket; ar pezh a ouezan eo n'int ket ker puilh.

Karotez ruz Sant Valery a vez gounezet, a-wechou, evid ar chatal ha dreist holl evid an dud.

Tempset e vez an douar d'ar garotez evel d'ar rabez ha d'ar panez.

Ar gwella miz da hada garotez eo miz ebrel; ar gwella zoken eo gortoz hanter ebrel a-raok hen ober; gellout a raer hada garotez c'hoaz, zoken, e deizioù kenta miz mezeven; met, arabad neuze gortoz eun eost ker puilh anezo.

Hada ranker ar garotez gand an haderez, evel ar rabez; 45 santimetr a vezo lezet etre pep roudenad; tri pe bevar lur had, dre zervez arat, a vezo red hag a-walc'h.

C'houennat a vezo graet ar garotez evel ar rabez hag ar panez; arabad ken nebeud ankounac'haat d'o rouesaat; eun troatad, war ar rouden, etre pep hini n'eo ket re.

Ar strev garotez a zo eur boued mat d'ar chatal; met arabad eo o c'hutuilh re abred.

Ar garotez n'int ket ker kizidik ouz ar skourn hag ar rabez; koulsgoude n'eo ket mat o lezel, eur wech tennet, war an douar, na dre ar skourn, na dre ar reo. Mat e vezo ivez o golei gant gouzer, ma o lezer er mêz.

Olier CHEVILLOTTE.

Yann an dichans

Yann an dichans, n'hen anavezit ket, lennerien ?
— Nann ! hag a be lec'h e rafemp ?

— A be lec'h ? Asa 'ta ! pa'z eo Yann an hini a anavezit, m'oarvat, ar gwella en ho parrez, marteze e tlefen lavaret en ho karter pe zoken en ho tiegez. N'emaoc'h ket heb e anaout, pegwir e vevit bemdez an eil e serr egile ; ha ma rofen d'eoc'h hepken eun tamm doare anezan, ne vijec'h ket nec'het evit kaout e hano ha prenna d'in va muzellou : « A-walc'h am eus klevet, eme c'houi ! Emaoun ganti ! Yann an dichans ! Ya sur, hen anaout mat a ran hag end-eün edon bremaik o varvailhat gantan ! »

Yann an dichans, e gwirionez, dre holl eo anavezet rak dre holl her gweler hag her c'hlever. Eun diaoul a zen pe eur paour kez a spered, siouaz ! Evel a geroch, eo. War an douar, n'en deus ket, diouz e glevet, eun tamm chans gant netra. Met penaos en dije, pa dlefe lavaret ken alies ha bep tro : Dre va faot, dre va brasa faot ! Unan a zaou a c'hoarvez gantan hep mank : pe ne anavez ket an tu mat da gemeret an traou pe ne gompren ket eur siseurt e kement a zell outan eus a dost pe eus a bell.

Nann ! er bed, an traou ne deont ket en dro, evel ma' karje. Pell ac'hano zoken. Ha ma vije Yann ar Mestr bras, ne vije ket pell sûr a-walc'h evit lakat eur bern traou, mesk ha mesk, war zigarez digas en o zouez eun tamm urz.

Ma kouez glao : « Na pebez dichans warnon, emezan. Set' aman avat hag a zigaso gwellaenn em divesker paour, krog ar remm enno ! Na falla amzer vreïn, gouest hepken da vaga klenvejou ! » Ma sko an heol a gign : « Dichans adarre ! a lavar Yann. Fallakr a heol o klask affer evelse ouz va fenn dis-

to, moal evel rutaenn. Bremaik gand eur c'hoz taol heol, e vezo bouedenn va empenn a-bez o virvi. »

Mar bez an amzer etre daou, ne deo nemet gwasoc'h c'hoaz evit Yann. Evit ober e dro-vale pemdeziek goude lein, petra da gemeret ? E benn-baz kizellet ker koant, pe e zisc'h'laoyer dislivet, e gamalad koz ? An dibab n'eo ket eas, rak bep wech, en hevelep tro, Yann a gouez warnan eun dichans, eun dichans ken divalo, ma sav gantan keuz re ziwezat da veza kemeret an eil e lec'h beza kemeret egile.

Evelse eman dalc'hmat an traou o c'hoari outan war an tu eneb : hed-a-hed e vuhez, n'en deus nemet koll war goll, ha dichans war zichans. War an hent-chou o unan, n'eus ket eur c'horn tro hag a vije grêt mat dioutan.

Ha petra 'ra neuze, pa gouez warnan eun dichans ? Petra ? Eun all marteze a c'hellfe c'hoarzin leiz e gov ouspenn eur wech... Met Yann ! Yann ne c'hell nemet egari ha kounnari gwasoc'h gwaz enep Doue hag eneb an dud.

Eun dervez Yann en devoa laket en e benn karga eur varrikenn, ha, gant ar zonj, se war e spered, e ya da gerc'hat eur founilh pe eun trezer. Ac'hanta ! Ha n'oa ket kement se kregi en e labour dre ar penn mat ? Eo, a dra zûr. Hogen evit kenderc'hel, Yann en em gemeras falloc'h. Ar founilh gantan etre e zaouarn, sellet ha sellet c'hoaz a rea outan, dre zindan, divar c'horre... ha pa ne lavare ger ar benveg mut, Yann ne jomas ket pelloc'h da nec'hi. Dao ! ha setu an trezer, nann e toull ar varrikenn, met war an toull : ar c'har d'an nec'h hag ar c'henou ledan da c'helei ar bount. Ha Yann tapa peg en eur picher, e garga, ha, gand evez en aon da goll eur berad, skuilh ar picherad gwin dre ar gorzenn... Allaz ! allaz ! n'eo ket ar pez a c'hoantae Yann eo a c'hoarvezas ! Na pebez dichans, gwasoc'h eget biskoaz ! Ar gwin ne dea tamm ebet er varrikenn, met diwarni

koueza a rea d'an douar; hag ar pezh a vije bet an evach prisiusa ne oa mui nemet poulladou ruz. Ha Yann, savet ar gwad d'e benn, da gounnari ha da langachat a eneb ar founilh fall hag ar barazer falloc'h en devoa her grêt.

Lakit stoup en ho tiskouarn, va zudou, ha ne vezoc'h na bouzaret na gwañ skoueriet gant malloziou Yann an divezet !...

« Kea gand an diaoul diwar va zro, benveg didalvez. Koll-danvez ! » Ha var lerc'h ar picher, grêt gantan e genta ha diweza nijadenn, Yann a stlapas ouz ar voger an trezer milliget. N'eo ket ar vein eo a frailhas ; an trezer eo a faoutas, ha kement, ma kouezas e tammou, evel m'oa kouezet en e raog ar picher bruzunet.

Hag ar barazer, en devoa grêt ha gwerzet seurt ijin fall, a dape war e gein malloziou ifern ha var e benn hanoiou laer : « Boued ar groug ! Darzod fallakr !... » ha me oar...

Evidon-me, en em gavet eno, dres war an taol, chom a rean e tal an or, hep kredi mont nag araok nag adrenv ; gand aon da veza flemmet gand ar gerioù divalo ne c'hellent na tiza na gloaza ar barazer, ha muioc'h gand aon da veza war hent an tammou trezer a c'hellje beza c'hoaz strinket pelloc'h. Ne greden ket lavaret grik. Ne greden ket zoken mouse'hoarzin. Em diabarz avat, ar sonjou a ruilhe, hag e lavaren d'in va unan, mantret net :

— Paour kez Yann, evit hirio, eman divouedet mat e benn pe trellet e zaoulagad gand an evachou. Sot eo da staga pe leun da ruilha. Petra 'n diaoul ! Emichans evit ober labour vat gand e founilh n'en devoa nemet e lakat war an tu mat... ha, ma n'oa ket gouest da anaout an hini mat diouz an hini fall, n'en devoa nemet kemeret kuzul e poent ! »

Ne dean ket evit-se da lavaret : « Yann va mignon, an trezer, evel eur c'halz a draou all, ret eo e gemeret dre ar penn mat ! » N'oa ket ar mare da rei

aliou : n'edon ket e chal e vije kailharet d'in va fol-tred ha c'hoant ebet n'em boa da glevet gourc'hemen-nou ha n'oant ket gounezet gahen. Trei a rajen war va zeulioù, ha me, didrouz, da skampa kwit ac'hano. « Warc'hoaz, eme ve, e rin ar gefridi am digase aman hirio ! »

Ha war an hent, en eur bellât diouz ti Yann, ne oan ket evit ankounac'hat an daolenn souezus am oa gwelet.

Eus an daolenn-ze, eur gentel dalvoudus a oa da denna.

Aman hag a-hont, kaout a reer hiniennou ha ne baouezont da c'hrozmolat enep Doue, dre ma ne ya ket an traou war o meno evel ma tlefent mont er bed. Ha n'int ket ar re ze breudeur pe gendirvi da Yann an dichans ? N'eo ket ar bed eo a zo bet grêt fall : e grouer, an Aotrou Doue, en deus laket ennan kement a oa ret ...ha p'en deus furmet spered ha kalon an den, n'en deus ket kennebeut grêt fall e labour — Hogen an dud o-unan eo n'ouzont ket ober implij vat nag eus o spered nag eus o c'halon nag eus o c'horf nag eus an traou krouet ; ha ne falvez ket ganto goulenn ouz Doue an doare da denna talvoudegez anezo.

Na pegen eas e vije koulsgoude ! Ar reolenn a bep tra, merket eo bet gant Doue en e c'hourc'hemen-nou, ha ma teuje pep den d'o heul a-benn-da-benn, pep den en dije an doare ar gwella da implijout an dud hag an traou, hag ar bed neuze ne yafe ket falloc'h.

Allaz ! niverus eo an teileien hag a laka d'an nec'h korzenn an trezer hag a en em gemer ouz Doue pe ouz an dud all, pa welont labour souezus o soton ! Allo 'ta ! e lec'h tamall da Zoue pe d'an nesa, lakit ho trezer war an tu all ha kemerit pep tra evel dan dre ar penn mat.

Evelse e ra kement hini en deus eun tammig spered hag eun tammig imor vat.

J. R.

Pajennad Breuriez-Veur ar Brezoneg

Trubuilhou ar seiz paotr yaouank, pez-c'hoari farsus e daou arvest, gant Loeiz ar Floc'h, Roazon, ti-moulervez an « Ouest-Eclair ».

Eur pez-c'hoari fraez eo heman, aes-tre ar skoulm-dis-koulm-anezan: seiz paotr yaouank a deu, da genta lerc'h-ouz-lerc'h, da c'houlenn eur plac'h ha, goude-ze a-gevret, da gaout peb a zac'h diganti. E-skeud ar marvailhig-se e tispleg Loeiz ar Floc'h eun daolenn gwirion ha beo eus techou fall pep stad a vuhez: tech an dud a vor, ar vez-venti, tech an dud a genwerz ar c'hoant d'an archant da gas bepred o stalig war well, tech an dud a garg, heulia ar gouarnamant en e spered digristen, tech ar gantreerien d'ar broiou-krec'h, trei kein d'ar brezoneg ha da Vreiz, tech an dud diwar ar maez, beza eun tammig re lent hag abaf.

Evel oberennou all Loeiz ar Floc'h houman a zo skrivet en eur yez Leon yac'h, pinvidik ha saourek-kenan. Nemet renket en deus he rei da voula d'eur « vilin-veur » a c'hallegach na ra ket nemeur a van pe voulet reiz pe « zistri-pet » e ve hor brezoneg. D'ar « vilin » ha n'eo ket da Loeiz ar Floc'h, pa zav skridou ker reiz evid hor c'hens-irivadegou (concours), e tamallomp ar faziadennoù da heul. Setu diwar o fenn eun nebeut evezadennoù, kement hag eeuna ar skrivagnerien yaouank.

**

1° Roll an daou-boent e brezoneg eo merka *disrann* etre diou vogalenn. Loeiz ar Floc'h her goar ervat hag a skriv reiz-tre gand an daou-boent *roit* pajenn 13, *ne za-lein ket* pajenn 16, *eürus* pajenn 16, *kasäus* pajenn 51. Ar mouler avat, pa na oar ket ar reolenn, en deus lakaet aman hag ahont an daou-boent war vogalennou n'int tamm eb't *disrann* diouz re-all: *rei*, *distrei*, *kein*, *roto*, *foeta*, *boeson*, hag all, aes eo gouzout, a dleer skriva hep daou-boent.

2° Roll ar virgulenn-grec'h (apostrophe) eo derc'hel

lec'h eur vogalenn waskedet (élidee): *ma'z oc'h evit ma'z oc'h*, gand an *e* waskedet; hogen *ne doun, mar deo* (aman neüs ket a vogalenn waskedet).

3° Skriva *e* « son » (à lui), *he* « son » (à elle), *hon* « notre », *ho, hoc'h* « votre », *o* « leur »; ha, da heul, *he deus, hon eus, hoc'h eus, o deus eus* ar verb *an eus*.

4° Diwar-benn ar c'hemma lizerennou (mutations). Skriva *itron vras*, hogen *itronezed bras* (evel *mamm vat, mammou mat*). Goude *tri, pevar, nao* kemma *k, p* ha *t e c'h, f* ha *z* (*tri zra, pevar zroad, nao fenn*). Ar c'hiz-se, heuliet peurvuia e Kerne, eo ar gosa hag ar reisa ivez.

5° Diwall da lakaat gwregel (féminin) hanoiou-zo, war zigarez e teu alies, — dre fazi, — ar ger *vat* war o lerc'h: *trouz, brud, implij, c'hoari, labour* a zo gourel (masculin) daoust ma stager outo alies ar ger *vat*.

6° Arabad ober gand *ez*, rann-verb-kadarnaat (particule affirmative), er frazennoù-nac'h (phrases négatives). E lec'h *n'ez a, n'ez in* skriva *ne da, ne din*. Arabad kennebeut trouc'ha *ez* dre an hanter: skriva *ez a, ez afe* ha neket *e za, e zafe*.

7° Ne dleer ket ober bepred gand *en eur* dirag an hano-verb (infinitif). Heman e brezoneg a zo eur gwir hano, a hell kemer dirazan, evel an hanoiou all, an holl araogennoù (prépositions), da skouer: *leunia e yalc'h dre zimezi d'eur plac'h pinvidik* ha neket *en eur zimezi*. *En eur* a verk hepken daou dra graet war eun dro: *lenn en eur vale*.

8° En em ziwall d'ober gand an dro-frazenn c'hallek er frazennoù-suj (subordonnées): *E sonj d'ezi ez our eun druilhenn, ha neket e sonj d'ezi me a zo...*

An ali a roomp d'an holl batroniezoù ha skolioù da brena ha da c'hoari ar pez nevez. Ouspenn m'eo aes ha farsus ez eo kentelius eus ar c'henta.

Ar Sekretour,
F. VALLEE.

Kevrenn ar Vugale

Daou c'houlenn all evit kenstrivadeg « *Sent ar Vro* ».

I. — Displegit en 20 pe 25 linenn d'an hirra:

- 1) Buhez sant Herve
- 2) Buhez sant Gwennole.

II. — Pere eo, hervez ho meno, ar c'houec'h sant breizat brasa, dre al labour a rejont e touez o c'henvroiz?

Paotr e varo berr ha paotr e varo hir

Yvonig a zo eur paotrig koant hag en devezo pemp bloaz bremaik pa deuo ar bleun er skao. Divorfil eo dreist, m'hel lavar d'eoc'h, lemm e lagad ha lemm deod. Entent a ra penn-da-benn ar marvailhou a ra dirazan an dud vras ken etrezo. Rak-se, e dad, bep wech ma teu unan bennak, en ti, a ra da Yvonig mont er-maez da c'hoari.

En deiz all edo lein meurlarjez. Kerent hag amezeien a oa bodet eun ugent bennak. An tad a reas d'an holl pignat war-laez. Hag e lavaras da Yvonig: « Te, potr, a jom d'an traon da zebri da lein. N'eo ket c'hoaz hir a-walc'h da varo da zont e touez ar re vras. »

Yvonig a oa tenval zac'h e benn. Nemet en desped d'ezan n'edo ken o tebri e lein.

Ruffig, ar c'haz bihan marellet du, gwenn ha melen, a dosteas gouestad ouz Yvonig. Chouchet e skouarn, tortef e gein ha sounn e lost, e teuas da floura ar pôtzig. Yvonig, finv emman, a strinkas Ruffig kwit gant eun taol dourn. Ar c'haz a zistroas a-nevez gant eun aer ken devot ha tintin Soaz pa vez o lavaret he Rôzera. Rei a reas eun taol lagad da Yvonig ha daou d'an tamm kig rost edo heman o vont da zebri.

Yvonig a droas krenn war-du Ruffig: « Te, emezan, kerz da zebri war-laez gant ar re vras. Te, da vihana, a zo hir a-walc'h da varo »,

Pegement ar bizad ?

N'eus ket gwall bellou, e tremenas an dram an e Lesneven. Eur vaouez, — unan deo, deo, bugale, he divoc'h ruz glaou hag he fri ker ruz hag all, he daoulagad dispourbellet, he bleo fuilhet, he c'hoef ganti a dreuz evel ma vefe bet laket gand ar forc'h, — mat ar vaouez-se a oa oc'h ober krampoez war ar blasenn, demdost d'an iliz, deiz ar foar vras. He rozell hag he spanell a yae en dro hag ar bern a greske buan: krampoez brao, flour, melen, bouk ha druz, ken a deue an dour er genou netra nemet ouz o gwelout. Ha setu ma tosteas eur c'houer eus Tregaranteg pe Blouzeniel, eur potr fin mar doa unan. Naon a oa savet gantan hag en doa grêt e zonz da gaout e lein marc'had-mat.

— Pegement ar bizad krampoez ganeoc'h maouez ?

— Ar bizad krampoez ? eme ar grampoezerez, souezet maro, ken a jomas he rozell ganti a dreuz war he fillig.

— Ya, ar bizad krampoez, eme Yann gouer, pegement ar bizad krampoez ? hag e tiskoueze e viz yod.

— Setu aman, a zonzas ar vaouez, eur paour kez den ha n'en deus ket a-walc'h, a ! emezi d'ezan, priz ar bizad eo priz ar grampoezenn : daou wenneg.

— Delit, maouez, setu aman daou wenneg; ganen-me eman ar c'hiz da baea a-raok.

Hag hen ha sank a e viz yod er c'hrampoez doun, doun, betek strad ar bern ha kas gantan ar bern a-bez ha yao kwit gand... e vizad a zaou wenneg.

MELEGAN.

DIVINADENNOU

I. — Hirio tri vevel ar Gergompez a zo libr o zri. Peur e vezint a nevez libr o zri en hevelep dervez pe n'en deus ar c'henta nemet eun dervez libr war 12, a neil unan war 15 hag an trede unan war 30?

Digaset gant R. Eozennou, Gwitalmezh.

II. — Petra zo red, tud fidel

Ouspenn eur pec'hed marvel
Evit koueza en ifern?

Digaset gant Fanchig Lukas, Lesneven.

III. — Uhel uhel ober

N'en deus na doare ti na doare moger,
Na doare den ouz e ober.

Digaset gant A. Kerouanton, Lanhouarne.

IV. — Eun tad en devoa roet 100 skoed d'e vab da brena 100 aneval; derved saout ha kezeg. Ped aneval a c'helio hen prena eus pep seurt en eur lakât 6 real e pep penn-danvad, 5 skoed e pep bioc'h ha 30 lur e pep loen?

Digaset gant Yann Omnès, Guisseny.

V. — Lakat kensonnennoù « des consonnes », e lec'h ar c'hroaziou:

a ✦ ✦ ✦ e ✦ o ✦ e ✦ ✦ a ✦ a ✦ ✦ ei ✦
a ✦ o ✦ ✦ eu ✦ ✦ a ✦ ✦ oa ✦ ✦ ✦ ei ✦

Digaset gant F. Guillou, Brest.

Aliou. — I. En eil divinadenn miz C'houevrer ez eus pevar ger da gaout hag a c'heller da lenn ken aes eus an nec'h d'an traou evel eus a gleiz da zehou.

II Digas respontchou tri miz kenta ar bloaz a benn an 20 a Miz Meurz da zivezata da:

M. Guillou, vicaire à Plouider, par Lesneven.

Feiz ha Breiz

ALLELUIA !

En amzer-ze, eme zant Mark, Mari-Madalen, Mari Mamm Jakob ha Salome a brenas c'houez vat hag a deuas da valzami Jezuz. Abred ec'h en em lakjont en hent hag e tigouesjont e tal ar bez da zav-heol. Hag e lavarent an eil d'eben : Piou a lammo ar maen a zo ostanka an nor? Met pa zelljont e weljont e oa lammet ar maen. Bras kenan e oa. Mont a rejont er bez hag e weljont eun den yaouank azezet, en tu dehou, dilhad gwenn gantan, hag e voent strafuilhet. Henman a lavaras d'ezo: N'it ket da gaout aoun; Jezuz Nazareth, an hini zo bet staget ouz ar groaz, eo a glaskit; savet eo eus a varo da veo; n'eman ket aman; aze eo e oa bet laket; it, lavarit, d'an diskibien ha da Ber, ec'h en em gavo en ho raok er Galile: eno her gweloc'h evel m'en deus lavaret d'eoc'h!





Buhez an Tad Julian Maner

Jezuist hamisioner (1606-1683)

E Tours hag e Bourj (1677-78)

Ar velegiñ : 6 mezeven 1677

E Tours ar Jezuisted n'o doa c'hoaz skolaj ebet. Tremen a raent o amzer o prezeg hag o kovez. Ar Breur Maner a voe kaset di, dreist-holl evit krenvaat e yec'hed oc'h en em ziskuiza. Hag, e gwirionez, aer yac'h ar vro a reas buan vad d'ezan.

Pa voe gwellaet, an Tad Dinet, e Rener, e gargas d'ober skol d'ar vugale a veze digaset bemdez gand o c'herent da di ar Jezuisted. Eun 40 ben-nak e vezent, met n'o doa nag ar memez oad nag ar memez deskadurez. Hag ez oa da zeski d'ezo galleg, latin, gregach. Ar Breur Maner a en em lakeas ganto a galon vat, ha buan e renkas d'ezo kalz traou en o fenn, met dreist-holl e teske d'ezo aniaout ha karet Doue. Da zull, o c'hase d'an iliz war diou renk, hag ar gerent a veze laouen o wellet o bugale savet mat evelse.

N'oa ket a-walc'h evid ar Breur Maner. P'en deze eun tammig amzer, ez ae d'ar c'hlanvdi, d'ar

prizoun, da diez ar beorien, da gelenn ar re a veze laket gant Doue, war e hent. Da zull e rae katekiz e iliz sant Per, hag e teue e-leiz a dud d'e zelaou.

Ar Jezuisted, gwelet fall da genta e Tours, a nebeudou, a voe karet ha prizet, ha ker Tours a c'hoanteas kaout ive, evel kalz kerioù all, eur skolaj renet gand ar Jezuisted.

Ar Breur Maner ne voe ket karget da gelenn er skolaj-ze. Da fin ar bloaz 1634 e voe kaset da Vourj evit peurzeski ar skianchou a-raok beza beleget, Skolaj Bourj a oa neuze e kreiz e vrud, prizet gant tud ar vro, gand ar roue. Ar prins Konde, gouarner rann-vro ar Berry, a harpe eus ar gwella ar skolaj hag en doa roet peadra evit kaout ennan mistri da zeski ar skianchou sakr, ar Skritur sakr ha yez ar Juzevien. e vab, Louis Konde, dug Enghien, an hini a dlie trec'hi enebourien ar Frans e Rocroi, a oa o studia e skolaj Bourj er bloaz m'en em gavas eno ar Breur Maner. Heman a zeue evit deski ar pezh a oa ret evit kelenn an dud, gounit eneo da Zoue, beza eur beleg santel. Skoazellet ha sklerijenmet gand an Tad Lallemant, e pigne bemdez uc'heloc'h e skeul ar zantelez. « Krena a ran, emezan, bep wech ma sonjan er misterioù santel. Peger bras galloud a zo roet, d'an den, gand Doue! Penaos e c'hellfe eur beleg, fiziet ennan eur garg ken uhel, trei e zaoulagad hag e galon ouz traou an douar, rei digemer da c'hoantegeziou izel pe, hudur! »

E zeskadurez war ar skianchou sakr a greske ive bemdez. E spered lemm, ar boan a gemere, hel lakae ato er renk kenta, ha pa veze bep sizun ha bep miz kenstrivadeg etre ar skolaerien, ar

Breur Maner a responte d'an holl goulennoù diaes, en eun doare sklér hag eün, a blije kalz d'e vistri.

Daoust d'e labour studi, e kavas tro c'hoaz, epad an Asvent, ar C'horreiz hag ar gouelioù bras, da brezeg ha d'ober katekiz d'an dud diwar ar maez.

Koulskoude an Tad Bernard, e Kemper, n'ankounac'hae ket e vreur hag e vignon. A-wechou e krive evit digas d'ezan sonj eus ezommou Breiz-Izel. Lavaret a rae d'ezan kenderc'hel da studia ar brezoneg ha dilezel ar c'hoant da vont da visionou ar C'hanada. « Doue, emezan, en deus diskouezet d'eoc'h sklér e c'hoant d'ho kwelet o labourat e Breiz-Izel. Deuit, kerkent ha ma vezot beleget. »

E Bourj, evel e Tours, ar Breur Maner a gleve hano eus misionou ar C'hanada. Liziri deuet ac'hano a veze lennet, hag ar Vreudeur yaouank o doa holl ioul da vont d'ar broiou-ze, da c'hounit an dud gouez da Jezus-Krist. Ar Breur Maner en dije karet mont ive. Evelato n'ankounac'heas ket an Tad Bernard hag ar Vretomed.

Er c'houls-se, e miz kerzu 1636, e kouezas klanv. E vrec'h kleiz a goenvas, en eun doare spontus, beteg an illin ha da c'houde beteg ar skoaz. Ar c'hrign-beo a oa kroget enni, hag ar vedesined a golle fizians. Ar Breur Maner, o veza gwelet an Tadou o lenva endro d'e wele, a gomprenas oa tost ar maro d'ezan hag en em brepare laouen da rei e ene da Zoue, Antronoz edo goul Nedeleg, hag e c'houlennas kommunia da hanter-noz; en em brepari a reas, eus ar gwella, o sonjal oa marteze ar gommunion-ze an diveza evitan war an douar. Neuze, evel pa vije deuet keuz

d'ezan da veza dilezet misionou Breiz, pe marteze poulzet gant gras Doue, e reas le, ma teufe da barea, da implija ar rest eus e vuhez o prezeg an Aviel e Breiz, hag e pedas ive ar Werc'hez Vari, sent Breiz, sant Eozen dreist-holl; goulenñ a reas diganto kinnig da Zoue al le en doa graet. Skriva a rafe ive da Rener ar Jezuisted da c'houlenñ digantan rei e asant d'al le. Neuze e kommuniās, ha kerkent Hor Zalver a roas d'ezan da anaout e perefiz dizale. Hag e gwirionez, ar c'hrign-beo n'en em astennas mui. Ar vrec'h a zigoenvas, ar vreinadurez ne voe mui anezi abenn eur pennad; ar vrec'h a voe a-nevez ker brao ha biskoaz. Ar vedesined, souezet, a veulas Doue a-unan gand an Tadou Jezuisted (1).

« Nebeut amzer goude, a skriv an Tad Maner e buhez Mikael an Nobletz, evel p'en dije Doue c'hoantaet rei d'in eur merk nevez eus ar burzud en doa graet evidon, e teuas d'in epad va c'houk eun hunvre souezus. Kredi a ris dougen war va diouiskoaz eur plouezad eus Bro Gerne. E anaout a raen mat dioc'h e vomed glan ruz, e vragou bras, e vodreou, e holl wiskamant. » Sant Fransez Xavier ive, anaok mont d'an Indez, en doa bet eun hevelep hunvre.

Kerkent ha ma voe pare, ar Breur Maner en em roas adarre a-zevri da studia ha d'ober katekiz pa veze aotreet. Mont a reas da zikour an Tad Kornemant en eur mision, e parrez Sant-Martin-Auxigny. Hogen, er bloaz-ze ar prened glas a zebre an holl draou er parkeier. Ne jome mui delienn ebet er gwez nag er plantennoù all, hag

(1) Klenved ha pareans ar Breur Maner a oa bet diskleriet pell a-raok gant Mikael an Nobletz.


an dud a oa enkrezet holl. D'an deiz diveza eus ar mision, ar Breur Maner a grog e sailh an dour benniget ha gand an Tad Kornemant e kerz a-dreuz ar parkeier. Dour benniget a zo taolet a gleiz hag a zehou. Ober a reont tro ar barrez. Antronoz ne veze gwelet e pep lec'h nemet prened maro. Ne jomas hini e buhez. Ha goulskoude, er parrezioù all tro var dro, e kendalc'hent d'ober droug.

Ar velegiaj (1637)

En amzer-ze ar Jezuisted yaouank ne vezent beleget nemet p'o deze peure'hraet o studi var ar skianchou sakr. Ar Breur Maner a voe galvet d'ar velegiaj bloaz a-raok m'en doa peure'hraet e studi, da zadorn an Dreinded 1637. E oferenn genta a lavaras da zui an Dreinded, hag epad e vuhez e talc'has sonj eus an deiz kaer-ze.

Kenderc'hel a reas da studia bloaz all e Bourj. Galvet e voe evel ar re all dirag e vistri da respount ouz ar goulennou graet outan divarbenn ar skianchou sakr, ha diskouez a reas oa desket bras. Neuze e voe kaset da gellenn da skolaj Nevers.

Y. U.



Manac'h Tosenn sant Gweltas

Ar marvailh-man en deus meur a gant vloaz hag a dremen en eun amzer ma ne rae ket an den kalz a van evit lemmel e vuhez digand e nesa, pa oueze, da vihana, ez aje, goudeze, e ene d'ar baradoz. En hon amzer (ha c'hoaz?) n'eo ket ken ker kriz an dud, met eur gentel gaer a c'heller da denna atao eus ar gontadenn goz-man he deus kemend a dalvoudegez breman ha gwechall hag ar gentel-ze a lavar e tleomp atao plega hon youl dirak hini an Aotrou Doue a oar gopraat ha kastiza e vugale en eun doare hag a zo d'ezan e-unan ha ne dleomp morse kaout abeg er pezh a zo graet gantan, goude ma ne welfemp ket mat an digarez hen dougas d'hen ober evel m'en deus graet. Hen eo an hini a oar gwella petra en deus da ober ha ni, en e zerr, n'hon eus ken tra da ober nemet kaout mat, atao, kement tra a zo graet gantan.

Gwechall goz e oa eun den-Doue hag en devoa savet eun ti-bedi war dosenn Sant Gweltas, etre Kastellin ha Plouidiern. Beva a rae eno, didrouz; ne zaremprede ket kalz e amezeien; an aluzen en deveze diganto ha d'o zrugarekaat e pede Doue evito. Evit gellout en em rei a-zevri d'ar bedenn en devoa graet an daou le-man: al le da jom hep lezel netra da strafuilha e spered pa vije o komz gand an Aotrou Doue hag al le da jom hep lavarret hanô da zen eus netra nemed eus ar pezh a oa

gouest da lakat e nesa da zervicha gwelloc'h an Aotrou Doue.

En dervez m'edo daoulinet, en e lochenn, o pedi, e welas, e traon e dosenn, eun den o kerzet war an hent bras a ya eus a Gastellin da Graozon. En eun taol, setu ma welas eur pezh fall a laer hag a oa kuzet betek neuze a-dre kein eur c'harz, o lammet war an tremeniad hag ouz e leda, war an douar, gand eur pikol taol baz diwar e benn; raktal e c'houllias e c'hodellou hag e tec'has o kas gantan ar pezh en devoa kavet warnan hag a oa diouz e zoare. Ar manac'h en devoa euz o welet ar pezh a dremene, met re hir e oa diouz an hent evit gellout miret ouz al laer da ober e daol fall ha neuze, dre e le kenta, e oa miret mat outan mont eus e lochenn a greiz m'edo o pedi Doue.

Dem-goude, e welas, o tont war an hent, eun tiek eus a gichen, e hano Idunet, a anaveze mat pell a oa, dre ma oa unan eus ar re a oa brokusa en e genver. An den-ze a en em gavas gand ar c'horf maro, beuzet en e wad; sevel a eure e benn diouz an douar da welet hag hen anaout a raje; en dra m'edo o sellet outan, ec'h en em gavas warnan, d'an daou lamm, daou archer war loen, her c'hemerias raktal evid al lazer; ar re-man, hep koll amzer, goude beza kaset kemennadurez da dud an hini lazet, a zistroas gand Idunet da Gastellin hag hen taolas er prizon.

Ar manac'h a jome sebezet. N'en devoa nemed eur ger da lavaret ha raktal Idunet a vije lezet da vale, met o lavaret ar ger-ze e torre e eil le ha n'en devoa ket a c'hoant d'hen ober ken nebeut.

Eur pennad koulskoude e chomas nec'het, met lavaret a eure outan e-unan: « Doue a zo re eun an traou gantan evit lezel eun den didamall da veza kastizet e lec'h an hini kablus. En eun doare

pe zoare e kavo an tu da zigoll Idunet ha da ziskouez n'eo ket hen eo en deus graet an taol fall a damaller d'ezan. Doue a en em gargo eus a gement-se ha n'em eus ket a ezomm d'en em jala evel ma ran gand eun dra ha ne zell ket ouzin.

Eiz dervez goude e klevas n'en devoa ket gelllet Idunet diskouez n'eo ket hen oa an hini en devoa graet al laz hag e voe barnet d'ar maro ha krouget.



Ar c'helou-ze a strafuilhas ar manac'h kez ha a zistereas ar fizians vras en devoa bet betek neuze e Doue: « Mat, evelato, ne dle ket beza eun a-walc'h an Aotrou Doue, emezan, p'eo gwir, e lez ober traou evel a ra. Ma n'eo ket mantrus gwellet-krouga eun den ker mat ha ma 'z eo Idu-

net hag e lakât e renk an dorfetourien evid eun torfed graet gând eun all. Ma n'eo ket eeun an Aotrou Doue, ma ne ro ket da bep hini diouz e oberou, me eo sota den a zo o vale o chom aman, en toull gouez-man, da zevi gând an heol en hanv ha da skourna gând ar riou er goanv, da zua gând an naon ha da zrailha pedennou ha ne ra van ebet outo marteze, pedennou ha ne virint ket ouzin zoken, piou a oar, da goueza e tan an ifern... Gwaz a ze! Ne jomin ket pelloc'h en toull brein-man. Mont a ran da redet ar bed ha da gemeret va flijadur evel an dud all. Petra dalv ober pini-jenn ha labourat da drec'hi ar gwall youlou ma n'eus ket eun neudenn-eeun en Aotrou Doue! »

Antronoz, kerkent ha goulou deiz, edo ar manac'h e penn an hent da vont da Gemper; mont a rae dillo, e spered o pleustri war ar pez en devoa digaset kemend a nevezenti en e vuhez; p'en em gavas skuiz ec'h azezas da ehana, eur pennad, war jichenn eur groaz. Endra m'edo eno e welas o tont etrezek ennan eur paotrig yaouank, gwisket kaer, her saludas gant komzou dereat: « Oc'h ober eur bale emac'h evelldoun, war a welan, emezan; ma kirit e raimp hent a-gevred; en doare-ze ne deui den ebet da glask trabas ouzomp ha berroc'h e kavimp an amzer. »

Ar manac'h a gavas mat komzou an den yaouank he setu i hag en em lakât en hent, an eil e serr egile. Diouz an noz, ec'h en em gavjont da dreuzi eur pont; eur paour a oa harpet ouz e speurenn, eur grogenn gantan, en e zourn, o c'houllenn aluzen: « Setu aman eun den, eme ar paotr yaouank, hag a lavaro d'eomp e pelec'h e c'hellimp kaout loj, en noz a zeu! »

— Ya! Ya! eme ar paour, n'ho peus nemet treuzi ar pont ha mont gând an hent a welit aze, war eun, hag hep dale, ec'h en em gavoc'h e maner Trohanet, el lec'h ma 'z eus eun dijentil mat hag a raio digemer laouen d'eoc'h.

Evid e drugarekaat, an den yaouank a grogas ennan, a dro vriad, hel lakas da ober lamm penn-dibenn, hag her strinkas er ster a oa down an dour enni kemend all a c'hlae bras a oa bet en deziou arak; ar paour a en em zifretas eur pennad, a youc'has, met ne zaleas ket da vont gând an dour ha da veza beuzet.

Ar manac'h a jomas strafuilhet: « C'houi a zo eur gwall zen spountus, emezan; perak oc'h et da ober eun hevelep taol da unan hag a oa o paouez ober vad d'eoc'h? »

— Peoc'h, eme egile, diwezatoc'h me a lavaro d'eoc'h!

Hag e komze ker rok ha gant kemend a c'halloud ma ne gredas ket ar manac'h gouikal ger ebet ken!

En em gaout a rejont e Trohanet el lec'h ma voent digemeret dreist, e gwirionez; an dijentil o fedas da zebri ouz e daol; e wreg a oa gantan hag e baotr bihan, eur c'hrouadurig pevar bloaz a garent kalz dre ma ne oa nemetan; ne raent nemet komz anezan, eus e droiou kamm, eus e c'heriou treuz hag eus ar pez ma vije pa vije bras. Re voumounet, ar paotr a oa deuet ha ne rae niemed e benn e-unan. Laket e voent da gousket o daou en hevelep kampr; antronoz, n'oa ket deiz a-walc'h c'hoaz, pa deuas an den yaouank, gwisket gantan e zilhad, da zihuna e gamarad: « Savit buan 'ta, emezan, ha d'eomp ac'han didrousa ma c'hellimp! »

Ar manac'h a zavas, a wiskas e zilhad, hag o vale war vegou o zreid evit ma ne zihunjent den ebet ec'h en em ziljont er maez, dre eun nor ha n'oa ket bet prennet en derc'hent.

Pa voent pell diouz ar maner: « Perak, eme ar manac'h, omp deuet ac'halese, evel daou laer, hep lavaret na kenavo, na bennoz Doue d'an aotrou-ze hag a zo bet ker mat evidomp.

—: Mall oa d'eomp chacha hor skasou ganeomp, eme an den yaouank, rak me a oa o paouez mouga ar pennher bihan, en e wele, ha ma vije bet gouezet an dra-ze e vije bet bruzunet hor pennou ouzomp gand an Aotrou!

— Penaos? eme ar manac'h, aet anezan e-unan, o klevet eun hevelep tra; folla pe falla den o zo o vale e tleit beza evid ober kemend all; mont da vouga, en e wele, eur c'hrouadur ker koant all ha ker karet ha ma'z eo hennez. C'houi a vo daonet



Ar manac'h e Kemper

hag evidoun-me ne 'z in ket pelloc'h war o lerc'h.

— Peoc'h, eme egile; n'it ket da varn traou ha ne ententit netra enno. Ne dec'hoc'h ket diouzin rak ezomm ho peus ac'hanoun c'hoaz!

En dervez-ze, an dro a voe trist; an daou valeer n'oa ger ebet ganto; diouz an noz e figouesjont e Kemper hag e c'houlennjont lojeiz, en eun ti bihan, er Ru nevez; an hini en devoa digoret e zor d'ezo a oa eun toker en devoa mil boan o c'hounit e vara hag hini e dud. Kouls-goude e voent digemeret laouen gantan hag e rannas ganto ar pezig en devoa da goan: eun tamm yod kerc'h hag eur banne laez trenk d'e zouba. Goude koan, a-raok mont da gousket, e chomjont da varvailhat eun tamm hag an toker a lavaras d'an daou lojer.

— Paour oun, ha kouls-goude, em eus eun dra hag a dalv arc'hant bras, eun dra am eus bet digant va zud koz a zo bet pinvidik, gwechall, war a glevan; n'em eus bet tra all ebet nemetan ha gwell e vefe ganen koll va lagad eget her c'holl, hag en eur gomz evelse e tennas eus e armel eun hanaf aour kizellet kaer da ziskouez d'ezo: diskarga a eure ennan eur voutailhad win ha pep hini, hervez giz an amzer-ze, a evas anezan.



Ar micherour paour a roas d'ezo goudeze eur c'horn eus e zolier, el lec'h ma en em astennjont da gousket, war eur guchennig kolo. Abred e tec'hjont ac'hano adarre, pell a-raok m'oa dihunet an toker. Pa oant er mêz eus ker, an den yaouank a dennas, eus e zac'h, an hanaf arc'hant en devoa evet ennan, en dere'hent.

—: O! eme ar manac'h, e kounnar, pa welas al laeronsi, c'houi n'oc'h nemed eun diaoul; mantrus eo kaout kemend all a fallagriez; mont da laerez, digand eun den bet ker mat evidomp, ar pezh m'oa staka outan; lazer ha laer, c'houi a zo eur vez i e-
vet hano ac'hanoc'h.

—: Peoc'h, eme egile, ken habask ha tra; gedit eur pennad c'hoaz a-raok va barn ha kerzomp eur pennad all c'hoaz a-gevred.

**

En dervez-ze ez rejont etrezek Lokronan ha p'edo ar pardaez o tont ec'h en em gavjont e kichen kastell Moellien e Plonevez-Forzay; skei a rejont, war an nor, da c'houlenn digor, met an Aotrou, enn den koz ha drouk, a gasas e vevel da lavaret d'ezo ne zigorje ket e di da rederien-bro eveldo ha n'o devoa nemed eun dra da ober, tec'het raktal ma n'o devoa ket a c'hoant e vije distaget ar chas war o lerc'h. Dre bedi hag aspedi, o veza ma oa fall ha yen an amzer, e voent lezet koulsgoude, da vont, da dremen an noz, en eur c'hraou-moc'h, hep tamm d'o c'hoan.

Antronoz, pa zavjont ac'hano, e oant du gand an naon ha louz o dilhad, evel ar seiz pec'hed; an den

yaouank a c'houlennas gwelet an Aotrou. Henman a deuas d'o c'haout, drouk ennan da veza direnket



— Aotrou, eme ar baleer yaouank a-raok mont kuit e rankan ho trugarekaat da veza hol lojet, evel m'ho peus, hag e testeni eus va anaoudegez vat, ho pedan da gemeret diganen an hanaf-man.

Aotrou Moellien a jomas sebezet o welet kin-nig d'ezan eur seurt tra ha n'en devoa, dreist-holl, graet netra d'her gounit:

— Tud, a-zoare kenan, oc'h, emezan, ha keuz bras am eus d'ho peza digemeret ker fall; met p'eo gwir ho peus klasket ober plijadur d'in, evel m'ho peus, ho pedan da jom em zi, hiviziken, keit ha ma karoc'h; debri a reoc'h ouz va zaol ha peb ha wele blot a vezo roet d'eoc'h da gousket. Met an den yaouank elec'h chom a dec'has buan hep kemeret zoken nag eun tamm bara, nag eur bann chistr a ginniget d'ezan. Ar manac'h a oa souezetoc'h eget biskoaz: « N'em eus gwelet den ebet c'hoaz, em buhez, emezan, oc'h ober evel ma rit. Laeret ho peus hanaf eur paour kez toker ha daoust peger paour oa en deus roet d'eomp da zebri ha da eva ha breman ho peus ar skiant da rei

ho laeradenni d'ar gwall aotrou-ze en deus grêt d'eomp ar pezh ne ra ket d'e voc'h, rak d'ar re-man da vihanan e ro da zebri. Evid ober evel a rit e tleit beza an diaoul e-unan.

Egile ne lavare ger, met kenderc'hel a rae da vale hag ar manac'h a gendalc'he da gerzet d'e heul, evel eur c'hi warlerc'h e vestr. Pignat a rejont etrezek Kemeneven. Digouezet, e korn eur waremm, ar paotr yaouank a gemeras eur bal lezet eno gand eul labourer a oa aet d'e verenn; mont a reas pelloc'h hag ec'h en em lakeas da doulla gant tiz, ken na gouezas war eun toullad eskern hag eur penn maro.

—: Sellit mat ouz ar c'horf-den-ze, emezan, d'ar manac'h, a oa aet gwenn o welet ar gavadenn e oad kouezet warni. Breman ec'h ententoc'h eun dra bennak ne vo ket pell. An den a welit aman e relegou a zo bet lazec'h, breman dek vloaz, gand Idunet a gemeréc'h evid eun den mat ha n'oa nemed eun den chouchet a glaske tremen diouz an holl ker krignet oa e galon gand ar morc'hed. Doue en deus e gastizet evid an torfed en devoa gret o lezel barmerien an douar d'e goundaoni evid eun torfed ha n'oa ket e hini; anavezet en deus eo dourn Doue eo a oa eno ouz e skei; anzavet en deus e bec'hed ouz eur beleg; maro eo evel eur zant ha breman eman er baradoz ha ma ne vije ket bet en em gavet gantan ar pezh a zo en em gavet e vije bet aet war e benn en ifern.

Ar c'hlasker-bara ho peus bet kemend a druez outan p'ho peus gwelet her stlapan, war e benn, er ster, a oa o c'hedal laza ar c'henta den, doare pinvidik d'ezan, a vije deuet da dremen. Ouz e veuzi

em eus saveteet e ene, rak a-raok mervel en deus bet keuz d'ar pec'hed edo o vont da ober ha Doue en deus bet truez outan hag en deus e bardonet.

Ma 'm eus mouget mab Aotrou Trohanet n'oa nemed evit miret outan hag ouz e gerent da goueza en ifern. Ar pennher-ze a oa eur paotrig kollet gand ar c'hamambre. Deuet e vije bet da veza eul lounker hag eur merc'hetaer, eun enebour da Zoue ha d'an dud. E dad hag e vamm ha ne gavent netra ebet da ober war an douar-man, nemet dastum danvez d'ezan, o devoa ankounac'haet hent an iliz ha ne ouient lakat netra ebet ken e dourn ar paour. Maro o mab en deus o laket da zont enno o-unan; kalz gwellaenn a zo deuet enno abaoe. Plega o deus graet o youl dirak hini an Aotrou Doue hag an Aotrou Doue n'o lezo ket dizher. Bugale o devezo c'hoaz.

Kemeret em eus hanaf toker Kemper rak, re en holl, e oa en em staget outan hag, ouspenn-ze re droet oa da eva ha drouk e veze diwar ar gwin ouz e dud. Breman e welo ez eus dudiu all war an douar estreget kaout eun hanaf aour ha gellout eva gwin gantan. Kinniget em eus an hanaf-ze da wall aotrou Moellien, rak an dra laeret-ze a oa diouz e zoare; n'eo atapiet nemet gand e binvidigez hag ouz o c'hreski d'ezan em eus e gastizet, e gwirionez, rak, en doare-ze, em eus e bellaet, muioc'h, diouz hent ar baradoz eget n'em bije bet graet ma 'm bije e zismeganset hag e skoet Gwelet a rit eta breman an digareziou am lakae da ober ar pezh a raen ha ne glask Doue nemed eun dra: brasa mad e grouadurien; war e urz eo e oan deuet d'ho kaout ha war e urz em eus graet kement tra am eus graet; fizians am eus e ten-

noc'h talvoudegez eus ar gentel am eus roet d'eoc'h
ha ne zifzioc'h ket ken hiviziken, nag eus a eeun-
ded nag eus a lealded an Aotrou Doue.

Endra ma lavare ar geriou-ze, an ael, rak eur
gwir ael oa, e gwirionez, a zispakas e eskell hag
a mijas d'ar baradoz. Ar manac'h hag a oa bet di-
gaset gand an ael da draon e dosenn a bignas
warni hag a dremenas ar rest eus e vuhez en e
beniti heb ober, a c'houdevez, le re ziaes ebet da
virout; ne veze ket e chal da glevet den ebet dir-
zan o tifizout nag eus a vadelez nag eus a druga-
rez an Aotrou Doue ha p'edo war e dremenvan
e tisklerias d'an dud vat a oa deuet da entent ou-
tan an danevell emac'h o paouez lenn. Skrivet e
voe war eur paper-ler a viret e abati Landeven-
neg ha betek an Dispac'h, — a ziskaras ar manati
kaer savet gwechall gant sant Gwenole, — e c'hel-
let he lenn eno ha kement hini her grae a vennige
an Aotrou Doue goudeze hag a gemere ar pleg fur
n'eo ket hepken da jom hep kaout abeg met da
gaout mat dreist kemend a veze bet graet gantan.

G. P.

NETRA DA OBER ?...

Netra da ober ?... O penn foll!
Pa 'man ar bed war dost da goll,
Pa welan, rustoc'h rust bepred,
Lano au droug o tont d'ar red.

Pa welan bugalligou Breiz,
Da skol vistri hep feiz na reiz
Ha klos o dor d'hor pedennou,
O vont, bemdez, a vandennou.

Pa welan yaouankiz ar Vro
O redeg d'an dansou, tro-dro,
Ha, siouaz, o tremen he noz
Ne oar den pelec'h, na penoz.

Pa welan gant fals-doktored
Lezenn Doue, bemdez, torret
Ha, da vouez o c'huzuliou
An dud dizouj ouz ar zuliou.

Pa welan beleien karet
Er fank, hep abeg, diskaret
Ha falc'h ar gevier, gant he zeod,
Dindan o brud o trouc'ha yeod.

Pa welan e fell d'hor mistri
Kas Doue kuit dious hol listri;
E gas, kaer en deus e c'hervel,
Pell dious ar c'hlanvour o vervel.

Pa welan hor yez koz mouget
Ha d'an toull-don, e kuz, douget,
Hag e tav ar gwerziou laouen
Em Breiz gwechall a zelaouen.

Pa welan ez eo rouesoc'h rouez,
El liorz ar bleun hag ar frouez,
Hag, e lec'h an edeier ruz,
Eo an dreog a bign druz-druz.

Pa welan n'eus forz e pe du,
Peorien gwasket gant an naon du,
Tud mac'hagnet kouls ha tud dall
Ha n'ouzon ket pet gwalenn all.

Pa 'z eus poblou, pell eus hor Breiz,
Du-glaou' o ene en o c'hreiz
Hag a c'houlenn, en hanv Doue,
Eun dourn d'o gwalc'hi er c'houe.

Netra da ober?... O truez,
Goude m'az pefe kant buez,
Kant spered, kant penn ha kant brec'h,
Morse d'al labour ne vi trec'h.

Netra da ober?... Taol evez,
Pa vezo echu da zevéz,
Hag er c'hiz-se e kavi gras,
Dirag dremm rust ar Barner bras.

Sao, lezirek, ha prim a-raok
Distag da venveg euz e grog,
Enor da vicher ha da stad:
Hennez eo gourc'hemenn hon Tad.

A beoc'h, da galon, e leunio,
A joa, da diad e vleunio
Hag e zorn, neuze flouroc'h c'hoaz,
En nenv da gurumo warc'hoaz.

Jersey, 8 a viz meurz 1928. J. L'HELGOUAC'H, M. M. D.



Itron Varia Gerineg e Poullan

E Kap-Sizun ez eus bet savet chapelioù hag ilizou kaer, breman ez eus pemp pe c'houec'h kant vloaz, pa oa pinvidik mor pesketerien Poulldahu, Goaien ha tro-wardro, gand an arc'hand bras a dennent eus ar mer-luz dizec'h a werzent da vont da zivavêz-bro. Kaera iliz bet savet en amzer-ze eo hini Itron Varia Roskudon, e Pont-Kroaz, gant he dor-dal, eun dantele-zenn vein rozennet war

he gorre ; ar re gaera goudeze eo sant Tujan, e Primelin, Itron Varia Gonfort, e Melar hag Itron Varia Gerineg, e Poullan. Eus an teir chapel-ze, an diweza eo an hini nebeuta anavezet ha n'eo ket souez, rak n'eus ket pell c'hoaz ne c'helled ket tostaat outi, koulz lavaret, pa glasket mont d'ezi diwar an hent a ya eus a Zouarnenez da Veg-ar-Raz. Breman ez eus nevez graet eun hent bras da vont d'ezi eus a vourc'h Poullan. Er gouezeri eman, met nemet kaeroc'h a-ze n'eo ken. He c'haout a reoc'h en eun draomienn, e kichen eur feunteun, foenneier a bep tu d'ezi, ha gwez kistin ha gwez fao ouz he gwaskedi. En eur gwir lec'h a freskadurez hag a laouenedigez eman, e kreiz bro c'haro ar C'hap, douar al lann hag ar pin.

Ne ouezer ket mat a-walc'h perak ez eus bet savet eur chapel ker kaer en eul lec'h ken distro.

War a lavar ar re goz, ec'h en em dennas eun den mat, dre eno, da ober pinienn. Eun eienenn a oa hag e savas e beniti en he c'hichen. Tud ar vro, betek neuze, a gemere an eienenn-ze evid eun doueez hag o devoa doujans vras eviti.

Ar manac'h santel a ziskouezas d'ezo o fazi, o zroas war an tu mat hag o gounezaz da Jezuz-Krist. Neuze e ouestljont ar feunteun da Vamm Doue hag e savjont e kichen eun ti-bedi a deuas dizale da veza kalz re vihan diouz niver an dud a gare dont ennan da bardona; gant profou ar bardonerien e voe gellet sevel eno kaera chapel he devoa ar Werc'hez e Breiz-Izel a-raok ma voe savet d'ezi chapel ar Folgoad.

Bali greiz chapel Kerineg a zo bet savet en XIII^{vet} kantved. Ar pilieri a zo a bep tu d'ezi a zo

graet gant koulounennou bihan, stag-ha-stag, hag ouz an tokou a zo war o gorre ez eus kizellet deliou.

Mogeriou an diavêz a zo bet savet en amzer an Duk Yann V, da lavaret eo, e hanterenn genta ar XV^{vet} kantved. Prenestr bras ar penn d'an nec'h, dek rozen vein ennan, ha daou brenestr dishenvel ar c'hosteziou a zo bet savet ivez, wardro ar poenchou-ze.




Pa deuer gand ar vali ha pa weler, dre douez ar skourrou glas, ar chapel sklerijennet gant bannou an heol a daol skeud ar gwez, war he mogeriou, hag a laka kinvi alaouret mein he zour da lugerni, n'heller ket chom hep beza sebezet o welet eur pezl labour ker kaer.

An tour-ze a zo bet diskaret, gand ar gurun, war a greder, ha savet a-ne-

vez, er XVII^{vet} kantved ha breman e weler e veg, toull-didoull o sevel, er vann, a-zioc'h eur bodad glazvez a vez eun dudi da welet, e miz mae, pa vez an deliou o paouez digeri er fao.

E diabarz ar chapel a vir, koulz lavaret, an amzer gwechall, dindan he bolzou koz eiz kant vloaz, e kaver skeudenn Itron Varia Gerineg, hini san-



Diabarz
Chapel
Kerineg

tez Anna, hini sant Sebastian, toullet e gorf gand ar birou hag hini santez Mac'harit.

Goude beza graet tro ar chapel ha pedet an Itron Varia, eo red mont da welet ar feunteun a zo enni eur Werc'hez eus hon amzer. Ar feunteun-

ze a zo bet renket a-nevez, er bloaz 1656, gant person Poullan, an Aotrou Caodal. Tostoc'hik d'ar chapel ez eus eur gador-brezeg, eur groaz en he c'hreiz; ac'hano eo e veze prezeget gwechall pa ne c'helle ket an holl bardonerien mont er chapel.

E kichenik ar chapel, e weler c'hoaz eun ti hanter gouezet: eur c'hlanv-di eo a oa eno gwechall.

En amzer goz, pa oa krenfoc'h ar feiz, e Breiz, eget n'eo breman, e veze kalz tud o pardona e holl lec'hioù santel ar vro; klask a raent enno gwellaenn ha pareans; meur a hini, en o zouez, a veze klanv, mac'hagnet, bec'h d'ezo bale, eun druez o gwelet oc'h en em gaout, e penn o hent; eyit ma c'helljent diskuiza eur pennad a-raok dizrei d'ar gêr, beleien pe fabriked ar chapelioù-ze o devoa laket ficha gweleou blot d'ezo, er chapel, pa ne c'helled ket ober e lec'h all, pe gentoc'h, en eun ti savet a-ratoz kaer evit kement-se. Eno e vezent bevet evit bennoz Doue hag e veze ententet outo epad eun nebeud derveziou; eun aluzen evid an hent a roed d'ezo-zoken pa weled e vezent gwir beorien hag ez aent d'ar gêr, laouen, da vihana, ha goude ma ne vijent ket pare atao, da veza gallet tremen eno eun nebeud derveziou.

Klanvdiou pe ospitaliou evelse a weler c'hoaz e kichen chapelioù brudeta hor bro; hini sant Yann ar Biz eo an hini a anavezet ar gwella; e Lambader, e Plouvorn, e Ti-Vamm-Doue, e Kerfeunteun, e santez Sesilia, e Brieg, e sant Yann Keran, e Sant Noug, ez eus bet, ma n'eus ket atao, tiez evelse; hini sant Yann Keran a zo bet peurfreuzet breman ez eus eun ugent vloaz bennak.



MANER Kerdanet

En dro d'an nor e weler peder darzell da c'hellout tenna dreizo war an enebourien.

toc'h, o gwirioù a yeas gand' aotronez Guilguiffin, eus a Landudec, ha goudeze gand' aotronez Kerdanet e Poullan. Er bloaz 1790, p'edo an Dispac'h o tont er vro, an Aotrou Alan Pennanec'h, person Melar, a vadezas eil kloc'h ar chapel hag hen hanvas Ana Roza ; e baeron oa Yann Anna Kaourintin perc'hen maner Kerdanet, Mezkozker, Kerineg, Treota hag all, hag ar vaeronez, Roza Anna Mari Geslin, Markizez Plœuc.

Kement ha m'emaomp, d'eomp dioc'htu, ma kirit da welet maner Kerdanet; n'eman ket ouspenn

Aotronez Kerharo, e Kleden-Kap-Sizun, oa diazeourien ar chapel, dre ma oa bet savet war zouar Kerineg hag a oa d'ezo. Gwirioù ar foar a veze grêt war letonenn ar chapel, goude pardon bras hanter-eost a oa d'ezo, ha d'ar prosesion, bep bloaz, e lakent unan eus o merrourien da zougen eur falz, eun ordennad ed hag eur freilh, evit tenna bennoz ar Werc'hez, war an eost. Diwezato-

eur c'hart eur bale diouz ar chapel. An ti, diouz an diavêz, n'en deus ket a zoare da veza gwall goz, met pa 'z aer ebarz ec'h en em gaver dirak eur chiminal hag a zo danvez eur zell ennan. Livet hag alaouret eo bet gwechall; daoust pegement eo bet mogedet e weler atao war e vantell skouejou aotronez Gourcuff, Plœuc ha Kergorlay gand' ar c'homzou a lakent en o ardamez. Ger Aotronez Gourcuff oa: PLVS: FAIRE: QVE: DIRE: hini Aotronez Plœuc: L'AMÉ: ET: L'HONNEVR: hini Aotronez Kergorlay: AYDE-TOI: DIEV: T'ALDERA. Kredi 'ran zoken e c'hellfed lenn eno ivez ger Aotronez Goulaine: DE: CESTVY: CY: DE: CESTVY: LA: J'ACCORDE: LES: COURONNES. eur ger hennez, hag a zo harpet war ar gredenn ez eus bet eun aotrou Goulaine, hanterour etre Roue Bro-Zaoz ha Roue Frans, hag a vije deuet abenn d'o lakat d'en em glevet: ar gredenn-ze avat n'he deus diazez vat ebet.


Tarzelloù a gaver er-mogeriou, ar pezh a ziskouez e oa Kerdanet eur maner hag e c'helled en em zifenn ennan, met an dra-ze ne viras ket ouz Fontanellan, p'edo e enezenn Tristan, da zont d'e laerez koulz ha ma laeras chapel Kerineg.

Breman ez eus 90 vloaz, Emil Souvestr o tremen, dre Gerdanet, a welas, e porz ar maner, eur skeudenn gaer da Zant Mikael; ne ouezer ket petra eo deuet da veza.

Kerdanet a zo bet laeret gand' ar C'houarnamant d'an Dispac'h ha gwerzet ganti goudeze, marc'had mat, na petra 'ta!

Tud chentil a zo c'hoaz hag a zoug an hano a Gourcuff. Unan anezo, o chom e Pariz, en deus savet, gwerzioù gallek, troet kaer, en enor da Vreiz.

War zouarou Kerdanet ez eus c'hoaz eur maen-
hir hag eun daol-vaen miret en o fez. G. P.



Chiminal Kerdanet

Kenstrivadegou Bleun-Brug 1928

III. — KENSTRIVADEG AN DISPLEGADEG

AZER ha MIZAEI

(Azer, mevel e ti Vizael, ar mab foran, a glask lakat e vestr da zistrei da di e dad).

AZER

Va mestr ! O ! pegement he deus ho tiskaret
Ar blijadur. Ho tal seder 'zo krizennet,
Ho taoulagad n'int ket ken evel ma 'z int bet,
Frank ha skler, evel dour mammenn ar feunteuniou,
Hoc'h anaout am eus graet, dreist holl diouz ho
komzou.

MIZAEI

Azer!

AZER

O! va mestr paour! va list da lavaret
D'eoc'h, pebez rann-galon ha pebez poan-spered
A zo du-hont 'n ho kêr, abaoe an dervez
M'ho peus he dilezet. O va mestr, an danvez
Ho peus kaset ganeoc'h en deus her goullonet
Eun tammig, nann kement 'v'lato 'vel ma c'hellfet
Kredi; n'eo ket eus danvez eo goullonet an ti;
Goullonet eo ac'hanoc'h, ya, mestr, ac'hanoc'h c'houi;
Goullonet eo eus ho c'hoarz ker skiltr, eus ho soniou
A glevemp o nijal, bep beure er méziou;
Goullonet eo eus an trouz a rec'h, ho preur ha c'houi,
Pa vezec'h bet ho taou, war al leur o c'hoari,

Gant ho sutellou skany, wardro koulz an ehan;
 En eur ger, goulllo eo ac'hanoc'h hoc'h unan.
 Setu perak eman evel eun ti e kanv,
 Setu perak ho tad, kement 'n deus da c'houzanv
 Ganeoc'h, a vez gwelet o vont, wardro serr-noz,
 Pell, ar pella ma c'hell, war an hent d'ho kortoz.
 Ar paourkez en em stlej, betek lein ar menez
 Ha chouket war eur maen, tre ma teu ar pardaez,
 E chom da zellet piz, en hentchou tro-war-dro,
 Da welet ha ne deu ket c'hoaz e vab en dro
 O ! va Mestr karet, deut dioc'htu ganen eta
 'Vit ma c'hello, war e galon, c'hoaz ho starda,
 Pe, ma teu da vervel, gand an anken mouget,
 An holl a lavaro ho pezo e lazet.

MIZAEL

Goude, Azer, goude.

AZER

Va mestr, perak goude?

Hizio, kentoc'h; warc'hoaz n' vo ket d'eoc'h marteze.
 Koueza 'ran d'an daoulin, va mestr, 'n hano ho tad,
 Ho tad hag a zo bet 'vidoc'h, atao, ker mat.

Ar pennad-man tennet eus Trede Arvest *Mouez ar Gwad* Job er Bayon eo ar pennad o do da zeski ar re o do c'hoant da gemeret perz e Kenstrivadeg an displegadeg, (*concours de déclamation*), er Bleun-Brug a zeu; 200 lur a vo rannet, war an taol, etre ar re a zispiego gwella an diviz-man, e Douarnenez d'an 13 a viz Gwengolo a zeu.

Gwendediz a c'hello kemeret komzou an Aotrou Bayon, dres, evel m'emaint e *Boch er Goed*, p. 86.

Né vezo graet kenstrivadeg gwerziou na sonioù ebet er bloaz-man ken na vo peur-reizet reolennoù nevez ar varzonlez vrezonek.

Kenstrivadeg ar c'han a vo embannet dal ma vo moulet al levr *Kanaouennou* emaez o sevel.

IV. — Kenstrivadeg ar gomz plen

Studiadenn e pemp pajenn d'an hirra war an danvez-man:

Livirit petra a vez grêt d'ar c'herc'h, er park, er gêr, er villin, er gegin, abarz ma teu da veza eun tamm yod fetis.

Perag ne vez ket grêt a yod ken, en tiegeziou, kement ha kentoc'h?

Pe goil pe c'hounit a ra ar Vretoned o tilezel ar yod kerc'h.

100 lur a brizioù d'ar gwella labouriou.

Kenteliou d'ar barz yaouank

(Kendalc'h)

An taol-mouez a dle koueza war ar glotenn: setu reolennoù-aour ar werzoniez klotennet. Diaes eo heulia ar reolennoù-ze, e brezoneg, da vihana e barzonegou hir (1). Setu pelec'h e oamp en em gavet. Lod a gred ez eo pinvidik a-walc'h ar brezoneg e klotennoù da ober gant ar reolennoù-aour. Gwella-ze, mar d'eo gwir, met ne gredan ket. Hogen, hag e vefe gwir, n'eo ket echu hon enklask war eur werzoniez reiz, *graet diouz plegou ar brezoneg, yez tonlet. Red eo gwelet ha n'ez eus ket tu da zavel, eur wer-*

(1) An Tad Kerrien a lavare, — e *Feiz ha Breiz* miz C'houevrer diweza, p. 56. — eo ar brezoneg re baour e klotennoù, hag e c'hellfed eta, e brezoneg, evel en darn vrasa eus ar yezou all, ober heb er glotenn. Goude beza lennet kement-se, unan eus hon c'henlabourerien a zigas d'eomp al lizer-man:

. Jersey. 8.-2.-28

Daoust d'ar pezh a lavar an Tad Kerrien.

1). — Me gred e kaver klotennoù (*des rimes*) ar pezh a gerer, e pep yez.

2). — N'eo ket paouroc'h ar brezoneg, war ar poent-se, eged ar yezou all....

3). — Klotennoù pinvidikoc'h zoken a zo e brezoneg eged er yezou all, dreist-holl, dre ma tro ennan, evel ma reont lizerennoù kentad ar gerioù.

zoniez, klotennet pe ziglotenn, diazezet war luskerez (Rythmós, lusk-dilusk) an taoliou-mouez, evel ma 'z eo diazezet ar sonouriez war luskerez ar frapadou krenv hag ar frapadou gwan. Lusk an taoliou-mouez a laran, ha nann hirreded pe verrded ar sillabennou evel e gregach hag e latin (2).

E brezoneg eur sillabenn a vo hir, pe gentoc'h krenv pa vo toniet; berr pe wan pa vo didon. Ezomm ebet eta da glask en eur Gradus hed ar sillabennou: *neb a oar distaga reiz ar brezoneg, a ouezo pe grenv, pe wan eo ar sillabenn*. Evelse e ra, a gredan, holl boblou Europa o deus eur yez toniet. Saozon, Alamaniz, Italiiz ha Spagniz a ra evelse.

Gwelomp penaos ec'h en em gemeront da luska an taoliou-mouez.

O ranna raïmp e daou rumm: rumm ar C'hreisteiz ha rumm an Hanternoz.

1. Kreizteiz (Italiiz, Spagniz).

En eur werzenn ez eus tri dra ret, hag unan a-zigouez. (3)

Traou ret : a) niver ar sillabennou; b) niver ha lec'h an taoliou-mouez; c) lec'h an arzav pe an troc'h a rann ar gwerzennou hir.

4). — *Ne welan ket perak ne vefe ket gellet ober eur pez-c'hoari hir, e gwerziou brezonek, klotennet reiz.*

5). — *Gouest e vefen da zevel unan ha n'em bese poan ebet o klask va c'hlotennou.*

6). — *Lezenn ar glotenn n'eo ket eur jadenn houarn eo, met eur jadenn zeiz.*

7). — *Gwerziou brezonek Breiz-Izel, koulz ha gwerziou breiz-Veur, zoken ar re gosa anezo, a zo klotennet.*

8). — *Ne gredan ket e vefe eun dra vat staga da glask ober e brezoneg gwerziou diglotenn.*

J. L. L'HELGOUACH.

Bennoz Doue d'an Tad L'Helgouac'h evid e lizer mat: gwella-ze, ma c'heller ober gand ar glotenn; nemet kaeroc'h a-ze hepken e vezo ar gwerziou. Ar pez a c'houlenn an Tad Kerrien, dreist holl, n'eo ket teurel ar glotenn d'an traon eo, met lakat lezenn e lec'h ma c'helle pep hini, betek hen, ober e benn e-unan, ar pez a zo eun dra hag a zo dies kaout abeg ennan. Y. V. P.

(2) Er yezou-ze an taol-mouez hag hed ar sillabennou a oa distag-krenn an eil diouz egile.

(3) Eun dra a zigouez = eun dra war ar marc'had; *une chose accidentelle*.

Tra a zigouez : ar glotenn. Er peziou-c'hoari ne raer ket ganti koulz laret; er barzonezou hir, eur werzenn pe ziou a vez alies diglotenn; hag ar barzonegou diere (suetos, sciolti) n'int ket rouez, dreist-holl e spagneg.

Niver ha lec'h an taoliou mouez. Chench a reont gant niver sillabennou ar werzenn. An arzav a ra henvel.

a) *Gwerzennou arz-meur.*

10 sillabenn a vez toniet an 3, 6 ha 9; an arzav a vez neuze warlerc'h ar 4. Beza 'vez diou hanterwerzenn : 4 + 6. Skouer.

Warc'hoaz viñtin || ez in da Vontroùlez.

Kaout a c'heller ivez diou hanterwerzenn a 5 (5 + 5). An arzav 'vo warlerc'h ar 5; an taoliou-mouez war ar 4 ha 9.

Morse ne larin || eur gaou d'am breudeur.

11 sill.: (hanvet gwerzenn *gaourel*, heroica): toniet ar 6 ha 10; hag ouspenn unan all a-raok ar bempvet, ne vern pelec'h. Eun doare all a zo da donia an unneksillabennek: 4, 8, 10. — An arzav a c'hell beza warlerc'h ar 4, 5, 6, 7, 8; an darn vrasa koulsgoude hel laka warlerc'h ar 5^{et} pe ar 7^{et}.

Daoulagad an oabl larzin || a sked lintrus (7 + 4).

Skedi 'ra muioc'h || strollad bràs ar stered (5 + 6).

12 sill. : evel diou werzenn a 6. An arzav warlerc'h ar 6^{et}.

N eur galon kailharet || ar bléun ' zao a-wèchou.

13 si.: evel unan a 6, hag unan a 7. An arzav warlerc'h ar 6^{et}.

Biskoaz ' ne voe gwélet || eur vaouez ken kounnaret.

14 sill.: evel diou a 7. Arzav warlerc'h ar 7^{et}.

War gein ar môr an àvel || a ziskarg frouez e gounnar.

b) *Gwerzennou arz-bihan* (arte menor):

Arzav ret ebet.

9 s.: nebeut kenan a gaver anezo. Ar re a zon ar braoa o deus an 2, 5 ha 8^{vet} toniet.

Er c'hoadou e kléver en évned

8 s.: toniet an 3^e hag 8^{vet}.

Tost d'e neiz e kan al labous.

7 s.: unan araok ar bempvet; eun all war ar 7^{vet}.

A-us d'ar stér an hâleg,

Loaiou-dour war he gorre
6 s.: Toniet 2 ha 5.

Menéziou Breiz-izel

5 s.: eun taol war unan eus an 2 genta, ha war ar 4.

Ar ménez àre

4 s.: war an 3; ma karer war ar 1^a.

Kleze àrzur

EVEZIADENNOU

1) Ar gwerzennou da veza kanet a dle dougen atao an hevelep taoliou-mouez.

2) An *arzav* a dle dont warlerc'h eur ger toniet war ar belost :

« Warc'hôaz » || a zo fall; « hirio » || a zo mat.

Gwerzaouerien-zo a lavar *n'eo ref* lakat an *arzav* nemet pa vez ezomm da grenvât eun taol-mouez re wan, pe m'her goulenn ster ar frazenn (4).

3) An taol-mouez diweza a rank koueza atao *war belost* ar werzenn. Velse, mar d'eo toniet ar zillabenn ziweza, e konter *unan muioc'h* eget ma skrifer (10 = 11); mar d'eo toniet ar belost e konter ar sillabennou 'zo; ma vije gerioù toniet war ar ragbelost (estrájula, sdrucciola, « riklus »), e *tiskontfer* unan (12 = 11) Mào = cânto = cântara e lost ar werzenn.

(da veza kendalec'het).

J. KERRIEN.

(4) Ster ar frazenn = le sens de la phrase. Ac'hano e teu dister = qui n'a pas de sens.

Lennit Buhez an Den eurus GLAODA LAPORTE

bet troet e brezoneg gant an A. CHAPALAIN, kure Saint-Martin, Brest

An Iliz a c'houlenn e ve anavezet ar verzerien ha kemeret skouer diouto.

Gloada Laporte a zo eur merzer bet savet gant an Iliz war a n aoterioù evit beza enoret gant ar gristenien.

Talvoudous eo d'ezo eta anaout e vuhez hag e varo.

Al levr en deus ment ar prizioù a roer da vugale ar c'ha-tekiz pe ar skolioù kristen.

N'eo ket ker. Ouspenn 220 pajenn zo ennan; ha ne goust nemet daou skoed (6 fr.).

Rabad a ves graet d'an hini a gemer meur a hini.

Magadurez pemdeziek


An darn vrasa, eus ar re a lenn gazetennou, ar pez a glaskont, bemdez, war o faperou, eo an torfejoù a ziouan diwar ar gasoni pe diwar an hudurnez; sebezus eo an droug a ra ar c'heleier fall-ze d'ar yaouankizou ha setu aze perak gouarnamant an Itali a zo o paouez pedi, start, renerien ar c'hazetennou da jom heb o embann hiviziken.

Er broioù all, siouaz, ar meneg a raer eus an torfejoù, eo a gendalc'ho atao, 'm eus aoun, da vaga ar c'hazetennou.


Diwar Life New-York.




Rener ar gazetenn. — Mantrus eo l Rivinet e vimp; eiz-tez' zo n'hon eus bet torfed bras ebet da embann.



Red eo kaout unan, en eun tu pe du, rak-se, kemerit ar penest-ze, dioc'htu, ha tennit war unan bennak.



Met tennit, avat, war unan anavezet, rak keleier da ldkat prena ar gazetenn eo a rankomp da gaout.



Paotr ar c'heleier. — Euz am eus ouz an traou-ze, mestr, met, p'eo gwir e c'hourc'hemennit, e rankan senti.

KELEIER AR MIZ

Park ar Geier

Al lizer-man hon eus bet er miz tremen :

L... 18-1-28.

AOTROU RENER,

Livirit d'in eta, m'ho ped, penaos sevel, evid ar gwella, eur skrid-bez, d'am zad... ne fell ket d'in e lakât e galleg, rak e brezoneg, hepken, eo e komze bemdez.

H. J.

Ma 'z eus eul lec'h ha ne dlefed ket mont ennan da lavaret geier eo ar vered ha pa dalv, ganeomp-ni dreist holl, Bretoned, ar vered a zo deuet da veza park ar geier.

War an darn vrasa eus ar beziou e welan skrivet, e lizereimou bras: *Regrets éternels*, da lavaret eo: *kavou da viken*, ha pa dalv ne vez ket tremenet atao an deiz ar bloaz, ma vez ankounac'haet, da vat, an hini maro... ha neuze, fall eo ivez gouela re war hon tud aet d'ar bed-all ha n'eus nemed ar re ne gredont ket er baradoz hag a rafe kement-se. War yezioù all e lennan: *ci-git un ange, amon ez eus sebetiet eun ael*; sell 'ta, me ' gave d'in n'o doa ket a gorfou an elez; perak neuze mont da lavaret o deus?

Ar vein a zoug ar skridou-se a zo mein c'haouiad.

Mein hor berejou a lavar geier, c'hoaz, dre m'int skrivet e galleg. Eun den ha n'eo ket eus ar vro-man, o tremen dre hor berejou, daoust ha gouest eo da gredi ez eus beziat eno Bretoned?

N'eo ket. Galleg a lenn, rak-se, Galloued eo a die beza dindan ar vein eman ar skridou galleg-se warnezo.

Fazia a ra koulsgoude, rak ar vein a lavar geier: ar c'horfou a zo dindanno a zo korfou Bretoned; an hanoioù a zougont a zo breizat hag ar yez a gomzent oa ar brezoneg.

Met perak omp bet en em daolet da lakât mein c'haouiad evelse, en hor berejou? Red oa ma vijemp kilav bras p'omp aet da ober kemend all. Ya, kenvroiz ker, eur c'hlenved a oa krog ennomp p'hon eus graet an dra-ze: *klenved an divroa a-spered, hep divroa a-gorf*, eur c'hlenved hag a ra d'an den kaout fall kement tra a zo eus e vro ha mat kement tra a deir eus ar broioù all; eur c'hlenved hag a zo anavezet pell a zo; eur gwall g'lenved; diskar a ra ar broiou kaera ha kristena ha ma ne garomp diouall e lako hor Breiz, hep dale, da goueza en he foull.

An hini ne wel ket eo ar c'hlenved-ze eul longnez eman Pi XI; en dra c'hell o klask diouall e gristenien diouti, a zo dall, dalloc'h eget an hini a zo bet ganet dalla.

Greomp holl, pa varvo hon tud, evel H. J. ha parkeier ar geier a deuo, evel m'eo dleet, da veza parkeier ar wirionez:

C'hoari e Danguy, an neb a garo,

Bezomp Bretoned, holl, beo ha maro!

Mona

Ma ra plijadur d'ar Vretoned a zo o chom e Breiz-Izel lenn *Feiz ha Breiz*, ar re a zo tec'het diouz o bro goz a glev gantan ivez c'houez, ar gêr; al lizer-man skrivet d'eoamp en Indo-China, d'an 8 a viz c'houevrer diweza hen diskouez sklêr a-walc'h.

Goude beza lennet *Feiz ha Breiz*

Genver 1928

D'ar barz en deus troet sonig dudius

MONA

Gourc'hemennou kaloneka

eur breizad koz, koz, ... pell, pell, eus e vro pell, pell a zo

Tad koz.

Mat da skigna, mat da zifenn

En daou viz tremen eo bet graet eus an eil penn d'egile da eskopti Kemper ha Leon bodadegou Gwazed *Unvaniez ar Gatoliked*; niver ar re a zo bet enno a ou bras ha gwellia-ze rak an dra-ze a ziskouez n'eo ket maro c'hoaz ar Feiz e Breiz. Met perak e rankas ar Vretoned dizrei d'ar ger, eus ar bodadegou-ze, hanter fall-galonet aliès o welet ne veze ket graet a stad a-walc'h atao enno ouz o yez kaer pa roet betek dek gwech muioc'h a amzer d'ar brezegerien c'hallek da gomz eget d'ar re vrezonek ha koulskoude, ped a oa e Lesneven hag e meur a lec'h all ha ne ouient ket a vrezoneg?

War an dourn e vije gallet o c'hounta. Perak neuze klask tremen kement diouz an niver bihan ha ken nebet diouz an niver bras?

Ar vrezoneg p'eo bet mat gwechall do skigna ar Feiz e Breiz a dle beza mat breman ivez d'hen difenn!

Y. V. PERROT.

Da C'hoarzin

Eur medesin yaouank, nevez en em laket da labourat war e vicher, hag amparfal c'hoaz war ar vrezoneg, a yeas eun dervez da welet unan goz a oa kouezet klanv; goude beza kavet he c'hlenved e c'hoanteas ma vije graet d'ezhi tizan diwar stagellou kerez, met fazia a eure, eun tamm, war e c'heriou, hag e lavaras d'an ozac'h :

— Ober a reoc'h d'ho kwreg tizan lostou kelien.

— C'houi gav d'eoc'h, Aotrou, eme an ozac'h sebezet, o klevet eun hevelep gouc'hemenn, em eus me kement-se a amzer da goll o vont da glask paka kelien.

DIVINADENNOU

I. — RESPONCHOU MIZ GENVER

1. Eur bengenn, pe eul letonenn, pa vez nevez aret. —
2. An amann. — 3. N'eus pluenn ebet er yar; warni eo emaint. — 4 ha 5. Eur valaenn pe eur skubelenn.

II. — RESPONCHOU MIZ C'HOUEVRER

1. — FOENN
2. — BARA
AZEN
REUN
ANNA
3. Pevar gaz. — 4, 5 ha 7. — 5. An hanter all a vez war e gof.

III. — RESPONCHOU MIZ MEURZ

1. A benn 60 dervez. — 2. Mervel. — 3. Eun neiz pig.
- 4. 90 danvad, 9 bioc'h, 1 loen.
5. Ar vrezoneg hag ar feiz
A zo breur ha c'hoar e Breiz.

MIZ EBREL

- I. Pe seurt mantell eo an domma hañv-c'hoañv?

Digaset gant Skol gristen Plouzeniel.

- II. — Lavarit petra rer pa vezer skuiz, gant eur ger a c'heller da lenn kerikouls eus a gleiz da zehou hag eus a zehou da gleiz.

Digaset gant M. Postec, Saint-Tonan.

- III. — Piou eo an den tener meurbet 'Garfe gwelet e vreur krouget.

Digaset gant F. Yannig, Pouldergat.

IV. — E Gwipavaz e oa badezet disul unan ha n'oa mab na da dad, na da vamm, na da Zoue, na d'an diaoul. Petra oa ?

Digaset gant eur « Reder bro », Gwipavaz.

V. — Fanchig Fall a lavare d'in : (a benn 4 miz am bezo oad eur c'hrouadur 1.000 miz. Emaoun o tont eus friko va filhorez Fanseza Karet, ha bloaz zo oad he fried Jakez Pendoupez (dizroet yac'h ha dibistig eus ar brezel) a oa « doubl » d'he hini ha p'he devezo Franseza an oad en deus breman Jakez o devezo neuze o daou an oad am oa 4 bloaz zo.

Pe oad eo bremañ : Fanchig Fall, Franseza Karet, Jakez Pendoupez.

Digaset gant Potr L. N., Logonna-Daoulas.

KLOC'H AN ANGELUS

Na kaer eo klevet, d'ar mintin,
Mouez kloc'h iliz sant Kaourintin,
Warzu Mari, d'an nenv laouen
O kas e vrava kanaouenn.

Na kaer eo klevet a-nevez,
Pa verk an heol kreiz an devez,
Flouroc'h c'hoaz e vouez o kana
Hano Merc'h Joakim hag Anna.

Na kaeroc'h eo, d'an noz, pa gouez
Lagad ruz al loar war ar gwez,
Klevet e vouez, a-raok tevel,
Warzu Mamm Doue o sevel.

Teir gwech bemdez, va mouez d'he heul,
O Mamm garet, ivez ho meul,
Teir gwech e c'houlenn diganeoc'h
Beva hep gwall, mervel e peoc'h.

J. L'HELGOUACH. M. M. D.
C'houevrer 12, 1928.

Feiz ha Breiz

PI XI ha yezou ar bed

Jezuz-Krist n'en deus ket gourc'hemennet d'e Ebestel mont da brezeg e Aviel, en o yez, da lavaret eo, e yuzeveg, met roet en deus d'ezo anaoudegez an holl yezou evit ma c'hellje pep den klevet ar c'helou mat eus e zonedigez, war an douar, en e yez e-unan.

War skouer Hor Zalver, an holl babed o deus bet atao ar vrasa doujans evit yezou distera ha pinvidika an holl boblou, pa gasent beleien daveto, hag eul levr bras a vefe gallet da ober d'hen diskouez.

War gement-se Pi XI n'eo tamm ebet dishenvel diouz an eskibien all a zo bet azezet, en e raok, war gador sant Per, e youl eo e oueste mat, mat, e eskibien hag e veleien, yezou ar gristenien m'int karget da gelenn. N'eo ket d'ar gristeneien eo deski yez ar veleien, met d'ar veleien deski yez ar gristenien.

Mussolini, eun tachad a zo, a zo klask italiakaat an Tirol, eur vroig vihan hag a zo bet staget ouz an Itali, goude ar brezel, breman ez eus nao bloaz, difenn a zo da gomz alamaneg er skolioù hag er ilizou ; arabad zoken lakaat skritell alamaneg ebet, e nep lec'h.

Pi XI en deus graet, er miziu tremen, ar pezh a c'helle evit-difenn alamaneg Tiroliz evel m'en doa, eun nebeud a-raok, difennet ar c'hatalaneg gwas-ket gant gouarnamant ar Spagn.

Ha n'eo ket ouz yezou an Europ hepken eo e taol pled, o paouez lakat sevel eur manati emañ, er China,

e vo ar chinaeg yez pemdeziek e venec'h ha goulenn a ra ouz ar re-man pleustri a-zevri war yez hag istor ar China ma c'hellint gouzout diwar o fenn kement tra a c'hell eun den da anaout. Kaeroc'h a zo; er China-ze n'eo ket hepken Chinaiz, Europiz hag Amerikiz eo a zo; bez 'ez eus ivez, e lec'hioù, eur ouenn dud hag a deu eus ar re a oa o chom er vro-se a-raok ma reas Chinaiz o diskenn enni, hag an dud-se n'int ket gouest d'en em glevet, tamm ebet, gant Chinaiz. Ar Pab a zo deuet d'her gouzout, ha setu perak en deus roet urz d'an A. Seguin, eskob Kou-Yank-Fou da ober eun eskob, eus an A. Carlo, a vezo, en e garg, gounit d'ar feiz gouenn dud kenta ar China.

D'an 23 a viz c'houevrer diweza an A. Prud'homme, eskob Prins-Albert, — eun eskopti hag ez eus ennan Alamaned, Poloniz, Tcheked, Saozon ha Gallaoued — a voe digemeret gant Pi XI ha setu aman petra lavar, e-unan, eus ar weladenn-se :

« *D'ar yaou, 23 a viz c'houevrer, da greisteiz ugent, e voen galvet david an Tad Santel; eun eur ugent or bet dalc'het gantan; goulenn a eure diganen keleier an eskopti; rei a eure d'ar meuleudi dre ma ouezan tremen diouz ar gouennou tud dishenvel a zo em farrezioù: « Netra, emezan, e laka « eur bobl d'ho karet kement ha gouzout he yez. « Tro am eus bet da welet, an dra-ze vad-unan, meur « a wech! »*

An holl a oar e komz ar Pab meur a yez. Lavaret em eus d'ezan edon o teski ar poloneg: « Eur yez diaes eo, emezan, met yaouank oc'h c'hoaz ha krenv, ha rak-se ne vezoc'h ket pell evit deski a-walc'h da ober vad ar dro d'eoc'h. »

Ar c'homzou-se o deus graet vad d'am c'halon ha diskouezet d'in edon en hent mat o klask tremen gwella ma c'hellan diouz ar dud oun karget da

gelenn hag o kas d'ezo beleien barrek da gomz da bep hini, en e yez, vit gellout o hentcha aesoc'h a-ze warzu ar baradoz. »

Sklêr eo ! youl ar Pab eo e ouesfe e eskibien hag e veleien kement yez, komzet gant ar gristenien, a zo en o c'harg, ma c'hello pep hini eus ar re-man klevet e eskob hag e veleg o komz outan er yez en deus desket war barlenn e vamm hag a zo eun alc'houez aour e vez digoret gantan raktal dor ar galon.

Seul-vui a yezou dishenvel a vo etouez an dud ha seul-vui a ganaouennou dishenvel a dregerno, dre ar bed, en enor d'an Dreinded. An dishenvedigez, en unvaniez, eo a ra ar vraventez hag an hini n'her gwel ket ne oar ket c'hoaz petra a zo kaer.

Seul-vui a yezou dishenvel a vo ha seul-vui a dro a gavo ar sperejou d'en em lemma ha seul-vui a gerioù a gavint d'en em voda. N'eo ket er c'herioù brasa eo ec'h en em blijer ar muia :

Dindan ar soul en e lochen,

Ar paour a c'hell c'hoarzin laouen !

hag ar pez a zo gwir evit kerioù ar c'horf a zo ker gwir all evit kerioù ar spered.

N'eus nemet tud foll pe dud gouez hag a vefe gouest da ziskleria brezel da eur yez. Meur a hini her gra, siouaz, zoken e Breiz, met unan a zo da vithana ha n'her gray biken, daoust pegen uhel ben-nak eo savet e dron a-zioc'h tronioù all an douar hag hennez eo ar Pab. Ne vez ket selaouet atao e gomzou kement ha m'eo dleet e vijent, met nerz ar vrec'h hag an niver a zo dister e-skoaz nerz ar gwir ; heman a zo evel an eol : sevel a ra atao war gorre, abred pe ziwezat ; ar gwir a zo trec'h d'ar bed.

Y.-V. Perrot.

Buhez an Tad Julian Maner

E Nevers hag e Rouan (1638-1640)

E Nevers ez oa eur skolaj bras savet e 1572 gand ar prins Louiz Gonzag, dug Nevers. Ar Renér oa an Tad Berard en doa anavezet an Tad Maner e Bourj. An Tad Rigoleuk, an hini a reas skol d'an Tad Maner e Raouzou, a oa ive breman e Nevers.

An Tad Maner a voe fiziét ennan unan eus ar c'hlasioù uhela. En em lakaat a reas da labourat evel m'en doa graet e pep lec'h. Met n'en em gave ket eürus e Nevers. Dont a rae d'ezan kelou fall eus a Gemper. An aotrou 'n eskob, Guilhou Le Prestre, ne felle ket d'ezan klevet hano eus misionou. « N'eus ket a brotestanted em eskopti, emezan; n'eus ket ezomm a visionou. »

Perak kas an Tad da Gemper, p'en doa difenn d'ober misionou? Ouspenn-ze, ar misionou a goustfe ker. Eus pelec'h e teufe peadra da zikour ar visionerien?

An Tad Maner a lakeas e fizians er Werc'hez Vari hag a gendalc'has d'ober skol. Neuze eo e sonjas lakaat urz er pezh a oa c'hoarvezet epad e glenved. Graet en doa le, ma teufe da barea, d'en em rei da visionou Breiz, met al le-ze, evit beza mat, a dlle beza aotreet gand e vistri. Skriva a reas da Roum, d'an Tad Vitelleschi, Mestr-Rener an Urz, da zisplega d'ezan e pe stad truezus edo Breiz-Izel, hag en doa graet le, epad eur c'hlenved, m'en dije ar pare, da vont da brezeg eno an Aviel, hag e lavare ive en doa desket ar brezoneg. An Tad Vitelleschi a gavas mat ar pezh en doa

graet an Tad Maner hag a roas urz d'e gas da Gemper kerkent ha ma vije gellet.

Met an Tad Maner n'en doa ket c'hoaz graet ar pezh a hanver an « trede bloaz » e Urz ar Jezuited. Ar bloaz-ze a dremenont adarre en eul leandi o pedi hag oc'h en em zizober gwella ma c'hellont eus ar pezh a vefe c'hoaz rebechus en o buhez. Evid ober ar bloaz-ze an Tad Maner a voe kaset da Rouan.

Ar c'hiz a zo ive, epad ar bloaz-ze, da zeski d'ar Jezuited yaouank an doare d'ober katekiz, da brezeg, da welet ar re glanv. An Tad Maner a yeas, gant an Tad Pinette, da brezeg eur mision da gêr Bernay, e eskopti Lisieux. Epad ar mision, e klevas hano eus eur vamm he doa ouz he mab eur gasoni spontus. Kaer en doa ar mab goulenn pardon, ar vamm ne felle ket d'ezi pardoni. An Tad Maner hag an Tad Pinette a welas ar vamm-ze en he zi, met kaer o doa prezeg d'ezi, ne rae van evit klevet o c'hentelioù; ne hardone ket. Abaoe eun eur edo an Tadou en ti, ha poent oa distrei. An Tad Maner en em daolas d'an daoulin dirag ar vamm griz-ze, d'he fedi da zilezel he c'hasoni. Neuze hepken ar vamm a voe skoet he c'halon. En em deurel a reas etre divrec'h he mab hag e trugarekas an daou Dad da veza graet d'ezi kaout keuz d'he fec'hed.

Epad ar mision e voe graet en iliz lidou kaer evit skei daoulagad ha sperejou an dud, ha d'ar fin eur prosesion bras ha kaer meurbet. Ouz an tiez bannielou, garlanteziou; er ruiou pallennou ha traou kaer. E penn ar prosesion 6 Breuriez gand o bannielou ha da c'houde 30 bugel e gwenn, henvel ouz aelez ar Baradoz; 60 plac'hig e gwenn ive,

ar re o doa kommunit evid ar wech kenta epad ar mision; warlerc'h e teue 50 beleg gand o dilhad oferenna ha Leaned a Urz sant Fransez ha sant Beneat. Tad Rener Leaned sant Beneat eo a zouge ar Zakramant. An dud vras a gêr, an dud-jentil, o doa ive gwisket o dilhad kaera. Eur c'houec'h pe seiz mil den a heulie ar prosesion.

Eur protestant, o welet traou ker kaer, kement a feiz, a garantez evit Doue, a c'houlennas beza kelennet war ar relijion gatolik. Ha ker buan e teskas ar gwirioneziou, ma voe gellet hepdale e zigemeret en Iliz katolik.

Eus Bernay, an daou visioner a voe galvet gand eskob Lisieux, da vont da Orbek. O tigouezout e weljont sevel ar groug da lakaat d'ar maro eun torfetour. War eün ez ajont d'ar prizoun. An torfetour ne felle ket d'ezan kovez e bec'hejou d'ar beleg karget eus ar prizoun. An Tad Maner a bok d'an torfetour hag a lavar d'ezan gand eur vouez leun a dan hag a garantez: « A-raok eun eur, c'houi a vezo bet barnet; komprenit ' ta pegen talvoudus eo d'eoc'h en em lakaat e stad vat da veza salvet. » E bedi hag e aspedi a ra, kement a druez en deus ouz e ene. Neuze an daou Dad en em daol d'an dabulin da lavaret an *Ave Maris Stella* ha Litanioù ar Werc'hez. Kerkent an torfetour a zo skoet e galon, kovez a ra pec'hejou e vuhez penn da benn, diskouez a ra keuz bras hag ez a d'ar groug gant nerz-kalon.

En nosvez kenta goude ma oant en em gavet e Orbek, e voe eur barr-arne spontus; ar gurun a gouezas war an ti tosta d'o hini hag hen devas; an tan gwall a grogas e kalz tiez, ha tud kêr a oa spontet holl. Eur beleg a zigasas ar Zakramant,

an Tad Maner a daolas eur skeudenn venniget war an tan. An avel a ehanas neuze hag an tan ive. An dud a ganas meuleudi da Zoue. An darvoud-ze a dalvezas d'ar mision. Prezegennou ar visionerien a voe selaouet mat hag an dud a zeuas da govez o fec'hejou. Ar veleien, tud an noblans, a voe gand ar re genta, hag ar re all a heulias.

Eul Lizer digant an Tad Bernard.

Ar vosenn e Kemper.

O tistrei da Rouan, an Tad Maner a gavas eul lizer skrivet d'ezan gand an Tad Bernard hag a gomze eus ar vosenn e Kemper, eur gwall vosenn, a ziskaras kalz tud met a ehanas en eun taol.

Ar gristenien a damalle ar vosenn da bec'hed eun den fall a Gemper, eur mesvier divalo, en doa torret he fenn da skeudenn sant Kaourintin a oa a-us d'e feunteun. An torfed-se ne voe ket kastizet. Eur bloaz warlerc'h, e fin 1638, ar vosenn a gouezas e ti ar mesvier-ze hag ac'hano en em skignas dre gêr. D'ar 26 a viz genver 1639, an aotrou markiz a Rosmadek, gouarner kêr, a vodas an noblans hag ar vourc'hizien evit klask an tu da drec'hi ar c'hlenved. War dorgenn Rozengroc'h, el lec'h eman breman ar blasenn foar, e voe savet buan tiez da zigemeret ar re glanv. Ar C'hapusi- ned a voe goulnnet diganto kas daou pe dri eus o zadou da govez ar re a vije dare da vervel. D'ar Jezuisted e voe lavaret sarra o skolaj ha kas ar vugale d'ar gêr betek merc'her al ludu. Ar glas-kerien bara, ar rederien hent a voe roet urz d'ezo da guitaat kêr dindan boan da veza fouetet. Ar chas, ar c'hizier, ar moc'h hag an holl loened gouest da rei ar vosenn a voe kaset kuit. Tud a voe karget da zougen ar re glanv betek torgenn

Rozengroc'h ha da lakaat en douar ar-re varo.

Ar vosenn a gendalc'he da spega. Evelato ne groge nemet aman hag ahont. Met er penn kenta a viz gouere niver ar re glanv a gréskas en eun doare spontus. Kalz a guiteas Kemper ha zoken beleien ha leaned. Ti ar Jezuisted a voe sarret a-nevez hag, an 800 skolaer kaset d'ar gêr. An Tadou en em rannas e teir lodenn hag a yeas lod da Lokamand, lod da eun enezenn a bell. Pevar a jomas e Kemper da entent ouz ar re glanv.

Ar maro a skoe gwasoc'h gwaz. An holl a oa spontet. En ilizou ha chapelioù, endro d'ar c'hadoriou-kovez, e veze ato leun a dud. An Tadou Kapusined, skoet ive gand ar c'hlenved, ne c'hellent mui entent ouz ar re glanv. Ar re-man a oa ker bras o niver ma n'oa ket a blas evito war dorgenn Rozengroc'h, ha m'oa ret o lezel en o ziez. Ouz an tiez-ze den ne grede tostaat.

Renerien Kemper en em droas ouz ar Jezuisted da c'houlenn sikour. Daou Jezuist a veze ato oc'h entent ouz ar glanvourien, daou all a jome er skolaj evit redek kerkent ha ma vijent galvet. An Tad Bernard a veze gwelet e pep lec'h, o vont eus eun ti d'egile, o kovez, o kas ar gommunion, o rei an nouenn.

Hag ar vosenn a gendalc'he da spega. Eiz pe nao c'hant he doa sammet e bloaz. Eun deiz an Tad Bernard, o welet pegen truezus oa stad Kemperiz, en em daolas d'an daoulin dirag eur groaz hag a bedas a greiz e galon: « Va Doue, emezan, ha n'hoc'h eus ket aman eur zervicher mat benak da glevet diganeoc'h ouz pehini eus ar zent e tleomp en em erbedi evit kaout fin d'ar c'hlenved? » Ha kerkent e klevas fraez ar c'homzou

man: « Sant Kaourintin eo a dleit da bedi. »

Kerkent an Tad Bernard a gerzas da glask Renerien ker evit lavaret d'ezo e zonz. En em gaout a reas gand an aotrou a Gerguelen, vikel vras, hag e lavaras d'ezan: « Me gred start hor befe fin d'ar c'hlenved, ma karfemp en em erbedi holl ouz sant Kaourintin! » Ar vikel vras a brometas mont war eun da gaout ar mear. Heman a roas urz da zeni ar c'hloc'h evit gervel ar vouc'hizien. Kerkent ha m'o deus klevet petra zo a nevez, e reont le, war goulenn an Tad Bernard, da lakaat en eur plas kaer brec'h sant Kaourintin en iliz-veur. Ar vrec'h-ze, digaset gand an aotrou 'n eskob Leprestre eus abati Marmoutiers, a oa dalc'het gantan, abaoe 17 vloaz, en e vaner e Kervegan.

Dioc'htu goude ma voe graet al le, ar vosenn a ehanas. Leun a anaoudegez vat evit sant patron Kerne, an Tad Bernard a boanias da lakaat e enori, rak evel ankounac'haet oa gand e Gerneviz. Er feunteun a zoug e hano e lakeas eur skeuden all, hag an hini a oa bet dibennet a zigasas d'ar skolaj. Staget e voe an tammou an eil ouz egile, hag ar skeudenn a voe savet er porz dirag ar c'hla-siou.

Ouspenn-ze, goulenn a reas digant tud Kemper derc'hel d'o le. Met ne voe gallet kaout ar vrec'h nemet dre destamant an aotrou 'n eskob Le Prestre, sinet d'ar 7 a viz du 1640, an deiz araog e varo. Ret e voe gedal pell araok ma voe graet an arched arc'hant da zigemeret ar relegenn, ha kempennet eur plas kaer en iliz d'he lakaat. D'an 3 a vae 1643, e amzer an eskob nevez Ronan al Louet, e voe douget ar vrec'h e prosesion ha graet eur gouel bras, en he enor.

Y. U.



MAMM DOUE

An Aviel ne lavar ket kalz a dra diwarbenn ar Werc'hez Vari: *Maria de qua natus est Jesus qui vocatur Christus* Mari, eme zant Vazè, I, 16. an hini a c'hanas Jezuz, a voe lezhanvet ar C'hris, met an Iliz gant he chapeliou, he aoteriou, he zaelennou, he skeudennou, he meuleudiou he c'hleier hag he breuriezou n'he deus ket uhelaet kement Mari ha m'en deus graet an Aviel gant ar gerioù berr hag helavar-se ha n'eo ket souezus e kendalc'hfe kristenien ar Zav-heol da jom hep lakaat, eveldomp, kurunnou war benn ar Werc'hez. Eur zeizenn a lakont war he zal gant ar ger-man broudet warni e lizerennou aour, THEOTOKOS, Mamm Doue. Petra dalv hor c'hurunnou-ni e skoaz al lezhano-se ? Netra !

Epad ar miz-man, a-ze he miz,

Bemdez, bep noz hag e pep ti,
Meulomp Mari



ITRON VARIA KERGOAD

Etre mor Douarnenez ha Menez-Hom, traonien ar Ster hag hini ar Ris, eman ar Porze, eur vro gaer ha pinvidik, ma 'z eus unan, benniget gant Doue, p'eo gwir e kaver enni, daoust ma n'eo ket gwall vras, tri eus lec'hioù santel brudeta Kerne: santez Anna ar Palud, Lokronan ha Kergoad.

Kergoad a zo eur chapel gaer, eus a barrez Kemeneven, hag a zo bet hanvet evelse, o veza ma 'z eo bet savet war lez eur c'hoad bras a hanver atao Koad-an-

Duk, hag a c'holo eul lodenn vat eus ar menez ma voe torret warnan, gant Keben, korn an ejen a zouge korf sant Ronan.

Kergoad a zo bras ha graet, penn-da-benn, gant mein-ben. Gwelet a raer an tour, en tu kleiz d'an hent a ya eus a Lokronan da Gastellin, dre Gast. Gwechall, e oa gwez fao ha gwez dero, eus ar re gaera er vered, tro-war-dro, d'ar chapel; trouc'het int bet, met gwez bihan a zav en o lec'h, hag a ro eun tamm disheol d'ar bardonerien a azez, en o serr, da ober eun diskuiz.

Gwasa pez a zo, ne ouezer ket, mat a-walc'h, na pegoulz, na penaos, eo bet savet ar chapel-se. Ar Werc'hez, da gredi eo, a reas eno eur burzud ben-nak e kenver ar re her fede, pa 'z eus gelllet dont a-benn da zavel eur chapel, ker kaer all, diwar an aluzen. Gwer a liou, eus ar XV^{vet} kantved, a gaver en eur prenestr hag a zo nevesoc'h egeto; ar pez a ziskouez e oa karet kalz Itron Varia Kergoad, en amzer hon Duked diweza, p'eo gwir he devoa eur chapel, pinvidik a-walc'h da gaout gwer a liou eus ar re vraoa.


Ar chapel a weler breman a zo bet savet, e bloaveziou kenta ar XVII^{vet} kantved, met renket eo bet a-nevez, eun tamm a-raok an Dispac'h, ha neuze, wardro ar bloaz 1765, eo e voe adsavet an tour a zo breman, gant Gwillou Salaün, ijinour e Kemper. An tour all a oa bet diskaret gant ar gurun, d'an 10 a viz kerzu 1740, hag o koueza en doa hanter zisvantret ar chapel. Ar vali greiz a zo ledan hag uhel hag he lambrusk a zo koataet evel krogenn eul lestr. A-drenv kein an aoter vras eman Itron Varia Kergoad, ar mabig Jezuz ganti war he brec'h; dereziou a zo d'ar bardonerien da

c'hellout pignat betek enni, a bep tu, da bokat d'he zreid. He fedi a raer, dreist holl puz an teurel gwad hag ouz an tan, marteze, dre ma 'z eus eur stlabez henveledigez etre ar ger koad hag ar ger gwad, koulz hag etre liou ar gwad hag hini an tan-gwall. A-zioc'h an aoter ez eus eur stel war goulounennou. Er prenestr bras a zo a-drenv an aoter, e weler, er penn war laez, skoued ar markiz du Gage, aotrou Gwengat ha Lezarscoët. An dud diwardro her galy: *Krib ar Gag*, hag, e gwirionez, stumm diou grib, dent an eil etre dent eben, en deus. Leurenn ar c'heur a zo graet gant mein-ben ha mein-skent kroazigellet.

War an aoter a zo a-gleiz e weler taolenn an Nouenn, graet diouz eun all kosoc'h, bet livet, gant al liver bras Valentin, wardro ar bloaz 1775, evit chapel Kergoad, war goulenn person Kemeneven. Valentin, war a leverer, en doa c'hoantaet liva, war an daolenn-se, maro intron yaouank Kerou-las, eus a vaner Treffry, e kichen, digouezet, eun nebeud bloaveziou kentoc'h. Met e daolenn, red eo ma vefe leiz ar chapel, a gollas he braventez, ha pa voe kaset da Gemper, da gempenn, e rankjod ober unan nevez, diouti da lakat en he lec'h; he miret a raer atao, koulsgoude, e sakreteri an iliz-veur. Valentin en doa graet ivez taolenn ar Rozera da lakat a-zioc'h aoter an tu dehou; evel taolenn an nouenn, houman ivez a zo bet aet buan da fall hag a zo bet red ober eun all diouti da lakat en he lec'h; ne ouezer ket petra eo deuet Rozera Valentin da veza.

Ar pez a laka chapel Kergoad da veza kaer eo he seiz prenestr gwer-a-liou koz hag a lez bannou an heol da gas o sklerijenn eus an eil tu d'egile

d'ar chapel, a-dreuz he filieri hag he gwaregeier. Na c'houek eo pedi er chapel goz-se ha na buan e teuer enni da gaout feiz virvidik ar re o deus he savet hag a veve en eun amzer hag e c'helled kredi e galloud ar Werc'hez hag e galloud ar Zent hep beza abeged ha dismeganset gant pabored dizoue evel ma vezer breman.



Kalvar Kergoad

Etouez ar gwer a liou kaer-se-hag a vije bet gwerzet. 1500 lur, gant gouarnerien iliz Kemeneven, breman ez eus daou ugent vloaz, anez ma voent diarbennet gand ar *Beaux-Arts*, — e weler Joseph, gwerzet gand e vreudeur, hag o tec'het a-raok gwreg Putiphar pa glaske hen dougen d'an droug; taolennou ar Varn ziveza warno elez mat hag a zoug eneou d'ar baradoz, goude o diframma eus a dre daouarn an diaoulou a glaske o derc'hel ganto; eur genou bras dent lemm enni, ha tan-

gwall o tont anezi a verk an ifern; diaoulou glas ha reunok, pennoù marmouz pe bennoù chas d'ezo, a sko gand o goafou war an dud daonet da ober d'ezo diskenn e rouantelez Satan. E traon an eil prenestr e weler penn eur chaloni eus a Gemper, a bacas ar gwer, hag a zo war e gein eur chap alaouret skeudennou an Ebestel war he bevenn. E skoued: eur wezenn leun a frouez gand eul labous war gorre hag eur c'houlin o tremen, d'ar red, dindan, a zo livet war e gador.

Uheloc'h eman an Ebestel, Jalm, Andre ha Per ha dirazo profeted al lezenn goz: Isaias, Jeremias ha Jechonias. Gwer ar prenestr-man a zo bet war unan eus prenecher ar chapel goz.

E tu ar c'hreisteiz e weler eur zantez Anna, eured ar Werc'hez, kemennadurez ar c'helou mat, eun daolenn gaer eus ar c'hinivelez, eur zant Mikael o trec'hi an diaoul ha kement-se holl a zo savet er stumm koz-se a ro kement a dalvoudegez d'an taolennou santel a zo deuet d'eomp digant hon Tadou. Ar prenecher a zo a bep tu d'ar c'heur n'eus chomet enno nemed ar skouejou, re an Henc, aotrou Kergoad, e Kemeneven, re aotroned Langueouez, Lezarscoët, Moellien, e Plonevez-Porze. Gentil Pont-Lez, e Kemeneven, Poulmic ha meur a hini all c'hoaz.

Eun ogrou a zo ivez e Kergoad, met mut eo hanter kant vloaz a zo; c'hoariet ez eus bet gantan, evid ar wech diveza, eme ar c'hloc'her koz, er bloaz 1880, pa voe benniget ar c'hleier nevez. A-zioc'h an nor gostez e weler eur werc'hez kurunet, e maen Kersanton, he mabig war he brec'h.

E traon ar chapel, en eur gampr, brein he leurren, eman armel vras an diellou o koueza a-dam-

mou; paperiou hag arc'hant ar chapel a veze enni gwechall; breman n'eus netra ebet enni ken nemet gwiad kivnid: ar paperiou-leve a zo bet laeret ha kollet gand an Dispac'h hag an arc'hant a zo kouezet dindan krabannou eun dispac'her divalo bennak. War ar sakreteri e lenner an oad: 1675 hag hano an hini a oa person neuze: an A. Piederrière.

Er vered ez eus eur c'halvar, diazezet war eur chichenn tri c'horn, gand eur peul, e pep korn; war an tu a-raok ez eus eun aoter e kaver warni I. V. a Druez, sant Yann Vadezour, e oan, war e levr, sant Gwennole ha sant Avertin, e benn, en e zaouarn.

Pelloc'hik eman ar feunteun e weler, a-zioc'h he dour, santez Anna, hag ar Werc'hez gand ar Mahig Jezuz, ar geriou-man a-zioc'h o fenn : IESV : MARI: ANNA: 1781.

Chapel Kergoad gwerzet epad an Dispac'h, gant he bered, a voe prenet, evit 854 lur, gant Nedeleg Saliou eus a Gergoad vihan, hen adgwerzas da iliz Kemeneven, er bloaz 1804. Gwerzedigeziou leveou ar zent a zo bet unan eus eugusa traou a reas dispac'herien Paris. Biskoaz n'eus bet gwelet tud ker gouez oc'h en em gemeret ouz chapelioù hag ilizou hag a oa karet gand an holl hag a oa evel touriou-tan ha kerioù-penn ar feiz er vro. An dispac'herien fallakr ne welent er chapelioù hag en ilizou-ze nemet berniou mein, mat da werza ha da zispenn evit sevel traou all. Eleiz a dud vat a en em glevas d'o frena evit mirout na vijent diskaret, met nag a bed a zo bet dismantret ha laket o mein da zevel tiez ha kreier moc'h.

Pardon bihan Kergoad a vez graet da zul ar C'hasimodo hag ar pardon bras, d'ar zul warlerc'h

Hanter-Eost. Breman ez eus hanter kant vloaz ne veze ket roet kalz a arc'hant c'hoaz d'ar chapel, met roet e veze berniou kanab, kochadou neud, dilhad, hivizou, ed, hag all, e prof d'ar Werc'hez. Alies ivez e roet, d'ar chapel, babigou koar e weler c'hoaz unanig bennak anezo, e kichen ar Werc'hez. D'ar pardon, e vez douget an Itron Varia, en dro d'ar vered; ar prosesion-se en deus roet tro, d'al liver bras, Jul Breton, — a deuas da welet pardon Kergoad, er bloaz 1865, — da ober eun daolenn leun a vuhez hag a liquiou kaer. Kroaziou ha bannielou ar parrezioù tosta, Plogonneg, Lokronan ha Plonevez-Porze, a deu da gaerât ar pardon hag a vez digemeret, gant lid bras, er porz-gwered, gant kroaz Kergoad ha banniel sant Ouen, patron Kemeneven, a vez laket da boket d'ezo. Ar prosesion-se a vez hanvet *proseion ar miraklou*, rak ar re o devez bet eur c'hras bennak, digant an Itron Varia, a gerz er penn a-raok, war gorf o roched, diskabell ha diarc'hen, eur pilled-koar, en o dourn

Kalz tud a vez atao er pardon ha dont a raer da Gergoad eus pevar c'horn Kerne.


Epad ar c'horaiz, meur a hini a ya da Gergoad, da lun, da ober o hanter-goraiz, en eur ober teir dro d'ar chapel, hag en eur lavaret o chapeled.

Breuriezh Hor Zalver en e angoni, hag Itron Varia a druez a zo bet savet e Kergoad e bloaveziou diveza ar XVII^{et} kantved; Innosant XII, dre lizer skrivet er bloaz 1695, a roas d'ezi eun induljans a seiz vloaz da c'hounit da c'houel sant Andre, da c'houel Hanter Eost, d'an 8 a viz gwengolo, ha da drede lun ar c'horaiz. Al lizer-se bet moulet

war baper-ler, er bloaz 1699, a gaver atao etouez paperou koz ar barrez.

D'an Dro-vinihi vras, ar prosesion a dremen tost da Gergoad, dre ar Gernevez, hag ar re gaera eus sent ar chapel a vez laket war lez he hent, e disheolennou graet gant glasvez ha linseliou; e Toull-ar-Stiff e kaver sant Maturin; e Trobalo, sant Gwennole; e Mesaudren, Itron Varia Gergoad he-unan, en he c'hichen kroaz kaer ar chapel; er Gernevez, santez Barba. Epad eiz dez, ar bardonerien a dremen ebiou ar zent-se, a ra dirazo eur bedenn, hag a daol o frof, er plad, a astenn d'ezo ar fabriked.

G. P.



Feunteun Kergoad

Marvailh ar soner a yeas d'an ifern hag a c'hellas dont anezan⁽¹⁾

(Tennet eus eur vojenn, hag he deus pemp pe c'houec'h kant vloaz).

Er Faou, e veve gwechall eur soner, gwella den a oa o vale, ma n'en divije ket bet karet, re, en holl, e vanne. C'hoari hag eva, eno edo e blijadur. Kerkent ha m'en deveze eur gwenneg bennak e veze krog en disou hag e lonke an eil picherad chistr warlerc'h egile. Pa n'en deveze netra e lake



e vinion e gouestl. E zilh a veze atao e truilhou; bale a rae atao diarc'hen; daoust da-se e veze atao kel laouen hag ar Spered Santel; her c'hlevet a raet o kana dre ma 'z ae ha ne c'houlenne ouz an Aotrou Doue nemed eun dra: ma en em gavfe ar zul ken alies ha bemdez.

Eun abardaez m'en doa evet re a jistr e oa chomet da gousket gant e govad, en eur straed zoun; eun tiek o tremen, gand e garr bras, hel lazaz, hep

(1) Arabad da zen ebet kredi, na petra 'ta, e vefe harpet ar marvailh-man, war an Aviel.

her gouzout. Dres, eun diaoul bihan a oa, neuze, en ardremez, o c'hedal eun ene bennak da gas d'an ifern hag a zammas, d'ar red, ene ar soner a oa o paouez tremen, hag hen dougas, gant lorc'h, da Gersatan.

Digouezout a eure er gêr, p'edo an diaoulou o fizrei; Paol gorniok a oa, en e zav, e kichenik an nor. Dre ma teue e vevelien, e stlapent, harp



ennan, ar pez o deveze gelllet da dapa: barnerien, laeron, marc'hadourien, tud-chentil ha zoken eur manac'h pe zaou, tud holl bet skoet gand ar maro, pa n'edont tamm ouz e c'hedal. Roue an ifern a zelle ouz an dudigou keiz-se ha goude beza graet eur sell outo e roe urz d'o stlepel en eur gaoter vras leun a zour bero. Paol gorniok a gredas e oa dizroet e holl elez hag edo o vont da lavaret prena an nor, pa welas eun diaoul bihan, dare da zihalana, o tont, gand ar soner war e gein, a daolas war an treujou e-harz treid e Aotrou: « Tosta, eme henman; petra e oas war an douar? Laer, breutaer pe verc'hetaer? »

— Nann, aotrou, me a oa soner, ha, n'em eus ket a aoun o lavaret, ne oa den ebet ker barrek ha me da zeni ha da gana; c'hoant ho peus e kanfen d'eoc'h eun dra bennak d'ho tidui.



— Me az kaso da gana, ya, boule'hurun; aman, n'eus ket a ezomm a ganerien; met, selaou aman ganen; n'oun ket eur gwall ziaoul ha neuze, leun

tenn eo ar gaoter; rak-se 'ta ne vi ket taolet ebarz, gant ma ri tan dindanni, noz-deiz; en hent-se e c'hellin rei labour all d'an diaoul a oa karget eus an tan-se. Taner e vi 'ta, en ifern? Tomm e vo d'it, met koulsgoude ne vo ket ken tomm d'it aze hag er gaoter.

— An dra-se a rin a-walc'h avat, ma kirit, eme ar soner, hag hen staga raktal da ober tan ha da stlepel keuneud ebarz, mar gouie.

Nebeut amzer goude e voe klenved spegus war an douar; an dud a varve evel kelien; Paol gorniok a gasas e holl zrouk-elez da redet warlerc'h an eneou. A-raok mont e-unan e c'halvas ar zoner:

— Labour am eus d'ober er maez me ha va holl Elez ha rak-se az kargan da deurel evez war va zud daonet. Gwaz-a-se d'it ma vank unan anezo pa deuin en dro rak laket e vi raktal ouz ar ber da resti, evel eur penn-yar, epad an holl amzer.

— O! Aotrou, it ac'halese, dienkre; respont a ran anezo koulz hag ac'hanon; pa deuoc'h en dro e vo an tan ker bras ha biskoaz ha tra pep tra, en urz.

— Mat eo! met, gand a ri, taol evez!

Ha goude beza graet evelse e c'hourc'hemennou diweza, Paol gorniok hag e Elez daonet a en em lakeas en hent.

Sant Per a oa dres o tremen, dre eno, en doa astennet e skouarn ha klevet ar pezh en doa lavaret an diaoul:

— Breman avat, emezan, e rankan en em denan, dre aman.

Lezel a eure ar sklerder a gurune e benn da ver-vel; dua a eure e varo hag e vleou louet; troka a

eure e loštenn wenn ouz hini eun dijentil ha gant sikour Doue e tigoras dor brennet an ifern yen; en em gaout a eure dirak ar zoner estlammet ouz e welet:

— Piou out te, emezan; eus a belec'h e teues?

— Peoc'h, eme Ber; oc'h ober eur bale e oan dre aze, hag em eus laket va zreid aman, eur pennadig; ma kerez e c'hoarimp disou; eur yalc'had vat a arc'hant am eus da goll.

Hag e tennas eus e c'hodell, eur c'horn, disou hag eur yalc'h teo gand ar peziou aour nevez flamm a oa ebarz. O welout kement-se, daoulagad ar paourkez taner a luc'has; e c'hoant c'hoari a grogas ennan, met en eur lezel eun huanadenn hir e lavaras:

— Siouaz, Aotrou, me n'em eus netra da lakat e gouestl e kenver ho skouejou c'houi; n'em eus nemed ar c'hoz roched rok-dirok-man a zo war va c'hein.

An dra-se n'eo netra ebet, eme zant Per, ma n'az peus ket a arc'hant, e roi eun ene d'in, pe zaou, en e lec'h, ha mat pell a zo; aman n'eo ket an dra-se eo a vank, war a welan; meur a gant a zo aze ganez, er gaoter-se, o virvi.

— A! nann avat, n'oun ket evid ober an dra-se, rak goude ha ma ne vankfe nemed unan hepken, e koustfe ker d'am ler.

— E kav d'it e ouezo da vestr e vank eun ene ben-nak el lec'h ma 'z eus kement all? Hennez n'eman ket o vont da goll e amzer o vont da gonta an eneou-ze. Sell, sell ouz ar peziou lugernus-se. Tro gaer ez peus d'o gounit ha gwaz-a-se d'it-ma n'hel lakes ket da dalvezout. Ne fell ket d'it? Mat, gwaz-a-ze; mont a ran gant va hent ha ne zizroin ket ken.

Ha sant Per a reas an neuz da vont kuit. Ar soner reuzeudik a oa gwasket gant e c'hoant c'hoari hag e strafuilh rak ar binijenn en doa komzet Paol Gorniok anezi a-raok mont kuit. Pa welas Per o tostât ouz an nor e redas war e lerc'h :

— Mat, emezan, ma kirit e raimp eun taol disou pe zaou, met ne vo nemed eur ene an taol.

Evid e lakât da c'hoari a-zevri, sant Per hel lezas da c'hounit an taoliou kenta ha pa welas e oa atapiet a-zoare gand ar c'hoari e lakas ar chans da drei diouz e du. Kaer en devoa ar soner evit tapa buanoc'h a-ze ar pez en doa kollet lakat daou ha tri ene an taol, ne c'houneze ket muioc'h; reuzeudik oa ha ne rae nemet koll bep tro. Gand ar gounnar a oa ennan a lavaras da zant Per:

— Red eo ma vefes eur riblaer evit gounit bep taol, evel ma res. Ne c'hoariin ket ken ganez, rak n'eus ket eun neudenn eun ennout.

— N'eo ket gwir an dra-ze, avat, eme zant Per; gwelet a res e c'hoarian a-wel d'it ha nann dre zindan; te eo an hini ne c'hoaries ket mat hag a zo c'hoaz gwarizius gand an dra-ze!

Hag e savas tabud etrezo hag, en e gounnar, ar zoner a glaskas skei gand ar zant. A drugarez Doue, porzier ar baradoz en doa miret an divrec'h krenv en doa p'edo pesketaer hag ar soner her gouezas, ne voe ket pell an dale. Goude eur pen-nadig gourin e teujod d'en em glevet. Paotr an tan a c'houlennas staga adarre d'ar c'hoari, gant ma vije asantet gantan e oa ar c'hoari genta eur c'hoari da fall. Sant Per a gavas mat e c'houlenn ha setu i ha kregi adarre en disou. An taol-man a voe gwasoc'h c'hoaz, eun tamm mat, evid ar soner

eged an taol kenta. An hanter eus an eneoù a oa er gaoter vras a oa kollet gantan, pa deuas, en e spered, ar stultenn da ginnig da Ber, ober eun taol diveza da adc'hounit an eneoù en devoa kollet pe d'o c'holl holl. An abostol, e c'hellit kredi a gavas mat ar c'hinnig hag e stagjod raktal d'ar c'hoari. En eun hunvre, sant Per a oa gounezet gantan an taol diveza; lammat a reas raktal d'ar gaoter, kemeret a eure an eneoù, an eil goude egile, a-bouez o bleo hag e pignas d'ar baradoz, e kreiz youc'hadennou laouen, ar re a oa bet ten-net eus an dour berô.



Chomet e unan, ar soner a grene gand e spont o pleustri war ar pez a zigouesje gantan pa deuje Paol gorniok en dro.

Eun nebeud euriou goudeze. Roue an diaoulou a zizroas hag a gavas an tan maro

hag ar gaoter goullou. Kounnari a eure o welet kement all:

— Pez divalo zo ac'hanout, emezan, en doare-ze eo e talc'hes d'az ger, te ?

— A! Aotrou koueza ran d'ho taulin d'ho pedi da gaout truez ouzin: me a zo o vont da lavaret d'eoc'h an traou evel m'int tremenet.

Neuze e lavaras en doa klasket ober eur c'hoariadenn hag e oa bet ker reuzeudik en ifern ha ma veze gwechall, p'edo war an douar.

Paol gorniok a deue an eionenn eus e c'henou, kement a zroug a oa ennan; an diaoul bihan en doa digaset ar soner, war e gein, d'an ifern, a en em gavas da dremen, Paol, p'her gwelas a youc'has d'ezan kerkent:

— Te eo, gravazok, ez peus digaset al laouok fall-se, aman? Gortoz, bremaik ez pezo!



Hag e voe roet d'ezan eur roustad bazadou ma oa eun druez sellet outan ha ma roas e c'her ne zigasfe ene soner all ebet ken d'an ifern:

— Te, avat, eme Paol, en eur gomz ouz ar soner, a grene evel eun delienn, ne fell ket d'in az kwelet ken, dre aman. Kasit dillo ar marc'hadour avel da zu-

tal diwar va zro; ma chomfe nemeur, dre aman, e vefe gouest da c'houllonderi an ifern a-bez. Ra hen digemero Doue, ma kar, en e varadoz, met, evid aman, emañ a re. Er mez, ha dillo!

Ar c'haner ne c'houlenne ket gwell; stlapet war hent ar baradoz ne voe ket pell evid en em gaout gant dor lez an Dreinded; sant Per a voe laouen bras ouz e welet o tigouezout; an Aotrou Doue ne oa ket kalz e chal d'e welet o lakat e dreid, en e di, met pedennou an eneoù a oa bet tennet gantan, eus kaoter ar re villiget, a deuas a-benn anezan. Abaoe, war a leverer, Paol gorniok ne ro dige-

mer da zoner biniou ebet, na da ganer, en e rouantelez, hag ar re-man-holl, abred pe ziwezad, goude eun ehan er purgator, a vez kavet mat da vont d'ar baradoz.
G. P.



AL LABOUSED

Bugale,

Er miz-man ez an da gana d'eoc'h eur ganaouenn diwarbenn eul' labous anavezet mat ha karet ganeoc'h holl, rak bihan eo eveldoc'h, ar bihanna, moarvat, eus al laboused: al laouenanig. Nag a bed gwech ho peus kavet neziou laouenan: neziou bras graet gant kinvi flour hag en o c'hreiz eun toull bihan, bihan, a vec'h ma c'hell eur biz mont ennan. Aon o deus al laboused keiz ne deufe unan bennek d'o laerez hag e reont eun nor vihan war o zi. Bezit mignoned d'al laboused. Breman eman mare an neziou hag eur blijadur eo evidoc'h mont da neziata; met en han' Doue na zifoupit ket an neziou a gavit, na laerit ket ar viou a gavit enno. Pegen trist e ve ar parkeier, ar c'hoajou, al liorzou, ma ne ve ket klevet enno mouez lirzin al laboused:

Sut ar voualc'h, kan an eostig,
Hini an drask, ar boc'hruzig.

Petra lavarfec'h ma teufe eun den fallakr da laerez d'ho kêr ha da freuza d'eoc'h ho ti. Mat, an draze a rit d'al laboused ma tifoupit o neziou. Na vezit ket ken digalon ha selaouit breman va c'hanaouenn;

Beg al laouenanig.



1

Na piou a zisplufe beg al laouenanig, (2 wech)
 Eul labousig ker bihanik e veg,
 Beg al laouenanig, holl a-hed-a-hed.

2

Na piou a zisplufe penn al laouenanig,
 Eul labousig ker bihanik e benn, e veg,
 Beg al laouenanig, holl a-hed-a-hed.

3

Na piou a zisplufe gouzoug al laouenanig,
 Eul labousig ker bihanik e c'houzoug, e benn, e veg,
 Beg al laouenanig, holl a-hed-a-hed.

4

Na piou a zisplufe vruched al laouenanig,
 Eul labousig ker bihanik e vruched, e c'houzoug, e benn,
 Beg al laouenanig, holl a-hed-a-hed. [e veg,

5

Na piou a zisplufe kein al laouenanig,
 eul labousig ker bihanik e gein, e vruched, e c'houzoug,
 Beg al laouenanig, holl a-hed-a-hed. [e benn, e veg,

6

Na piou a zisplufe askell al laouenanig,
 Eul labousig ker bihanik e askell, e gein, e vruched, e c'hou-
 Beg al laouenanig, holl a-hed-a-hed. [zoug, e benn, e veg,

7

Na piou a zisplufe kov al laouenanig,
 Eul labousig ker bihanik e gov, e askell, e gein, e vruched,
 [e c'houzoug, e benn, e veg,
 Beg al laouenanig, holl a-hed-a-hed.

8

Na piou a zisplufe lost al laouenanig,
 Eul labousig ker bihanik e lost, e gov, e askell, e gein, e vru-
 [ched, e c'houzoug, e benn, e veg,
 Beg al laouenanig, holl a-hed-a-hed.

9

Na piou a zisplufe gar al laouenanig,
 Eul labousig ker bihanik e c'har, e lost, e gov, e askell, e
 [gein, e vruched, e c'houzoug, e benn, e veg,
 Beg al laouenanig, holl a-hed-a-hed.

10

Na piou a zisplufe troad al laouenanig,
 Eul labousig ker bihanik e droad, e c'har, e lost, e gov, e as-
 [kell, e gein, e vruched, e c'houzoug, e benn, e veg,
 Beg al laouenanig, holl a-hed-a-hed.

11

Na piou a zisplufe ivin al laouenanig,
 Eul labousig ker bihanik e ivin, e droad, e c'har, e lost, e
 [gov, e askell, e gein, e vruched, e c'houzoug, e benn, e veg,
 Beg al laouenanig, holl a-hed-a-hed.

Ar ganaouenn-man a zo bet desket d'in gand Per
 Lichou eus Plouzeniel. Distagellet mat e ranko
 beza ho teod evit gellout lavaret, fraes ha buan, en
 eun aridennad: e ivin, e droad, e c'har, e lost hag
 all, met, abouez poania e teuoc'h abenn. Chans vat
 d'eoc'h.

MELEGAN.

Kavellou Goullou

« *Wa. don* : Petra zo nevez e KER-IZ »

I

Nevez-krouet gantan ar bed,
Doue a zo lirzin meurbed;
Hon tad Adam, hor mamm Eva,
En e skeud, a gav brao beva.

Fichet kaer ez int gant Doue,
Hi Rouanez hag hen Roue,
Hag eus liorz sioul an Eden
Skany d'an nenv e nij o fedenn.

Lagad aour eun heol heb e bar,
A-hed an deiz, warno a bar;
Warno, a-hed an noz laouen,
E sked mil ha mil goulaouenn.

Diskennet euz lein e balez,
Ganto o daou, dre an alez,
E vale Doue, war e bouez,
Ha d'o skouarn c'houek eo e vouez.

O daou int glan, o daou int noaz,
Diaoul ebet n'o zagas ket c'hoaz,
Ha ken Doue, ken e Eled
Outo; hep mez, a c'hell sellet.

D'al loened donv, d'al loened gouez,
D'al laboused klujet er gwez,
D'ar pesk a ruz wal al lano
Adam a zibab eun hano.

Hogen, eun deiz, ar bed a dav
Ha mouez ar C'hrouer, skiltr, a zav,
Eus e deod diou gomz a ziver,
« Ra gresko dañc'h mat ho niver. »

E urz, skrivet en envoriou,
A heuilh ar pesk en e voriou,
Ar chatal puchet en o zoull,
Al laboused neizet er zoul.

Tud a draonienn, tud a venez
E glevo holl gant levenez
Hag ar vuez, evel dour-red,
War an douar, a ruilh bepred.

A boblou stank, rumm goude rumm,
Boull ar bed en em c'holo trumm;
Broiou yen-skorn, broiou bleuniet,
A vugale a zo leuniet.

II

Ma, setu breman eur pennad,
E krogas ennoun eur mennad:
Da furchal, e-kuz, hag ez eo
Urz Doue c'hoaz doujet ha beo.

Laboused, a-hed an henchou,
Bodet war gribell ar blenchou,
Pe er goudor, e-tal o neiz,
Em dioukouarn a stlap o geiz.

Er marchosi hag er c'hreier,
Er prajou, er c'hoad, er reier
Mouez ar chatal, skiltr ha sklinton,
A dregern e ear ar mintin.

Bagou pounner ha bagou skanv,
Alaouret gant heol ruz an hanv,
A welan, er porziou, tro-dro,
Sammet gant pesked a bep bro.

Va dourn sarret, war va fenn-baz,
Ez an larkoc'h lark, pas dre has,
Dreist ar steriou, dreist an irvi,
Joa vras em c'halon o virvi.

Tremen a ran dre ar c'heriou
Er peoc'h a drenv o mogeriou,
Hag ar maeziou, ivez d'o zro,
A wel o tont ar foeter bro.

Na pebez kemm etre gwechall
Hag hirio, e Breiz ha Bro-C'hall,
Etre eur vammenn puilh ha fresk
Hag unan all o vont d'an hesk.

« Pelec'h 'mae ar c'havell, mâtez?... »
Hag e tiskouez ar c'halatez,
Pe ar zolier, pe eur c'hoz-korn
Ha va fenn-baz a gren em dorn.

Eiz, nao, dek beufig, pe ouspenn,
En o neiz, a gan a bouez-penn;
Kant danvadez 'ro bronn d'o oan
Harp ennoun en o dilhad gloan.

Hag, en tiez, en-dro d'an daol,
O tebri o soubenn ar c'haol
Pe azezet sioul war eur skaonv,
... Daou, tri vugel gant dremmou kaonv.

Du evel ar barrad-arne,
O daoulagad 'zo doan warne,

Rag klask a reont hep klemm ebet,
Eur breur, eur c'hoar n'o deus ket bet.

N'eo ket doun a-walc'h o dudi,
Gred ebet na dreuz o studi,
Eus o daouarn o levr a gouez.
O « bonjour » a zo yen ha gouez.

N'eo mui Breiz hirio hini dec'h,
Diouz an hent eun kals treid a dec'h,
Mouez ar blijadur o c'hervel
A ra da vouez Doue mervel.

Em Bro, ar vuez, sonj am eus,
Gwechall a rede, 'vel dour-beuz,
Mammou a oa ha m'o gwel c'hoaz,
A vleunie o ziad, bep bloaz.

Siouaz, siouaz, breman, hon tud,
Heb azaouez, a goll o brud,
Gwenvet eo ar bleun youank-flamm,
Mui, er galon, ar gwad ne lamm.

Klevit gwragez: gwragez ar Spagn,
Re an Itali, an Almagn,
A ziskouez deoc'h, gant beg o bez,
Ho pro, dreizoc'h, bountet d'ar bez.

Hag ar c'homper hag e barez
A zrailh d'in daou, tri digarez:
« War ar maez, Aotrou, hag e ker,
Maga bugale a goût ker. »

Ha Doue, neuze, petra 'ra?
E gomzou ne dalvont netra?
Sarr da veg, paotr, merc'h, me da bed,
Ha fizia e Mager ar bed.

D'al labous gwan e aoz e bred,
D'ar p'env e rann ar bevans ret,
Ha diouz e zourn, kristenien fall,
C'houi n'ho pefe ket kemént all?

III

Em huvre, gant e fourn c'horet,
Me wel an ifern digoret,
Strolladou, tud me wel eno,
Aet doun malloz Doue enno.

Na pebez stad, na pebez klemm,
« Sell, eme Satan, rust ha lemm,
Sell ouz mougerien ar vuez
E goueled al lenn didruez. »

O va Zalver, na skrijus eo
An tan a zebr, an tan a zeo...
Ha setu me, gant va zelenn,
Deut eus an ifern d'ho kelenn.

Pign er gador, beleg, ha sko
War eur walenn a laz hor Bro,
Embann d'an dud, hep mar nag aon,
Diskenn ar c'havellou d'an traon.

Embann pegen kaer perlezenn
A guz Doue en e lezenn,
Embann, embann, gant eur vouez krenv,
Eo d'an douar bleunia an nenv.

D'ar Zul Fask, Ebrel, 8, 1928.

J. L'HELGOUACH, M. M. D.

Keleier ar Miz

Mouez an Elzas

En hano ar Frans, en dek vloaz diweza tremenet-man,
an Aotronez Joffre, Millerand ha Poincare, o deus roet
o ger, an eil goudé egile, d'an Elzas, ne vije breset hini
eus gwiriou he bugale, nag o gwiriou a gristenien, nak
o gwiriou a Elzasiz, ha pa dal, kerkent ha ma véze troet
o c'hein gand an aotronez-se, o mevelien a yea a-grenn
a-neb o lavarou, war zigarez hevelaat, emezo, Elzasiz
ouz ar Fransizien all.

Elzasiz a glemmas; ar re a zavas uhela o mouez a voe
stlapet er prizon da c'houeliou Nedeleg diweza ha difenn
grons d'ezo da voula ken o c'hazetennou: o frosez bras a
dle digeri da zeiziu kenta ar miz-man.

An A. Poincare a gave d'ezan edo, en hent-se, o vont da
lakaat Elzasiz, da rei o moueziou, d'ar voterez, evit tud
eus e gostezenn; met eun distro lous en deus bet!

N'eo ket a daoliou baz eo e c'hounezer, evelse, kalon
eur bobl. An A. Poincare a dle her gouzout mat, breman,
pa oar pegement a voueziou o deus bet ar re m'em'an o
klask trabas outo. An Elzas a-bez, a c'heller da lavaret,
a zo savet war he zreid da stourm outan.

Darn a zo hag a lavar : « Gwaskit, gwaskit hag e ple-
gint », evel ar gazetenn ruz-tan « *Le Journal d'Alsace et
de Lorraine* » hag a skrive antronoz ar voterez kenta :
« *Désormais une politique d'assimilation continue, une
action énergique contre les ennemis de la France sont
plus que jamais nécessaires* ».

Met Yann Guiraud, Rener Kroaz Paris, (1) a zo furoc'h
hag a lavar : « *Erreur funeste ! Casse-Cou !... taolit evez
ma kendalc'hit da gerzet, gand an hent emaoch warnan,
e torroc'h ho kouzoug; evit gounit Elzasiz n'eus nemed
eun dra hepken da ober : respecter leurs droits et leurs
libertés, lezel ganto o gwiriou hag o frankizou.*

(1) *La Croix*, n. du 24 avril 1928.

Salo e teufe holl gatoliked Frans da varn traoù an Elzas evel ma oar an A. Guiraud hen ober, met siouaz, Pell-emaomp diouz eno c'hoaz ha koulskoude, Hor Zalver m'en deus lavaret e oa red beza kristen, biskoaz n'en deuz lavaret e oa red da Vreiziz ha da Elzasiz mont da C'hallaoued ha dilezel o brezoneg hag o elzaseg evit mont d'ar baradoz.

Ar re a venn laza ar brezoneg

I. — *Setu petra lavar Dibunamb Genver 1928*

Piou a zo aheurtet a eneb ar brezoneg?

Da genta penn, an dud sot ha n'eo ket bet mat ganto biskoaz deski ar brezoneg, hag a zo kounnar enno dre m'her c'homzer, dalc'h-mat, en despet d'ezo, e Breiz.

Gwelet ez eus bet anezo, e Lourd, er bloaz tremenet. An A. Gouarin, person Gregam, pedet gand an A. 'n Eskob, a oa pignet er gador-brezeg, evit lavaret eur ger pe zaou da berc'hirined Gwened.

Kerkent, setu eur vaouez o sevel gant he faner karget ha gant he botou trouzus, ha hi da redek er mêz, 'vel pa vije bet an tan... en eun tu bennag. Eun nebeud all henvel outi, hen heulias a-benn kaer, ha, me lavar d'eoc'h, eno e voe eur safar. Bez 'e oa en iliz tud a Wened, hag eus an Oriant, a-ziavêz-bro zoken, ha ne anavezent ket ar brezoneg; ar re-man ne zavjont ket eus o lec'h, digor a-walc'h a-spered e oant evit kompren e oa dleet komz brezoneg da Vreiziz hag ousspenn desket-mat e oant ha seven. Met, petra zonzit eus ar re all ?

Anavezet int bet c'hoaz e Keranna, en tolpe (bodadeg) bras savet gand an « *Action Catholique* ».

An A. Kadig, kannad e Paris, a gomzas, e brezoneg, d'an 50.000 a baotred a oa eno. Piou a vefe souezet ma prezege e brezoneg dirak Breiziz ?

Ha koulskoude, hep dalc'h, unanig bennak a en em laka da zoroc'hat. Hag evel ma oa tolpet an dud, dre ganton, e oa aes a-walc'h gouzout a bé lec'h e teue an trouz. Gwraegez a oa droug ganto klevet brezoneg e Lourd; o gwazed, e Keranna ne oant ket dishenvel diouto.

II. — *Klevomp gand an A. Thoz, e BREIZ an 22^a viz Ebrel 1928, doare ar barrez-man a vro Dreger.*

Eur person en deus va aotreet da zisplega penaos eman kont en e barrez; koulskoude, ne lavarin ket e pelec'h. E oa ar brezoneg o vont da goll. Daou vloaz a zo, an A. Person hag an A. Kure o deus argaset ar pedennou gallek, ar c'hantikou gallek, ar prezegennou gallek. Ar baotred vihan a zo distro d'ar c'hatekiz brezonek ha stad er barrez. Mat ar « jeu » neuze.

Siouaz! abaoe ma ya ker mat ar « jeu », setu ar person hag ar c'hure goursouezet o welout n'arru ar merc'hed bihan en iliz nemet pa vez achu ar pedennou. Petra 'zo kiriek d'ar c'hoarventez-man ?

Hag e klevjont ne ve lavaret e skol al leanezed nemet pedennou gallek, graet nemet katekiz gallek, kanet nemet kantikou gallek, ha c'hoaz, m'oarvat, e vez difennet ouz ar merc'hed bihan sevel o mouez gant mouez ar baotred, en iliz, pa 'z eo gwir, pa vez kanet kantikou brezonek en iliz, ne rann grik ar merc'hed bihan. Evelse eman kont er barrez-man ha, marteze, e meur a barrez all !

III. — *Lennit breman al lizer doanuz-man :*

Gwitalmeze 29 a viz Meurz 1928.

Aotrou Perrot,

Disul diweza edon war c'hed d'ho kwelout e Lokournan evit kendalc'h ar Yaouankiz diwar ar maez. Eur blijadur vras e vije bet evider komz ganeoc'h. Hel lavarout a rankan d'eoc'h, siouaz, eo gwella-ze oc'h chomet er gêr. Anez paotred Gwitalmeze ne vije bet ger brezonek ebet edoug an deiz. Betek zoken ar brezegenn graet d'an oferran a oa e galleg.

Aotrou Person Gwitalmeze en deus dichouet brao eun hevelep tra. Goulennet e oa bet digantan ober ar c'hendalc'h-se, en e barrez, ha kerkent e skrivas : « Ya, emezan, gant ma vezo graet, penn-da-benn, e brezoneg. » Ha setu perak eo bet graet e Lokournan.

... Kenavo ha ra skuilho sent Breiz o bennoz warnoc'h.

Per ar C'hadour (Ab-Maël).

Stouaz, ar ruz graet e Lokournan, war ar brezoneg, d'ar 25 a viz meurza, a zo bet nevezet e Plouvorn, d'an 10 a viz ebrel.

Gwidkaniz, da vihana, n'eus netra da damall d'ezo; graet o deus ar pezh o doa graet en o raok Gwitalizmeze. Bennoz Doue d'ezo koulz ha da Zaik Rolland, eus a Vordilis, eur paotr yaouank tri bloaz war nugen, a lakas e holl genvroiz da strakal o daouarn d'ezan, ken a goueze ar bleud eus treustou ar zal, o tispaka dirazo banniel beo ar brezoneg.

Ar Vretoned ma ouezont galleg, hag e reont, n'her gouezont nemet evit komz ouz ar C'hallaoued ha nann kenetrezo. Ar brezoneg eo yez ar galon. P'her c'harer, e karer Breiz ha pa garer Breiz e karer ar Feiz.

Hor c'heriou bras eo ar c'hroaz-hentchou e teu enno hor c'hevnoiz da goll o Breiz hag o Feiz. Perak?

Re a zarempred o devez enno gand ar C'hallaoued;

Mont a reont e kêr,
O lezel Doue er gêr !

Ma chomjent kenetrezo, kement-se ne zigouesje ket; Muia ma c'hellimp, eta, chomomp kenetrezomp, hag evit chom kenetrezomp, komzomp brezoneg; pa gomzomp brezoneg e c'hellimp lavaret atao embomp er gêr ha goude ma vefemp pep kant leo diouti.

Hag arabad d'ar re a venn laza hor brezoneg kredi e vezint lezet bpred, da ober o renkou, evel m'int bet lezet betek-hen.

Kaer hon eus klask ludu da c'holo hon tan e kavomp atao; met ma kendalc'h enebourien Breiz da ober o reuz, evel ma reont, eur pennad a zo, e teuo eun deiz ha kaer hon do klask ne gavimp ket ken: fuilhet e vo bet holl d'eomp gand an avel foll o do c'houezet war ar vro.

Nevezentiou berr

Trignac ha Montoir. Kelou laouen a deu d'eomp ivez eus ar vad en deus graet an Tad Rozec epad amzer Fask da Vretoned Trignac ha Montoir. Er miz-man e klasko o boda da ober ganto, eur zulvez bennak, pardon sant Erwan.

Bretoned ar Mans. — Skriva raer d'eomp ar c'homzouman hag a daly ar boan o embann:

Ar Mans, 23-4-28.

Aotrou Rener,

... *Bep sul ez eomp d'an oferenn ha person Sant Pavin en deus lavaret d'in hizio n'eo ket bet biskoaz, abaoe m'eman person aman, ker kaer e iliz ha ma vez breman, bep sul, gand ar zoudarded, daoulinet en o mantelloù glas, ar chapelad, en o dourn, hag ar zoudarded-ze, koulz lavaret holl, a zo bet e retred Lesneven.*

Ernest Gouriou.

Koulz hag ar re goz. Setu eun nebeud linennou all, plijadurus meurbed ivez da lenn, tennet eus lizer eur paotr yaouank triouec'h vloaz:

Breiz-Izel, 12-4-28.

Aotrou Rener,

Skriva a ran d'eoc'h, me ivez, da lavaret d'eoc'h pegen dudius e kavan, bep miz, ho kelaouenn Feiz ha Breiz. N'eo ket hepkèn ar re goz eo a gar ar brezoneg, rak anaout a ran meur a baotr yaouank ha ne fell d'ezo komz nemed e brezoneg. Me, kennebeut, n'oun ket koz c'hoaz, rak n'em eus nemet triouec'h vloaz ha koutsgoude, peger bras eo an tan a zo ennoun, peger birvidik ar gwad breizad a red em gwazied pa vez red difenn hor gwiriou a Vreiz.

U. B.

Ar pezh a lavar ar paotr yaouank-man a zo gwir-bater ha pa lakan va dourn war liziri evel re ar yaouankiz a skriv d'in, en deziou-man, e kav d'in e lakan va dourn war galon Breiz hag e welan n'eo ket bet lammet biskoaz gwelloc'h ar gwad enni ha ma ra breman: n'eus hano mervel ebet ganti c'hoaz, na pell diouz eno; hano beva ne lavaran ket; ar goanv a zo o vont ebioù d'ezi ha bleunv ha kan an nevez-amzer a laouenna he hent, tu ha tu.

Y. V. Perrot.



DIVINADENNOU MIZ MAE

I. Pe benn a dleer lakat a-rok,
Eus eur c'hraevaz diwar ha klok ?

Digaset gant Mari-Anjel Creff, Plouzeniel.

II. Pried en noz, intañvez en dez,
Lamperez en dour, pignerez er gwez.

Digaset gant Per Thomas, Plouider.

III. En eiz pik chomet goullo, lakit an niverenn
... nou 33, 57, 17, 25, 65, 9, 49, ha 41, en
1 . . . eun hevelep doare ma kavot an niverenn 99
... en eur gonta eus an nec'h d'an traon pe eus
an traon d'an nec'h.

Digaset gant P. J. U., Gwipavaz.

IV. Gwelet a ran eur vonianez;
Ker figus eo, o va zud kez,
Goude frita d'ezhi boued
Morse ne zebr grisenn ebet.

Digaset gant Saig Sparfel, Skolach Kastell.

V. Houarn war zouar, koad war houarn, pilleri war
goad; ti war billieri, koad war an ti, ha denved ennan o
peuri ?

Digaset gant F. Yannig, Pouldergat.

Feiz ha Breiz

MENEC'H BREIZAT

Menec'h eo o deus dibabet d'hon tud koz ar vro gaer ma vevomp enni breman; gant o skoazell eo ez eo bet savet hor Breiz; o roudou a zo sanket ken doue, e douar an Arvor, m'o gweler c'hoaz, daoust pegement a boan o deus kemeret o enebourien d'o c'has da get, hag o hanoiou a vez, dalc'h mat, e genou hag e kalon eur bobl a-bez.

Menec'h hon eus bet, met n'hon eus ket ken. Fiziants am eus koulsgoude e tizroint adarre, eus eun tu pe du, hag en eun doare pe zoare. Doue ne lezo ket Breiz da vervel.

Tadou Sant Beneat Stadou-Unanet an Amerik a zo o paouez staga, a-zevri, war a glevan, da zevel eur manati eus o urz er China; ar manati-ze, eme an Tad Yann Joliet, a vezo chinaek, penn-da-benn; ne vezo ennan nemet tud eus ar China ha ne vezo komzet ennan, dreist pep tra, nemet chinaeg; ar re hen diazezo, dal ma o devezo desket, da venec'h kenta ar China, lezennou sant Beneat, a en em denno hag a lezo Chinaiz mistri en o zi.

Na pebez vad ne ray ket ar manati-ze d'ar China ha na peger sentus eo menec'h an Amerik

ouz ar Pab a lavar d'ezo dre c'henou e gannad e Pekin, an A. Constantini: « An Iliz n'eo ket evit « gouzany gwelet he beleien o labourat evid o « bro o-unan p'emaint o chom en eur vro ha « n'eo ket o hini. »

Pe goulz e tevio ivez menec'h evelse, pe eus an Amerik, pe eus eul lec'h all, da zével e Breiz-Izel eur manati fiag a vo *eur gwir vanati breizat ha nann eun ti gall ouspenn e Breiz*. Her gedal a raer mil bell a zo. Charles de Gaulle her goulenne pa skrive, er bloaz 1865, ar c'homzou-man: « S'il m'était permis d'exprimer un vœu... ce serait de voir un ordre religieux nouveau ou, du moins, une division spéciale d'un ordre religieux ancien se consacrer, sous l'invocation des vieux saints savants des deux Bretagnes, à la prédication et à l'instruction de la jeunesse de toutes les classes dans les pays celtiques, ET CÉLA PRINCIPALEMENT PAR LE MOYEN DES LANGUES INDIGENES. » (1)

Lakat sevel eun hevelep ti a vije ar brasa vad a oufe santez Anna da ober d'he bro.

Eur beleg aman, eur beleg a-hont, kaer o do beza tuet gand ar brezoneg, ne raint biken d'ezan, koulsgoude, ar vad a raio eun tiad menec'h a vo o labour pemdeziek pedi Doue ha poania da viret Breiz en he sav, rak en he sav e rank chom; aze n' eus ket da lavaret nann; ezomm a zo anezi er bed hag ezomm a zo eus ar brezoneg; e lezel da vont da goll a zo lezel da vont da goll eun tenzor heb e bar. Ha n'eo ket an dra-ze hepken:

(1) Les Celtes au XIX^e s. p. 51.

Ar Brezoneg hag ar Feiz

A zo breur ha c'hoar e Breiz!

Evelse e komze ar re goz ha truez em bevez atao ouz ar re a gav abeg, en eul lavar ker fur.

Sur a-walc'h n'eus chadenn aour, na chadenn houarn ebet o staga an eil ouz egile ar Brezoneg hag ar Feiz ha koulsgoude stag, ha stag mat endeeun int, an eil ouz egile, ha stag mil bell a zo, ha dall e ranker beza pa ne weler ket e vleunv an eil pa vleunv egile hag e voenv an eil pa voenv egile!

Y. V. PERROT.



Antronoz Miz Mae

Tremenet eo ar miz laouen,
Koant evel ar werelaouenn;
Aet eo da benn ar miz a beoc'h
Gant an Iliz, Mamm, gouestlet deoc'h.

E yeot ar prad, nes an aven,
Ar c'haera bleuniou a gaven,
Da ficha ho tron benniget
Am eus, bemdez, deoc'h kinniget.

Skoulmet ganin gant eun neudenn,
D'ho chapel, dirag ho skeudenn,
Roz, lili, na pet bleunvenn c'hoaz
A zougen deoc'h war va dourn noaz.

Da c'houlou de ha d'ar pardaez,
Gwechou, én traon, gwechou, war-laez,
Holl dud an ti, bihan ha bras,
O deus ho pedet, Mor a c'hras.

Pa zave mouez ar c'hloc'h, d'an noz,
E tiredemp d'hoc'h iliz koz,
Hag, e Treger, Leon pe Gerne
Ho meuleudi a dregerne.

Ar beleg a lenne, eno,
Skridou santel, traou kaer enno,
Traou graet gant ho tourn truezus
Evit hor mad, o Mamm Jezuz.

An oabl gant e stered melenn
A beurachue d'am c'helenn
D'in, o zal aour, o lagad flamm
A gomze euz gened va Mamm.

Ha neuze, e troad va gwele,
Dirazoc'h c'hoaz me a ouele
Hag, evit hor Bro, diganeoc'h
E c'houlennen bennoz ha peoc'h.

Hag, em hunvre, o Gwerc'hez c'hlan,
En tu all d'an nenv sioul ha splann,
E seblante d'in ho kwelet
O tiskouez hor Breiz d'hoc'h Eled.

Hag ar re-man, a vandennou,
En-eskemm d'hon holl pedennou,
O tont, diouz ho perz, da ranna
Grasou da Vro ho Mamm Anna.

Jersey, Mae, 9, 1928.

J. L'HELGOUACH, M. M. Z.

Buhez an Tad Julian Maner


An Tad Maner a zistro da Gemper (1640)

Goude beza graet c'hoaz daou vision all én Normandi, an Tad Maner, achuet gantan e vloaz e Rouan, a yoe, da viz east 1640, digaset da Gemper, hervez m'en doa goulennet Mestr-Rener ar Jezuited.

An holl a ouie e teue da Gemper evid ober misionou, met an Aotrou Le Prestre a Lezonnet, eskob Kemper, a jome atao enebour d'ar misionou. An Tad Flouet, Rener skolaj ar Jezuited e Kemper, a oa c'hoaz marteze muioc'h eneb ar misionou eget an aotrou n-eskob: « Ho mision, emezan d'an Tad Maner, a vezo prezeg en hor prioldi Lokamand diou pe deir gwech ar bloaz. » An Tadou all a c'hoantae ive e vije karget an Tad Maner d'ober skol en eur c'hlas, rak eur mestr oa eus an dibab... Penaos e vije roet d'ezan eun Tad all d'e zikour? A-walc'h o doa d'ober er skolaj, hag hini anezo ne anaveze ar brezoneg. An Tad Bernard n'hen anaveze ket muioc'h eget eun all, hag edo en e 56 vloaz. N'e ket d'an oad-ze e tesker ar brezoneg, eur yez ken dies. Ouspenn-ze, piou a rofe peadra da baea mizou ar misionou? An Tad Maner a zigase gantan eun nebeut aluzennou eus an Normandi; met petra oa an dra-ze?

Evelse edo an traou, pa glévas Mikael an Nobletz oa deuet an Tad Maner da Gemper. Kerkent her pedas da zont d'e welet da Gonk-Leon. An Tad Maner a zentas hag en em lakeas en hent evit mont

da Gonk. Da fin e zervez kenta a vale, e teuas d'ezan ar c'helou oa maro an aotrou n eskob Le Presire, en e vaner Kervegan. An aotrou Le Presire oa enebour ar misionou.



Skol ar Jezuisted e Kemper, p'edo eno an Tad Maner

Pa zigouezas an Tad Maner e Konk, Mikael an Nobletz a voe kel laouen ma skuilhas daelou a joa, hag en eur e vriata e lavaras : « Breman, va Doue, e c'hellit va gervel pa garot. Mervel a rin laouen, p'am eus gwelet an hini ho peus prometet d'in. »

Antronoz Mikael a goveseas d'ezan e bec'hejou evid en em brepari d'ar maro, ha gand e gloe'h ez eas da c'hervel tud Konk d'an iliz evit klevet an Tad Maner, an hini a dlle kenderc'hel ar misionou e Breiz.

N'oa ket awalc'h. E gloe'h, e daolennou a roas

d'ezan, hag e c'hoanteas e welet o kregi en e labour adaleg an deiz-ze. An Tad Maner a reas katekiz, prezegennou, a goveseas, a yeas gantan da welet ar re baour hag ar re glanv. D'ar par-daez, Mikael her e'hasas en e gambr, a ziskouezas d'ezan e gayerou, enno kenteliou an Tad Gourdon, e vestr-skol e Bourdel. An Tad Maner a gavas er c'hayerou-ze sklerijenn evit dirouestla eun dra ziaes e lakae nec'het.

An Tad Maner en doa graet e zonz da studia istor ar Frans, da studia leoriou Baronius ha traou all c'hoaz. Mikael an Nobletz, evel sklerijennet gant Doue e-unan, a lavaras d'ezan : « Va mab, kalz labour hoc'h eus d'ober. Na gollit ket hoc'h amzer o lenn istor ar Frans ha skridou Baronius. Ar pez a dleit da studia eo ar Skritur Sakr. » Hag e roas d'ezan ive ar reolennou en doa bet digant daou Jezuist, an Tad Kotton eus a Baris hag eun tad all eus Bourdel. Er reolennou-ze oa merket ar pez furra eus gourc'hemennou sant Ignas a Loyola, an hini en deus savet Urz ar Jezuisted.

En deiz varlerc'h e kendalc'hjont da ziviz etrezo. Ar mestr a lavaras d'e ziskibl : « Netra gwelloc'h eget ober misionou d'an dud paour divar ar maez. Skuizus int, met n'eus ket a lec'h da gaout ourgouilh evel er c'heriou etouez an dud vras. Er c'heriou e kemerit kalz poan evit nebeut a frouez. M'ho peus da c'houzantv poan, dispriz, brezel, bezit laouen. Kement-se a zo evidoc'h eun tenzor kalz talvoudusoc'h eget holl denzoriou an Ejipt. Evid ober vad d'an eneou, grit katekiz, prezegennou, grit d'an dud beza aketus da govez, ha dreist pep tra roit da anaout ar gwirioneziou a zo merket en taolennou. Lakit kana ar c'han-

tikou, rak talvoudus bras int; o skignit e pep lec'h, lakit enno an diverra eus an Aviel hag eus misterioù ar feiz evit deski evelse d'an dud o relijion.... P'ho pezo da veachi, it dre zouar, pa c'hellot, kentoc'h eget dre vor, rak evelse e kavot tro da gelenn an dud war an henchou hag en tiez... Met espernit ho yec'hed muioc'h eget n'am eus graet, evit padout pelloc'h. Pa vez re skuizet ar marc'h, e kouez er foz gand e zen. Bezit ato leun a nerzkalon... Mar deus eur vro hag a gemennan d'eoc'h etre ar re all, eo Douarnenez. Me garfe e rafec'h eno ho mision kenta. »

En eur achui, e roas d'ezan eur c'hreunenn venniget distaget diouz eur chapeled da zantez Janned eus ar Groaz, e Kubas, eskopti Toled, er Spagn. Ar chapeled-se en doa ar vertuz da drec'hi an drouk-spered ha da barea klenvejou ar c'horf hag an ene. An Tad Maner en doa war e zremm eur goagrenn hag-a voe pareet kerkent ha ma voe touchet outi ar c'hreunenn.

Araok kuitaat Mikael an Nobletz, an Tad Maner a c'houlennas e vennoz. Mikael a roas e vennoz, met a c'houlennas ive beza benniget e-unan gand an Tad Maner. En em vriata a rajont, hag an Tad Maner a zistroas da Gemper, prest da gregi el labour merket d'ezan gand Doue.

Met distro da Gemper, e welas n'oa tamm gwellaenn ebet en traou. Ar chaloned a c'houarne an eskopti da c'hedal eun eskob nevez a oa holl eneb ar misionou... Traou nevez oa ar misionou, a lavarent, ha n'o doa c'hoant ebet da rei o aotre d'ezo... Evelato, o welet pegen dizesk oa an dud, e rojont aotre d'an Tad Maner d'ober katekiz, da brezeg ha da govez en eskopti.

Er skolaj n'oa ket a c'hoant kennebeut da rei d'ezan an Tad Bernard d'e zikour. Ha n'oa hini all ebet da c'hellout mont en e lec'h.

Skriva a reas da Vikael an Nobletz. Heman a respontas ez afe mat an traou, en desped d'an dud ha d'an drouk-spered.

Mikael a skrivas ive d'an Tad Bernard, e gouesour epad pell amzer, evit e bedi da zikour an Tad Maner.

An Tad Bernard, o c'houzout peseurt sklerijenn a oa e spered Mikael an Nobletz, a gredas kerkent oa galvet gand Doue da zikour an Tad Maner, en e visionou. E vignoned a glaske hen distrei : « C'houi a zo re goz, emezo; n'oc'h ket gouest da vont war droad dre barreziou Breiz; ne ouzoc'h ket ar brezoneg. Petra reot? » Hen a responte : « Gwir a lavarit; met ma n'ez an ket gantan, ne vezo ket a visionou e Breiz. Ha petra a c'hoarvezo neuze gand kement a eneou? E riskl e vezint d'en em goll. Komz a rit d'in eus poan, skuisder. Ne ran forz, gand ma vezin da Jezus er vuhez hag er maro. » Hag e c'houlennas aotre e Dad Rener.

Da c'hedal ma vefe renket an traou, an Tad Maner hag an Tad Bernard a veze e ospitaliou ha prizoniou Kemper oc'h ober katekiz hag o prezeg an Aviel. Dizale e voent-galvet ive er parrezioù tro var dro da Gemper. O klevet ar vad graet gand an Tad Maner, Markiz Rosmadek, gouarner Kemper, a c'hoanteas e zikour gwella ma c'hellas, hag a gomzas diwar e benn d'ar C'hardinal Richelieu, ministr ar roue Louiz XIII. Richelieu a gemeras en e garg ar pevar mision kenta. Markiz Rosmadek a zigasas ive 1200 lur d'ar skolaj evid an Tad

Maner. Aluzennoù all en em gavas c'hoaz, ha dizale e voe peadra eyit beva daou visioner.

An Tad Bernard en em lakeas da zeski ar brezoneg. An Tad Maner, eus e du, pa gave eun tamm amzer, a skriva kantikou, hervez an ali roet d'ezan gant Mikael an Nobletz. War e zaoulin o skriva, dirak skeudenn ar Werc'hez.

Er c'houls-se e teuas ar c'helou oa hanvet da eskob e Kemper an aotrou Ronan al Louet a Goatjunval, chaloni-kaner e iliz-veur Kastell-Paol. Henman a oa bet er skol gand ar Jezuisted e Paris hag e Bourdel, en amzer m'edo eno Mikael an Nobletz. Diskleria a reas d'an aotrou Kupif, eskob Kastell, ne gemerfe ar garg da c'houarn eskopti Kemper, nemet o veza m'en doa fizians da veza sikouret gand ar Jezuisted.

Y. U.

KANAOUENNOU BLEUN-BRUG 1928

a vezo peurvoulet a-benn *GOUEL-YANN*.


O goulenn adalek vremen ouz :

M. l'Administrateur de l'E. S. I.

4, rue du Château, Brest.

(20 real ar pe.)

Chapel Sant-Tujen e Preveilh (Primelen)



Tour Sant Tujen

Pa'z aer eus a Waien da Veg-ar-Raz, en eur dreuzi eun uhelenn skubet bemdez gand avel yac'h ar mor hag a zo stankoc'h ar milinou-avel warni eged ar gwez, e kaver, war an tu kleiz, eur wech treuzet bourc'h Eskibien, eun tour bras, n'eo ket bet beget hiskoaz, hag a zo kuzet an traon anezan gand ar gwez a zav, en e gichen. An tourse, harp er mor, henveloc'h eus a-bell ouz tour eur c'hastell eged ouz tour eun iliz, a zo savet a-zioc'h chapel sant Tujen, brudeta ha kerra chapel, hep mar ebet, a gaver e Kap Sizun.

Nebeud a-walc'h a dra a anavezet di-

warbenn sant Tujen; eur breizad oa, mab da Arastagn, eur c'hernevad pinvidik, a oa o chom e kastell Ker-ar-Roue, etre Irvilhag hag Hanveg.

E hanter ar VI^{vet} kantved eo edo o vev; pa gemeras sant Paol sant Jaoua, da lakât e penn eskopti Leon, henman a lakeas Tujen da berson e Brasparz en e lec'h. Darn o deus c'hoant da lavaret e voe ivez abad e Daoulas, met n'eus testeni ebet da ziskouez e oa eur manati, e Daoulas, en e amzer.


Goude e varo, sant Tujen a voe kemeret da batron iliz Brasparz. Enoret eo ivez e Landerne, e Bannaleg, e Landudal, e Sant Vig, e Konk-Leon hag all. Hen diskouez a raer, en e skeudennou, gwisket gant dilhad-abad, e gammell, eun alc'houez hag eul levr digor, en e zourn, hag eur c'hi klanv gand ar gounnar e-harz e dreid; a-wechou ivez e vez eur bugel en e gichen. Pedet e vez dreist-holl evit beza diouallet ha pareet diouz ar gounnar.

Chapel Preveilh a zo bet savet er XV^{vet} hag er XVI^{vet} kantved; an tour daoust ma n'eo ket beget en deus 24 metr a uhelder; 125 derez a zo da bignat ennan; tri gloc'h a zo ebarz; eun doenn blomm a oa warnan gwechall met lammet eo bet ac'hano, d'an Dispac'h, da ober bouliji da lakât er fuzuilh.

Ar pevar avieler a zo o skeudennou a bep tu d'an nor a zo dindan an tour.

En tu diouz ar c'hresteiz ez eus eun nor c'ho-dek ha war he gwereg eman skeudenn sant Tujen, e alc'houez gantan en e zourn; war ar voger ziavez e kaver c'houec'h abostol; ar c'houec'h all a zo er porched gant Hor Zalver, ar Werc'hez ha santez Anna. Etre daou brenestr ar sakreteri e weler skeudenn vaen eul laer o poania, en dra c'hell, d'en em jacha eus ar voger.


Peder aoter a zo e diabarz ar chapel; war hini ar c'heur, en tu dehou, eman sant Tujen gand e gi hag e baotr bihan hag en tu kleiz sant Mikael, gwisket e marc'heg, eur groaz troet he fenn e goaf, hag eur c'hrog-pouezer, da boueza an eneou, en e zourn.



Kalvar Sant Tujen


E chapel kroaz ar c'hresteiz eman aoter Itron Varia ar Grasou, eul labour kaer bet kizellet er XVII^{vet} kantved; 26 ael bihan gand o eskell alaouret a ra an dro da Vamm Doue ha da skeudenn gaer

Itron Varia a Druéz. Tro-war-dro dro eman sant Per, ar Vadalen, santez Tereza ha sant Youenn. E chapel-kroaz an hanter-nnoz eman aoter Itron Varia ar Rozera hag harpet ouz eur pilier, e kichen, aoter santez Barba a zalc'h en hé dourn dehou an tour el lec'h ma voe klozet gant he zad.



Maner Lezurek, e Primelen

An Aotronez Menez, eus a vaner Lezurek, e Preveilh, eo a voe diazeourien ar chapel; i eo a roas an douar ha setu aze perak o doa gwir da gaout o bez, e kreiz ar c'heur; freuzet eo bet d'an Dispac'h, met dereziou a zo c'hoaz da ziskenn dindan an aoter vras el lec'h m'edo o archedou a zo bet laketa dammou, en amzer an Dispac'h, evit laerez ar plomm a oa enno. Eur maen marbr louet a verk e pelec'h edo ar bez; skoued aotronez ar Menez, kelc'henn sant Mikael en dro d'ezan, gand o ger *Fide et opere*, a weler warnan.



Ar maen-font e weler war e speurenn diou daolenn bet livet er bloaz 1705: war unan e weler eur beleg o venniga eured aotrou hag itron Lezureg, ha war eben eur beleg o vadezi mab Lezureg; en traon e lenner ar gwerziou-man:

Curé de Primelen
Maitre Jean Gloaguen
Baptisant cet enfant
Nay (sic) depuis un moment.

E diabarz ar maen-font e weler ivez teir daolenn, hini badiziant Hor Zalver, hini ar Gonfirmasion hag hini ar binijenn. War al lambrusk ez eus bet livet lili hag herminigou, en eun douez. Klasket ez eus bet o diverka ouz o gelei gand raz, en amzer an Dispac'h, da gredi eo.

Eun tamm chiminal bihan a gaver, er chapel, da domma ar vugale vihan epad ar goanv. E Sant Tujen e kaver ivez skeudennou sant Kristof, sant Visant Ferrier, sant Yann an avieler, ha sant Touhou, eur zant koz, nemeur anavezet, hag en doa eur chapel gwechall, e Preveilh.

Ar c'heler a zo bet graet er bloaz 1642; Adam

hag Eva hag a zigasas ar maro war an douar a zo kizellet warni.

Kalvar ar vered a dlîe beza kaer gwechall, met, diskaret eo bet. War ar jichenn e weler c'hoaz darn eus skeudennou ar c'halvar koz.

Pell a zo abaoe ma enorer sant Tujen e Preveilh; er bloaz 1418 e oa hano eus eur chapel all kosoch eged an hini a zo breman ha p'eo gwir ez eus gallet dont a-benn da zevel ar pezh labour kaer a weler c'hoaz, en e zav, eo anat e oa karet sant Tujen gant tud ar C'hâp.

Seu, hervez al lavarou koz, penaos eo deuet sant Tujen da veza patron ar chas klanv. Eur c'hoar en doa, eur plac'h yaouank koant hag e vamm, a-raok mervel, en doa e garget da deurel evez warni, en aoun ne deuje d'en em goll gant he skanvadurez. Ar zant, kemend a aoun en doa da zizenti ouz e vamm, a gase e c'hoar, d'e heul, dre ma'z ae ha pa veze re stris pe re fall an henchou hen douge war e gein. Met, kaer en doa teurel evez, eun dervez ma oa skuiz maro gand ar pennad hent en doa graet, ec'h en em roas da gousket; pa zihunas, e welas n'edo ket mui e c'hoar en e gichen; her c'haout a eure a-dre kein ar c'harz, er park tosta o komz gant teneredigez ouz eur paotr yaouank ha n'oa ket bet eun holl vad evid ober anaoudegez gantan. En e gounnar e lavaras:

— A! gwelet a-walc'h a ran eo esoc'h miret ouz eur c'hi klanv da daga eged ouz eur plac'h yaouank da ober an droug!

Doue a oa ouz her selaou hen dalc'has e ger:

— Hiviziken her gweli, rak adalek hizio az kargan da deurel evez war holl chas klanv Breiz ha

da ziouall na grogfent gant o dent, leun a gontamm, er gristenien vat a en em erbedo ouzit, em hano.

Ar zant a asantas hag abaoe n'eus ket eur penn kristen bet oc'h en em erbedi outan hag a vije bet taget gand eur c'hi klanv.

Eun alc'houez eo ar pezh a verk galloud ar zant; her mirout a raer e Preveilh en eur relegouer alaouret, eun troad d'ezan evel hini eur c'halur. Eun dervez, ar Zaozon a reas o diskenn, dre eno, hag a laeras alc'houez sant Tujen hag her c'hasas ganto, lorc'h bras enno, war unan eus o listri; met p'en em gavjont en o bro n'oa alc'houez ebet-ken ganto; eun nebeud derveziou goudeze, eur pesketaer a dapas e aod Kabestan, tost d'ar chapel, eur pikol pesk bras, ha pa'z aes d'hen divouzella, e kavas eun alc'houez en e gov. Sebezet e chomas o welet ar gavadenn en doa graet; eun nerz ha n'oa ket e hini a reas d'ezan kerzet etrezek ar chapel; p'en em gavas dirak an nor, a-walc'h e voe d'ezan diskouez an alc'houez evit gwelet an diou zor o tigi raktal a-hed o fenn.

An dud diwardro a anavezaz kerkent an tenzor a oa bet laeret diganto hag hen dougas, gant kalz a lid, d'al lec'h m'her gwelent ennan kentoc'h.

Breman ez eus hanter kant vloaz, e veze gwerzet bara bihan, da zeiz ar pardon, hag e veze bet stoket outo an alc'houez burzudus: o henvel a raet *bara an alc'houez*.

Ar bara-ze ne louedent ket; mat e oant ouz ar boan-zent ha pa veze eur c'hi klanv o redet war-lerc'h unan bennak, n'oa nemed o zeurel d'ezan evid en em zizoher dioutan.

Breman c'hoaz e werzer d'ar bardonerien al-c'houeziouigou staen, graet e Pont-Kroaz, hag o deus an hevelep galloud.

Pa vez eur c'hi klanv o redet warlerc'h unan bennak, heman n'en deus nemet teurel e alc'houez dezan.



Feunteun sant Tujen

Ar c'hi a glask bruzuna ar penefi-se etre e zent hag epad an amzer-ze, an den a c'hell en em jacha.

Parea a c'heller ivez diouz ar boan zent o skuba pe o lakât skuba ar chapel pe ar feunteun; hou-

man a zo, e gevred ar vourc'h, e kichen maner koz ar Zal.

Holl chas klanv ar vro a ya di, eus o fenn o-unan ha kement hini a zo bet taget a dle mont da zellet enni rakta; ma wel mat e benn ebarz, n'eus ket a ezomm da gaout aon; met ma weler skeud ar c'hi en dour, neuze e c'heller krena.

Pardon sant Tujen a vez graet e miz mezeven, d'ar zul a-raok gouel Yann. Kalz tud a vez ennan, a vil bell-ze; an Tad Maner a brezegas, teir gwech, d'ar pardon-ze, er bloaz 1643, 1656 ha 1669 dirak eur bern tud. En eil gwech, e c'hellas mirout ouz an dud a oa o vont da zansal diouz ar pardaez en eur ober d'ezo mont d'ar chapel gantan da gana kantikou.

Tud ar C'hap, re Waien, Douarnenez ha Penn-marc'h, a deu di, bep bloaz.

A-wechou zoken e teuer e prosesion, da Zant Tujen, eus ar parrezioù tosta hag eun taol-lagad eus ar re gaera eo gwelet ar bannielou hag ar c'hroazioù o ficha a-zioc'h pennou an dud, oc'h ober tro an aod, dre an Trez, en dra m'eman ar bardonerien, ar c'hleier hag ar c'houm-mou o touezia o mouezioù dishenvel da ober eur mor a gan en enor da zant Tujen, sant karet ar C'hap.

G. P.

GAVRIG AN HANV (4)

Kan evit contralto

Ton H. Guillerm.

Métronome ♩ = 52.

Musical notation for the song 'Gavrig an Hanv'. It consists of three staves of music in 2/4 time. The lyrics are written below the notes.

Bim - baon ! ga - vrig an hanv, Pe -
 lec'h out bet e - pad ar goanv ? En eun tou - lig
 en dou - ar, o c'he - dal an am - zer glou - ar.

1

Bimbaon! gavrig an hanv,
 Pelec'h out bet e-pad ar goanv?
 En eun toullig en douar,
 O c'hedal an amzer glouar.

2

Bimbaon! gavrig an hanv,
 Petra ri, breman, en hanv-man?
 — Meuli Doue am savas
 Ha douar hor Breiz am magas.

3

Bimbaon! gavrig an hanv,
 Ha petra ri c'hoaz, en hanv-man?
 — Kana drant va c'hanaouenn,
 Da lakât holl Vreiziz laouen.

(1) *Gavrig an hanv* a zo eul lezhano a roer d'ar c'hioc'h, e Gorre-Leon, dre ma 'zeus kalz henvedigez etre an trouz a ra ar par, gand e blunv, p'o laka da zourral, ha begeliezez ar c'havrig.

4

Bimbaon! gavrig an hanv,
 Ha petra ri c'hoaz, en hanv-man?
 — Karout va gioc'h karadeg
 Ha va neiz kuzet en havreg.

5

Bimbaon! gavrig an hanv,
 Ha petra ri c'hoaz, en hanv-man?
 — Deski d'am evnedigou
 Nijal war o eskelligou.

6

Bimbaon! gavrig an hanv,
 Ha petra ri c'hoaz, en hanv-man?
 — Diouall ouz fazi marvel
 O tec'hout diouz skoul ha sparfel.

7

Bimbaon! gavrig an hanv,
 Ha petra ri c'hoaz en hanv-man?
 Klask eun toull kuz da vervel,
 Pa deui Doue d'am gervel.

8

Bimbaon! gavrig an hanv,
 Fur out, e-skoaz kalz tud skanv!
 — Bepred e ran youl Doue,
 Warnomp holl Hen eo ar Roue.



ALANIG HAG AN DAOU RAMPS

Gwechall goz, en amzer m'edo an Dukez Anna e penn Breiz, e oa eun emzivad, e hano Alanig, o chom e kichenig Landerne. E dad a varvas da genta hag e vamm ne jomas ket beo, nemeur, war e lerc'h; ar paour kêz paotr a gouezas er vrasa dienez. Den ebet, etouez e gerent, n'edo e chal d'e gaout en e di hag an emzivad reuzeudik pa ne ouie ket penaos ober ken evit gounit e vara a en em c'hreas chaseer, barrek ma oa da denna gant e wareg.

En amzer-se e oa eur c'hoad bras etre Landerne ha Lesneven. Evel ma oa loened gouez ennan, diouz an druilh, ha ne oant da zen, Alanig pa'z ae di ne veze ket pell evit leunia e zac'h-ler a c'hedon, a zubeed, a c'hlujiri, a yer dour hag a grak-houidi a werze, goudeze, er marc'hajou, e Brest, e Landerne pe e Lokournan. Gand ar gwenneien a c'helle da gaout evito e pae e voued da eur vaouez koz eus a Blabenneg, her beve, hel loje hag a zrese d'ezan e zilhad. O veva dalc'h-mat en aer yac'h, e teuas da veza eur paotr kaer hag eur paotr krenv, eun den ha n'en doa ket e bar, evel gwareger, nag e Leon, nag e Kerne.

Eun dervez ma oa aet doun er c'hoad, e voe tizet eno, gand an noz, ha n'oa ket gouest ken da gaout e hent da zont d'ar gêr. Goude beza troïdellet, eur pennad, e welas, ouz sklerijenñ ziweza an heol, touriou eur c'hoz kastell ha n'edo ket gwall bell dioutan ken. D'ar red, e kerzas beteg an nor, ha goude m'en doa skoet warni, e welas, o tont da zigeri d'ezan, eun itron goz a lavaras d'ezan e c'helle tremen an noz en he zi. Pa oa deuet an eur da vont da gousket, an itron a lavaras — : Eur gampr kaer am eus war laez, gand eur gwele mat ebarz; met ne dalv ket ar boan d'in ho kas di, rak ne gouskfec'h ket eno.

— : Ha perak'ta, itron, eme Alanig?

— : Abaoe m'eo maro va gwaz, er gampr-ze, e vez klevet eun trouz spontus eno, bep noz, ha deuet oun ha n'oun ket gouest da zerc'hel den ebet ken war va zro.

— : Ha den, eme Alanig, n'en deus kredet mont da dremen an noz eno, da c'houlenn, ouz an hini a zizro di, petra en deus ezomm?

— : Nann! eme an intanvez, eun tamm mezok.

— : Mat, eme Alanig, evidoun-me n'em eus ket a aoun evit lavaret d'eoc'h, evidoun-me ne greñ ket evit tremen an noz en toull-se. Roit d'in eun hordenn geuneud bennak da ober tan ha diou pe deir voutailhad chistr ha me a jomo, war zav, er gampr-se, epad an noz, hag a lavaro d'eoc'h warc'hoaz ar pez am bo gwelet ha klevet.

Ar pez a c'houlenne Alanig a voe graet; da zaouzekvet taol an hanternoz o seni e tour ar c'hastell, edo ar paotr azezet, en e gador vourret, e kichen an tan, pa welas, en eun taol dirazan,

daoust m'oa chomet prenet an nor, eun dijen-til, gwenn ha tenval e benn, a jomas a-ban, da zellet outan, hep ranna ger. Ar paotr yaouank a reas sin ar groaz hag a c'houlennas ouz an tasmant :

— Petra c'hedit diganen ? Livirit ha ma c'hellan ober eur vad bennak evidoc'h her grin.

— : Ya ! va mab hen ober a c'helles, rak krenv out ha yac'h. Pa oan war an douar, eo bet tost d'in beza bet lazec, eun dervez, er brezel, hag e ris le, ma c'helljen dizrei d'ar gêr, da vont da bardona da zant Jalm, da Gompostela, hep kousket, gwech ebet, dindan eun doenn.

Met ar bloaveziou a dremenas hag ar maro a deuas ha n'em oa ket c'hoaz sevenet va le. Doue en deus va c'hastizet ouz va lakaat da zizrei aman, hep noz, ken n'am bo kavet unan kalonek ha karantezus a-walc'h evit mont da bardona duze, em lec'h. Te eo ar c'henta den beo a deu er gampr-man abaoe m'eo bet kaset va c'horf d'ar bez. En em erbedi a ran ouzit ; kemer truez ouzin ha tenn va ene eus ar purgator o vont da bardona evidon da zant Jalm ha Doue az paeo !

— : Bezit e peoc'h, ene paour, eme Alanig, hep marc'hata. Warc'hoaz, kerkeht hag an deiz ez in en hent !

— : Bennoz Doue d'it, eme an tasmant a deuzas raktal ha ne voe ket gwelet ken ac'houdevez.

Kerkent ha goulou-deiz, goude beza lavaret ar pez en doa gwelet ha klevet, d'an itron goz, he devoe mil boan ouz e lakaat da gas gantan eur pez aour bennak, Alanig a en em lakeas e penn e hent hir. Beva a rae diwar ar pez a dape gand e wareg ha pa deue an noz e kouske war ginv ar c'hoajou pe war geot ar prajou, hep toenn all

ebet a-zioc'h e benn nemed an hini a rae d'ezan deliou ar gwez. Evel ma oa eun tenner mat ne vanke ket a voued d'ezan da zebri, met an hent a oa tenn hag an noz tremenet, er mêz, n'hen diskuize ket diouz skuizder an deiz.

Rodig a dro

a ra bro ;

Goude bale pell hag hir amzer ec'h en em gavas ivez e traon menezioù uhel ar Pyrene a ranke da dreuzi evid en em gaout er Spagn. Eur c'hoad bras a oa dirazan hag hen ebarz ; tri dervez ha teir nozvez a oa edo ennan ha n'en doa ket e dreuzet c'hoaz. Kaout a rae d'ezan e oa dianket pa welas, a-dreuz ar gwez, mogerioù louet eur c'hastell koz. Hag hen ha dao etrezek ennan. Dres, p'edo o kerzet, en e wir wella, setu ma wel eur c'had o vont eus a dre e dreid hag eun dube o nijal a-zioc'h e benn ; stigma a eure e wareg ha diou vir, trumm an eil warlerc'h eben, a zutas hag a ziskaras unan an dube hag eben ar c'had :

— Satordallik, te ez peuz lagad, avat, paotr, eme eur vouez c'haro, en e gichen.

Ar breizad yaouank, strafuilhet eun tamm o klevet eur vouez ha n'edo tamm ebet war c'hed anezi, a zavas e benn hag a welas daou ramps, a-ban, o sellet outan, sebezet. Hep diskouez e spont Alanig a lavaras :

— Ya ! brud vat am eus, em bro, evel tenner.

— Ma keres a raïmp marc'had hon daou, eme ar ramps en doa komzet. Dre aman ez eus eur c'hoz kaz fall ha va breur ha me a garfe e vefe graet e stal outan. Ma c'helles hen diskar evel ma peus diskaret an daou loen-se, ez po 500 skoed.

— O ! mat ! kredi a ran e teuin a-benn.

— Met red eo lavaret d'it an traou holl, evel

m'emaint. Ar c'haz-se n'en deus nemed eul lagad, e kreiz e dal; eno eo-e rankes skei ha ma vankes, war da daol, e sailho warnomp hag e vezimp laket gantan, hon tri, a dammou.

— Diaouskell! met hennez ar c'haz-se, d'eoc'h c'houi, a zo eur sorser; marteze e vije gwelloc'h d'in chom hep mont da glask trabas outan.

— Ober a ri evel a giri, met m'hel lavar d'it ma ne glaskes ket ober e daol outan eman nezet da c'houzoug ouzit evel ma vez graet da eur penn-yar a-raok hel lakat ouz ar ber.

— Mar d'eo evelse eo eman an traou ganeoc'h, eo koulz d'in gwelet ha me a c'hello laza ar c'haz. E peléc'h ema ?

— Er c'hastell; d'an taol a gresteiz her gweler, oc'h heolia, war ar vogger, hag e chom eno keit ha ma vez an daouzek taol o seni. Red eo d'it



Alanig o tenna war ar c'haz

hen diskar a-raok an daouzekvet taol, rak anez e vi lazet gantan ha ni ganez.

— Mat eo! Ober a rin eus va gwella.

Alanig a gempennas e wareg hag a lemmas ar gwella bir en doa en e glaouier. D'an taol kenta a gresteiz eur pikol kaz gwenn a valeas war vogger ar c'hastell o sellet, a gleiz hag a zehou, gand e lagad gwer ha drouk; ar paotr yaouank a stignas e wareg hag a zellas; ar bir a zutas; ar c'haz a lezas eur glemmadenn hir hag a gouezas, a-fardigleo, d'an douar, maro-mik, e harz treid ar rampsed a skoe o daouarn, an eil en egile, hag a youc'he, kel laouen e oant o welet ar pez a oa digouezet:

— Mat eo, avat, eme ar c'henta; breman ar c'hastell a zo d'eomp gand an holl denzoriou a zo ebarz. Met penaos mont ennan? An nor a zo prenet mat ha n'eman ket an alc'houez ganeomp; met dont a raimp a-benn eus hon taol, evelato; me a gemero va breur war va diouiskoaz ha te a bigno war e re; ac'hano e c'helli sevel war ar vogger. Pa vezi en em gavet eno e krogi e skourrou ar wezenn zero a weles aze hag e tiskenni, drezi, d'an douar hag e tigori d'eomp. Ententet eo? Ha neuze, ma ne zentes ket eman graet ganez!

— Koulz eo d'in gwelet neuze, eme Alanig, pa n'oun ket evid ober ken.

Hag e pignas war ar vogger; diwar ar vogger e lammas er wezenn ha diwar ar wezenn e lammas d'an douar. N'oa den ebet er porz, met eur pez kleze, eun dournell arc'hant d'ezan, a oa a-istribilh e kichen an nor; lemm oa evel eun aotenn.

— Setu aze avat eur penefi a-zoare d'in d'en em zizober eus an daou louangenn divalo-man.

An daou ramps a youc'he eus ar mêz:

— Digor 'ta dillo, pe bremaik ni da vougo!

— Gortozit, gortozit, eme Alanig; ne vin ket pell; ne welan ket an alc'houez e tu ebet, met mont a ran atao da zigeri d'eoc'h toull ar c'haz; gand ar c'hleze emañ o paouez kaout aman e vo kresket ha marteze e c'helloc'h tremen drezan.

Hag hen hag en em lakat da greski an toull, mar gouie; ar ramps bras skuiz o c'hedal a lavaras:

— Gortoz eun tamm, ma lakin va fenn en toull da welet petra a zo er porz!

Alanig, ne c'hede nemed an dra-ze; mont a eure war e giz, sevel a eure ar c'hleze, er vann hag e tarc'haos eun taol ker pounner ma kasas penn ar ramps da rodella war leur ar porz.


— Setu aze unan atao, da vihanan, ha ne ray ket kalz a boan d'in ken.

Ar ramps bihan o welet ne finve ket ken e vreur a gredas e ranke beza en em c'hlazet hag a jachas e gorf diouz an nor; pa welas e oa dibennet e vreur e lezas eur youc'hadenn ker skiltrus ma lakeas da dregerni holl hekleioiu ar c'hastell hag e klaskas a daoliou dourn hag a daoliou troad divarc'ha an nor; met houman a zalc'has goenv. Alanig ne oa ket eur grik gantan; ar ramps goude beza klasket kaout digor, en aner, o veza ma ne gleve trouz ebet ken en diabarz, a lakeas e benn, hen ivez, e toull ar c'haz, da welet e pelec'h e oa aet Alanig. A-raok m'en doa gellet hen tenna

gantant, edo kaset, gand eun taol kleze, da steki ouz penn e vreur.



Alanig e tibenna ar ramps



Alanié a gav ar brinsez

ha ne weled en dro d'ezan nemed ar seiz an aour hag ar perlez e kavas, kousket, eur brinsez yaouank, koant evel heol benniget an Aotrou Doue, pa vez o sevel, en eun oabl digatar, d'an nevez amzer.

Alanig, estlammet a yeas etrezek ar gwele, gouestadik. War unan eus an diri a oa da bignat da gaout ar gwele, e welas boutouigou neud-aour ar brinsez; kemeret a eure unan anezo hag her c'huzas en e vruched.

Soubla a eure neuze da bokat, gouestadik, da zourn ar brinsez a oa a-istribilh ganti ouz ar gwele hag ez eas kerkent er mêz.

Al le ha n'oa ket sevenet c'hoaz a oa deuet war

Dienkrez, meur, goude an taol-se ar paotr a yeas er c'hastell hag a redas eus an eil sal d'eben. En unan anezo e kavas eun daol hag e oa warni tra pep tra evit debri hag eva. Debri hag eva a eure e walc'h. Ne weled, dre holl, nemet listri aour hag arc'hant, pallennoù broudet hag arrebeuri eus ar re gae-ra. E goueled ar zal ziweza, en eur gwele

e spered hag e lavare outan e-unan e oa mall d'ezan tec'het diouz ar c'hastell alaouret-se ma n'en doa ket a c'hoant da vont a eneb ar ger en doa roet d'an hini maro. Ar plac'h yaouank dihunet gand e bok, kaer he devoe redet war e lerc'h hag her gervel ne c'hellas ket hen tizout, met laket en doa en e benn dont d'he gwelet en dizro.



Epád tri miz ar brinsez her gedas, en aner; eur pardaez, koulsgoude, e welas o tont, en he forz, eur baleer yaouank, gwenn kann e zilhad gand ar boultrenn ha skuiz maro; nerz a-walc'h en devoe, daoust daze, da vousc'hoarzin hag e tiskouezas d'ar brinsez, hep lavaret ger, ar votezig neud-aour en doa kaset gantan.

Goude beza e laket Ar brinsez o c'bedal Alanié da ober eur pred mat, ar brinsez a c'houlennas hano digantan eus ar pez en doa gwelet oc'h ober e dro:

— Fall em eus graet, emezan, en dro all m'ounbet aman, o kas unan eus ho poutou ganen.

— Nann! nann! emezi, n'ho peus graet netra fall ebet, Alanig; va zenna eus ar prizon eo ho peus graet o laza ar c'hoz kaz gwenn-ze am dal-

c'he aman evel eur gêzez ha miret ouzin da goueza etre krabanou lous an daou ramps. Dre ho pok ho peus va distrobinellet ha breman ma fell d'eoc'h beza va fried n'ho peus nemet lavaret ya da ober ha kerkent va c'hastell, va zenzor, ha kement am eus a vezo d'eoc'h.

Ya! laouen, avat, a lavaras Alanik raktal. An eured a voe lidet eun nebeud derveziou goudeze, eun eured vras ha kaer, gant goueliou hag a badas eiz dez.

Alanik deuet da veza dijentil ha pinvidik mor a oa e blijadur rei digemer en e gastell d'an holl Vretoned a dremene ebiou enq o vont da zant Jalm; e vugale war e lerc'h a reas evel o zad betek ma teuas amzer fall an Dispac'h a ziskaras ar c'hastell hag a reas d'ar Vretoned ankouna-c'haat hent Kompostela.

G. P.

Da C'hearzin

En deiz all, e Treflez, eun danvez-kannad, o kesta moueziou, eun tammig kintou ennan, o veza ma n'oa ket bet selaouet, mat a-walc'h, war e veno, a lavaras, en eur vont kuit, d'ar re a oa da dosta d'ezan:

— C'houi, dre aman, a zo sot, evel saout!

Eun Treflezad, distagellet mat e deod, a respontas raktal:

— E broiou a zo e vez kaset d'an taro sotoc'h saout c'hoaz, eget ne 'z eus, dre aman, p'eo gwir ez eus deuet eul leue eveldout te, en hon touez!

KELEIER AR MIZ

Ar re a zo o tiskar Breiz

I. — Kenteliou Tintin Anna

Tintin Anna, goude beza sellet mat en dro d'ezi, da welet pénaos ez a an traou, en hon amzer, a skriv d'eomp kement-man:

Ar vaouez eo a zo da veza tamallet, ar mui, ma vez dilezet ar méziou, evel ma vezont breman. Eur paotr yaouank a lavare d'in:

— Chom a rafemp, war ar mez, ha laouen bras o chom, met ne gavomp ket ken a verc'hed da jom ganeomp. Gwelet a ran petra 'zigouez gant va c'hamaraded; kerkent ha ma vezont dimezet, setu ma stag ar wreg da ouela: « Ma karfes mont da archer, da zouanier, war an hent-houarn, e vefe ebatoc'h va doare neuze, eur wech aet e kamp, eget n'eo aman, breman, o terri va c'horf ouz ar c'hoz tamm douar lous-man! »

Hag ar paotr yaouank a deue an daerou en e zaoulagad: « N'ouzon ket emezan, petra 'vez desket ken d'ar baotrezed, er skol! A bep seurt traou a vez sanailhet en o fenn, met ne ouezont mui nag ober stamm, na penselia an dilhad, nag aoza yod, na gor ar zaout. »

Anzav a rankan eo gwir-bater ar pezh a lavar an den yaouank-se. Re nebeud en holl ivez e kar ar merc'hed gwiskamanchou Breiz, a zouez kemend an divroidi, ha re droet int da heulia gizioù distrantell Paris.

Eur wreg yaouank, koef ha gwiskamant Kerne ganti a deuas da jom em farrez: koant oa evel ar werelaouenn, gwenn, evel eur zantez ha dereat evel eur gwir vreizadez. Abenn eur pennad, siouaz, ez eas avel en he fenn; dont a reas da gredi e vije koantoc'h e tok hag e stlapas he c'hoefou e sac'h ar pilhaouer; henveloc'h eo breman ouz eun urupaill eged ouz eur vaouez: n'eo mui nemed eun itrou kousez eus a lost ar c'har.

E lec'h lenn traon hag a vefe yaouank d'o spered, eleiz eus ar merc'hed yaouank breman, ne lennont mui nemet levriou fall pe levriou didalvez, aliou tud diempenn warno. Pa vezan o kinnig va *Feiz ha Breiz* da lenn, d'ar re yaouank, bet savet, koulsgoude, er skoliou kristen, e vousehoarzent goapaüs hag e tremenont ebioù d'in ha ker faeüs ha tra: « Houman goz, emezo, ne oar nemet brezoneg! yez an dud gouez! » Ha nebeud goude ma'm boa kinniget va levrig d'am merc'hodenned e welen pemp pe c'houec'h anezo, a-zav, o fri harp ouz gwerenn vras eur stal bouteier-ler: re velen, re « verniset », seuliou uhel d'ezo. Hag an eil eus ar baotrezed a lavare d'eben: « Sell' ta! pevar ugent lur ar re-man, n'int ket ker! » —: « Ar re-man a zo bravoc'h c'hoaz, da vihanan, eme eun all: pemp lur ha pevar ugent; evid ugent real muioc'h n'eo ket da gonta! »

Hag e sonjis gant truez: « Ne vez ket sellet evit forani ugent real; met *Feiz ha Breiz* a gaver re ger pevar real! Pegen diboeñ an den! ne wel ket en deus ezomm ar spered eun tamm boued fetis ivez, beb an amzer, evit chom beo! »

Ma 'z eus kement a skanvadurez e pennou merc'hed hag a zo, piou eo a zo da damall, goude o mammou, ma n'eo ket ar skoliou eo, ar skoliou divrezonek, renet gant dimezelled trellet, siouaz, o daoulagad gant braoigou didalvez ha gizioù diskempenn Pariz?

Ha n'emaint ket breman o rei urz d'o bugale da vont bemdez, *en o bleo*, d'ar skol?

En he zi, eur vaouez a ra ar pezh a gar, a laka he c'hoef pe a jom hep hel lakaat, met er mêz, n'eo ket mui henvel; eno e ranker gouzout en em zerc'hel: amzere eo gwelet merc'hed yaouank o vont diskabell, dre an hentchou, chomet o c'hoefou ouz an drez; merc'hed, ken diwisk ha ker skanv-benn, n'o deus ket bet a urz, na n'o do biken, da vont, evelse, en ilizou.

Ma ouesfe merc'hed Breiz ar pezh a gollont, e pep doare, o klask heulia, bep bloaz, gizioù merc'hed ar broioù gouez, ne vefe ket gwelet unan anezo o tilezel dilhad he bro.

Penaos e raio ar ratikou breman, i hag o deus trouc'hed o bleoioù ha berraet o lostennoù, pa deu adarre, en dro, e Pariz, ar c'hiz da gaout bleo hir ha lostennoù o koueza betek an traon?

N'eo ket me eo am bo truez outo; ma karjent n'o divije ket bet a ezomm na da grenna, na da astenn; n'o doa nemet derc'hel da c'hiz o bro; met bez'ez eus tud hag a rank atao ober dishenvel diouz ar re all.

II. Ar Brezoneg e skoliou Brest

En deiz all e oa deuet d'am gwelet daou baotr yaouank, eus a Vrest, bet skoliou e skoliou Sant Louis hag I. V. Wir Zikour; unan anezo en doa c'hoant da werza arrebeuri hag egile da werza dilhad hag e lavarent d'in, peger kasaüs oa evito ober tro ar vro, o veza ma ne ouient ket a vrezoneg. An hanter e vije bet aesoc'h d'ezo gwerza o marc'hadourez, m'o divije gelllet komz ouz an dud er yez a gomz ar re-man bemdez.

— Breman ez eus pemp bloaz, a lavaras d'in an hini a oa bet, e skolach ar Wir Zikour, e voe hano da zeski brezoneg d'eomp. Eun dervez, pa zigouesjomp, er zal-studi, e kavjomv, pep hini, en e blas, eur baperenn gand an daou c'houlenn-man warni e skritur-moul:

1° — *Ma vije graet skol vrezonek, er skolach, hag hen heulia a rafec'h?*


2° — *Ha mar hen heulifec'h, livirit perak her grafec'h?*

Ar vugale a zo e skolach ar Wir Zikour a zo holl bugale tud pinvidik, tud chentil pe dud e kargou uhel; n'int-ket holl Bretoned, daoust da-ze, hep beza gallet en em glevet a-raok, p'eo gwir n'oa bet hano ebet eus an dra-ze kentoc'h, e respontjont holl *ya* hag e kavjont, da harpa o *ya*, rezoniou hag o devoa talvoudegez:

— Me, a lavare an darn vrasa, a zo breizad, hag a vefe eur paotr diwarlerc'h, ma ne ouesfen ket yez va bro; me, eme eun all, am eus leveou, du-man, du-hont, hag a vefe laouen, ma c'hellfen komz, e brezoneg, ouz va merourien; me, eme eun all c'hoaz, a vo ofiser war vor hag am bo Bretoned dindannon; ma c'hellan komz outo, e brezoneg, e vezin deuet gwelloc'h d'ezo!

An holl skolaerien eta a oa a-du gand ar brezoneg; daoust da-ze ar skol vrezonek ne voe ket digoret; unan eus ar gelennerien, war am eus klevet, n'oa ket evit gouzany klevet hano anezi hag ar Rener ne gredas ket enebi outan; met breman hennez n'eman ket ken, war dro eno, ha ne welan ket eta petra virfe ken ouz ar skol vrezonek da veza digoret.

Setu petra lavare d'in paotred Brest ha me gave ne gomzent ket fall hag e vije mat ober diouto: Brestiz o deus kement a ezomm da c'houzout brezoneg hag ar Vretoned all ha ma n'o deus ket bet an eur vat d'hen deski war varlenn o mamm, ra hen deskint, da vihanan, war skinier ar skoll!



NEZENTIOU BERR

I. — Eun iliz-veur nevez

D'an deiz kenta a viz meurz diweza, eo bet sakret, gand an arc'heskob Pisani, iliz-veur nevez Mogadiscio, er Somal, en hanter-noz an Afrik. Evit he sevel n'oa bet goulennet skoazell den all ebet nemet hini ijinourien ar Somal, rak youl ar Pab eo gwelet sevel an ilizou, e pep bro, muia ma vo gallet, war ar stumm a gemerer, er broiou-ze da zével an traou all.

Hag an dra-se a ziskouez, eur wech c'hoaz, pegement a c'hoant en deus ar Pab da dremen diouz an holl boblon ha d'o gwelout o viret kement tra a laka dis-kenveledigez etrezo ha ra ket a c'haou ouz ar feiz kristen.

Arabad eta kredi e vefe a-du gand ar Pab belcien ha leanezed ar vro-man hag a ra brezel d'ar brezoneg: nac'h o gouenn ha dizenti outan a-grenn eo a reont ha netra ken.

II. — Bretoned an Naoned

Skriva a raer d'eomp :

Naoned, 26 Meurs 1928.

Aotrou,

Kas a reomp d'eoc'h eur pennad diwarben gouel brezonek Sant-Joseph-de-Portricq (Bro Naoned). Plijet ganeoc'h hen noulla war « Feiz ha Breiz ».

Da zeiz pardon Sant-Joseph-de-Portricq, an avel a yude dreist ar maeziou. Kouls-goude, kaer e voe ar gouel, en abardaëz ar zul 25 a veurz diweza.

Ar japeñ a oa leun a dud ; en o zouez ez oa ouspenn 60 deuet da bardona da heul an aotr. J. Ar Berr, rener « Oaled Vreton » an Naoned.

A raok echui ar gousperou eur c'hane^o eus iliz-veur Kemper a ganas kantikou brezonek. Eilet e oa gant kenvroiz divroët er gêr vras. Da c'houde ec'h en em vodjod, en eun ti, evit eva eur banne jistr, ha klevet gwerziou Taldir, Gourvil, Bourganlt-Ducoudray, abad Maréchal hag all.

A-raok distrei da gêr Naoned, ar gêr vras ha duet, an holl a oa laouen da veza gallet tremen eun abardaëz, en eur gouel ker kristen ha ker breizat.

Yvon Bizien.

III. — Dilhad kempenn

Ministr ar Post, en Alamagn, a zo o paouez gourc'hemenn d'ar merc'hed a zo diand'an e urziou lezel o lostennoù da goueza, da nebeuta, ugent-santimetr izeloc'h eget pennou o daoulin.

Ma rafe hon eskibien eun hevelep gourc'hemenn d'ar merc'hed, o deus c'hoant da dostaat ouz an daol zantel, hag a youc'h ne vefe ket e bro ar ratikou?

Ha kousgoude, an holl dud fur a veulfe hon eskibien da

IV. — Prosez elzasiz

Goude beza padet tost da beder zizun, prosez Elzasiz a zo bet klozet d'ec'h da noz, 24 a viz mae, da 7 eur 10; an An A. A. Riklin ha Rossé, — *bet hanvet « député », hag i er prizon, breman ez eus eur miz*, — Paul Schall ha Fasshauer a zobet kondaonet da vloaz prizon, gant difenn d'ezo da jom e Frans, goudeze, epad pemp bloaz; an unnek talmallet all n'o deus bet netra.

An A. Feuillet, eus a Gemper, ar gwella eus o alvokaded, dal ma voe embannet ar c'helou-ze a vrietas an A. Rosse, en eur lavaret : « Arabad d'am mignoned, Rossé, Schall, Fasshauer ha Riklin, barn ar Frans war ar varnedigez-se ! »

An torfed estlammus o doa graet an dud-se oa klask miret ouz frankmasoned ar Frans da ober o reuz en Alzas.

N'eo ket Republikaned ken eo a c'houarn ar Vro, met Frankmasoned; re anat eo en taol-man.

Elzasiz, da vihana, a ziskouezo n'emaint ket o vont da diega d'ezo, c'hoaz.

Setu aze neuze tud hag a oar en em zifenn!

Y. V. PERROT.

STAD AR BREZONEG

Ha stad ar Yez ?

Fall bepred! N'eo ket hepken dre dorfed renerien an Deskadurez hen argas diouz ar skoliou, hogen ivez, — ha dreist-holl marteze! — dre leziregez ar skrivagnerien na strivont ket a-walc'h e sell d'ar Yez lennek. Evel m'hel lavare an aotrou abad Gantois e diweza kendalc'h ar *Bleuv-Brug*, kenta tra a rankomp da gaout e Breiz eo eur Yez vrezonek reiz hag unvan a vezo evel e wis-kamant-natur, — dereatoc'h ha kaeroc'h eget nep hini all! — d'hor Spered breizek :

Paotred-araok ha Barzed c'houek,

Karomp, pleustromp ihor Brezoneg!

Gantan savomp a nerz ihor bréc'h,

— Ma vo kaera iliz d'hor Feiz,

Hag ouz ar Gaou eun harz didrec'h, —

E di breizek da Ene Breiz.

Heulia en hent-se *Gwalarn*. Eun dilead eo da bep Breizad desket heulia pliz hag harpa taol-striv *Gwalarn*, ar c'hrenva hag an uhela a gement a zo bet graet evid ar Yez abaoe ma 'z eus anezi.

**

Trugarez kalonek en hano *Breuriez-Veur ar Brezoneg* d'ar vignoned a zegas d'ez i rollou geriou bet kutuilhet ganto diwar ziweuz ar bobl. Graet e vo gand eun dibab anezo evid ar *Geriadur*. Rener ar *Vreuriez-Veur*, an aotrou Ernault, a zo deut nevez-zo da chom e Sant-Brieg, (14, Place Saint-Michel). Gallout a reer, neb en deus c'hoant, skriva d'ezan war-eeun.

Erbedi start a reomp al levrig *Yezadur berr ar Brezoneg* nevez-embannet gand *Gwalarn*.

Ar Sekretour: F. VALLEE.

DIVINADENNOU MEZEVEN

I. Pe seurt kemm a zo etre eur marc'h hag eun aval douar ?

Digaset gant Mari Pelten, Tréouergat

II. Pegement a ra naontek pevar ugent hag unan ?

Digaset gant Théophil Kotonneg, Enez-Sizun

III. Daou zisterik kenan a dra; Ma n'int toull ne dalvont netra.

Digaset gant Yann Diverrès, au Tréhou

IV


x	x	x	x	x
	x	x	x	x
		x	x	x
			x	x
				x

1. Gant pemp lizerenn, o kaera bro.
2. Gant peder, aes da gas en dro.
3. Gant teir, ne vez graet mui nemeur a vara.
4. Gant diou, eur ger kontrol da uz.
5. Da ziveza, eul lizerenn hag a zalch penn.

Digaset gant Yann Kostarreun, Bro Wened.

V. Teir vaouez, teir amezogez o deus pep hini eur puns da gerc'hat dour: ar puns 1 a zo d'ar vaouez A, ar puns 2 d'ar vaouez B, ar puns 3 d'ar vaouez C. — O veza ma n'en em glevant tamm ne fell da hini anezo tremen dre eun hent all.

Merkit war baperenn o respoc'hou penaos ec'h en em gemerint evit kerc'hat dour ?



Digaset gant eur Pagan, eus Goulc'hen.

Feiz ha Breiz

An Aotrou F. Cardinal, 1859 - 1928

D'ar 4 a viz mezeven diweza, p'arrez Plougastell a-bez. — kel leun oa an iliz, daoust d'ar gwall-amzer, ha d'ar gouelioù brasa, — a gase d'ar vered, e kreiz ar c'hanvou hag ar pedennoù, he ferson karet, an Aotrou Cardinal, diskaret gand ar c'blenved, kentoc'h eget gant ar gozni, rak n'en doa c'hoaz nemet nao bloaz ha tri ugent.

Ganet e oa bet e Gwiklan, er bloaz 1859; d'e bevar bloaz war nugen e oa beleget ha kaset evel kure d'ar Vourc'h Wenn hag ac'hano evel Rener skol Geroulas, da Gastell-Paol. D'e zaou vloaz ha daou ugent edo person e Sant Nouga; eno, e ioul oa nevez ha kreski an iliz, met ne dizas ober netra nemed eur presbital nevez.

D'e eiz vloaz ha daou ugent e oa hanvet da Rener beleien goz Ti Sant Joseph, e Kastell-Paol; tri bloaz goude edo chaloni a enor ha, d'e dri bloaz hag hanter kant, person e Plougastell.

Eun den a spered hag a galon ha mat da c'houzout tremen diouz an dud oa an Aotrou Cardinal; buan a-walc'h e vije bet barradok anez m'en doa desket en em drec'hi a-bred; eun den seder ha kaer gand e vleo gwenn evel an erc'h o kuruni eun tal chomet yaouank ha diroudenn. Daou zervez goude m'oan bet o welet diskenn e gorf e bez personed koz Plougastell, — kenta labour graet gantan, en e barrez nevez, — e tiskennen, e mirdi (1)

(1) *Mirdi* = Musée.

Brest, da ober eur zell ouz an taolennou nevez niverus a ziskouezed eno, en deiz-se; unan, dre douez ar re all, am skoas, raktal, hag e lavaren, ennoun va-unan, ouz he gwelet, a-bell : « Nag eo henvel an daolenn-ze ouz hini sant Divi, arc'heskob Menevia ha paeron Bro-Geumri ! » Eur penn breizad, e gwirionez, eo a oa dirazon, nann hini eur breizad tramor, avat, evel ma kave d'in, met hini an A. Cardinal e-unan, graet gand an dimezell Mary Piriou, eur vaouez speredet ha dournet kaer, ginidik, marteze, eus a Blougastell.

Evel breizad, an A. Cardinal a jomo e hano stag ouz *Feiz ha Breiz* hag ouz ar *Bleun-Brug*. Ren a eure *Feiz ha Breiz* epad pevar bloaz, eus a 1907 da 1911; ar c'hannad-se, ha ne veze moulet betek neuze nemet bep daou viz, a deuas da veza miziek; an A. Cardinal a embannas, ennan, war istor Breiz, war ar skol dizoue, war an ear, an dour, ar gwin-ardant hag all, pennadou hag a adlenner c'hoaz gant plijadur.

Ar « *Bleun-Brug* » pa ziouanjont. etre mogeriou uhel kastell Keryann, a gavas ennan, ivez, harp ha skoazell.

An A. Léon ar Berr, war « *Union Agricole* » ar 5 a viz du 1926 a lavare ne oa kevredigez ar *Bleun-Brug* nemed eur skourr diframmet diouz an « *Union Régionaliste Bretonne* ».

Kement-se n'eo ket gwir.

Ar *Bleun-Brug* eo merc'h *Kenveuriez ar Brezoneg*, ar gevredigez-se bet savet d'ar 14 a viz C'houevrer 1894, e kloerdi Kemper, gand eur brestad, Alfred Laurié, evit lakat ar gloareged e tro da anaout gwelloc'h o Breiz Epad an daou vloaz m'he renis, 1901-1902 ha 1902-1903, e welis ar vad e vije kaout e pep parrez, eur gevredigez savet, war he stumm, hag a vodje ar yaouankiz, nann da yaou,



AN A. CARDINAL. (1859-1928)

evêl ma rea hi, met da zul. Goulenñ a ris, war *ar skol-zul*, alñ an A Buleon, person Bignan, a oa neuze ar beleg e c'helle ar Vretoned lakat ennan, ar muia, o fizians, ha setu aman darn eus al lizer hir a skrivas d'in, d'an 20 a viz mezeven 1903, an hini a zo breman person iliz veur Gwened :

.... Il est bien vrai que j'ai tenté d'établir dans ma paroisse l'*Ecole du Dimanche*, — mais il est vrai aussi que mon premier essai n'a pas réussi.

A la fin de l'année, malgré les attractions diverses que j'avais imaginées pour cette Ecole nouvelle, j'ai constaté, une fois de plus, que les Bretons n'ont pas les mêmes habitudes sociales que les Gallois, ni la même mentalité; et qu'une œuvre pour réussir doit être organisée, non seulement d'après les besoins, réels et sentis, de telle ou telle population, mais aussi d'après les habitudes et le caractère de cette population.

J'ai donc changé mon fusil d'épaule; et, au moment où j'ai reçu votre lettre, j'étais en train de combiner une organisation nouvelle, sans illusion, mais pourtant avec quelque espérance.

La nouvelle tentative a échoué comme la première et j'en suis là, en ce moment, avec deux galons d'échecs sur les bras.

A force de changer son fusil d'épaule on ne trouve plus d'épaule où le mettre. Néanmoins l'année prochaine je recommencerai, et, tôt ou tard, je réussirai, j'en suis sûr, car je n'ai pas la tuberculose du découragement, et je *veux* réussir.

Quels moyens prendrai-je l'an prochain ? Mon plan est déjà tout tracé, mais permettez-moi d'en garder le secret, avant d'en avoir fait l'expérience, car il est très possible que j'ai un troisième échec à noter l'année prochaine, et, je ne veux pas m'exposer à l'humiliation d'être loué avant d'avoir réussi.


J'irai jusqu'au 12^e échec, s'il le faut, et, permettez à ma vieille expérience de dire à vos jeunes confrères que le plus sûr moyen de réussir c'est, — de ne pas craindre d'échouer, — de recommencer toujours, — d'examiner avec soin l'état d'esprit et les besoins de sa paroisse, — de renouveler, sans cesse, ses moyens d'action, — d'aimer le peuple, — et de persévérer jusqu'au succès,.... car, pour les œuvres comme pour la prière, la persévérance est la condition qui justifie toutes les autres....

J. BULEON.

Al lizer-ze a zeskas d'in kendelc'her, gant va labour vreizek... daoust peger kalet bennak e c'hell beza a-vechou an hent, hep fallgaloni, morse;... eur gentel eo bet hounnez ha n'em eus ket gelllet he ankounac'haat goudeze.

Da viz ebrel 1904, pa voen hanvet da gure e Sant-Nouga, gand an A. Cardinal da berson, e klaskis

sevel eno, evid ar yaouankiz, ar pez am boa gwelet e Kloerdi Kemper : *eur skol vrezonek*.



An A. CHARL a Goatgoureden
Diweza Aotrou Keryann.

En em voda a raemp bep sul; studiadennou ha prezegennou a veze graet; kaout a ris beleien all hag a rae, en o farreziou, ar pez a raen em hini ha ganto ec'h en em glevjomp da ober, raktal goude an cost, gouel ar peurzourn, a lezhanvjomp *gouel ar Bleun Brug*, eul lezhano ha n'oa ket bet roet da c'houel brezonek ebet c'hoaz, daoust ma oa bet rannet

bodou brug d'an 29 a viz gwengolo 1904 en eur gouel savet gant an U. R. B. e Priziag, e Bro-Wened, hag hanvet ganti : Gouel ar C'houn (1)

O kroui ar *Bleun-Brug* ar pez a glaskemp oa sklerijenna ar Vretoned war o istor ha war o yez hag o lakat da anaout mat o Breiz evit ma c'helljent he c'haret hag he servicha gwelloc'h goudeze. Ar c'hevredigeziou breizat a welemp o kerzet en dro d'eomp n'oant ket graet, mat a-walc'h, marteze, diouz doare ar bobl: digristen e vezent alies hag o renerien ne ouient ket a vrezonég.

Evel kevredigez, ar *Bleun-Brug* a oa krouet da vat, d'ar 7 a viz meurzh 1905, c'houec'h miz a-raok ma teuas hini eus izili an U. R. B, war he zro, hag ober a eure he c'hresk; goudeze, hep harp all ebet ken nemed an hini a roas d'ezi an A. Coatgoureden hag an A. Cardinal, mear ha person Sant Noug.

An A. Coatgoureden a lavare d'in, eun dervez: « Penaos n'eo ket bet deuet, ugent vloaz kentoc'h, p'edon e kreiz va brüd, ar c'hiz eus ar goueliou kaerze ? »

An A. Cardinal o c'hare hag, er brezegenn a rae d'o digeri, e lavare, d'ar bobl, an ezomm a oa anezo da rei d'ar spered breizad ar vagadurez a zo diouz e zoare.

Skoazell an daou zen-ze ha n'eo ket hini all ebet eo o deus roet tro d'ar *Bleun-Brug* da spega, da zavel ha d'en em skigna, evel m'o deus graet; war o beziou, breman p' int aet o daou d'ar bed-all, e skrivan an testi-man eus an doujans hag eus an anoudegez vat am eus evito.

Y. V. PERROT.

(1). Cf. Bulletin de l'Union Régionaliste bretonne, Congrès de Gourin 1904, p. 128.



Buhez an Tad Julian Maner

Stad Breiz e penn kenta ar zeitekvet kantved

E buez Mikael an Nobletz e weler pegen truezus oa stad Breiz e penn kenta ar zeitekvet kantved, a oa bet gwall-gaset, dismantret gant brezelioù hir ha kriz etre ar gatoliked hag ar brotestanted. E Breiz ar brotestanted ne c'helljont ket skigna o fals-kredennou, met brezel a voe evelato, ha da heul ar brezel pep seurt gwall-euriou. Ouspenn-ze, eur forban, Fontaneilla, a reas pep seurt torfejou e Breiz, epad m' edo, e Frans, ar gatoliked hag ar brotestanted oc'h en em ganna.

Epad trizek pe bevarzek vloaz e voe freuz ha brezel e Breiz. A-walc'h oa evit digas naonegez, pep seurt dizurziou, ober droug bras d'ar relijion.

N'edo mui an traou war o zu mat. Ar veleien ne raent ket o dever. Ar re anezo a oa desket hag a oa bet o studia e skolioù bras Paris pe gerioù all, a veze roet d'ezo parrezioù bras da c'houarn; met meur a hini anezo ne raent nemet kemeret o fae ha fiziout al labour e beleien all, dizesk, a gargent da gana an oferenn ha da rei ar zakramanchou; evid o labour e

roent d'ezo eur gwanneg bennak. Ar veleien-ze, ar re a rae al labour, a oa paour. Ar re all, ar re ne raent netra, a oa pinvidik, o veva diwar o leve.

An dud-jentil a veve ive en dizurz. N'o doa doujans ebet evid hano Doue hag e lezenn; kriz oant, troet var an eva, an emgann, an hudurnez.

An dud dister eus ar bobl a oa kouezet gwall izel. Parreziou hag e doa, a-raok ar brezel, 1200 oc'h ober o fask, n'o doa mui breman nemet eun dousenn pe war dro.

E eskopti Leon an traou n'oant ket ker fall hag en eskoptiou all; an dud o doa dalc'het gwelloc'h d'o relijion; evelato an droug a oa bras ive, an deskadurez kristen ne veze mui roet evel ma vije ret. N'oa ket a skolachou bras. Ar familhou a c'hoantae rei deskadurez d'o bugale a ranke o c'has da Baris, da Vourdel, da Ajen, evel ma voe kaset Mikael an Nobletz hag e vreudeur.

Eskopti Kemper a oa bet dilezet muioc'h eget hini Leon. Epad 200 vloaz, an eskibien n'ez aent, nemet eur wech bennak, da welet ar parreziou. An aotrou Rohan, hanvet eskob e Kemper e 1501, ne voe sakret nemet e 1510, ha n'en em gavas en eskopti nemet e 1518. Tost da 20 vloaz heb eskob ebet! — Eskibien all, hianvet war e lerc'h, ne raent nemet tremen ive, pe a garge unan bennak da c'houarn an eskopti en o lec'h. Pa voe hanvet, e 1614, an aotrou Le Prestre a Lezonnet eskob e Kemper, an dud ne anavezent mui netra eus o relijion, hag an dizurziou a oa bras spontus. Evel chatal e vevent, a skriv an Tad Maner.

Ne veze graet prezegenn ebet e iliz sant Korantin, eme Vikael an Nobletz, nemet er C'horaiz. Da bardon sant Korantin, ne veze ket prezeget, nemet pa goueze ar pardon eun deiz sul. Pa veze ar pardon eun deiz all,

an dud a zeue d'ar foar, a zigore en deiz-ze, hag epad an noz an holl, pinvidik ha paour, a zanse endra c'hellent, hag evelsé epad an eisvetez.

E eskopti Treger oa henvel. N'oa mui a vuhez kristen er parreziou.

Hiniennou a gavo marteze e lavaromp re, ha n'oa ket ker fall-ze an traou e Breiz. Met, ret eo kredi ar re o deus gwelet: Mikael an Nobletz, an Tad Quintin, an Tad Maner hag ar veleien a labouras gantan.

Er parreziou var ar maez meur a hini ne anavezent ket misteriou ar feiz a ranker da c'houzout evit beza salvet. Ne veze graet prezegenn ebet, kouls lavaret. Ar vugale a veze kaset da zivall ar chatal ha lezet ken dizesk hag ar chatal. An dud yaouank ne glas-kent nemet an dansou, ar c'hoariou.

Hag, evel ma c'hoarvez ato pa vez dilezet ar relijion, kredennou faos ha diskiant en em skigne etouez an dud, sorserien a douelle an dud gant troidellerez an drouk-spered.

Peger gwir eo komzou persoun Ars: « Lezit eur barrez ugent vloaz hep beleg : ar chatal a vezo enoret enni! »

Evelato Breiz n'ez aio ket da goll. Doue a zell a druez outi. Digas a ra d'ezi beleien santel, misionerien kalonek evel Mikael an Nobletz, an Tad Maner, ha dre o frezegennou hag o labour, Breiz a vezo tennet eus he stad truezus hag a vezo adarre douar ar zent.

Teir merc'h ar baraer

Gwechall goz, en amzer ma oa eur roue e Kemper, teir merc'h kaera ker oa merc'hed baraer koz straed an Eostig. Eun dervez, goude koan, azezet, e kichen o frenestr digor, e komzent, euz an dimeziou, hag eus ar gwazed, evel m'her gra alies a-walc'h ar merc'hed yaouank.

— Evidoun-me, a lavare an hini gosa, Annaig, du he bleo, a garfe dimezi gant liorzer ar Roue, rak me a gar ar bleuniou, ma 'z eus unan, kemend all a c'houez vat a vez ganto ha ker kaer all ha ma vez o liouiou.

— Me, avat, eme Varianig, an eil, gell he bleo, evel ar c'histin, a zimesfe dillo a-walc'h gant paotr-gampr ar roue. Gwisket eo evel eun aotrou bras hag alies en devez profou digand e vestr.



— Me, eme ar yaouanka, Lizig, eur plac'hig koant, eus ar re goanta, gant he daoulagad laouen hag he

bleo melen, a zell uheloc'h egedoc'h: mab ar roue, e-unan, eo a fell d'in kaout da bried.

— Te a zo eun diskiantez, Lizig, eme an diou all, eun tammig kintou enno; ma kav d'it eman mab ar roue o vont da zellet ouzit e fazies kals. Hennez p'en do c'hoant dimezi, a 'z ay da c'houenn eur brinsez da Wened pe d'an Naoned ha ne jomo ket, dre aman, da glask eur vaouez!

An tad, eus e wele kloz, a zelaoue ragacherez e verc'hed hag e youc'has d'ezo:

— Gwelloc'h e vefe d'eoc'h mont da gousket eget chom aze da ranellat; ma 'z eus tremenet unan bennak, ebiou an hent, ha m'en deus klevet ar pez en deus lavaret Lizig, eo gouest da gredi he deus kollet he fenn.

Eun tamm rusder war o zal, an teir blac'h yaouank a bignas d'o c'hampr, hep gouzout e oa bet klevet o c'homzou. Hogen, en abardaev-se, mab ar roue a oa oc'h ober eun dro e ker, e-unan, gwisket dister hag eun tok ledan war e benn. Ober a eure eun azez, da ziskuiza, dindan apouilh ar varaerez hag en doa bet plijadur o klevet ranellerez ar merc'hed.

Antronoz, abred, mevel bras ker ar roue a zigouezas er varaerez hag a-lavaras d'ar baraer mont kenta ma c'hellje da gaout mab ar roue gand e deir merc'h Enkrezet bras, ar paourkez den a c'halvas e vugale:

— Gwelet a rit, emezan, unan bennak en doa klevet ho stranerez dec'h, rak anez ne vije ket bet deuet a urz d'eomp da vont hor pevar, d'al lez, raktal. M'oarvat, e tapimp eur binijenn galet.

N'it ket da gaout aoun, rak an dra-ze, eme Lizig; n'hon eus graet torfed ebet o komz evel hon eus graet; ar roue a zo mat hag e vab a zo koulz hag hen; sur oun n'hon eus ket a ezomm da gaout aoun raozo.

Hag, e gwirionez, p'en em gavjont, gand o zad, gwisket en o braoa, dirak mab ar roue, heman a reas d'ezo

al laouena digemer; kavet en doa, e-unan, e oant plac'hed kaer, dreist-holl Lizig hag e lavaras d'ezo, en eur vouse'hoarzin:

— Eur roue mat a dle ober he lavarou ouz e bobl pa c'hell, atao; mat, dec'h da noz, em eus ho klevet o komz eus a zimeziou hag e fell d'in ober ho lavarou ouzoc'h; c'houi, Annaïg, a zimezo gant va liorzer; c'houi, Mariannig, gant va faotr a gampr, ha c'houi, Lizig, p'eo gwir e plijan d'eoc'h, ha va c'hemeret a rafec'h da bried?

Hini eus ar merc'hed, aes eo da gredi, ne lavaras nann; an teir eured a voe graet antronoz hag epad eur miz dioc'htu ne oa e Kemper nemet leinou ha dansou, bep eil; met goudeze, Annaïg ha Mariannig a oa aet da jom da di o gwazed, ha Lizig, hepken, a jomas el lez, hag a deuas da veza, e berr amzer, eur brinsez vat, seven hag hegarat. Pep hini a rae he meuleudi hag an holl a oa souezet o welet n'oa ket deuet da veza lorc'hus, eviti da veza pignet en eun hevelep renk.

An diou c'hoar gosa, gwas a voe, a deuas da gaout gwarizi ouz o c'hoar yaouank, hag e lavarent en o c'hounnar:

— Perak eo hounnez rouanez ha ni gwragez mevelien ha netra ken? Ha ne dalvezomp ket hounnez, bemdez? Ma vije bet unan pe unan ac'hanomp ken divergont hag hounnez, marteze, n'eo ket warni eo e vije bet kouezet taol lagad mab ar roue.

An diou c'hoar gêz a deuas da veza daou spered debret kement a zroug a oa enno o welet o c'hoar Lizig pignet uheloc'h egeto.

A-benn bloaz, goude, Lizig a deuas da veza mamm eur paotrig bihan eus ar re goanta. He diou c'hoar, o devoa goulennet beza war he zro pa vije o willioudi, a gemeras tro ac'hano da laerez an hini bi-

han ha da lakat en e lec'h eur c'hi bihan maro. Ar prins yaouank hag e wreg a voe doaniet pa weljont ar pezh a oa digouezet, met o veza ma ne oant ket evit kredi e fallagriez an diou geben, e kredjont e oa an dra-ze eur groaz digaset d'ezo-gand an Aotrou Doue.

An hini bihan a oa bet laket gand Annaïg, en eur baner, ha roet da eur wrac'h koz da deurel er ster. Gand aoun da veza tapet, an hini goz a bignas betek maner al Loskoat; eno e lakeas ar baner war ar ster hag hel lezas da vont da heul tiz an dour.

En daou vloavez warlerc'h e c'hoarvezas an hevelep taol. Lizig a lakeas er bed eur paotr hag eur verc'h; kerkent e voe graet d'ezo evel ma oa bet graet d'o breur hena hag en o lec'h e voe laket eur c'haz bihan hag eur c'havrig vihan maro. D'an trede gwech, ar prins hag a oa deuet da veza roue, dre ma oa maro e dad, a yeas droug bras ennan:

— Petra eo an holl draou-man? Aman e rank beza sorserez, en eun tu pe du; ya, Lizig, dre zorserez eo ho peus va zouellet ha Doue am c'hastiz kalet da veza heuliet eur froudenn direiz eus va spered, en deiz ma 'm eus ho koulennet da bried. Met ne vezin ket pelloc'h ozac'h eur vaouez villiget. Tapit krog er rouanez ha kraouit hi e tour uhela ar c'hastell, ha lezit hi eno gant bara ha dour hag eul levr hepken d'he didui.

Heulia a voe graet urziou ar roue ha Lizig a deuas da veza eur paour kez prizoniadez a skuilhas daerou, meur a wech, war an amzer, ma edo laouen e kichen he zad, en o zi bihan e tal ar ster.

A drugarez Doue, he zri bugel a oa beo; tapet e oant bet, an eil goude egile, gant miliner milin Tro-heir n'en doa ket a vugale hag a rae an dra-se poan d'ezan ha digaset d'ar red d'e wreg, eur vaouez vat o digemeras evel pa vijent bet digaset d'ezi eus an neuv hag o savas gant kemend a deneredigez ha ma vijent bet he bugale he-unan. Ar miliner a oa pinvidik ha n'en devoe damant da netra pa veze hano



da breña eun dra bennak d'ar re vihan; ar vilin a oa d'ar roue hag he-man, beb an amzer, evid ankouna-c'haat e dristidigez a deue betek eno da ober eun dro, evid aveli e benn; diskenn a rae, e ti ar miliner, da zebri e d'hortozenn, meur a wech, hag en doare-ze, e reas anaoudegez gand ar vugale, hag e teuas d'o c'harout hep gouzout edo

mouez ar gwad o c'hourc'hemenn d'ezan tostaat outo. Dont a eure d'o c'harout kement, m'o c'hasas gantan d'he gastell ha ma n'en em blijje nemed en o serr e vije. Klask a eure gouzout da biou e oant bugale, met ne deuas ket a-benn d'hen anaout.

Ha setu ma teuas, eun dervez, da Gemper, eun den hag en devoa redet ar bed, hag ar roue a gemeras plijadur o klevet gantan hano eus ar broiou pell ma oa bet enno. Lavaret a reas d'ezan e oa war eur menez, a zo o tispertia ar Gres diouz an Turki, eul labous burzudus a hanvet *labous ar wirionez* dre ma komze evel eun den ha ma lavare atao ar wirionez da gement hini a deue d'her c'hilask digantan. Tud a gantchou a zo bet o klask paka al labous-ze, met hini ebet biskoaz n'en doa gellet dont a benn eus e daol, hag e kredet e oant marvet holl e tal e venez.

Adalek an deiz-se, ar roue a veze atao o pleustri war *labous ar wirionez*. An daou zen yaouank, eus o zu,

o doa youl ivez da anaout o zud, a oa atapiet bras, evel ar roue, gant al labous burzudus. Eun dervez, ma n'oa ket evit herzel ken, Guyen a c'houlennas ouz ar roue aotre da vont da vro ar Say-Heol evit gwelout ha koueza a c'hellje war al labous dispar. Goude beza kempennet e stern hag e loen, a-zevri, ec'h en-em lakeas en hent, o rei e c'her, p'edo o kimiada, da veza distro, adarre, d'ar vro, a-raok c'houec'h miz; met c'houec'h miz a dremenas, ha bloaz, ha paotr ebet ne zistroas. Enkrezet gand e vreur hena, Gweltas a falvezas gantan mont da welet petra e oa deuet da veza. Hen ivez, ne zistroas ket. O c'hoar Levenez eur plac'h yaouank, koant evel an heol, a ouele, noz deiz, war an darvoudou fall a dlle beza digouezet ganto, met eun dervez, skuiz o ouela, e lavaras outi he-unan:

— A-walc'h a zaerou evelse; gouzout a rankan e pelec'h eman va breudeur ha pe veo pe varo int; mont a ran da gerzet war o roundou ha netra ne c'hello va diarbenn ken n'am bo kaset va gefridi da benn.

Hag hi ober he fourchasou. Kemerout a eure dilhad marc'hég hag eul loen; lakat a eure leun tenn he yalc'h a beziou aour hag eur c'hour-gleze a stagas ouz he c'hostez; eun dervez hep lavaret kenavo d'ar roue, ez eas en hent a-raok goulou-deiz.

Epad sizuniou ha sizuniou e kerzas hep blenier all ebet nemed an heol o sevel. Eun abardaez ec'h en em gavas en eur gompezenn hir ha noaz; o veza ma ne ouie ket kalz e pe du kerzout ken, ez eas etrezek eur wezenn vras a wele a-bell. P'en em gavas en he c'hichen e welas e oa kleuz hag e oa enni eur paotrig koz o chom, baro hir ha gwenn d'ezan; e varo o oa ken hir ma veze strobet ganti ha m'en doa poan o vale ganti:

— Ar varo-ze, tad koz, o strob kalz, eme Levenez; ma kirit m'hen trouc'ho d'eoc'h ha d'am digoll e tiskouezoc'h d'in va hent.

Mar kirit e reoc'h an dra-ze d'in, avat, eme an hini koz, rak ouspenn pemp kant vloaz a zo abaoe ma n'eus bet aotenn ebet warno ha seul vui e teuan da veza hoz ha seul vui am strob.




Lizig a gemeras eur gwentle hag a drouc'has baro an hini koz; n'oa ket aes, rak rouestl dirouestl oa ar varo ha kalet mantrus c'hoaz, gand an dra-ze, met a-

bouez poania, ar plac'h yaouank a deuas a-benn da zilulia ar paotr koz:

— Bennoz d'eoc'h, merc'h roue! eme ar c'hoziad gant levenez. Me a oar piou oc'h ha da belec'h emaoch o vont. Aboe pemp kant vloaz c'houi eo ar c'henta den en deus klasket ober vad d'in ha setu perak e fell d'in, d'am zro, ober vad d'eoc'h ouz ho lakat da gaout ho preudeur a zo bet tremenet dre aman. Setu aman eur voulig olifant a redo en ho raok hag a ziskouezo d'eoc'h hoc'h hent. Abenn daou zervez aman e weloc'h eur menez uhel, el lec'h m'eman labous ar wirionez : pignit warnan hep kemeret aoun ebet rak ar pez a glevoc'h pe a weloc'h; ne zigouezo droug ebet ganeoc'h gant ma na zelloc'h morse war ho lerc'h. Gwelet a reoc'h, war an naou, renkennadou mein hir du. Ar re-ze eo furmou ar re a zo marvet o redet warlec'h labous ar wirionez, dre m'o deus kollet kalon ha taolet eur zell war o lerc'h. Ho taou vreur a zo en o zouez. Digouezet e kern ar menez e kavoc'h eur wezenn hag a-ispilh ouz unan eus he skourrou, eman al labous, en eur gaoued aour. E kichen, ez eus eur feunteun, distaga a reoc'h ar gaoued hag e leunoc'h, a zour ar feunteun, ar voutailh-man hag e skuilhoc'h eur veradenn eus an dour-se war bep hini eus ar vein sounn a zo aze hag a en em droio raktal e tud. Evelse e lakoc'h ho preudeur da zavel, gand ar re all, eus a varo da veo, hag e tistrooc'h ho tri, da Gerne, yac'h-pesk, mar plij gant Doue!

Levenez hen trugarekeas kalonek hag a gendalc'has gant he hent. Digouezet e traon ar menez e ranke pignat warnan, e sellas outan gant spont. Eur pez karreg serz, hep gwez na glasvez, n'oa ken. Staga a eure da bignat; kignat ha regi a eure he zreid hag he daouarn diouz ar reier; beb an amzer, eur maen-rodell bennak o koueza eus a gern ar menez a venne he flastra; digouezet uheloc'h e voe tapet e kreiz eur barr erc'h, kazarc'h ha kurun; an tan a



venne he dalla
hag ar yennienn
a venne sounna
he izili. Daoust
d'a-ze, e kavas,
en he c'halon,
nerz a-walc'h da
genderc'hel gant
he hent. Uheloc'h
c'hoaz e kavas
aered ha loened
gouez estlammus
a venne he loun-
ka; serra a rae
he daoulagad hag
e kendalc'he da
bignat. En eun
taol, e klevas a-

dre he c'hein eur vouez o youc'hal d'ezi :

— Levenez, chom d'hor gedal 'ta! Ni eo Guyen ha Gweltas, da vreudeur! Edo o vont da zistrei he fenn pa deuas sonj d'ezi eus a c'hourc'hemenn an den koz, hag e kendalc'has hep trei, e nep tu.

En eun taol, an holl strobinnellou-ze a dec'has hag ar plac'h yaouank a en em gavas war eur letonenn gaer sklerijennet gant bannou klouar an heol. E kreiz al letonenn edo ar wezenn hag a-ispilh outi ar gaoued; e kichen e rede ar feunteun. Levenez, d'ar red, a dapas kaoued al labous glas hag a leunas ar voutailh a oa ganti, e dour ar feunteun. Dre ma tis-kenne, e skuilhe dour war ar vein hir a deue da veza duked pe varc'heien hag a oa chomet eno strobinnellet, bloaveziou ha bloaveziou a oa, dre ma n'o doa ket kavet war o hent eun den koz d'o blenia evel m'he doa graet he-unan. Evelse e tistrobinnellas he breudeur a gemeras ganti raktal penn an hent da zistrei d'ar gêr.

Tri miz goude, e oant digouezet o zri e Kemper hag

ar roue, laouen o welet e vignoned yaouank a gave d'ezan a oa kollet, o tizrei a lakeas ober goueliou bras evid enori o distro. Da gloza lein, Levenez a zigasas en e gaoued aour, labous ar wirionez o doa mall an darn vrasa da glevet:

— Labous brao, eme ar roue, lavar d'eomp ar virionez!

Hag al labous a zentas:

— Ugent vloaz, a zo, Aotrou Roue, emezan, gand eur vouez skler, abaoe ma talc'hit ho pried, e tour uhela ar c'hastell, er brasa dienez. Tamallet eo bet e gaou ha stlapet war hoc'h urz en toull tenval-ze. Daou vab hag eur verc'h he deus ganet ho kwreg Lizig d'eoc'h; o c'haret a rit heb o anaout: ho pugale eo Gwyen, Gweltas ha Levenez. Ar re gablus a rankit da anaout ivez hag eo Annaig ha Mariannig, c'hoarezed fallakr ar rouanez; ar re-ze eo o deus laeret ha klasket beuzi ho pugale. Sellit outo, gwenn int gand ar spont; Kastizit i, Aotrou, ar skouer-ze a dleit rei d'ho pobl.

Ar Roue a voe ker skoet gand ar c'homzou-ze, ma vennas koll e anaoudegez. Pa deuas ennan e-unan e redas d'an tour m'edo ennan Lizig. An daou bried a en em vriatas gant teneredigez hag a greiz o lenvou hag o daerou eo e leverjont o c'heuz hag o fardon an eil d'egile. Ar roue a gemeras e wreg, dre he dourn, hag he c'hasas d'ar zal vras hag he lakeas da azeza a-zehou d'ezan. An holl a youc'has en enor d'an itron hag a jomas sebezet o welet, n'he doa ket kollet, daoust d'he foaniou, nag he yec'hed nag he gened. Briata a eure, gant teneredigez, ar vugale a oa bet lammet diganti ken abred. Annaig ha Mariannig a voe taolet en ereou. En e gounnar, ar roue a roas urz da lakat leun a dachou da dreuzi diou varrikenn, gand o broudou dispak en diabarz, da gloza enno an diou dorfetourez ha d'o stlepel diwar gorre ar Menez Fru-

Jy, er ster. Pedenntou ar c'hoar ha re an nied a dec'has diouto ar c'hastiz-ze, met sammet e voent war eul lestr ha kaset da vro ar Vorianed gand urz d'o-gwerza, evel sklavezad d'ar c'henta marc'hadour tud a vije kavet hep gouleinn evito netra, en dizro, nemed al le e vijed kalet outo. A hent all n'ouzon netra ebet ken diwarbenn ar brinsez hag he bugale. O zri da gredi eo, e rejont dimeziou kaer. Ne ouezer ket ha kendelc'her en deus graet labours ar wirionez, da lavaret ar wirionez met her c'hredi a c'heller, p'eo gwir n'eo ket eun den oa.


G. P.



Oc'h heja kroc'hen eul loen gouez, Katell hel lez da goueza...



war gein Kabor, ar c'hi mat, a oa gourvezet e tal an ti, oc'h heolia.




hag a red ac'hano, d'en em zizober eus e groc'hen mevez,.....




sebezet, o welet Goulc'hannig, o vignon bras, o tec'het en e raok, spontet!

AR C'HI EN DIENN


Allegro. Metr. ♩ = 120.



Di - sul, o tont eus an o -



fren, Di - sul o tont eus an o - fren, Sailh ar c'hi



du, lan - di - gue - don, Er pod di - enn, lan - li - ron.

Disul o tont eus an of'renn (2 wech)

Sailh ar c'hi du, landigedon,

Er pod dienn, lanliron.

Arru ar mestr e kreiz an ti,

Hag e c'houlenn, landigedon,

P'lec'h man e gi, lanliron.

Ar mestr a lar d'ar vesaerez:

— Krog en e lost, landigedon,

Tenn hen er mēz, lanliron.

Krog en e lost ha lip e benn,

Rak... pec'hed eo, landigedon,

Koll an dienn, Lanliron.

— Tavit, ar mestr, na ouelit ket

Chas du a-walc'h, landigedon,

A vo kavet, lanliron.

Chas du a-walc'h a vo kavet,

Met ken desket, landigedon,

Ne vezo ket, lanliron.

L'astumet gand an A. H. GUILLERM.

Chapel sant Sebastian e Sant-Segal



Sant Sebastian e Sant-Segal

mer-
zer santel, ma lakaje ar c'hlenved da goueza. Sant
Sebastian, evel a ouezer, a vez pedet a-eneb ar
vosenn hag ar c'hlenvejou spegus ha n'eus ket

Goude chapel
Itron Varia ar Por-
zou, e Kastell-Nevez-
ar-Faou, n'eus cha-
pel ebet e traonien
ar ster Aon, hag a
vefe darempredet
muioc'h gand ar bar-
donerien eget chapel
Sant Sebastian, e
Sant Segal. Savet eo,
war eun dosenn a
65 metr a uhelder, e
kreiz etre diou gam-
menn ar ster, eun
hanter leo, e tu ar
gwalarn, diouz sklu-
ziou Gilly-glas.

Gwez dero koz a
ro disheol d'ar cha-
pel a zo bet savet er
XVI^{vet} kantved. War
a lavar ar re goz, tud
Sant Segal, klanv
gand ar vosenn, a
reas le da zevel ar
chapel-ze d'ar mer-

kals a barreziou, e Breiz-Izel, ha ne vije ket kavet
enno, pe eur chapel, pe eun aoter pe, da vihanan,
eur skeudenn da zant Sebastian.


A-zioc'h ar porz gwered ez eus eur wareg a enor
ha dindanni e weler ar zant, eur gwareger a bep
tu d'ezan, o stlepel warnan o birou.

E diabarz ar chapel ez eus skeudennou hag aoteriou
kizellet kaer; diouz o gwelout eo anat e
tleont beza bet graet, wardro ar bloaz 1710-1715,
gand ar breudeur Dean, eus a Gempér, ar re a
reas ivez skeudennou hag aoteriou santez Mari
ar Menez-Hom.

Chapel sant Sebastian a c'hellfe beza bet savet
gant menec'h Landevenneg; en amzer goz e c'hel-
lent kaout eno eur chapel, met skouejou aotro-
ned ar Gilly ha Lezaon, kizellet er mogeriou,
meur a wech, ha livet war ar gwer, hanoiou ar
veleien hag ar fabriked moulet er mogeriou, an
traou-ze holl a ziskouez, sklêr, eo bet savet chapel
sant Sebastian gant beleien, tudchentil ha koue-
rien Sant Segal.

Ar skeudennou e peder dirazo ar muia, er cha-
pel, eo hini sant Sebastian a weler stag ouz eur
wezenn, toullet e gorf gand ar birou. En e gichen
eman hini sant Fabian. Er c'heur, en tu kleiz,
eman aoter ar Werc'hez hag en dro d'he skeudenn
eo kizellet, war banellou, istor ti santel Loretta;
gwasa pezh a zo, ar panellou-ze, a zo bet diskaret
gand an hini en deus o livet e gwenn.

E kichen skeudenn sant Joseph eman re an
Ebestel hag ar pevar avieler ha taolennou bihan
war vuhez Hor Zalver en e vugaleach; harp eno
ivez e weler sant Severin, patron Sant Segal, sant



Chapel sant Sebastian e Sant-Segal

Youenn, eur rollad paper-ler gantan, en e zourn, hag eur manac'h eus a urz sant Beneat; war an aoter vras eman sant Per, gand e gilhog ha santez Mari Madalen gant he fodad louzou c'houez vat.

En tu dehou d'ar c'heur eo labouret gwelloc'h c'hoaz ar c'hoad; eno eman sant Roch ha sant Vaudez a vez pedet o daou a-eneb ar c'hlenvejou spegus.

Pelloc'h, aoter ar Zakramant eo perlezenn ar chapel; mantrus eo peger brao eo graet pep tra en aoter-ze, betek al laboused bihan a zo o pipat ar blokadou rejin a gouez diouz ar c'holonennou. Eno e kaver santez Anna, sant Joakim, sant Yann an Avie-ler ha sant Zakarias. A-zioc'h an aoter, e weler Jezuz oc'h en em ziskouez da Vari Madalen ha da ziskibien Emmaüs.

War ar gwer ha war ar c'hoad, e kaver skoed tud Kergoet a oa perc'hen, e Lothey, da gastell ar Gilly. O ger oa : *En kristen mad, me vev en Doue.* Kaout a raer ivez, dre eno, skoed Kerlec'hed ar C'hastell, aotoned Tresigidy, er XVII^o kantved.

E sant Sebastian e oa gwechall eur beleg a lavare an oferenn bep sul. E di hag e liorz a zo atao eno. C'houec'h pardon a veze graet, hep bloaz; d'an 20 a viz genver, da veurz fask, da zadorn ar zizun wenn, derc'hent sul an dreinded, hanvet pardon sant Herbot, d'ar zul goude gouel ar Vadalen, e miz gouere. — heman eo ar pardon brasa, — ha d'an trede sul a viz gwengolo, lezhanvet « pardon ar per rous. » Ar pezh a zo a zouezusa er pardonioù-ze eo ar prosesionou bihan a c'houlenner ober en dro d'ar chapel evit beza dilivret pe ziouallet diouz ar c'hlenvejou spegus. Er bloaz 1870 e voe goulennet 500 prosesion. Epad ar brezel diweza, da gredi eo, ez eus bet ivez goulennet kals.

Beleg diweza chapel sant Sebastian, a-raok an Dispac'h, an A Scouarnec, o veza ma ne falvezas ket gantan plega da lezennou fall ar C'houarnamant, a voe kraouiet e kastell an Taro ha kaset goudeze, d'an harlu, d'an Alamagn. G. P.

Kalon Rannet

Kalon ar vamm a zo e gloaz :

He merc'hig koant a bewar bloaz,

D'ar vered zu, diwar he brec'h,

Gant an Ankou a zo aet dec'h.

Aze he gwelan, en eur c'horn,

He fenn harpet war balv he dorn,

Disliou he chod, he dremm gwenvet,

He daoulagad hanter-goenvet.

An ozac'h, nes e vreg e kaon,

A jom, eur pennad, war ar skaon,

Ha, kel lies gwech ma klemm re,

En e zaouarn e stard he re.

War dor an ti, war dor ar zal,

E stag he sell, e sav he zal;

An nor a-gleiz, an nor a-ziou,

A jom, siouaz, sarret o diou.

Ar c'hatekiz, desket d'an noz,

Ar verc'hodenn gwisket e roz,

Ar zaeou sul, gwenn evel erc'h,

A gresk enni he c'heuz d'he merc'h.

Diouz taol ne gemer mui he flas,

Gant he boued ne gav ket a vlaz,

Ha, sebeliet doun en he foan,

Ne ra forz gant lein na gant koan.

A-bell da bell, he merc'h Lena

(Hi eo, en tiez, an hena),

Coustad a dosta ouz he mamm

Evit kinnig dezi eun tamm.

Ar vamm ankeniet d'he merc'h ker

Ne lavar ket zoken eur ger,

Ha, ruz he daoulagad, d'ar red,

Lena d'an dud a rann o fred:

Jopig, ar bugel diweza,

(Tri bloaz bennag e c'hell beza),

Azezet e kostez an daol,

E kreiz ar peoc'h eur c'hlemm a daol :

« Pelec'h, eta, e chom Mari,

Pa ne ziskenn ket da c'hoari ?

Anezi em eus ezomm c'hoaz

Ha d'in e fell he c'haout warc'hoaz ».

An tad a skrij, an holl a dav,

Ar vamm baour diouz he skaon a zav

A vriat stard d'he faourkez oan :

(O va mab, na d'in e rez poan).

.....

Sec'h da zaelou, mamm glac'haret,

N'eo ket aet pell da verc'h karet,

En nenv, e renk ar gwerc'hez,

War eun traon aour eo azezet

Dastumet int en dro d'an Oan,

Gantan e kemeront o c'hoan,

E pep lec'h e kerzont d'e heul,

Hag hep paouez o mouez e veul.

Abenn eun nebeut bloaveziou,

Pa vo leunniet da zeveziou,

Hi da vlenio, c'hoar an Elez,

Da lidou ar beurdalez.

J. L'HELGOUACH.

JERSEY, Mezeven, 4, 1928.

Pajennad Breuriez-Veur ar Brezoneg

Précis de grammaire bretonne, Yezadur berr ar Brezoneg, gant H. Hemon, Moulerez 4 Stræd ar C'hastell, Brest. Priz: eur skoed (3 lur).

Em diweza pennad em eus rôet d'al levrig-man eur veuleudi dleet-mat. Talvoudus e vo dreist-holl da staga gant studi ar brezoneg a ranko an holl addiski e Breiz mar fell d'imp mont war-raok da vat gand hon Emzav brôadel.

Ouspenn-ze, evel m'eo skrivet en diou yez, galleg ha brezoneg, e tigor an hent d'ober gand ar brezoneg da yez kentelia war hep doare anaoudegez. D'ar pal-ze e tleomp dont. Red eo ma vo graet gand ar brezoneg, n'eo ket hepken da venveg da ziski ar galleg, hogen da venveg da ziski pep tra, adaleg ar Groaz-Doue e skol ar re-vihan beteg ar brederouriez (philosophie) hag an doueoniez (théologie) er c'hloerdi bras.

Eur vegenn-dreist el levr nevez eo an taolennou. Gouezet en deus an oberour displega e taolennou, d'al lenner d'o merzout en eun taol-lagad, ar c'hemmadurion (mutations), ar ragano (pronom), an niveri (numération), an damziskoueza (l'indéfini), an araogennoù (prépositions), ar verbou, da lavarout eo ar pep diaesa eus ar yezadur a deu evel-se aes ha freaz.

**

Dre m'eo bet lakaet ber-ha-berr ar c'henteliou e van enno aman hag about eun draig bennak da glokaat pe da reiz. Setu aman war ze eun nebeut éveziadennou.

Pajenn 6, taolemm ar c'hemmadurion, ez, rannig dirag ano-gwan (*ez leal*) a vefe kentoc'h en eil bann, a-unan gand ar ger-mell (article). Ar *z*, kensonenn dre an dent, e dibenn ar ger *ez*, a hanzouz ar c'hemmadur *d/z* evel an *n*, kensonenn-dent ivez, e dibenn ar ger-mell *an*. Da evessaat: emeur tuet e Leon da dremen dreist an harz-se evid an ano-gwan goude an ano-kadarn, da skouer: *logodenn-zall*, *pluenn-zir*, daoust ma leverer e Leon, evel en eilve-

zou all, *an danvadez* goude ar ger-mell, hep kemma an *d e z*.

Pajenn 12, liesteriou en *-ed*. Ouz « an anoïou tud, loened ha gwéz » e c'heller staga: « hag eun nebeut anoïou-moneiz: *louized, dinered, liarded* ». Evid al liesteriou en *-ier, -eier* hag ar re en *-i* e ve mat notenni ez eus anezo liesteriou ampresis (indéterminés). Kenveria, da skouer, *botou* « la paire », *boteier* « chaussures en nombre indéterminé ».

Pajenn 19, *ar wana* « la plus faible », hogen *ar re wana* (gant *re* hepred) « les plus faibles ».

Pajenn 21, staga a c'heller *daouvet, diouvet* « -deuxième » da heul *unanvet* « -unième ».

Pajenn 25, an displegadur (conjugaison). Reisoc'h e ve marteze, e lec'h eun displegadur hepken, digemna meur a hini diouz ma ve penrann ar verb o tibenni dre eur gensonenn (evel *hada*) pe dre vogalennou (evel e *gwel-laot, trei, savetei, dont*).

Pajenn 27, ha taolenn-verbou. Staga amzeriou-boaz *gouzout*, da lavarout eo *gouezan, gouezen* graet ganto ez direiz e Leon e lec'h an amzeriou boutin. Amzeriou-boaz n'int ken, henvel ouz *bezan, bezen*.

Pajenn 32, Miret e c'hell beza ar rannig-verb ez goude *pa, ma: pa'z eo, ma'z eo*. En *hevelep doare ez edon*.

Pajenn 36, goude *ha* diou dro-lavarenn: *Per a zeuas hag a lavaras* « Pierre vint et dit » ha *Per a zeuas hag e lavaras* « Pierre vint et il dit ». Goude *rak kerkouls-all: Rak Per a zeuas* « car (ce fut) Pierre (qui) vint » pe: *Rak ma (pe e) teuas Per* « car vint Pierre ».

Pajenn 37, red eo merka an dishenvelidigez etre *evel ma (weler* « comme on (le) voit ») hag *evel pa (ve gwir* « comme si c'était vrai »); *evel pa* eo, an doare reiz evit « comme si ».

Eur wech c'hoaz ec'h erbedomp start ad levr nevez d'an holl vrezonegerien, ken d'ar re a zo c'hoaz war studi hor yez vroadel, ken d'ar re o deus he desket ha d'ar skrivagnerien. D'ar re-man e vo a dalvoudegez dispar kaout war o zaol-labour, a-unan gand ar geriadur, ar c'hrenna-man ker freaz ha ker reiz eus hor yezadur brezonek.

Ar Sekretour,


F. VALLEE.

Stourmad Sant Albin an Hiliber

440 vloaz a vo d'an 28 eus ar miz-man abaoe ma voe trec'het ar Vretoned gant ar C'hallaoued, e

Sant Albin an Hiliber. Eun dervez a dristidigez e voe an dervez-se evit hor bro hag an Duk Fransez II, pa glevas ar c'helou glac'harus, a voe ken doaniet ma varvas gant ar rann-galon c'houec'h sizun goudeze, d'an 9 a viz Gwengolo 1488.

Louis de la Tremouille a oa e penn ar C'hallaoued; nevez kemeret o doa Fougères hag edont



o vont da Zinam. Ar Vretoned, renet gant ar Rieu (eur breizad) ha gant Duk Orleans (eur gall, kenderiv da roue Frans) a gerze etrezek Sant Adbin evit klask he diframma eus a-dre krabanou ar C'hallaoued o devoa he c'hemeret, er bloavez a-raok, daoust peger mat e oa bet difennet gant eur Breiz-izelad, Gwillou Rosnyvinen, ginidik eus a Loperhet.

Ar C'hallaoued o doa 12.000 den hag en o zquez 5.000 suis, tud kaer ha kreñv. O mistri a oa gwazed hag a ouie o micher ha peziou-kanol a oa ouz o heul. Ar Vretoned a oa eus o zu 7.000 den chentil kalonek, dizesk siouaz, war o micher, 800 soudard alaman, 300 saoz ha 3.500 spagnad degaset gant roue ar C'hastilh; da lavaret eo e c'hellent beza eun 11.500 den bennak. Evid an niver eta ne oa ket kalz a gemm etre an diou arme, met, etre pennoù bras ar Vretoned, Duk Orleans, prins Oranj, Aotrou Albret hag all, gwad gall ha netra ken en o gwazied, ne oa nemet trouz, tabud ha gwarizi. Penaos gedal beza trec'h pa vezer renet gant tud evelse ?

Ar stourmad a zeraouas wardro div eur goude kreisteiz, e kreiz eul lanneg vras, a hanver c'hoaz, en deiz a hizio, *Lanneg an Diambroug*, « *la Lande de la Rencontre*. »

Ar Vretoned, pa glevjont edo ar C'hallaoued ouz o c'hask, a en em dennas war eur grec'henn a gaver a-zioc'h hent koz Sant Albin. Eleiz a vrezelourien o devoa komunitet en deiz-se; ar zoudarded wella a oa harp ouz koad Usel; e kreiz an arme edo ar c'hanoliou hag, en diou gostezenn, ar varc'heien; a-dre kein edo ar geginerien hag ar mevelien.

La Tremouille, dal ma welas ar Vretoned, a reas d'e dud chom a-zav hag o rannas e teir lodenn. Ma karje ar Vretoned beza sailhet, raktal, war o enebourien, evel ma lavare d'ezo an Aotrou Rieu, edont trec'h d'ezo, dioc'htu, en taol kenta. Met, siouaz! n'eo ket evelse eo e rejont.

Goude beza laket ar peziou-kanol da c'hoari ha lazet kalz tud, en diou gostezenn, soudarded an A. Rieu a grogas er C'hallaoued a oa dirazo; skrijus oa gwelet an taoliou a skoet; ar Vretoned a youc'he : Sant Samson! Sant Samson! o pedi, evelse, ar zant breizat a oa e c'houel, en deiz-se. Ar C'hallaoued kement a vec'h a zo warno a ra kant kammed bennak war a-dre. Gwasa pezh a voe, eur c'habiten alaman, e hano Bhler, evit diouall e dud diouz bouliji ar C'hallaoued, a gerzas, re vuan, en holl, war raok, hag a lezas eun toull goull, e linenn ar Vretoned. Ar c'habiten italiad Galiota a wel ar fazi; gant 400 marc'heg ec'h en em daol dre eno e mesk ar Vretoned; lazet eo raktal, met e dud a ro lamm d'an Alamaned, a ziskar ar ganolierien, a laz ar geginerien hag ar mevelien hag a dag ar Vretoned diouz an dre kein p'o doa a-walc'h da ober o stourm ouz an enebourien a-oa dirazo. Dizale e savas freuz; ar varc'heien a gollas o fenn hag a dec'has, d'en em guzat, er c'hoad tosta; ar zoudarded war droad a gilas goude; 2.000 brezelour hag a zouge war o dilhad kroaz rus ar Zazon, daoust ma oant holl, koulz lavaret, eus a Vreiz a stourmas ken a gouzas an diweza anezo war an dachenn.

Pa yeas an heol da guzat, 5 pe 6.000 breizad a oa astennet eno o c'horfou maro, o klask derc'hel,

en he sav sounn, banniel hor frankiz hag hor broadelez.

Hanoiou ar dud kalonek a gouzas eno a vije bet dleet o mirout; gwasa pezh a zo, ne anavezer nemed unanig bennak: Fransez, Aotrou Leon, eur paotr yaouank triouec'h vloaz, a oa en o zouez, o stourm ouz e dad, an Aotrou Rohan, en em werzet d'ar C'hallaoued. En o zouez edo, c'hoaz, Per, aotrou Pont 'n Abad ha Rostrenen hag e vreur Visant; Yann Pean, aotrou ar Roc'h Jagu, e Plœzal hag Hellez, e Lanveur; Per, aotrou Kervarker, e Lanvo-dez; Gwilhou, aotrou Kpateuzen, e Lanveur.



Lec'h ar stourm d diweza.

Etouez ar re a voe prizoniet edo Tanguy, Aotrou Kervaon, e Kernilis, a oa e penn gwazed Leon, Thomas de la Marche, eus a Vro Dol, Per de Francheville, eus a Vro Wened, ha Fransez, Aotrou Goz-briand, e Plouigneo. An hanoiou-ze a zo nebeud, met n'hon eus ket gellet kaout hini all ebet ken.

Lanneg an diambroug a zo bet labouret meur a wech abaoe stourmad ar bloaz 1488. Eun tiegez, hanvet Moronval, a zo savet war al lec'h ma voe gwaso ar stourmad, rak, d'an distera ma touller an douar, dre eno, e kaver tammou armou koz.



Diouz groaz vein a verke gwechall al lec'h ma kouezas ennan ar Vretoned ziweza. Ar c'hroaziou-ze, siouas, a oa kouezet, hag unan anezo kollet, met d'an 13 a viz mae diweza, eur strollad studierien ha studierezed yaouank eus a Roazon a zo bet o pardona e Sant Albin an Hiliber; bet int war dachenn ar stourmad; kanet o deus Bro Goz va Zadou, lavaret o

deus eur bedenn c'houek evid ar Vretoned vat a gollas eno o buhez, hag a-raok dizrei d'ar ger, o deus siellet, war eur roc'h, ar groaz o deus kavet hag a zavo hiviziken he divrec'h a-zioc'h mez-ar-stourm da venniga relegou ar re a gouezas eno evid ar Vro.

Breiz da virviken !

G. P.

KELEIER AR MIZ

I. — Gouel Sant Erwan, er C'hanada.

Deiz sant Erwan a voe lidet aman, a-zoare, evel ma oa bet « *Saint Patrick's day* » daou viz a-raok. Marteze e vo mat ganeoc'h klevout ar pezh a voe graet en enor da Vreiz, dre aman. Daou vreizad omp aman oc'h ober hon novisiad etouez Kanadiz Ar C'hallaoued, dre aman, o deus muoc'h a zoujans evidomp eget re Frans; aesoc'h int da garet eget ar re du-ze.

Da veure an 19 a viz mae e voemp saludet gant hor c'heneiled, seizennou gwenn ha du, ganto, war o bruched, hag, er zal-c'hoari vras ma weled eur « *Breiz da virviken* » o lugerni war he mogeriou e voemp sabatuet o klevout unan anezo o tistaga d'eomp eur brezegennig vrezonek. Sur a-walc'h n'o doa ket riblou Ster ar Pradou tregernet alies c'hoaz, gant ar seurt geriou betek oun chomet souezet o welet en doa gallet en em denna, kouls ha m'en doa graet, rak ar pezh a vrezoneg en doa desket a oa bet desket gantan epad ma vezemp o c'hoari, war ar porz, en eur c'houlell ouzin penaos e veze lavaret an dra-man hag an dra-hont: Setu aman e skrid evel ma oa; ne lammomp hani ebet eus ar faziou a oa ennan:

BREUDEUR KER,

En deiz-man, deiz gouel evid an holl gwir Vretoned, eurus ez omp da lavarout d'eoc'h « gouel mat ha laouen », da lavarout d'eoc'h e karomp c'houi a zo ganimp.

N'hellomp ket komz mat ar brezoneg met hor c'halon a c'hell karout mat Breiziz.

Lavaromp « breudeur »; breudeur ez omp gand an tiegez ha gand ar broad; ho hent a zo hon hent; ho stourmad, hor stourmad.


Bezent digabestr Breiziz ha Kanadiz ha benniget sant Erwan hor poblou.

D'an noz e voe kaniri: *Bro Goz va Zadou*, (hag a zo anavezet gant pep unan, aman, kel lies eo bet kanet ha ken kaer her c'havont.) « *Gwir Vretoned* », « *Dalc'h*

Sonj »; hag e vo kanet adarre en enor d'eur c'henvreur iwerzoniad toniou brao « *Saint Patrick's day* ».

Eun dra a gavis plijadurus meurbed hag a roas d'in da gredi e plije hor c'han da zant Erwan: unan eus hor mignoned yaouanka, « *Saint-Yves* » e wir hano, pa n'helle ket lenn ar geriou brezonek; a en em lakeas dirak ar gernerien d'o rena gand e zourn!

II. — Sizun veur ar Zakramant e Plouguin.



Itiz Plouguin

An Adorasion, e Plouguin, a vo prezeget er bloaz - man gand an Tad Pronost hag an Tad Collin, d'an 9, 10 hag 11 a viz gouere. D'an 12 eman dervez bras ar vugale: an oferenn a vo kanet evito da 9 eur 1/2 gand an A. Berthou, person Lannilis hag an A. Cong, person Lok-Gwennole a raio eur brezegenn.

D'an 13 eman dervez ar veleien ha d'ar 14 dervez an a-naon.

D'ar 15 e vo graet pardon bras ar Zakramant da gloza sizun an Adorasion.

— Eus a 8 eur 1/2 da 9 eur 1/2 e vo digemeret prose-sionou an holl barrezioù diwardro.

— Da 9 eur 1/2, an A. Cogneau, vikel vras, a gano an oferenn-bred, dirak an Aotrou 'n Eskob, e park skol Santez Anna.

An A. Moenner, person Sant Louis, Brest, a raio ar brezegenn.



Chapel sant Pirris, e Plouguin

— Raktal goude an oferenn-bred, studiadeg war ar Zakramant, evid ar merc'hed e park ar skol, evid ar wazed hag ar baotred yaouank e porz ar skol hag evid ar merc'hed yaouank e porz ar gouent koz.

Da 2 eur 1/2 — Gousperou ha prosesion bras ar Zakramant.

Goueled-Leon a-bez a vezo e Plouguin, d'ar 15 a viz gouere o kana gloar da Jezuz-Krist, en e zakramant, met let ra vezo.

III. — Gouel Santez Anna, Mamm Breiz.

Miz Gouere eo miz ar Vretoned, dre ma tigas daveto, bep bloaz, gouel mamm o Bro: gouel Santez Anna.

D'ar 26 a viz gouere, pep Breizad, pe hen a zo o chom e Breiz, pe hen en deus ranket, an dour en e zaoulagad, redet warlerc'h e vara, pell diouz bro e gavell, a deu da anzav, gant muioc'h a lorc'h eget biskoaz, eo mab da outenn hep par ar Vretoned hag e fell d'ezan bale war roudou ar re goz.

D'ar 26 a viz Gouere, pep Arvoniad a ya, a-gorf pe da vihanan, a-spered, da Geranna hag eno, war bez Yvon Nikolazig, ar gwir Vreizad, hag e-tal aoter ar Vamm-Goz e ra al le da jom ar pez m'eo bet e dud, en e raok: eur Breizad penn-kil-ha-troad.

O Mamm ar Vro, salvit ho Pretoned!

IV. — XVIII^{vet} Gouel ar Bleun-Brug.

Ar *Bleun-Brug*, o veza ma ne c'heller ket hen ober, c'hoaz, e Douarnenez, a vezo graet er bloaz-man, e Lesneven, d'an 3, 4, 5 ha 6 a viz Gwengolo a zeu.

An A. Duparc, Eskob Kemper ha Leon, pedet gant an A. Cornic, Rener bras ar *Bleun-Brug*, a vezo e penn ar goueliou breizek-se a lakaio Lesneven da veza eur mor a gan epad tri dervez.

D'al lun 3 a viz Gwengolo, holl vignoned ar *Bleun-Brug* a 'z aio da bardona da Zant Gwennole, da Landevenneg. Eul lestr o c'haso eus a Vrest da Landevenneg; goude m'o devezo graet o fedennou e iliz Landevenneg ha graet tro ar manati koz, e treuzint, gant autoioù penn-enez Kraozon; leina a raint e Morgad ha d'ar pardaez, da zizrei da Vrest, e kemerint al lestr e Kameled.

D'ar meurz 4 ha d'ar merc'her 5. Studiadedou war ar

yez hag an Istor. Kantved Arzur de la Borderie, hon istorier bras.

Diouz an abardaez, peziou-c'hoari nevez flamm.

D'ar yaou 6. — Kenstrivadegou al lenn, ar c'han, an displegerez hag ar brezegerez.

Oferenn-bred e Folgoad.

Goude merenn bodadeg vras da beurgloza ar gouel.

V. — Nevezentiou berr ha berr.

An A. Uguen, Rener Skolach Pont-Kroaz, a zo o paouez beza hanvet da berson e Plougastell, warlerc'h an A. Cardinal. Hor gwella gourc'hemennou d'ar person nevez, ha gras d'ezan da jom, epad eleiz a vloaveziou, e penn unan eus ar parrezioù kaera ha brezoneka a zo e Breiz-Izel.

Tonig, Jobig, Herve, Gwenn, Annaïg ha Jenovefa de Parcevaux de Tronjoli, eus a vaner Langongar, e Plouzane, a gemenn d'eoc'h, gant levezeg ez eo ganet o breur *Erwan*.

An A. hag an I. Yann Caroff, o chom e Villiers-sur-Marne, a gemenn d'eoc'h ginivelez o merc'h Anna-Mari, merc'h vihan da Zantez Anna ar Palud ha merc'h da Itron Varia ar Folgoad.

Ra zavo bras ar vugaligou-se evit brasa enor o zud hag o bro.

Hor c'henvroad mat, Mauris Avril, eus a Zant Malo, en deus kemeret da bried an dimezell Anna Saubost hag o eured a zo bet benniget d'ezo d'an 29 a viz mae, da hanter-noz, en iliz-veur Sant Malo.

Hor mignon mat, Yann Louis Pichon, eus a Treflez, en deus kemeret da bried an dimezell Mari-Jann Bihan-Poudec eus a Lannvretin, e Goulec'hien, hag o eured a zo bet benniget, d'ezo, d'an 20 a Vezeven, da 11 eur, gand an A. Conseil, person Sant Thegonneg.

Feiz ha Breiz a ginnig e wella gourc'hemennou d'an dud nevez-se.

Y. V. PERROT.

DIVINADENNOU MIZ GOUERE

I. — Gertou da lemm e kroaz:

- ◆ Me, lavar ar c'henta, eus al leue-oun ar penn,
 - ◆ ◆ Ha me, eme an eil, 'vez aliez war da benn.
 - ◆ ◆ ◆ Ni zo loened bihan, gant an holl dud kaset.
 - ◆ ◆ ◆ Va bleo-me a zo deuet da veza gwenn kann,
 - ◆ ◆ Me, erfin zo laket da veza lost d'ar c'had.
 - ◆
- Digaset gant J. P., Pluguen.*

II. — Petra reas Jezuz d'e zaouzek vloaz?
Digaset Tanguy Creignou, Cléder.

III. — Pennaoz ranna, va zud vat,
Etre daou vap ha daou dad,
Tri c'hant lur; met, kwit a fazi,
'N eur rei kant lur da bep hini.
Digaset gant eun Torr-penn.

VI. — Pehini eo al loen ne vale nemet roet e ve
d'ezan taoliou treid?
Digaset gant H. Rolland, Dirinon.

V. — Nao garre bihan graet gant
allumetez. — 1° Tennit kwit 4
allumetezenn evit ma ne jomo
mui nemet 7 karre. — 2° Lakit
goudeze ar 4 allumetezenn a-ne-
vez en o flas. Tennit adarre 4 kwit
evit ma ne jomo mui er wech-
mân nemet 6 karre. — 3° Grit ke-
ment all eun trede tro evit ma ne
jomo mui nemet 5 karre. — N'eo
ket ret e ve an holl garreou bep
tro kement ha kement.

Digaset gant Skol gristèn Plouzeniel.

ALI. — Digas respontchou divinadennoù Ebrel, Mae
ha Mezeven a benn ar 15 a miz Gouere da zivezata, da :
M. Guillou, vicair, Plouider.

Digas respontchou Sent ar Vro d'an hevelep adres
abenn ar 15 a viz gouere ivez, da zivezata.

Feiz ha Breiz

Buhez an Tad Julian Maner

An Tad Maner e Kerne

Mision Douarnenez (1641)

Evit senti ouz Mikael an Nobletz, an Tad Maner
a yeas da genta da Zouarnenez d'ober eur mision.
Mikael an Nobletz, eürus bras, a skrivas d'e vigno-
ned eus Douarnenez, da lavaret d'ezo en em brepari
mat evit tenna frouez eus ar mision. « Ma ne vez ket
labouret an douar bep an amzer, emezan, n'eus forz
peger mat e vezo an had, ne vezo gwelet nemet drez.
Eur vro lezet hep prezegennoù a goll buan ar pezh he
doa a vat. Ar gizioù fall a zeu adarre da c'hrazienna
enni. »

An Tad Bernard a oa gand an Tad Maner. Ne ana-
veze ket c'hoaz mat awalc'h ar brezoneg evit prezeg,
met kovez a c'hellas, hag o veza m'oa santel meurbet,
e reas kalz vad d'an eneou.

O tiguezout e Douarnenez, an Tad Maner a voe di-
gemeret e kichen dor an iliz gand ar pennoù bras eus
ar barrez. Antronoz e prezege divarbenn ar varn zi-
veza hag e lavare ar c'homzou-man, skrivet en Aviel:
« an heol a denvalaio, al loar ne roio mui he skleri-
jenn, ar stered a gouezo eus an neny; klevet e vezo trouz
ar gurun. » Kerkent, hep ma vije bet doare, eul
luc'hedenn a drellas daoulagad an dud, hag eun tarz

kurun, pounner mantrus, a spontas an holl. Eur vaouéz a zemplas, hag e voe ret he c'has er maez. Ar prezezer, goude eur pennad ehan, a gendalc'has : « Petra ! emezan. Awalc'h eo eul luc'hedenn hag eun tarz kurun evid ho sponta evelse ? Petra vezo, pagouezo varnoc'h kounnar Doue en doaré skrijus ma komz an Aviel anezi ? »

Komzou an Tad a ziskennas doun e kalonou ar re o doa e glevet, hag an dud a voe aketus da zont d'ar prezegennou.

En dervez-ze, an Tad Maner a brezegas c'hoaz e chapel santez Helena, e iliz Pont-Kroaz, e Pouldergat, er Yeurc'h, e Treboul, hag evelse e reas bep sul eus ar C'horaz. En dervezioù all eus ar zizun e rae katekiz pe brezegennou en unan pe unan eus ar parrezioù-ze. An amzer a jome gantan a veze implijet o kovez pe o welet ar re glanv.

Setu penaos e tremenas ar C'horaz e Douarnenez, hag e c'helle lavaret, d'ar fin, en doa kelennet dek mil den d'an nebenta.

Poan en doa bet, met levenez ive, o welet ar vad graet d'an eneoù. E pep lec'h e kave merkou sklear eus labour Mikael an Nobletz ; an dud a oa e gwirionez, troet ouz Doue, beva a raent evel gwir gristenien, ar gizioù fall o doa bannet pell diouto.

Nevezet e voe o c'harantez evit Doue gant prezegennou an Tad Maner. Epad m'edo heman o prezeg e Douarnenez, Mikael, e Konk-Leon, a rae pedennou birvidik. Skriva a rae alies d'an Tadou, d'o c'hennerza ha da lavaret d'ezo penaos en em gemeret. Digas a rae d'ezo kantikou en doa graet. An Tad Maner, eus e du, en doa savet ive kalz kantikou var ar Bater, ar Gredo, goure'hemennou Doue, an doaré da govez, da gommunia, var ar Rozera, finvezioù diveza an den. Tud Douarnenez o deskas hag o c'hanas, hag o ski-

gnas dre ar parrezioù tro var dro. Re all a zeue da Zouarnenez evid o deski, hag e voe gwelet adarre traoù kaer ha burzudus, evel e amzer Mikael an Nobletz, ar mor, ar parkeier o tregerni gand ar c'hantikou, hag ar c'hanaouennou divalo ha lous dilezet.

Doue e-unan a ziskoueze, dre vurzudou kaer, e sikoure an tad Maner. Heman a rae ar burzudou-ze, en eur bedi sant Ignas. « Eur vaouez, emezan, a oa klanv abaoe pell amzer. An tad Bernard ha me a lavaras d'ezi en em erbedi ouz sant Ignas. Senti a reas, ha kerkent e voe pareet... Nebeut amzer goude e voemp galvet da vont da gaout eun den yaouank, nevez dimezet, en doa kollet e skiant vat hag a lavare e lazfe e c'hwreg a daoliou bouc'hal. Ne habastere tamm, na noz na deiz, Staga a rajomp ouz e wele skeudenn sant Ignas. Kousket a reas mat epad an noz, hag en deiz varlerc'h edo pare. »

Eur vaouez, Mac'harit Sevaër, a voe pareet ive. Eun all, an hini a zemplas en iliz epad prezegenn genta an Tad Maner, a jomas hep dont enni he-man, eur pennad mat a amzer. Da c'houde, oa dinerzet holl, ne zebre na ne gouske, hag alies e koueze e sempladurez. An Tad Maner a roas d'ezi eur relegenn eus sant Ignas, hag a lavaras d'ezi ober le da govez ha da gommunia bep bloaz deiz gouel ar zant-se. Kerkent ha ma voe roet ar relegenn d'ezi, e c'hellas debri, hag e kouskas epad peder eur, ha daou zervez goude e c'helle dont d'an iliz evel ar re all ha klevet ar prezegennou.

Ar burzudou-ze a reas da dud Douarnenez kaout fizians e sant Ignas, ha deiz e c'houel e teujont niverus d'e bedi, e chapel ar skolaj, e Kemper.

An Tad Maner a voe galvet da vont da gaout eun intañvez santel, Eleonora Thepot, unan eus ar re a oa bet hentchet var ar zantelez gant Mikael an Nobletz. Goulennet he doa digand Hor Zalver tanva ar

poaniou en doa gouzanvet epad e Basion. Selaouet e voe he fedenn, ha da wener evel dere'hent ar goueliou bras, e sante evel spilhou ha menaoedou o sanka en he izili. Laouen e c'houzanve ar poaniou-ze, gant fizians da veza paet eun deiz evito er baradoz. — Met daouzek vloaz a oa abaoe m'edo evelse, hag e pedas an Tad Maner da denna divarni he foaniou. « Met, ha ne'ouzoc'h ket, a lavaras d'ez i an Tad, eo ar poaniou eun donezoun a-berz Doue? » Eleonora a respontas kerkent... Mat! Gouzany a rin c'hoaz, mar plij gant Doue. Ar pezh a ra d'in goulenn beza dizamm, eo o veza eman erru ar gozni. N'hellan gounit va bara nemet o tougenn, da wener, sammou bras a besked eus Douarnenez da Gemper. Aon am oa na c'hellfen ket ober mui eiz leo, bep gwener, abalamour d'am foaniou. »

O welet kement a feiz, an Tad Maner ne reas nemet touch ouz penn Eleonora gand ar c'hreunenn venniget en doa resevet digant Mikael an Nobletz. Adalek neuze, Eleonora n'he devoe mui a boaniou da c'houzany en derveziou ma veze en hent. En derveziou all, o gouzanve. Hag evelse e tremenas an traou beteg he maro.

Hervez e bromesa, an Tad Maner a giozas e gorañ e Douarnenez dre eur brosesion vras, a voe graet d'al lun Fask. C'houec'h mil den bennak a oa bodet; ar vugale, an dud yaouank, ar plac'hed yaouank a oa a strolladou; lod a skeudenne an Alez, a zoug binviou ar Basion; re all, ar plac'hed yaouank, gwisket e gwenn, var o fenn bleuniou ha kurunennou, a oa en dro da skeudenn ar Werc'hez. An holl a gane, a bouez penn, ar c'hantikou. Brao oa evel ar baradoz. An dud a lenve gand ar joa.

An Tad Maner en em brepare da guitaat Douarnenez, pa voe galvet da vont da welet eur vaouez seizet, dalc'het, abaoe pell amzer, en he gwelê. He c'hovez a reas, ha goude beza he aliet da gaout feiz krenv,

e touchas ouz he zal gand ar c'hreunenn venniget. Kerkent ar vaouez a zavas hag a c'hellas bale.

Distro da Gemper, an Tad Maner a labouras e ti ar Jezuisted, da c'hedal beza aotreet evel misioner e Breiz.

An holl ne welent ket c'hoaz oa ret ober misionou. « Da betra misionou? » a lavare kalz.

E penn kenta a vezeven 1641, e teuas da Gemper an Tad Dinet, mestr-bras ar Jezuisted evid ar C'huz-Heol a Frans. Ober a reas enklask, klevet a reas ar pezh a veze lavaret eus an daou du, gwelet a reas an hini a c'houarne an eskopti abaoe maro an aotrou 'n eskob, ha goude beza pouezet mat pep tra, e tisklerias e vije lezet hiviziken an Tad Maner hag an Tad Bernard d'ober misionou e Breiz: an Tad Maner evel Rener, hag an Tad Bernard da eil gantan. Evit ma vefe reizet mat an traou, e roas d'ezo liziri sinet, da ziskouez o doa bet o c'harg digand o mistri.

An Tad Maner a voe eürus meurbet hag a skrivas: « Doue a zo souezus en e oberou. Piou a c'helfe harpañ outan? »

En hent evit mont da Enez Sizun

An Tad Bernard hag hen, unanet hiviziken evid an hevelep labour, a zisklerias e chomfent an eil gand egile beteg ar maro.

Da belec'h mont da genta? E pelec'h ez eus ar muia ezomm anezo? Ne voent ket pell en entremar. Gouzout a raent edo Enez Sun hep beleg, hag ez ajont di.

Goude beza pedet e iliz sant Korantin Kemper, ec'h en em lakjont en hent. Eun dervez a dremenjont e Douarnenez. Tri miz a oa abaoe ar mision. Prezeg, kovez, gwelet ar re glanv a rajont epad an dervez-ze. Digaset e voe d'ezo eur paotrig seiz vloaz, gouez man-

trus, en doa aon rag an dud. Distres oa a gorf, poan en doa en e benn hag en e izili. An Tadou a douchas ar c'hreunenn venniget ouz an izili en doa poan enno, hag ar gouez bihan a voe habaskaet, e gorf en em eümas, hag e boaniou a voe pareet. Eur vaouez, Thomazi Rolland, a voe pareet ive, gand ar c'hreunenn, eus ar gouli a grigne d'ezi he dourn.

Euz Douarnenez, an daou Dad a yeas warzu Beg ar Raz, evit tremen ac'hano, dre vag, da Enez Sun Edont var vor, ha tost d'an enezenn, pa voe digaset d'ezo eul lizer a berz Mikael an Nobletz, da lavaret gortoz araok mont da Enez Sun, rak m'edo an dud o pesketa. Mikael o fede da zont da Gonk.

An daou Dad a zistro raktal vardu Beg ar Raz. Met, o veza m'eo fall an amzer da vont da Gonk, e touaront e Plogoff. Var o hent e kavont tiez paour. Mont a reont en unan anezo, hag e lavaront d'an dud: « Ha c'hoant hoc'h eus e komzfemp d'eoc'h eun tam-mig eus an Aotrou Doue?... — « A galon vat », a respontas an dud. Hag an Tadou d'o c'has kerkent d'eur chapel a oa eno, savet da zant Kollodon. A-benn eur c'hart-eur oa leun ar chapel a dud. Abaoe daou vloaz hini anezo n'en doa klevet prezegenn ebet. An Tad Maner a ra d'ezo kateliz, prezegennou, a zesk d'ezo an doare da zigemeret ar zakramanchou. Antronoz an Tad Bernard hag hen o c'hovez, hag int laouen o welet feiz an dud-se a oa siouaz! dilezet, a veve evel payaned, p'e gwir e teuent da zansal en noz er chapel, hervéz ma tisklerias ar re goz d'an Tad Maner.

Pa droas an avel, an daou visioner a gemeras eur vag evit mont da Gonk. Gortozet oant eno. Met n'oant ket c'hoaz diskennet eus o bag, pa voe klevet dre ar ruiou komzou diskiant, skignet ne ouzoun na penaos na perak. Ar vrud a redas edont e vont da gemeret abati sant Vaze, ha p'en em gavjont er porz, e voe lavaret d'ezo oa gwelloc'h distrei. Mikael an Nobletz en em zavas eneb an traou diskiant-se, hag an daou

Dad a voe digemeret mat e Konk. Met breman edont var douar Leon, hag o doa da c'houlenn aotre eskob Leon, an aotrou Kupif. Mont a rajont d'e gaout da Kastell. An digemer graet d'ezo ne voe ket kaer... Al Leanéd, eme an aotrou 'n eskob, n'o deus ket d'en em emellout eus ar parreziou. Grit skol d'ar vugale ha beleien. » M'en doa an aotrou 'n eskob disfizians eus ar Jezuisted, eo o veza m'oa bet komzet fall d'ezan divar o fenn gand eur beleg a oa en e gichen.

An daou Dad, e lec'h diskouez beza poaniet, a zigemeraz gant kement a zoujans hag a habaskted komzou an aotrou 'n eskob, ma voe heman hanter-c'hounezet, hag e lavaraz d'ezo: « Deuit c'hoaz d'am gwelet, araok kuitaat Kastell. »

An Tad Maner hag an Tad Bernard a lakeas o fizians e Doue. Mont a rajont da welet eur vaouez santel, ganet e Guiclan e 1599, hag o chom e Kastell, Mari Amis Picard. Adaleg he bugaleaj he doa diskouezet eur garantez vras evid ar Werc'hez ha sant Yann avie-ler. Eun deiz, bihanik c'hoaz, o gwelas en eur skeudenn e-harz ar Groaz, hag e voe ker skoet, m'en em lakeas da skuilh daerou. D'an oad a seiz vloaz, goude klevet eur brezegenn var ar werc'hted hag ar verzerenti, he doa goulennet digant Doue teir c'hras: da genta, d'ober e pep tra e volonte; d'an eil, da vev ha da vervel gwerc'hez; d'an trede, da gaout perz e Pasion Hor Zalver hag e poaniou ar verzerien. Roet e voe d'ezi he goulenn. E 1641, pa z'eas an Tad Maner d'he gwelet, he doa 42 vloaz, hag abaoe c'houec'h vloaz e c'helled lavaret oa merket en he buhez goueliou ar verzerien. Araok gouel pep merzer e c'houzanve poaniou henvel ouz re ar merzer-ze.

An Tad Maner hag an Tad Bernard a c'houlennas sikour he fedennou.

Goudeze ez ajont da gaout an aotrou Louet a Goatjunval, vikel vras Kastell, hag hanvet da eskob e Kemper, eur beleg santel meurbet. O digemeret mat a reas

hag e lavaras d'ezo: « Va zikourit, me ho ped, da zougenn ar zamm taolet var va diouškoaz. » Hag e pedas anezo da vont, kenta ma c'helfent, d'ober eur mision da Enez Sun ha da glask eur beleg bennak a asantfe beza hanvet da bersoun er barrez-ze. « Goude daou vloaz tremenet en enezenn, eme an aotrou Louet, me e hanvo en eur barrez all. »

An aotrou Louet a reas muioc'h. Da gaout an aotrou Kupif ez eas, hag e lavaras d'ezan: « Ar visionerien-ze n'emaint ket o klask gouarn ar parrezioù. Gwelit o doujans. Dont a reont da c'houlenn aotre diganeoc'h d'ober eur mision e Konk. Senti a raint ouzoc'h. Bez ez int eus kompagnunez Jezus, hag ar Vreurierez-ze a zo karget gand ar Pab da brezeg d'ar bayaned, d'an heretiked, da gelenn an dud e pep giz. Lod a ya d'ar Chin, d'ar Japon. Ar re-man a c'hoanta prezeg e Breiz, el lec'h ma z'eus ezomm ive da rei deskadurez kristen. Eun eskob evel doc'h, a glask gloar Doue ha silvidigez an eneoù, a dle beza laouen o veza sikouret gant misionerien evel ar re-ze. Ma ne fell ket d'eoc'h o lezel da brezeg var an douar bras, o c'hasit da vihana da enezennou Eusa ha Molenez. Rak an dud a zo eno ne welont morse eskob ebet, hag a zo evel dilezet. »

An aotrou Kupif a voe gounezet gant komzou e vikel vras. En eil gwech e tigemeraz an daou visioner gand ar vrasa madelez... It da genta da Eusa ha da Volenez, emezan, araok mont da Konk. Pa vezot distro eus an diou enezenn-ze, c'houi a lavaro d'in penaos em' an an traou. »

Y. U.

SELAUIT 'TA

Red eo kas holl skridoù kenstrivadegoù ar *Bleun-Brug* d'an *Docteur Cornic, Président du Bleun-Brug, Douarnenez*, a-benn Hanter Eost, da ziwezata.

AZE 'MAOUT

Kontadennou dastumet er beilhadegoù gant F. NIALMOR ha Kinniget da *Feiz ha Breiz* gant Ronan LEON eus a Lesneven.

Gwechall e oa, en eur barrez eus a Vro-Leon, daou vreur ha n'o doa mui na tad na mamm. Er baourentez edont ha petra a zo gwasoc'h eged ar c'hlenved-se? Beva a raent o daou en eur c'hoz tamm lochenn a oa warnez da goueza en he foull.

Eun nozvez, nec'het pis gand an naon, ar zec'hed hag ar yenienn, en eur ger gant holl ar pezh a zigas ar baourentez en eun ti, ec'h en em lakejont da zonjal penaos en em gemeret evit kas ar baourentez diwar o zro.

Eun den pinvidik a veve nepell ac'hano.

— An Aotrou Brugelen en deus kalz denved en e graou, eme Yannig, ar c'hosa eus ar baotred; ne rafe ket a zroug d'eomp-ni kaout unan anezo.

— Kalz kaol en deus ivez, en e bark, eme an eil eus ar baotred, Perig, hag eur podad soubenn vat a rafe unan bennak anezo!

Perig a daolas eur sac'h, war e skoaz, hag a gemeras, en e zourn, eur mell kountell evit trec'hi ar c'haol.

Setu i en hent warzu Kervalaneg, tiegez Brugelen.

Perig a ya war eun da bark ar c'haol; Yannig a ya er porz hag a zigor dor ar c'hraou; kregi a ra en denved, en eil goude egile, evit klask al larta, na petra 'ta.

Tud an ti a oa c'hoaz war zav; pa glevas gwigour dor ar c'hraou, ar mestr a lavarás d'e vab: « Kerz 'ta da welet petra a zo ha galv ar c'hi! » Ar c'hi a oa e hano Azemaout. Mat e voé da Yannig ma n'edo ket wardro ar porz d'ar mare-ze.

Mab an ti a yeas er maez hag a c'halvas: « Azemaout! Azemaout! »

— Ya! aman emañ, sur, eme Yannig, en eur zont er maez eus ar c'hraou!

An noz a oa tenval; evelse ar mab ne welas ket nini en doa respontet d'ezan hag e kredas, e gwirionez, e oa ar c'hi eo en doa komzet; mont a reas en ti, buana ma c'hellas, o krena gand ar spont.

— Petra 'zo 'ta, va mab, eme an tie?

— Petra 'zo? Ma ouesfec'h! Strobinellet eo bet sur Azemaout, rak komz a ra evel eun den.

— Piou? hor c'hi?

— Ya! hor c'hi, ha brezoneg eo a gomz ha ma ne gredit ket, kit buan, hoc'h-unan, da welet!

Brugelen en doa c'hoant da welet ar marvailhese; mont a reas er porz hag e youc'has a-bouez penn: « Azemaout! Azemaout! »

Hol laer, hep gouzout kement-se a respontas:

— Aman 'maoun, sur; e pelec'h e fell d'eoc'h e vefen ken 'ta?

Hag ar mestr en ti, mar gouie:

— Mab, a lavaras-hen, dre holl zent ha sentezed ar baradoz, biskoaz n'em eus gwelet kement-se; kerz da lavaret d'an Aotrou Person petra dremen ha lavar d'ezan dont aman, dioc'htu, gand e stol ha dour benniget.

Buana ma c'hellas ar paotr yaouank a reas an hent a gas eus a Gervalaneg d'ar vourc'h. Pa zigouezas, er presbital, an Aotrou Person a oa en e wele. Mab Brugelen a lavarás d'ezan:

— Aotrou, deuit du-man, dillo, da glevet marvailhou; kemerit avañ, o stol ha dour benniget, rak diwarbenn eur sorserez bennak eo.

— Sorc'hennou, eme ar beleg, eo a leveres d'in aze, ha n'eo ket war draou en doare-ze eo e savin eus va gwele; breman dres, p'oun deuet abenn d'e domma.

— Mat, dont a rankit, Aotrou Persoun; me ho tougo kentoc'h war va diskoaz; rak-se, na zaleit ket.

Ar person a lakeas e zilhad, a wiskas e jopiliz hag e stol, a gasas gantan eur banne dour benniget, hag evel ma oa fall da vale e pignas war gein ar paotr yaouank a gemeras an hent treuz, dre ar parkeier, evit beza buanoc'h er gêr.

Perig, ar breur yaouanka, a oa e park ar c'haol o karga e zaç'h pa welas eun dra wenn o finval e kichen an ode. Kaout a reas d'ezan eo e yreur eo a oa o tont gand eun danvad hag e c'houlennas:

— Digas a res eun dra bennak?

— Ya! sur, eme ar Brugelen yaouank, e gave d'ezan klevout mouez e dad.

— Taol anezan neuze 'ta buan, d'an douar, aman, eme Berig, ma rin e stal outan; va c'hountell a zo lemm ha ne vezin ket pell evit trec'hi d'ezan e c'houzoug.

Pa glevas kement-se, ar beleg a lammas d'an douar hag a dec'has ac'hano, strafuilhet holl; mab Brugelen a yeas ivez eus e du; met an

Aotrou Person a jomas e jopilis stag ouz eun dre-zenn ha ne gredas ket dont en dro d'e gerc'hat.

Perig, o welet eun dra wenn a yeas da welet petra oa: sebezet e chomas pa welañ e oa eur chopilis. Dres, d'ar mare-ze ivez, e tigouezas Yannig gand e zanvad dibennet, skuiz maro e oant p'en em gavjont en o lochenn gant o semmern. Perig a ziskouezas neuze ar chopilis d'e vreur, hag e c'hoarsjont leiz o c'hof o welet pegen tost e oant bet, o daou, da goueza, diwar ar billig, en tan.

Prinsezig he bleo aour

Bez'e oa gwechall eur roue hag en doa c'hoant da veza desket bras, an desketa en e rouantelez.

Eun dervez e welañ o tont davetan eur c'hoz gwrac'h koz ha dister a roas d'ezan eur pesk ha n'en doa gwelet biskoaz hini ebet henvel outan:

— Grit poazat hennez evidoc'h, emezi, hag e weloc'h, kerkent ha m'ho po hen debret, e ouezoc'h petra lavar loened an douar, an aer hag an dour!

Lorc'h bras a voe er roue o klevet kemend all ha paea mat a eure ar vaouezik koz, a c'hellit kredi. P'en em gavas er gêr, e lavaras da Yeunig, unan eus e wella mevelien:

— Aoza a ri ar pesk-man d'in, met arabad eo d'it, avat, debri tamm ebet anezan rak keuz a zavfe gan da ler.

Ar mevel a voe sebezet lioll o klevet kemend all. Perak edo e vestr o klask mirout outan debri eus ar pesk-se. Sellet a eure outan :

— Ne 'm eus ket gwelet hevelep pesk em buhez, ha p'hen tanvfen, pe zroug a vefe ?

Pa voe aozet ar pesk, kenta tra a reas Yeunig a voe kemeret an tamm kenta anezan. Epad m'edo o lipat e vizied, e klevas eun dra bennak o vouldal en dro d'e ziouskouarn hag o lavaret d'ezan :

— Kemer eun tamm, tanv ar pesk 'ta !

Pa zellas ar mevel eus a belec'h e teue ar geriouze, ne welañ nemed eur gelienenn bennak o nijal er gegin .

En hevelep amzer e klevas, er mêz, eur vouez hag a lavare :

— E pelec'h e tiskennimp, e pelec'h ?

Unan bennak a lavaras :

— E tachenn ed ar miliner ; d'eomp da ed ar miliner !

Yeunig, dre ar prenestr, a welañ eur vandennad gwazi :

— Setu an taol, emezan ; breman e welañ perak e tifenne va mestr ouzin tanva ar pesk ; aoun en doa ne ouesjen evel dan yez al loened.

Goude lein, ar Roue a lavaras da Yeunig tenna er mêz daou varc'h evit mont gantan, a-gevred, da ober tro e zouarou.

Ar pezh a voe graet.

En eur dreuzi eur prad glas, marc'h Yeunig a en em lakeas da fringal ha da wic'hal ; setu amian ar pezh a lavare :

— Setu, va breur, ker skanv oun hizio, ma lamfen a-zioc'h ar menez a zo dirazomp.

— Me a rafe kemend all, eme varc'h ar roue, met n'her grin ket, p'eman a rpaour kêz koz-man, war va c'hein, rak koueza ha terri e benn a rafe.

— Petra 'ra an dra-ze d'it ? Gwell a-ze ma varv, a respontas marc'h Yeunig rak neuze e lec'h dougen eur c'hroped koz e, tougi eur paotr yaouank.

Ar mevel a c'hoarze o klevet kement-se. En em guzat a rae avat muia ma c'helle ; ar roue oc'h en em drei a welas eur mousc'hoarz war vuzelloù e vevel hag a c'houlennas outan perak e c'hoarze :

— N'eo netra, va mestr emezan ; c'hoarzin a ran, hep gouzout perak, mat a-walc'h.

Ar roue koz, avat, en doa klevet ivez komzou ar c'hezeg hag a gavas gwelloc'h dont en dro d'e lez. En em gavet er gêr, e lavaras da Yeunig :

— Karg d'in ar werenn-man a jistr, Yeunig ; lak hi leun tenn ha taol evez avat, da skuilh rak koll eur berad anezi a zo a-walc'h evit chacha taol ar maro war da benn.

D'ar geriou-ze e voe gwelet, tost da brenestrou al lez, daou labous oc'h en em ganna, an eil o klask tenna teir vlevenn aour eus pao egile :

— Ro i d'in, eme ar c'henta ; gouzout a res ervat int d'in.

— N'eo ket gwir ! Me eo em eus o c'hemeret evidon va-unan.

— Me eo em eus o gwelet o koueza eus penn prinsezig he bleo aour.

— N'ez pezo ket unan.

O klevet an dra-ze, Yeunig a droas e benn hag eur berad chistr bennak a gouezas war an daol.

Ar roue, droug bras ennan, a ouezas neuze e oa bet gwerzet gand e vevel hag a lavaras :

— Pez fall ma 'z out ! Dizenet ez peus ouzin o teski yez al loened ; mervel a ri eta evid eun torfed ken grevus. Ma 'z peus c'hoant da jom beo, digas d'in ar brinsez he deus bleo ker brao, rak c'hoant am eus d'he c'haout da bried. Ha breman, kerz en hent .

**

Petra da ober ? Ar paour kez Yeunig a gawe gwelloc'h ober n'eus fors petra ma vije lezet e vuhez gantan eur pennadig all c'hoaz .

Sterna a eure eur marc'h ha setu hen en hent.

D'an trede dervez, ar marc'h eg a en em gavas dirag eul lenn ; diskenn a eure da eva dour hag e welas, e kreiz al lenn, eur verienenn o neunv hag a oa o vont da veza beuzet, sur a-walc'h.

Yeunig, avat, en doa kalon vat evid al loened hag a ginnigas d'ezi eur yeotenn : ar verienenn a voe saveteet :

— Bennoz Doue d'eoc'h, den mat, emezi, da Yeunig ; dalc'h koun ac'hanon pa vezi en ezomm, rak me eo rouanez ar merien. Kenavo.

Yeunig a gemeras, neuze, hent eur c'hoat a wele dirazan. Bale a reas ken na zigouezas dirak eun dervenn uhel. Er blenchou e oa eun neiz ha war an douar, diou vran vihan, kouezet anezan, a lenve hag a glemme :

— Tad ha mamm, a lavarent, e pelec'h emaoe'h ? N'eo ket goloet mat a-walc'h hon diouaskell c'hoaz, gand ar pluny, ha n'hon eus ket eun tamm da zebri. Deus war hor sikour, Yeunig mat, ha n'hon lez ket da vervel gand an naon.

Yeunig, kerkent, a ziskennas diwar e yarc'h hag, hep gina, a lazas heman, gand eun taol kleze, evit rei da zebri d'ar paour kez brini naonek : ar brini, evel ar merien a lavaras d'ezan :

— Pa vezi en ezomm, hor galv, hag ez aimp war da dro.

Goude beza baleet, daou zervez all, ec'h en em gavas Yeunig, war ribl ar mor ; war an aod e oa daou zen, trouz etrezo, diwarbenn eur pesk kroc'hen aour :

— Me eo am eus e dapet, eme unan.

— Ma ne vijen ket bet aet d'az kerc'hat, war ar roc'h du-hont, e vijes bet chomet eno da veza beuzet, rak n'oa bag ebet ganecz.

— Gwerzit d'in ar pesk-se, eme Yeunig, en eur dostaat ; ranna a reoc'h an arc'hant dre an hanter, hag en hent-se ne vo trouz ebet ken etrezoc'h.

Tenna a reas eus e c'hodell ar yalc'had aour en doa bet digant e vestr da ober e hent hag her rei a eure d'ar besketerien. Goudeze e kemeras ar pesk hag hen taolas en dour, met sevel a eure anevéz hag o sevel e benn er mêz eus ar mor e lavaras :

— Bep wech ma vezi en ezomm, va galv ha me'z ay raktal, war da zikour. Kenavo, Yeunig !

Hag ez eas ar pesk da strad ar mor :

— Da belech ez es ? eme ar besketerien, da Yeunig.

— Da glask, evit gwreg, d'am roue koz Dinarvor, Prinsezig he bleo aour ; met, ne ouezan ket, e pelec'h he c'haout.

— Ma n'eo nemed an dra-ze, emezo, e c'hel-lomp hel lavaret d'eoc'h. Dinarvor eo merc'h ar

roue a ren war an enezenn vras a weloc'h a-ze dirazoc'h. Deus en hor bag ha ni az kaso di.

En em gavet en enezenn, hon den a yeas prim da lez ar roue. Pa en em gavas eno, na pebez souez da Yeunig.

Mogeriou ar palez a oa kreun-bara ; al leur-zi a oa graet gant kig mogedet ; an oaled gant amann ; treustou radenn a zounge ar zolier fars-gwiniz ha treustou haleg an doenn grampoez. Etre diou renkennad mevelien e treuzas Yeunig dor al lez. Kenta tra a c'houlennas digand ar roue a voe dourn Dinarvor evid e vestr :

— Her rei a rin d'it, eme ar roue, met a-raok he c'haout ez peus tri dra da ober d'in. Warc'hoaz, pa zihuni, e divirin d'it petra ez pezo da ober da genta. Ha breman, kerz da gousket evid en em ziskuiza diouz da hent.

**

Antronoz, beure mat, Yeunig a oa dirak ar roue a gomzas outan evel hen :

— Va merc'h he doa eur c'holier perlez, met torret eo bet hag ar perlez a zo kouezet etouez ar geot a zo er prad a weles a ze a-zirak ar palez. Kerz ha digas d'in ar perlez-se a-raok kuz-heol.

Kerkent, Yeunig a yeas d'ar prad ; bras e oa hag hir ar geot ennan. Koulsgoude Yeunig, en eur zaoulina, a en em lakeas da glask. Sonet e oa krestez gant kloc'h al lez ha perlezenn ebet n'en doa kavet. Sevel a reas e benn :

— Boulc'hurun, emezan, pebez labour torr-penn ; ma 'm bije bet aman va merien bihan ken mat, marteze ne vije ket bet er giz-se :

— Setu-ni, eme ar merien, oc'h en em zispaka eus a bep lec'h ; petra fell d'it ?

— Red eo d'in klask ar perlez kollet er pradman.

— Gortoz eun tammig, eme ar merien. Hag ar merien, mar gouient, da glask ha da ziglask, etouez ar geot. Kement a oa anezo ma chomas kalz hep labour.

N'oa ket tremenet a zek munut, mat a-walc'h, ma ne jome mui eul lec'h, er prad, ha ne vije ket troet ha distroet hag ar perlez digaset da Yeunig.

Ar roue pa welas heman oc'h en em gaout gand ar perlez n'oa ket evit kredi en divije gelllet dont a-benn eus e daol. Koulsgoude, goude beza o c'hontet e voe red d'ezan kredi edont holl :

— Mat, eur maout out, emezan. Warc'hoaz e roin dit eul labour all.

Antronoz ar roue a lavaras da Yeunig :

— Dec'h edon o vale war lez ar mor pa deuas da zonj din eus al labour a c'hellfen rei dit. Kemeret a ris eur maen aour em godell hag her stlapis pella ma c'hellis er mor. Pe 'z pezo digaset d'in ar maen-se, ez pezo graet an eil tra a c'hortozan diganez.

Tenval e oa penn Yeunig o vont hag o tont, war an aod, en dervez-se. Ar mor a oa brao ha lintrus meurbed ; daoust da-ze, Yeunig ne c'helle gwelet na strad ar mor nag ar maen a oa eno :

— A ! va feskig aour, emezan, perak n'emaout ket aman ?

— Setu-me, eme ar pesk ; eus goueled ar mor e teuan da rei d'it va skoazell. Petra 'z peus ezomm ?

— Red eo d'in digas d'ar roue eur maen aour taolet gantan, er mor, dec'h.

— O paouez gwelet daou besk oc'h en em ganna evid eur maen-aour, emañ. Gortoz, eun tammig, ma 'z an d'o c'hlask.

Hag ar pesk a 'z eas en dour. Eur pennad goude edo en dro-gand ar maen aour.

Hag ar pesk kuit.

Pa deuas Yeunig d'al lez gand e vaen aour en devoe meuleudi digand ar roue evid e daol kaer.

D'an dervez warlerc'h e voe lavaret d'ezan :

— Ma 'z peus c'hoant e rofen va merc'h d'ar roue, e rankes digas d'in dour ar maro hag hini ar vuhez : ezomm hon devezo anezo.

Er wech-man, avat, Yeunig a voe laket nec'het ; wardro kreteiz e figouezas, en eur c'hoad, hag ec'h en em lakeas da glemm :

— Na pebez tristidigez, evelato ; ma vije va brini aman, e vijen sikouret ganto, marteze.

Ma klevas eun dra bennak o sourral a-zioc'h e benn hag e klevas an diou vran o koagal :

— Krak ! krak ! petra fell d'it 'ta, Yeunig paour ?

— Red eo d'in digas d'ar roue, dour ar maro hag hini ar vuhez.

— Gortoz eur pennad !

Eur c'hart eur goude edont en dro. Pep hini anezo he doa en he fao eur pod pri. An hini kenta a oa ganti dour ar maro hag an eil dour ar vuhez.

Yeunig a gemeras hent ar c'hastell. E penn ar c'hoad e welas eur wiadenn-gevrid, etre diou wezenn. E kreiz ar wiadenn, eur mell kevnidenn he doa lazet eur gelienenn edo o vont da zebri. Gant daou pe dri verad dour ar maro, Yeunig a lazas ar

gevnidenn ha gant dour ar vuhez e lakeas buhez adarre er gelienenn. Houman a nijas hag a droas en dro da ziskouarn he salver, en eur lavaret :

— Yeunig, eun dra vat ez peus graet o rei d'in ar vuhez rak hepdoun-me ne 'z piije ket gouezet biken e pelec'h e lakaio ar roue e verc'h Dinarvor rak el lez edon dec'h pa glevis kement-man : Yeunig, eme ar roue, a zo gouest da zigas d'eomp dour ar maro ha dour ar vuhez. Evit ma chomo Dinarvor ganeomp e lakimp hon daouzek merc'h e daouzek kached; an hini a vo er c'hached a ziskouezo eo en do da gas gantan. Rak-se me a zo vont dillo da welet e pelec'h e kaso ar roue e verc'hed hag, en doare-ze, pa zigouezi, el lez, e c'hellin da zikour.

Hag ar glienenn a nijas ac'hano, tiz warni.

Pa zigouezas Yeunig, el lez, ar roue a lavaras d'ezan :

— Rei a rankan d'it va merc'h, met red e vezo d'it he c'havout. Evit se em eus laket va merc'hed a-zindan kachedou. Ma tivines mat ez pezo va merc'h.

Kaset e voe en eur gampr e weled enni daouzek kached henvel mik. Den ne c'helle gouzout petra a oa dindanno :

— Va daouzek merc'h a zo aze, dindan, eme ar roue, klask !

Yeunig a glevas neuze eun dra bennak o voudal en aer hag e welas ar gelienenn a lavaras d'ezan :

— Brr ! Brr ! Brr ! tosta ouz ar c'hachedou ha bale en dro d'ezo ; pa vezo red me ' lavaro d'it pehini eo !

Yeunig a reas an dro d'ar c'hachedou; d'ar seizvet e klevas :

— Setu aman ! gand ar gelienenn.

— Aotrou ! setu aman kached Dinarvor, emezan d'ar roue.

Neuze ar roue a zavas ar c'hached hag e voe gwelet Prinsez he bleo aour o sevel, eun torchad bleo aour d'ezi hag a goueze betek he zreid :

— Her rei a ran d'it, eme ar roue.

**

Tri dervez goude, Yeunig a guitae palez an enezenn ha gantan kevred edo Dinarvor. Tri gar barr a aour a roas ar roue da gas da vestr Yeunig, a voe sebezet holl o welet eur brinsez ker koant. N'oa ket bet a amzer da gas an embannou e oant eureujet met ne voe ket drus ar friko rak ar roue a oa eun tammik re biz...

... Goude ar pred e lavaras da Yeunig :

— Laeret ez poa diganen an tu da c'houzout yez al loened. Sonj am oa bet da genta d'az krouga ha da rei da gorf da zebri da laboused an nenv. Digaset ez peus d'in an hini a garen ; dibennet e vezi, met sebeliet e vezi evel eun ofiser bras.

Ar bourreo a reas evel m'en doa gourc'hemennet d'ezan ar roue. Neuze Dinarvor a bedas he gwaz da rei d'ezi korf Yeunig. Ar pezo a voe graet. Ar brinsez a lakeas dour ar maro war ar c'horf; goudeze e lakeas dour ar vuhez warnan : beo e teuas a-nevez, koantoc'h ha yaouankoc'h :

— Biskoaz, emezan, n'en doa kousket kerkoulz hag a savas en eur zibikousa e zaoulagad.

Koulskoude ar roue koz o welet kement-se a oa deuet c'hoant d'ezan da zont yaouank ha koant a-nevez. Lavaret a reas d'e gerent hen dibenna ha teurel dour buhezek warnan.

Ar pezh a voe graet.

Holl an dour a oa implijet hag ar roue ne finve ket c'hoaz. Neuze e voe implijet dour ar maro; siouaz, hanter c'hraet e oa hepken, rak ar penn a en em stagas ouz ar c'horf met o veza ma ne oa mui a zour a vuhez ne voe ket gellet digas buhez ennan en dro. Den ne c'helle kaout eus an dour-ze hep gouzout yez al loened, ar pezh a ouie Yeunig a-raok ma oa bet dibennet.

Ar roue koz a voe beziat ha Yeunig hanvet en e lec'h. Dimezi a eure gant Dinarvor ha friko bras a voe. Danset e voe kement a c'havotennou hag a jabadaoiou, en o enor, ma chomas an hini a gontas ar rimadell-man d'in, epad eiz dez, gand ar boan en e zivesker, rak bet e oa bet er friko. Lavaret a reas d'in ivez e voe debret ugent ejen, seitek leue, seiz hag hanter kant danvad, eur c'harrad avaloudouar, eur garigellad karotez ha peder garigellad kaol, met holl ferniel ar barrez ne oant ket bet bras a-walc'h evid aoza ar farz hag ar bara evid ar frikoterien, hep konta ma voe evet eur varikennad chistr, ugent litrad gwin ha trizek litrad gwin-ardant; er fin e lavaras e oa bet seiz kant hag eiz ha tregont den er friko hag e oa skuizet trizek soner evit lakat ar re yaouank da zansal; ar re goz o doa devet evit unnek skoed a vutun.

Petra livirin d'eoc'h c'hoaz? Ez eus c'houec'h pe zeiz vloaz abaoe ha Yeunig a vev atao en eur palez kaer en deus laket sevel, eurus gant Dinarvor, ha karet gand e bobl a ra bemdez pedennou evit ma chomo ganti. Lavaromp ivez 'ta eveldi: Buhez hir d'ar roue Yeunig.

AR MENGLEUZIER

Debret e oa koan, eur pennad a oa, hag an holl a oa azezet, e korn an oaled, o c'hortoz an amezeien da zont da veilha. En em gaout a rejont pelloc'h ha ganto e oa eur mevel, en em gavet, er gerriadenn, en deiz-se, end'eeun.

Eur penniadig, e tremener an amzer o komz eus al labouriou hag eus ar marc'hajou. Pa ne gaved ket kals a dra da gonta ken ar wazed a lakeas eun tamm tan. Neuze ar mevel nevez a lavaras:

— Me a zo o vont da gonta d'eoc'h eur gontadenn, ha c'houi, ar re vihan, digorit dreist-holl ho tiskouarn hag ivez ho kenou ha selaout.

Eur wech e oa eur mengleuzier ha ne c'houneze ket kalz ne evit rei da zebri d'e dud ha kaout ouspenn e dammig butun da zul. Ken tenn e oa e labour ma ne garie ket dreist e vicher.

Eun dervez, ma oa gwall skuizet gand e labour, e lavaras, en eur en em glemm p'edo o tont d'ar gêr: — Perak ne vefen ket, eun dervez, pinvidik? Pegen eurus e vefen neuze; chom a c'hellfen da ziskuiza; kousket a c'hellfen en eur gwele plunv ha dougen a rafen dilhad seiz.

Eun él, a oa d'ar mare-ze, a-zioc'h ar vengleuz, a glevas klemmou al labourer hag a yeas da lavarret kement-se da Jezuz.

Salver ar bed a lavaras:

— Kerz ha desk d'an den-ze ne dalv ket beza pinvidik.

Mont a reas an él betek kêr ar mengleuzier hag e lavaras d'ezan: — Pinvidik e vezi, hervez da c'hoant.

Kerkent al labourer paour ne c'helle ket mui niveri e zanvez. Gwisket e oa gant seiz, hen, e vaouez hag o c'houec'h bugel. En nozvez-se e kouskjont e gweleou plunv.

En dervez war lerc'h, ar mengleuzier aet da ober eur bale a gavas, war e hent, ar roue a oa war varc'h, eur bern mevelien ouz e heul. Pa welas an dra-ze, ar mengleuzier a lavaras:

— Perak n'oun me ket roue? neuze em befe n'eus fors pegement a dud d'am servicha.

Hag e vezi, eme an êl.

Ha setu hon den roue.

D'ar mare-ze e oa eur zec'hor vras. Ar feunteuniou hag ar steriou a oa dizec'het; ne jome mui eur yeotenn war an douar. Tud ha chatal a varve a-verniou gand ar zec'hed.

En eur welet an heol ken tomm ha ken lugernus, ar roue a lavare:

— Perak, n'emaoun-me ket en e lec'h?

Graet e vezo d'it hervez da c'hoant, eme an êl, hag ar mengleuzier roue a deuas da veza heol.

Ken tomm e oa deuet da veza an amzer ma ne c'helle mui an dud finval war an douar.

Koulsgoude, eun dervez, e voe gwelet eur goumoulenn en aer ha, diwar an douar, ne c'helled ket mui gwelet an heol. Henman a c'hrosmole:

— Petra 'n diaoul en deus ar c'houmoul-ze pa deu da virout ouz va droug da vont beteg an douar: Mar d'eo evelse eo eman an traou eo koulz ganen beza koumoul.

Kerkent e teuas da veza eur goumoulenn deo, ken tenval, ma vire ouz holl dud an douar da welet an heol.

Kemend a zour a gouezas ma oa beuzet an holl draoniennou hag e pep lec'h ar steriou a zizoc'he.

Koulsgoude kurun a oa hag al luc'hed a dreuze

ar c'houmoul: Petra, eme ar c'houmoul, eul luc'hedenn a eneb ouzin. Gwell eo ganen beza luc'hedenn eget beza koumoulenn.

Hag e teuas da veza luc'hedenn.

Eur pennad goude, houman a gouezas er ster hag a voe mouget:

— Petra, emezi, me beza lazet gant dour. Mar d'eman an traou en doare-ze, ra zeuin da veza dour.

— Ar pezh a zigouezo, eme an êl. Ar ster m'oa kouezet al luc'hedenn enni a oa eur ster he doa kuitaet he hent; kaout a eure, da enebi outi, eur roc'h:

— Petra, eme an dour, eur roc'h eo a deui breman da ober al lezenn d'an dour. P'eo gwir eman an traou evelse, ra vezin roc'h.

Ha kerkent e teuas da veza eur roc'h.

Koulsgoude an dour a yeas kuit hag ar roc'h a welas eun den gand eul langede o toulla d'ezi he zreid:

— Prenv-douar, emezi, ma vefen den, ec'h en em gannfen ganez.

— Hag e vezi, eme an êl. Ha dioc'htu ar roc'h a droas e den, hag ar mengleuzier a oa bet pinvidik, roue, heol, koumoul, luc'hed, dour ha roc'h a deuas a-nevez da veza mengleuzier, ker paour ha ma oa, en dervez ma klevas an êl e glemmou. Karout a ra breman e vicher ha ne gav netra gwelloc'h eget labourat edoug an deiz.

Setu, me lavar d'eoc'h, gwazed ha merc'hed, ha c'houi, dreist holl, paotred ha paotrezed, na rit ket ar pezh en doa graet ar mengleuzier am eus kontet d'eoc'h e istor, rak abred pe ziwezat ho pezo kez m'hen lavar d'eoc'h:

— Netra suroc'h! eme holl dud an ti.

Dastumet gant FRANSEZ NIALMOR.

Pajennad Breuriez-Veur ar Brezoneg

Gwalarn, niverenn 14, hanv 1928, moulerez 4 straed ar C'hastell e Brest. Kas ar c'houmananchou boest-post 75 Brest.

Setu aman unan eus ar re wella, ma n'eo ket ar wella, eus an holl niverennoù a *Walarn* bet embannet betek-hen.

En eil darn (Notennoù) dreist-holl e kavor pennadoù a bouez dispar, da genta *Skollou-uhel ar bobl en Danmark*.

**

N'eus gwelloc'h skouer d'eomp er bed-holl, moarvat, eget hini an Danmark.

Daou c'hant vloaz 'zo edo stad an Danmark henvel ouz stad Breiz. Er bazenn uhela bourc'hizien imaget o spered gant yez ha deskadurez-estren, ha dindano kouerien d'izesk o terc'hel d'ar yez ha d'ar vro dre voaz kentoc'h eget dre emskiant ha dre garantez. A drugarez d'eun nebeut tud a galon e voe trôet penn d'ar stad-ze. Sevel a rejont d'ar bobl skolioù ma klevent enno *en o yez* eur gelennadurez dereat, war eun dro kristen ha brôadel. Ar gelennadurez-se eo he deus ceunet bro-Zanmark en hent reiz hec'h Amzer-da-zont.

Red eo lenn e *Gwalarn* istor burzudus *Emzav an Danmark*. Eul levrig a dlefed ober eus ar pennad-ze d'he lakaat etre daouarn kement-hini a bleustr war wellaat stad Breiz.

**

Eun enklask a zo bet digoret e *Gwalarn* diwar-benn stad ar brezoneg. « En em zifreta a reomp, emezan, kement ha ma c'hellomp evid ar brezoneg. Hag e-keit-se n'anavezomp ket e wir stad ! » Eun doare diarvar da anaout ar stad-ze eo enklask diwar-benn implij ar yez en

iliz, er prezegennoù hag er c'hatekizou. Kas de *Walarn* (boest-post 75, Brest) diskleriadur war ar poent-se, an neb a hell hen ober. Diwar an holl ziskleriadurioù dastumet e vo savet « taolennadur hor yez » a zo kement a c'houlenn d'ezan a bep tu.

**

An esperanteg, daoust d'ezan da veza bet goapaet gant sodien, a zo anezan eur benveg talvoudus kenan. Drezan e c'hellomp kaout eun tanva eus an holl skrivagnerien estren brudeta a zo bet trôet o fenna oberennoù er yez-se. A-hend-all aes-tre eo da ziski ; eur c'hoari n'eo ken ! Enket emaeomp a-drenv kael yez ha spered ar C'hallaoued. An esperanteg a roy tro d'eomp da zellout dreist ar gae-ze en diavaez. Eur yezadur eus an esperanteg lakaet berr-ha-berr ha fraez-tre a gavor en niverenn-man a *Walarn*. Da heta eo e vo graet ive eul levrig eus ar *Yezadur esperanteg*.

**

Geriadurig-dourn brezonek-gallek gant R. Hemon. Savet a-ratoz e sell d'ar yez lennek al levr nevez-man a zo galvet d'ober kalz a vad d'hol lennegezh dre ma kavor ennan, displeget en eun doare fraez ha reiz, ar pep gwella eus gerioù ar yez unvan ma reer ganti breman en holl levrioù. An daou gae-gerig kenta anezan a zo deut emaez ar wask. O goulenñ a heller diwar-vreman.

**

Kentelioù Sant Fransez, kelaouenn vizek gant skeudennou, Renér T. Roussel, 28 Bali ar Marne, an Oriant.

Kentelioù sant Fransez a zo aet war wellaat souezus. Da genta n'oa enni nemet pennadoù e trefodachou

diñshenvel ha ken direiz an eil hag egile. Breman e kerz mui-ou-z-mui en hent ar yez unvan ha reiz.

**

Breiz, sizuniat, Rener an aotrou Moal, merour an abad Le Clerc, rue des Capucins, Gwengamp.

En despet d'an diaesteriou a bep seurd a gav war he hent e talc'h *Breiz* en he sav hepred. Gwaz a ze he deus ranket dilezel he zroidigez eus *Aviel ar Sul* a oa eun dudi he lenn, gant reiz e oa ar yez anezi, en tu-hont ma rôe aczaman d'al lennerien da heulia an oferenn. Va fedi a reont da zevel va mouez evit ma vo daskoret d'ezo o « *Aviel* ». Ha setu graet va c'hlemm !

**

Estr eget stad ar brezoneg *dre ziavaez*, a vo diskleriet d'comp dre enklask *Gwalarn*, ez eus da evesaat ivez ouz e stad *a-ziabarz*. Boulc'het eo bet al labour en hent-se gand an aotrou Per ar Rous eus skol-veur Roazon en e « *Atlas linguistique* ». Nemet e van kalz d'ober c'hoaz. Eun dra vat e vez ivez dastum, kent ma vezint peur-ankounac'haet, ar geriou koz diembann, ar marvailhou, al lavariou, hag all, a zo c'hoaz e koun ar re goz.

Ar sekretour : F. VALLEE.

**

Trugarekaat a reomp an aotrou Chaloni Uguen evid e levr kaer *Eul Leanezig* (Brest, ti-moulerez ar « C'hourrier », 4, straed ar C'hastell).



BANNIEL BREIZ

E Plouescat ez eus Bretoned vat ha Bretoned klouar.

D'ar 15 a viz gouere diweza, ar conseilherien a en em vodas hag an A. Georges Jaouen, a c'houlennas ma prenje an ti-kêr eur banniel breizat. An A. Caroff a enebas, ar pezh ma c'hellas: « eur vez e vefe, emezan, prena eun hevelep tra! »

Daoust d'e gomzou flemmus ha touellus 9 conseilher a votas evit banniel Breiz hag 8 en e eneb.

An A. Caroff, — eur breizad, ma 'z ear d'ezan diouz e hano, — ma vije bet anaoudekoc'h eus ar pezh a dremenas e Breiz hag eus ar pezh a dremen e Frans, n'en divije ket komzet evel m'en deus graet...

Banniel Breiz a dle beza gwelet o ficha eus an eil penn d'egile d'hor Bro ha den speredok ebet, zoken etouez ar C'hallaoued, ne dle kaout abeg e kement-se.

E Roazon, da zeiziou a zo, ne vez gwelet, ouz an holl diez nemet bannielou breizat o ficha ha Roazon eo kêr vrasa an deskadurez e Breiz.

An A. Doumergue, warlene, pa yeas da Lille, a welas eno, ouz an tiez kemend a vanniellou flandrezat hag a vanniellou triliou ha ne gavas abeg ebet e tud Lille.

Deskomp eta hon istor Breiz ha neuze e lec'h kaout mez eus hor Bro e vezo lorc'h ennomp ganti ha ra vezo gwelet bannielou Breiz o ficha ouz kement ti a zo e Lesneven hag e Follgoad d'ar Bleun-Brug a zeu.

Y. V. PERROT.

1428 — YANN V E FOLLGOAT — 1928

Daoust peger kaer e vo ar baleadennoù, ar studia-
dennoù, ar prezegennoù hag ar c'hoariadennoù a vo
graet, epad tri dervez bras ar *Bleun-Brug* d'ar 4, 5 ha
6 a viz Gwengolo, evit eleiz kaera tra a gavint edoug
an tri dervez-se e vo gwelet, d'ar yaou 6 a viz Gweng-
golo, hon duk mat Yann V hag e bried Janned Frans, o
vont, war varc'h, eus a Lesneven da bardona da Foll-
goad, evél ma rejont; breman ez eus 500 vloaz, evit tru-
garekaat Doue hag ar Werc'hez da veza digaset ar peoc'h
e Breiz.

Eun daolenn lufus meurbed e vo gwelet Yann V,
prins ar peoc'h, holl dudchentil Leon, war e lerc'h, o
vont dre hon hentchou, betek an iliz kaer-ze, savet war
bez Salaün ar Foll, hag a zo, e gwirionez e iliz, rak den
ne labouras kement hag hen d'he sevel, d'he c'haeraat
ha d'he finvidikaat.

Setu aman tudchentil vrasa Bro Leon breman ez eus
500 vloaz hag a vo gwelet o vont, gand o gwragez, da heul
hon Duk mat Yann V, eus a Lesneven da Follgoad.

I. — *Ar re o doa urz da zougen banniel er brezel.*

Aotrou ar Penhoat, e Sant Tegonnec, o oa e c'her: *Red eo.*
Aotrou ar C'hastell, e Landunvez, a oa e c'her: *Ma car*
Doue.

Aotrou Kervaon, e Kernilis, a oa e c'her: *Doue arak.*
Aotrou Kergournadec'h, e Cleder, a oa e c'her: *En Dieu*
soit.

Aotrou Kerouzere, e Sibiril, a oa e c'her: *List, list.*
Aotrou Coatmeur, e Gwikourvest, a oa e c'her: *Aultre*
n'auroy.

Aotrou ar Breignou, e Plouvian.
Aotrou Koativy, e Plouvian, a oa e c'her: *Bepred.*
Aotrou Keruzas, e Lok-Maria-Plouzane.
Aotrou Penmarc'h, e Sant Fregant, a oa e c'her: *Prest ve.*
Aotrou Kerwern, e Gwipavas.

II. — *An noblans vrasa goudeze*

- Aotrou Keringar, e Lannilis.
- Aotrou Kergroadez, e Breles.
- Aotrou Meslean, e Gouesnou.
- Aotrou Penfeunteuniou, e Sibiril.
- Aotrou Morizur, e Plouider.
- Aotrou Kerzazon, e Gwiklan.
- Aotrou Keryann, e Sant Nouga.
- Aotrou Kerliviry, e Cleder, a oa e c'her: *Youl Doue.*
- Aotrou Kerven, e Plouzeniel.
- Aotrou Krec'hkerault, e Plouvorn, a oa e c'her: *Tu dis-*
pone.
- Aotrou Lezireur, e Henvic, a oa e c'her: *Dieu me tue.*
- Aotrou Mezarnou, e Gwiniventer, a oa e c'her: *S'il plait à*
Dieu.
- Aotrou Trouzilit, e Plouguin, breman e Treglonou, a oa
e c'her; *Aultre n'auray.*
- Aotrou Keraudy, e Gwiniventer.
- Aotrou Lezkiffiou, e Pleyber-Krist, e oa e c'her: *Kemer ar*
c'hoat ha lez ar c'hiffiou.
- Aotrou Penc'hoadig, e Gwiklan.
- Aotrou ar C'harpont, e Lambaol-Witalmeze.
- Aotrou Coatjunval, e Plouzeniel.
- Aotrou Trevigne, e Plouneour-Trez.
- Aotrou Ranorgat, e Plouguerne.
- Aotrou Coatelez, en Drennec.
- Aotrou an Henc, e Landerne.
- Aotrou Kerleac'h, e Gwitalmeze.
- Aotrou Kerozal, e Plouguin.
- Aotrou Kergoff, e Kernoues.
- Aotrou Meznoaled, e Gwilers.
- Aotrou ar Penhoat, e Sant Fregant.
- Aotrou ar Roual, e Lannilis.
- Aotrou Kerlozroc, e Gwitalmeze.
- Aotrou ar C'hoz-Kastel, e Taule.
- Aotrou Kerangouez, e Kastell-Paol, a oa e c'her: *Mut out*
te ?
- Aotrou Ramblouc'h, e Plougoum.
- Aotrou Keronyant, e Plouvorn.
- Aotrou Kergadiou, e Plourin.
- Aotrou Keroulas, e Breles.

- Aotrou Kerlean, e Breles.
 Aotrou Keriber, e Gwisseny.
 Aotrou al Lescoat, e Lanarvily, a oa e c'her: magit mad.
 Aotrou Kerazret, e Plougoulm, a oa e c'her: *Pa c'helli*.
 Aotrou Koatmerret, e Lanhouarne, a oa e c'her: *Soit, soit*.
 Aotrou Brezal, e Gwiniventer, a oa e c'her: *Spes mea Deus*.
 Aotrou ar C'hurru, e Milizac.
 Aotrou Guilimadec, e Plouzeniel, a oa e c'her: *En diavéz*.
 Aotrou ar Poulpry, e Plouzeniel.
 Aotrou Kervenguy, e Cleder, a oa e c'her: *Tout pour le mieux*.
 Aotrou Keryenou, e Porspoder.
 Aotrou Koataudon, e Gwipavas, a oa e c'her: *Tout à souhait*.
 Aotrou Koetlosket, e Plouneour-Menez, a oa e c'her: *Franc et loyal*.
 Aotrou Kervellec, e Gwiklan.
 Aotrou Kervorvan, e Trebabu, a oa e c'her: *Servir Dieu est régner*.
 Aotrou Koatmenec'h, e Plouider, a oa e c'her: *Soit*.
 Aotrou Herlan, e Sant Thegonnec.

G. P.

AR BLEUN-BRUG A ZEU

Ar goueliou, er bloaz-man, a zigoro dre eun dro-vale a raimp d'ar meurz 4 a viz gwengolo, betek Landevenneg, evit pedi Sant Gwenmole, unan eus Tadou Breiz ha betek Kraozon, evit gwelet ar c'hevioù kaer en deus graet ar mor e Morgat hag ar veinhir a zavas, e Lagad Yar, an dud kenta a vevas, er gourenez.

Dizrei a vo graet da Vrest, dre Gameled.

An dro e Landevenneg hag e Kraozon, — holl vizou al lestr, an auto hag al lein paet, — a gousto 40 lur.

N'eo ket kalz a dra pa zonjer pegement a draou kaer a vo da welet.

Ar re o deus c'hoant da virout o flas, a zo pedet da gas o hanoioù hag o arc'hant, da M. Pierre Abjean, Trésorier du Bleun-Brug leonais, Plouguerneau.

Ar goueliou-ze, en enor d'ar brezoneg ha d'ar ouenn ne c'hellint ket beza gret heb ar c'hant bras; seul-vui e vezimp harpet ha seul-vui e vezint kaer, setu perak e pedomp kement hini a wel ar vad a reont d'ar vro da zigas o aluzen da denzorier Bleun-Brug Leon: M. Pierre Abjean Plouguerneau, c/c 121-83, Rennes.

Bleun Brug Lesneven

Klevit ta, Bugale

Ouspenn ar c'henstrivadegou etre tud yaouank ha tud vras bet embannet war *Feiz ha Breiz* miziu kenta ar bloaz, ar *Bleun-Brug* a zavo adarre er bloaz-man, eur genstrivadeg all etre holl vugale Breiz, paotred ha merc'hed, ha n'o deus ket c'hoaz a bemzek vloaz graet.

Ar vugale o do c'hoant da c'houmit prizioù kaer ar genstrivadeg-se a ranko:

- *da genta*, lenn eur pennad eus buhez ar Zent.
- *d'an eil*, kana eur c'hantik brezonek,
- *d'an trede*, kana eur ganaouenn vrezonek.

Respont a rankint ivez d'ar goulennoù a vezo grêt outo:

- a) war istor ar Folgoat,
- b) Buhez sant Herve,
- c) Buhez sant Goulc'hen.

Setu aman hanoioù barnerien ar genstrivadeg-se:
 An Aotronez I. F. M. Sparfel, Plouescat.

Y. M. Balcon, Plouescat.

J. Lagadec, I. V. wir Zikour, Brest.

J. L. Dantec, Skolach Lesneven.

Ar genstrivadeg-man a vezo graet e skolach Lesneven d'ar 6 a viz gwengolo a zeu eus a 8 eur da 10 eur.

DIVINADENNOU



I. Responchou Miz Ebrel

1. — Mantell ar siminal.
2. — Azeza. — 3. — Unan dall. — 4. — Eur verc'h.
5. — Fanchig koz : 83 bloaz; Franseza : 16 vloaz,
4 miz, 24 dervez; Jakez: 31 bloaz, 9 miz, 18 dervez.

II. Responchou Miz Mae

1. — Eus eur c'hravaz diskoar ha klok
N'eus fors pe benn lakat a-rôk.
2. — Eul linsar-wele.
3. — 57. 17. 25.
1. 33. 65.
41. 49. 9.
4. — Eur billig. — 5. — Eun den.

III. Responchou Mezeven

1. — War marc'h e sav bleo
War ar patatez e sav treo.
2. — Naontek, pevar, ugent hag unan a ra : 44.
3. — An nadoz hag ar vountounenn.

O deus bet evit divinadennoù Ebrel, Mae,
Mezeven

300 poent

Paol Ségalen, Gouesnou.
Skol Gristen, Plouzeniel.

280 poent

Visant Prigent, Skolac'h Kastell-Paol.
Yan Perrot, Rosko.
Mari Cabon, Gwiseny.
Pôtrez Sant Magloar, Mahalon.
Louis Diquelou, Plomeur.
Yann Cadiou, Skolac'h Kastell-Paol.
260 poent

F. M. Lanhouarne.
Pôtrez ar Penn, an Tréhou.
F. L. Bihan, Cléder.
Angela Nédélec, Cléder.
Soudard Breiz, Coetquidan.
Mari Bozec, Plouzeniel.
Louis Floc'h, Plomeur.
Fanch ar Furcher, Orpheinat d'Elancourt, par Trappes,
Seine-et-Oise.
A. ar B., Sant-Nic.
240 poent

Mari Laurent, Gwipavaz.
J. M. Salaün, Tréhou.
220 poent

J. F. Diverrès, Tréhou.
Rene Jacolot, Gwipavaz.
Unan, Plouzane.
200 poent

Per Dantec, Plouzeniel.
Danvadig Breiz, Gwimilio.
Tanguy Creignou, Cléder.
Frausina Pouliquen, Sant Thégonnec.
Mari Baour, Gwikar.
Yann Binvidik, Gwikar.

Divinadennoù miz Eost

- I. — Lazit hi heb enkreuz
Hag ec'h astennoc'h he buhez.
Digaset gant F.-L. ar Bihan, Cléder.
- II. — Daou vreur o deus hevelep oad
Ha n'o deus ket na penn na troad.
Digaset gant Alina Abéguillé, Sant-Nouga.

III. — Biel a lavare d'e vevelig Jermen :
 « Da Zouarnenez kerz dioustu hag hep termen,
 Da brena gant tri skoed ha tregont hag eul lur
 Kant anevallig lart digant Lan an Distur :
 Gedon, klujiri ha morzevelleged mat.
 Eul lur eo pep glujar, ugent real eo pep gad,
 Ha pevar gwenneg
 Pevar morzevelleg ».
 Ped loen a bep seurt a ranko prena 'r mevel
 Evit digas kant loen, vit kant lur da Viel ?

Digaset gant Potred Sant-Magloar, Mahalon.

IV. — Pe seurt kemm a zo etre mor Landerne hag al loar ?

Digaset gant unan eus Traonlenn.

V. — Peder maouez o vont d'an ofern a rank treuzi eur ganol gant eur vag ha ne c'hell dougen nemet 120 lur. — Ar vaouez kenta a bouez 116 lur, an eil 50 lur, an drede 98 lur hag ar bedervet 68 lur. — Penaoz ec'h en em gemerint evit treuzi ar ganol ?

Digaset gant Louis Grall, Plougerne.

EN EUL LINENN

Ma vije lavaret d'ec'h lakât, en eul linenn, ar pez a reas Jezuz, en eun eured, e Kana, er Galile, pa reas e vurzud kenta, o trei ar gwin e dour, e vefec'h laket ne c'hell ha koulskoude, eur skrivagner, eus ar XVII^{vet} kant-
 vd, eus a Vro Gemre, Robert-Crasgaw, a gavas an tu d'en ober brao bras, en eur zével al linenn-man :

Nympha pudica Deum vidit et erubuit.

An dour mezek a welas Doue hag a ruzias.

Kevrenn ar Vugale

Kenstrivadeg Sent ar Vro

Va mignoned vihan,

Mall oc'h eus, sur a-walc'h, da glevet eur c'helou ben-
 nak eus ho labour diwar benn Sent Breiz.

Setu aman atao, da vihana, anioù ar c'hounideten. —
 An uhela poentchou oa 90.

1. Cécile Loaec, Plouzeniel.....	75½
2. Victorine Prémel-Cabic, Plouider.....	75
3. Marie-Thérèse Salou, Plouzeniel.....	74½
4. Alexandrine Ladam, Trégarantec.....	74
5. Ambrosine Gac, Plouider.....	73½
6. François Guillou, Camlez (Tréguer).....	73
7. Félix Postec, Plouider.....	72½
8. Louise Jaouen, Plouzeniel.....	72
9. Marie-Joséphé Martin, Plouzeniel.....	71½
10. Françoise Salaün, Plouider.....	71
11. Antoinette Morizur, Plouzeniel.....	70
12. Brigitte Simon, Plouzeniel.....	69
13. Jean Dourmap, Plouider.....	68½
14. Albert Gat, Plouider.....	64½
15. Yvonne Briant, Plouzané.....	60
16. Thérèse Person, Plouider.....	57
17. Thérèse Le Verge, Plouider.....	56½
18. Thérèse Morizur, Plouider.....	56
19. Alexine Person, Plouider.....	55½
20. Augustine Féroc, Sant-Neven.....	55
21. Anna Quéré, Sant-Neven.....	54
22. Corentine Kerbaul, Sant-Neven.....	53½
23. Marie-Yvonne Beyer, Plouider.....	53
24. Aimé Le Got, Folgoat.....	52½
25. Francine Corre, Sant-Neven.....	52
26. Louis Le Rest, Folgoat.....	51
27. Pierre Colin, Folgoat.....	51
28. Anne-Marie Floch, Lannurvan.....	50
30. Marie Jézégou, Sant-Neven.....	50

Meneg a reomp ive eus labouriou ar vugale a zo o anoiou aman warlerc'h. Tostaat a reont ive eus ar prizioù. Arabat d'ezo koll fizians : er bloaz a' zeu e c'hellint beza krog ive : Suzanne Couloigner, Françoise Colliou, Marie Corre (Sant-Neven), Marie Le Gall (Plouider), Marie-Anne Kermarrec (Lannurvan), Marie Corfa, Catherine Fily (Sant-Neven), ha Louise Dolou (Lannurvan).

Er miz a zeu e vezo roet ar respontchou ha lavaret eur ger bennak diwar benn al labouriou

FINESAOU

— An tad koz: Lavar d'in, Yvonig, pegement a ra dek kwennig bemdez epad eur zizun.

— Yvonig: Pevarzek real, tad koz.

— An tad koz: Deuet eo ganez. Mat pe gwir ez' out bef fur hag eman ar groaz ganez, del, setu aze ar 14 real.

— Yvonig: Feiz m'am bije gouezet, em oa lavaret 20 real.

**

— Eur paotrig en em gav, eur veurevez, er skol, goloet a aman. War e fri, war e dal, war e zivoc'h, e ziouskouarn, n'eus nemed aman.

— Petra, eme d'ezan ar mestr skol, en doare-ze eo e teuer d'ar skol?

— Va mamm eo he deus va lardet evelse evit dont d'ar skol.

— Che, ha perak da vihana?

— O veza ma lavar an holl, ne vez drebet nemet bara zec'h du-man.

MELEGAN.

Centenaire d'Arthur de LA BORDERIE

Les fêtes du Centenaire de la naissance d'Arthur de La Borderie, sont définitivement fixées aux 22 et 23 septembre de cette année.

Elles comprendront :

LE 22 SEPTEMBRE. — Matin : Messe à la mémoire de La Borderie et des grands vitréens : Bertrand d'Argentré, Pierre Landais, etc. Panégyrique par le R. P. JANVIER, ancien prédicateur de N. D. de Paris. — La cérémonie religieuse sera présidée par S. E. le Cardinal CHAROST, archevêque de Rennes.

À l'issue de la messe, devant la maison où naquit et mourut l'illustre historien de la Bretagne, pose d'une plaque commémorative sur le portail de la rue Notre Dame.

Le midi, banquet par souscription.

sacrée à l'histoire de Bretagne.

Après-midi : Au théâtre, séance académique con-

Le soir : Séance de gala au Théâtre avec conférence sur l'œuvre de La Borderie, par M^r LOTH, membre de l'Institut, professeur au Collège de France.

Le 23 SEPTEMBRE. — Des fêtes d'un caractère plus populaire seront organisées. Elles comprendront cependant une partie éminemment bretonne :

Pèlerinage aux maisons des grands vitréens : La Borderie — Bertrand d'Argentré — Pierre Landais, etc. Les représentants des Associations bretonnes, seront appelés à y prendre part et à parler devant les maisons de ces grands bretons.

Séance consacrée à l'influence de La Borderie sur les études préhistoriques et sur l'enseignement de l'histoire de Bretagne (Les Associations sont invitées à préparer dès maintenant leurs rapports)

Le midi : banquet par souscription, des représentants de toutes les associations bretonnes ou de bretons émigrés.

L'après-midi : chœurs, danses et luttes bretonnes.

Pendant toute la durée des fêtes, du 21 Septembre au 24 Septembre, exposition d'art breton sous les halles (se faire inscrire chez le Président, avant le 10 Septembre)



Feiz ha Breiz

1428 — YANN V E FOLLGOAD — 1928


Yann V, ar gwella eus hon Duked, a deuas er bed d'ar 24 a viz kerzu 1389; d'an 2 a viz kerzu 1396, e timezas gant Janned Frans, merc'h Charlez VI; d'an 23 a viz meurzh 1402, goude beza touet difenn, beteg ar gwad, gwiniou roueel Breiz, da lavaret eo he frankiz, e voe laket kurunenn aour hor bro war e benn, dirak holl bennou brasa Breiz-Uhel ha Breiz-Izel.

Biskoaz Breiz, abaoé ma 'z eus anezi, n'eo bet ker pinvidik ha kel laouen, evel m'eo bet en e amzer: mirout a eure hor Bro « *in pulchritudine pacis et requie temporalium opulenta* », meuleudi, seul gaeroc'h ma teu eus genou eur gall, al lean a zavas buhez Charlez VI.

En e amzer eo e savas hon tadou iliz ar Follgoad hag hen eo an hini en deus graet ar muia evit he sevel hag he c'haeraat.

Eun dudi oa evitan dont da Follgoad. Epad ar bloaveziou 1425, 1426 ha 1427 e voe e brezel ouz Bro-Zaoz; d'an 28 a viz Genver 1428 e voe sinet ar peoc'h etre an diou vro. Eun nebeud miziu goude edo Yann V, o pardona e Follgoad hag o trugarekaat ar Werc'hez da veza roet ar peoc'h d'e vro.

Evel prins ar peoc'h eo e tigemerimp eta Yann V, e Follgoad, d'ar 6 a viz gwengolo a zeu e kreiz eur mor a gan hag a levenez.



LESNEVEN

Reolenn XVIII^{vet} Gouel ar Bleun-Brug

Renet gant an A. DUPARC, eskob Kemper ha Leon,
d'ar 4, 5 ha 6 a viz Gwengolo

D'ar meurzh, 4 a viz Gwengolo.

Ar *Bleun-Brug* a 'z aio da 8 eur, dre lestr, eus a Vrest da Landevenneg, da bedi war bez Sant Gwennole; ac'hano, dre girri-dre-dan, ez aio da Vorgad el lec'h ma vezo leinet. Strollad kanerien Rekourans, — 40 anezo, — a gano eno, epad eun eur, kanaouennoù kaera Breiz-Izel.

Dizrei a vo graet da Vrest abenn 6 eur nemet kart.

Da 8 eur hanter, e Lesneven, beilhadeg vreizek e sal yras ar Patronach.



Ar pezh a jom eus iliz manati Landevenneg

D'ar merc'her, 5 a viz Gwengolo.

Da 9 eur. — E Sal ar Patronach.

I. — Eur zell war ar bloaz tremenet, gant an *D^r Cornic*, Rener meur ar *Bleun-Brug*.

II. — Lezennoù ar *Varzoniez*, studiadennou savet gant an *Tad L'Helgouac'h* hag an *Tad Kerrien* ha lennet gant an A. Batany, kelenner e skolach Lesneven.


III. — Ar brezoneg en tiegeziou, studiadenn graet gant an dimezell M. a Gervenguy.

Da 2 eur. — I. — Kanaouennoù, yez hag istor Breiz, er skoliou.

II. — Emgleo Sant Ildut, gant an *D^r L. Dujardin*, he Rener.



AN D^r CORNIC
RENER MEUR AR BLEUN-BRUG



Ar pezh a jom eus a iliz Landevennec

Da 8 eur 1/2. — I. — *Eun nozveziad gwenn,* pezh-c'hoari, en eun arvest.

II. — *Toniou ha soniou kaera Kembre,* gand an Itron Dyfnallt Owen, hag he merc'h, an dimezell Meirion.

III. — *E tal ar poull,* farserez, en eun arvest.

D'ar yaou, 6 a viz Gwengolo.

Da eiz eur. — Kenstrivadegoù ar vugale: a vo graet, nann er skolach, a vo miret, en deiz-se, evid an Duk Yann V ha tud e lez, met e skol ar Gallon-Zakr. Ar c'henstrivadegoù all a vo er Patronach.

Da 10 eur. — E loc'ho an Duk ha tud e lez da vont da Follgoad.

Kerkent ha digouezet e Follgoad, oferenn bred kanet gant Aotrou chalon Talabardon, persoun Plougerne.

An Aotrou 'n Eskob a brezego en oferenn.

Da 2 eur. c'hoariadeg vras e porz ar retred:

I. — *War varc'h d'ar mor*, pez kaer, en eun arvest.

II. — *En o eil bugaleach*, pez farsus, en eun arvest.

III. — *Salud Kembre da Vreiz*, gand an A. Dyfnallt Owen, eus a Gaervarzin.

IV. — *Toniou ha Soniou kaera Bro Gembre*, gand an Itron hag an Dimezell Dyfnallt Owen.

V. — *Kanaouennoù kaera Breiz-Izel*, gand ar ganerien hag ar strolladou kanerien bet loreet e kenstrivadeg an dervez-se.

VI. — *Yann, paotr ar gêr*, diviz plijadurus, gand Fanch Stephan, eus Kastell-Paol.

VII. — *Salud da Vreiz*, koroll gand merc'hed bihan Plouzeniel.

VIII. — *Raktal goude ar c'hoariadeg*, bennoz ar zakramant, en iliz parrez, da beurgloza XVIII^{vet} gouel ar *Bleun-Brug*.

J. CORNIC,

Renner meur ar Bleun-Brug.

Tro Gourenez Kraozon

Ar re o deus c'hoant da vont gand ar Bleun-Brug da ober tro gourenez Kraozon d'ar 4 a viz Gwengolo a zeu, a rank kas kemennadurez hag arc'hant, — 40 lur, — abenn ar zùl 2 a viz gwen-golo, pe d'an A. Georgelin, 4, rue du Château, Brest, C/C 44-40, Rennes, pe d'an A. P. Abjean, trésorier du Bleun-Brug Léonais, Plouguerneau, C/C 121-83, Rennes.

Ar vag « Rapide » a vezo kemeret. Mont a ray kuit diouz « premier bassin » porz a gonverz Brest, da EIZ EUR dres. Teurel evez bras war an eur !

Eun Norveziad reo gwenn

SKLERIJENN. — *Eur gegin, en eun tiegez bihan diwar ar maez. Dirak ar zelaouerien eman an oaled ; en tu kleiz ez eus eun nor a sko war an dereziou da vont d'an nec'h ; en tu dekou ez eus eun nor a sko war an dereziou da vont d'an nec'h ; en tu kleiz ez eus eun nor all a sko war ar c'hraouzaout. En tu kleiz d'an oaled ez eus eur sofa koz, louet, hag a zo troet e gein ouz dor an dereziou hag en tu all ez eus eur gador pourret hag a zo troet he c'hein da zor ar c'hraou. Etre an diou aze-zenn-ze ez eus eun daol met arabad e stankfe an oaled a ranker da welet. Arrebeuri an ti a zo arrebeuri gempenn hep netra binvidik enno. Eun almanag a weler a-ispilh a-zioc'h ar chiminal. Pa zav ar gouel e weler Elin Huws, en he boned gand eur chal war he dioukoaz, azezet war he c'hador. Sellet a ra ouz an tan, en eur brederia. Elin he deus 70 vloaz. N'he deus ket a yec'hed eur pennad a zo. Komz a ra gand eur vouez glac'harus evel m'he divije bet kals da c'houzanv. He merc'h Jann a zo o ferra, war an daol. Gwech ha gwech ez a d'an oaled da lakat glaou en he ferr. Jann a c'hell kaout eun 40 vloaz bennak. Eun tamm eo kalet e kenver he mamm. Ar pezh he deus gwelet er bloaveziou tremenet en deus he c'haletaet ouz ar boan.*

I

JANN, ELIN

JANN. — *Troët eur vrochenn bennak en tan, 'ta, mamm, ha n'it ket da jom evelse da vantri edoug an holl amzer war ar pezh a zo tremenet.*

ELIN *o renka an tan.* — An hunvre am eus bet dec'h da noz en deus laket va gwad da virvi.

JANN, *têr.* — Sebezus eo ez afec'h da derri ho penn gant hunvreoù evelse; kals re en holl a fizians a lakit er c'hoz traou-ze.

ELIN, *oc'h huanadi.* — En han Doue, Jann, n'es ket da gomz ker rok-se ouzin; gwelet a res n'emaoun ket, war va zu, eur pennad a zo; n'em eus tamm yec'hed ebet ken.

JANN. — N'emaon ket o klask ober poan d'eoc'h, mamm, met e gwirionez, lezel a rit atao an hevelep traou da stourm ouz ho spered. Red eo d'eoc'h pelloc'h ehana da bleustri warno.

ELIN. — Aes eo d'it komz, evel ma res, va merc'h; te a zo bet yac'h a-hed da vuhez; n'out ket bet klanv miz ebet c'hoaz, e kement ha ma oufen, hag evel ma leverer a zo gwir:

Den n'anavez eur c'hlenved
Amez beza e danvet.

Ha diaes eo da dud, evel d'az tad ha d'it te, en em glevet gant tud hag a vez epad an daou benn eus an amzer o treuzeurel [treuzeuler] etre ar gwele hag an tan evel ma vezan-me. Sell, da dad...

JANN. — Pebez spered debret a rit c'houi! mamm. Gwelet a-walc'h a ran ho peus c'hoant da lavaret e tennan d'am zad ha n'oun ket gouest da gemeret perz e-glac'har eun all.

ELIN. — Anat eo, evelato, e tennes muioc'h d'az tad eget d'az vamm: an hevelep spered ho peus. Gouzout a res ervat n'em eus biskoaz lavaret ger dizoare ebet d'it diwarbenn da dad. Eun den eun eo hag hegarat, da vihanan, war e veno, met an dra-ze ne vir ket e c'heller anzañ eo eus meur a dra c'haro ennan.

JANN. — O! ya! Me ivez a zo hegarat ha koulskoude, em natur, ez eus meur a dra hag a zo garo ivez. Selaout, mamm, tremenet em eus bloaveziou gwella va buhez o labourat, a-laz-korf, er c'hoz tamm tiegez bihan-man hag entetet em eus ouzoc'h eus va gwella pa ne c'hellec'h gounit-nemed ar pep tosta da netra, ac'hanoc'h hoc'h unan.

ELIN. — Ya! Jannig, dereat kenan out bet em c'henver, ha ne dlefen ket en em glemm eus eur verc'h evel d'out, met, a-wechou, koulskoude, e wellan e vezes rok ouzin. Marteze ez eus lec'h da gaout abeg ennoun rak dre ma kosaañ e kouezan, a-nebeudou, em bugaleach.

JANN. — Nann! nann! n'em eus ket lavaret an dra-ze d'eoc'h ha ne garfen ket hien ober. Met setu aman ar wirionez; me n'oun ket evit beza war eun dro mel ha sukr ha ne gredan ket zoken e talvezfe ar boan da eun den beza evelse!

ELIN. — Da dad a lavar kemend all diwar e benn e-unani.

JANN. — Petra neoc'h ken? Red eo kemeret an traou evel ma teuont hag an dud evel m'emaint. Met petra eo an hunvre-ze en deus ho strafuilhet kement-se adarre 'ta?

ELIN. — Aratoz kaer, Jannig, e klaskes ober poan d'in adarre, rak ne res ket eur van evit klevet hano eus a hunvreoù.

JANN. — Nann! nann! disklerit d'in hoc'h hunvre rak eur frealz e vo evidoun her c'hlevet.

ELIN. — Hunvreet em eus, en noz tremen, e oa dizroet da vreur Dik d'ar gêr hag en doa doare da veza doaniet ha skuizet skrijus. Her gwelet a raen ker splann ha ma 'z kwelan aze dirazoun

breman ha stumm eun den toc'hor bras en doa; ya, stumm eun den maro a oa warnan; an huan-
 vre-ze en deus va strafuilhet, mantrus!
 (*Chom a reont sioul o diou*).

ELIN. — Ne leveres ger, Jann!

JANN. — N'em eus netra da lavaret, rak anaout a rit pell a zo ar varn am eus douget war Dik.

ELIN. — Gouzout a ran; barn a res evel da dad; setu pemp bloaz aet ebiou d'eomp abaoe ma savas da dad war yaen an aoled-man ha ne ankounac'hain morse e c'heriou: roet en deus urz d'in da jam hep morse lavaret hano Dik, pa vije war al lec'h, ha biskoaz n'em eus dizentet outan e kerver an dra-ze, met va c'halon a zo ranmet; karout a rafen komz gant da dad eus ar mab a zo tec'het, met ne gredan ket hen ober...

JANN. — Gwell eo d'eo'c'h tevel; gouzout a rit er vat pebez den striz eo va zad p'en deve roet eun urz bennak.

ELIN. — Pebez nozvez e voe an nozvez-se ma taolas e droad, war eur gador, evit lakat an almanag war vantell ar chiminal-man da guzat portred Dik vihan evit ma ne c'hellje den her gwelet ken, met da dad ne oar ket pet gwech e savan an almanag-ze, gand ar vrochen da zellet ouz va mab. Eviden-me eo atao Dik vihan pennefen, daoust d'an holl drougou a c'hell beza graet.

JANN (*ginet ha du he fenn*). — Dik vihan, va Doue! koz a-walc'h eo hennez p'en deus ho laket da zizec'ha war ho treid, er pemp bloaz diwezaman ha p'en deus laket va zad da veza dek vloaz kosoc'h da velet eget ne d'eo, e gwirionez ha n'oun ket souezet n'en defe c'hoant ebet va zad da glevet hano eus e vab en ti-man. Dik vihan! ha setu aze avat eun hano da rei d'an hini en deus pellaet pep laouenedigez eus an ti-man evid atao!

ELIN. — Daoust hag eur vamm a c'hell ankounac'haat ar mab a zunas he laez?

(*sec'ha a ra he lagad gant fraon he zavancher*)

Daoust d'ar pez a leveroc'h te ha da dad, Dik eo va mab-unik, ar mab n'eus mab all ebet nemetan hag an dra-ze e vo atao. O va Doue! Ne ouezan ket e pelec'h eman epad an nozvez reo gwenn-man. Dik, perak out aet d'am lezel epad pemp bloaz hep gellout teurel va daoulagad warnout hag hep gellout klevet eur ger eus ar pez a zo digouezet ganez abaoe m'out tec'het diwar va zro?

JANN. — Ma rit diouzin n'en em jaloc'h ket ken gand ar paotr-ze rak ne dalv nag eun daer nag eun huanadenn! (*An tad a deu en ti gand eur bal hag eur boutegad patatez; o lakat a ra en eur c'hogn, a-dre kein ar sofa, hag e teu da gichen an tan, d'en em domma. Emae wardro 70 vloaz, eun den eo ha p'en devez laket eun dra bennak en e benn a zo diaes bras hel lakat d'hen ankounac'haat. Kalet eo ouz e boan*).

II

TAD (*oc'h en em domma*). — Laonenn an avel a drouc'h, er pardaez-man, evel laonenn eun aotenn; yen bras e oa er c'harz, aze, bremaik.

ELIN. — Ar re n'o deus na ti nag oz, na gwele da gousket en noz, a zo kalet d'ezo chom, er mêz, da loja pa vez yen an amzer evel ma 'z eo fenoz.

TAD (*a gendalc'h d'en em domma*). — An truilhou-ze a dap ar pez o devez gounezet; peurliesao devez chachet ar c'har war o c'hein! Jann! n'eo ket echu da ampezadenn ganez c'hoaz; gwall lakat an noz da astenn an deiz a rankes 'm eus aoun; n'eus nemed eun eur pe ziou hepken etrezomp hag ar zul.

JANN. — Ne jom ket kalz a dra da ober ken.

TAD (*diwar e azez e tenn e vodreou hag e voutou*). — D'ar zadorn da noz eo ober holl labouriou an ti evit beza prest a-benn ar zul.

JANN. — Ha n'eo ket aman eo e tile ar beleg a deuiio d'ar chapel koania warc'hoaz ha kemeret an the?

TAD. — Eo.

ELIN. — Piou eo ar beleg a dle dont warc'hoaz, Gwilhou?

TAD. — Ezra Davis, Llanllios.

JANN (*O tapa ar pezh a oa ganti war an daol*). — An Aotrou-ze, n'em eus ket a aoun o lavaret, — ha goude ma vefe tud diavêz ouz va selaou, — n'her c'haran ket nemeur.

TAD. — Jann, ne gavan ket aes da glevet oc'h ober fae war dud vat evelse!

JANN. — Pe vat pe fall ez eo, evid eur si fall en deus kemeret hag ho laka da vont en egar outan, pa vez en eun tu bennak.

TAD. — Pchini 'ta?

JANN. — Re figus eo, war va meno, war e voued. Perak n'eo ket mat d'ezan debri evel an dud all, e lec'h bezan o skrabat e blad evel eul labous yar pa glask e damm.

TAD. — Arabad eo d'it mont da gaout abeg, en eun den, evelato, evit diesterachou evelse! (*Sevel a ra da lakat e vodreou hag e voutou e kichen ar boutegad patatez hag ez a d'an armel da glask ar Bibl ha goude beza tostaet an daol ouz an tan e kemer eur gador hag e tigor e levr*).

Koulz eo d'eomp lenn, breman, eur pennad eus an Aviel a-raok mont da c'hourvez. C'houi a lenno, feno, Elin?

ELIN. — Nann! n'emaon ket kalz e chal d'hen ober.

TAD. — Diaesoc'h emao'h hizio?

ELIN. — Nann! koulz ha kent ec'h en em gavan, met n'oun ket evit tenna va spered diwar an dud reuzeudik a zo, er maez, er pardaez-man!

TAD. — Daoust hag eur pennad bennak a zo hag a garfec'h klevet kentoc'h eget re all?

ELIN. — Ya! lennit d'in ar barabolenn ziweza a zo e pemzekvet pennad Aviel Sant Lukas.

TAD. — Mat, Jann, prennet ez peus an nor?


JANN. — Nann! (*Mont a ra warzu an nor*).

ELIN. — N'es kêt d'her prenna, breman, va merc'h.

TAD. — Perak? (*Elin ne lavar grik*). Prenn, evel en deizioù all. (*Jann a brenn an nor hag a azez war ar sofa dirak he mamm. An tad a denn e lusedou eus ar voest o glanna hag o laka war e zaoulagad. C'houilia a ra da glask ar pennad hag e teraou d'e lenn*). — *Eun den en doa daou vab hag ar yaouanka anezo a lavaras d'ezan: « Va Zad, roit d'in ar rann en ho peadra a dle digouezout ganen! » Hag e rannas etrezo e zavez. (Tenna a ra e lusedou diwar e zaoulagad, evel m'en divije ezomm d'o glannaat eun eil gwech). Hag eun nebeud deizioù goudeze, eur wech dastumet gantan kement tra a deue d'ezan, ez aes en eur vro bell hag eno e foranas e zavez, o veva en hudurnez.*

(*Klevet a raer eun taol gwan war an nor*).

(*Da gendelc'her*).



Abati ar Releg

Eul leo, er sav-heol da voure'h Plouneour-Menez, en eun draonienn c'hlas ha fresk e kaver gras en em gaout enni pa ziskenner Menez Are, eman ar pez a jom eus abati ltron Varia ar Releg, eus a urz Citeaux, da lavaret eo tiez koz ha bras ar venec'h a ra an dro, gand o mogeriou louet, d'eun iliz, e weler he zour, toet e veg gant sklent, o sevel eus a douez ar gwez uhel, e kichenik eul lenn koant ha skler.

An abati-ze a zo bet savet, war a lavarer gant kenta eskob Leon, sant Paol Aurelian, wardro ar bloaz 560, war an dachenn m'oa bet trec'het enni; pevar pe bemp bloaz kentoc'h, an dispac'her Konomor, aotrou ar Poher, gant Judual, roue yaouank an Domnone. Konomor a oa eun den youlok ha troet war an danvez; kemeret en doa da breid, wardro ar bloaz 540, intanvez roue an Domnone, Iona, ha klasket en doa en em zizober eus he mab Judual, 'vit gellout kaout e gurunenn. Judual a rankas mont da Baris hag eno, dre zourn sant Samson, e kavas harp ar roue Childebert hag e savas eun arme da ziskar, mar gellje, e enebour. Konomor a voe trec'het gantan e Brank-haleg, el lec'h m'eman dismantrou an abati, ha lazet. An enebourien trec'het a voe lazet. Pemp pe c'houec'h vloaz goude, pa deuas sant Tanguy, ha daouzek manac'h all, eus a Vaz hag eus a Eusa, o devoa bet urz digant sant Paol da vont d'e heul, — da jom da Vrank-Haleg, e kavjont al lanneier tro-war-dro, ker goloet a eskern tud ma rojont d'o zi an hano a « *Abbatia de Reliquiis* », abati ar Relegou. Manac'h-ti ar Relegou, a zo deuet breman da veza ar Releg. Wardro ar bloaz 1820, e tiskouezed c'hoaz etre ar manati ha pennker ar Vengleuz eur pez maen glas, a hanved Maen bez Konomor. Ar maen-ze, abaoe, a zo bet laket da ober eur c'hae ha n'her gweler ket ken.

Kenta abati ar Releg, hanvet ivez, war a leverer; Ger herr, dre ma ne oa ket a urz da gomz ennan nemet an nebenta ma c'helljed, n'eus chomet netra anezan. Diskaret e voe gand an Normaned en IX^{vet} kantved hag e voe adsavet gant menec'h urz Citeaux, deuet er bloaz 1132 eus a abati Begard, war goulenn

Herve II, beskont Leon, a stagas leveou ouz an abati evit ma c'hellje ar venec'h beva ennan aesoc'h aze. Ne ouezer ket kalz a dra diwarbenn buhez ar Manati-ze en daouzekvet, trizekvet, pevarzekvet ha pemzekvet kantved, rak eun tan gwall, a zevas holl baperiou koz ar venec'h wardro ar bloaz 1550. Menec'h sant Beneat o deus savet, gwella m'o deus gellet, roll an abaded abaoe David a veve er bloaz 1184. Sant Erwan, a zifennas eun denchentil ouz unan eus an abaded-se en doa choant da ziframma digantan e beadra. Abaoe ar prosez disleal-se, e lavared, e oa kondaonet an abati, gand an Aotrou Doue, da veza atao e prosez ouz unan bennak. Er bloavez 1774, abati ar Releg he devoa c'hoaz c'houezek prosez digor dirak Parlamant Breiz.


Er bloaz 1376, ar Pab a roas induljansou bras da c'hounit da gement hini a roje an dourn da adsevel abati ar Releg dismantret gand ar brezel hag eur chlenved spegus. Er bloaz 1458, an abad Herri Gercevaux ar Gualès da abad, en e lec'h; henman a varvas, er bloaz 1462, hag eur c'har d'ezan, Gwillou ar Gualès, a gemeras e garg. Henman, daou c'hant vloaz goude, a vo brud anezan atao, er manati; e vez a oa harp ouz hini eun abad all euz a lignez vras aotroned Rohan hag e skoued a weled war volz eur gampr eus maner an abat hanvet ar *gampr alaouret*.

E hanter ar XVI^{vet} kantved, e oa daou o klask mont da abad : unan anezo, Gwillou ar Rouz, ginidik eus a Lanneanou, ha manac'h eus ar Releg, hanvet hag harpet gand e genvreudeur, hag egile, Jakez Torsolis, eun diaveziad, hag en doa liziri, digant ar Roue ha digand ar Pab, da ziskouez e oant evitan.

Per Chouart, persón Plougasnou, a labouré evit Jakez Torsolis. P'en em gavas er Releg, da gemeret perz en abati, en hano Jakez Torsolis, e kavas dor brennet; Chouart a redas ar parrezioù diwardro, gand e varnerien hag e notered, a en em gollas e Koat an noz, a zailhas war brespital Komanna, a greiz eul lein a roe ar persón da vignoned ar Rouz hag a dapas peg en unan enezo, Alan Morice.

Dem goude e voe kannaet gant tud Lesmenez, e Plouneour, a redas war e lerc'h gand o firc'hier hag o bizier. D'an daou-lamm e rankas tec'hel, en o raok, adreuz ar geunioù hag ar c'hoajou, heb ehana tamm, ken na zigouezas e Lesneven.

A daoliou prosez, Chouart a deuas a-benn da gaout baz-abad ha mintr an abati a oa bet kuzet e maner Koat ar Roc'h e Komanna hag a voe digaset d'ezan da Vontroulez gand itron ar maner-ze. Dre laer e tapas Charl Pommeret, kure Ploezal, tamallet da veza kuzet arrebeuri hag a oa d'an abati hag e lakeas e stlepel e prizon ar Roc'h Derrien, epad eiz miz, da nebeuta. E miz c'houevrer pe e miz meurzh 1543, endra ma n'edo ket ar Rouz, er ger, C'houart a c'hellas en em rinkla er manati. Rei a eure raktal eul lein vras d'ar varnerien ha d'an dudchentil o doa e skoazellet ha raktal e lakeas dek alc'houez nevez ha tri ugent war holl doriou ar manati. Daoust da-ze d'an 2 a viz mezeven 1543, ar Rouz a c'hellas, (m'oarvat gand skoazell ar venec'h), en em zila er manati hag a stlapas er miz aotrou ar Veuzit, laket gant Chouart da zerc'hel e blas. Pa deuas persón Plougasnou, en dro, e kavas aotrou ar Veuzit hag e zaou vevel o tisklaoi dindan porched an iliz ha kaer en devoe skei ne gavas digor e nep lec'h.



Goude beza klasket en em denna, e meur a c'hiz, Chouart, gant eun toullad tud a yeas eus a Werleskin, d'ar 15 a viz Here 1544, hag evel eur c'habiten bras, a roas urz d'ar wazed a oa gantan da bignat er manati dreist ar mogerioù, hep rei amzer, d'ar Rouz d'en em zifenn. Ar paour kez abad a voe prizoniet da genta e Montroulez, goudeze, e Landreger, hag er fin e Roazon, met dem-goude, evit kaout peoc'h e tilezas e garg a abad, gant ma vije roet d'ezan, en dizro, 50 lur leve, er bloaz, hag e tizroac d'ar Releg, el lec'h m'her c'havomp c'hoaz, er bloaz 1563, evel priol, dindan urziou an abad nevez, Louis ar Bouteiller, a gemeras peun an abati warlerc'h Jakez Torsolis.

Unan eus menec'h ar Releg, en amzer-ze oa Fransez an Tour, ginidik eus a Blougasnou, a deuas da veza chaloni eus a iliz Lanndreger; person e Plougonven hag e Plestin, priol sant Varzin Montroulez, abad Koatmalouen e eskopti Lanndreger, eskob e Kerne er bloaz 1573, eskob e Lanndreger, er bloaz 1583 hag a varvas, en e vaner, e Penn-ar-Stank, e

Plougonven, hag a voe beziet en iliz ar barrez, goude beza renet eur vuhez hag a c'helled kaout abeg enni meur a wech.

Er bloaz-se ivez, Kristof Kanne, aotrou Krec'h-meur, eun dijentil yaouank a oa bet laket e penn abati ar Releg, gand ar roue, daoust ma ne oa na beleg, na manac'h, a voe prizoniet gant tud ar Roue, e emgann Plestin, ha kaset ganto da gastell Koatfreg, el lec'h ma varvas, diwar ar gouliou en doa tapet, d'an 19 a viz gwengolo 1590. Beziet e voe gant lid bras e iliz Tadou Sant Dominik, e Montroulez.

Er bloaz 1606, Renan ar Rieu, mab markiz Sourdeac, gouarnar Brest, a voe roet d'ezan abati ar Releg. N'en doa nemet 16 vloaz neuze, ha pevar bloaz a oa edo abad e Daoulas; er bloaz 1613, d'he 23 bloaz, e voe hanvet da eskob e Leon warlerc'h an A. Roland de Neufville. Kaout a raer c'hoaz skoued an A. Rieu, war chapel vihan sant Barnabe, demdost d'ar Releg, war menez Are. Deuet da veza kovesour ar rouanez Mari Medicis, an A. Rieu, pa deuas houman da veza gwelet fall, a rankas rei e zilez eus a eskopti Leon ha kemeret hent an harlu. Keit ha ma oa er mêz eus ar vro, abati ar Releg hag hini Daoulas a voe gouarnet gand ar c'hardinal Mazarin, beteg ar bloaz 1646; er bloaveze-ze an Pab a dorras ar varnedigez douget eneb an A. Rieu hag, en hent-se, henman a c'hellas dont er vro da ren, a-nevez, e eskopti. Mervel a eure, er Releg, d'an 8 a viz meurzh 1651 ha d'an 18 a viz meurzh 1651 e voe beziet en e iliz-veur, e Kastell-Paol.

Hardouin Rouxel de Grancey a c'houarne an abati er bloaz 1690; lazet e oa, er brezel, el lec'h m'ao aet, evel beleg, e tal Turin, er bloaz 1716.

Diveza abad ar Releg, an A. du Vivier de Lansac, chaloni Lyon, a lakeas adsevel, er bloaz 1774, eul lodenn vat eus ar manati, er bloaz 1774, gant Jakez Piou; tad kunv, Jakez Piou, kannad Flandreziz a zo bet er bloaveziou diveza-man, unan eus gwella difennourien ar gristenien, er Gampr.

Goude maro an A. du Vivier de Lansac, er bloaz 1789, ar Releg a voe gouarnet gand ar priol Glaoda Verguet. Breman ez eus hanter kant vloaz, e oa hano anezan c'hoaz er vro. Louis XVI o veza klevet peger brokus oa bet e kenver eur réjimentad sourdarded a dremene dre eno hen hanvas viket vras urz Citeaux, e Breiz. Er bloaz 1789, beleien Leon her c'hasas da Baris, gant Expilly, evit beza o c'hannad; siouaz, trei fall a eure, toui a reas ha dimezi. Goude beza bet sous-prefed e Lure e varvas en e vro, e Montarlot er bloaz 1814.

Pa voe kaset ar venec'h eus ar vro gand an Dispac'h, er bloaz 1790, ne oa mui er Releg nemet pemp mamac'h. War an inventar graet d'ar 26 a viz genver 1791 e welomp e oa, en abati, 3398 levr. Petra int deuet da veza ? E tenzor an iliz e oa eur c'halur alaouret, pemp kalur arc'hant, teir groaz, daou lamp, eur zailh evid an dour benniget, eur voest evid an eol sakr hag eur Werc'hez arc'hant. Pa deuas pao-tred an dispac'h da laerez ar Werc'hez arc'hant-ze a oa karet gand an holl dud eus a dro-war-dro, gwa-zed ar menez a glaskas difenn o zra, met ne oant ket niverus a-walc'h hag e rankjont plega. Ar manati a voe gwerzet gand ar C'houarnamant ha prenet gand eun noter eus a Vontroulez, an Henaff, a werzas kalz mein hag a viras evelato an iliz.

Wardro ar bloaz 1850, eun nebeud eus diskibien

Felix Lamennais en o zouez edo an A. Leopold Le-rebeuc, a voe divezatoc'h eskob e Autun, — a glaskas prena abati ar Releg evid ober anezan en ti-studi evel hint ar Chênaic kentoc'h, met ne deujont ket a-benn eus o zaol. Leanezed ar groaz a deuas da jom d'ar manati er bloaz 1855 hag a jomas eno beteg ar bloaz 1874. Ugent vloaz goude, an A. Jeuné, person Plouneour-Menez, a gemeras en e garg nevezi iliz ar venec'h hag a gasas brao bras al labour-ze da benn ha breman pa 'z aer en iliz-ze her c'haver ker kaer ha ma oa breman ez euz seiz pe eiz kant vloaz.


A bep tu d'an aoter vras eman skeudennou bras Sant Beneat ha sant Bernez. E chapel kroaz tu ar c'hreizteiz ema skeudenn garet Itron Varia ar Releg, bet kizellet er XV^{vet} kantved, diou eus ar vertuziou penna, an nerz hag ar poell ouz he dougen.

Dindan prenestr bras tu ar c'hreisteiz eman bez Aotronek Koad ar Roc'h, e Komanna, gand o skouejou, ha re aotronek Kerne, Poulmic ha Kergorlay, o c'herent.

Pa voe nevezet ar chapel e voe kavet eur bez dindan an aoter vras hag e oa ennan tri arched plomm. Lezet int bet ebarz heb ober netra d'ezo.

Ar c'hloastr a zo bet diskaret; aman hag a-hont e kaver eur maen bennak anezan c'hoaz. Dirak an iliz ez eus eur feunteun gaer a daol dour diouti dre beder duellenn.

Evit gwelet ar Releg, en e gaer, eo red treuzi chaoser ar vilin ha mont da azeza e kichenn feunteun goz sant Bernez, e traon krec'h Kerguz. Ac'hano e weler al lenn, mogeriou koz hanter gouezet ha goloet a illio ar manati, an iliz, hag a dre kein meziou Brank-haleg ha menez Are.



FEUNTEUN AR RELEG

Feunteun an Itron Varia a zo e penn an iliz ha darmpredet eo atao gand ar bardonerien; evit beza paret diouz ar remm, meur a hini gwechall, a lake skuilh, en o c'herc'hen, eur skudellad eus dour yen ar feunteun-ze. Yer gwenn eo a veze roet e prof d'ar chapel hag eur bonedad kerc'h.

Abati ar Releg he doa leveou e Plouneour Menez hag er C'hloastr; gwelet a raer c'hoaz pennadou eus moger park ar venec'h a en em astenne, e tu ar savheol, betek hent koz Montroulez d'ar C'hastell-nevez.

hag a hanver c'hoaz moger an diaoul, dre ma kreder eo bet savet gand andiaoul, en eun nozvez. Al leveou a oa rannet e peder gordennad: leveou ar Releg, re Lannven, e Sant Noug, gwerzet er bloaz 1563, da Louis Barbier, aotrou Keryann, re Bleifur e eskopti Tregger hag ar re en tu all d'an Elle, eur ster vihan hag a zo e eienenn e geunioù Sant Mikael. Ar re a oa a chom el leveou-ze a ranke heulia ar c'hiz a roe ar gwir, d'ar yaouanka eus ar vugale, da gemeret penn an tiegez warlerc'h e dud; brao oa beza merour dindan ar venec'h ha ne veze ket a ezomm da c'houezi kalz evit gounit ar gouel-Mikael. eBp bloaz ar verourien o deveze daou zervez charre da ober evit mont betek Kastell-Paol pe Montroulez da gerc'hat diankachou an Abati; bevet dereat e vezent epad an hent hag en dizro e veze roet d'ezo 7 torz vara hag 20 diner.

G. P.

EN O EIL BUGALEACH

SKLERIJENN. — *Evit c'hoari ar pez-man eo red kaout eur zal kempennet kaer a vo enni eur piano, diou gador vourret, eun daol vras, e kreiz, hag ivez, a gostez, eun daol vihanoc'h da c'hoari, eur gartenn vras, war ar speurenn, dirak ar zelaouerien; eun nor, en tu kleiz, a sko war ar gegin, hag eun all, en tu dehou, a sko war an hent. Pa zaver ar gouel, Maltt a zo o lakat he dilhat da vont er maez; he zad, eur zae c'hlas gantan, a zo o labourat, war eul lestr, ouz an daol vras hag en dro d'ezan emae e veniachou.*

A-wechou, marteze, an hini a raio. Maltt ne ouezo ket c'hoari war ar piano, met neuze eun all a c'hell c'hoari eviti a-dre kein ar speurenn pe a devio zoken eus ar gegin, galvet ganti, da c'hoari, en he lec'h, war al leurrenn.

MALLT (o lakat he zok war he fenn). — Mont a ran d'ar red, da gas al lizer-man, d'ar post, a-raok ma vo serret ar stal. Daoust ha dont a raio va contr Nath aman, adarre, fenez ?

PER. — Dont a dle p'eo gwir eman ar yaou; peurliesia e teu d'hor gwelet d'ar meurz ha d'ar yaou da noz.

MALLT. — Hag ho pag, penaos ez a an dro ganti ?

PER. — Ne 'z a ket re fall; met ne vo ket peurc'hraet c'hoaz en deizioù kenta-man.

MALLT (o lakat he manegou). — Hag ho mouchoer-godell, bras a-walc'h da ober ar pez a vennit ober gantan ?

PER. — Eur mouchouer-godell, e c'helles kredi, n'eo ket bras a-walc'h da ober holl goueliou eur skouner evel houman.

MALLT. — Pet gouel a zo ezomm 'ta ?

PER. — Eur bern : ar gouel bras, ar gouel misan, ar gouel balouin ha me a oar me !

MALLT. — Che ! met eur vag evelse a rank kaout muioc'h a zilhad eged eur verc'h yaouank.

PER. — Anat d'it, avat, ha neuze eur vag a zo eur stlabez merc'h ha kenetrezomp bleizi-mor, ni a oar vat e rankomp tremen diouz hor bagou evel ma tremener diouz ar merc'hed ; goude ober brao d'ezo, hag o c'hempenn hag o ficha eus ar gwella, e vezer laket nec'het a-walc'h ganto c'hoaz, meur a wech.

MALLT. — E gwir ! met, va zad, daoust ha ne vije ket eum tamm mat gwelloc'h d'eoc'h en em lakat da lenn eul levr bennak, bemdez, goude ho merenn, eget chom aze, war ho skañv, epad an hanter dervez, gand eur c'hoz c'hoariell vugale ?

PER. — (*eun tammig kintou ennan*). — Eur c'hoariell ? eur c'hoariell ? henman n'eo ket eur c'hoariell eo ! ha neuze, kabitened koz, eveldomp ni, hag o deus graet tro ar bed, n'eo ket aes gouzout pet gwech, n'o deus ezomm da lenn netra ebet ken.

MALLT. — Mat, va eontr Nath a gar lenn kouls-goude !

PER. — Nath ? Me a oar vat e vez e fri atao en eul levr bennak hag ouz eul levr a lennan e lenn kant, met n'em eus ket a aoun o lavaret aman pa n'eus nemedomp hon daou, ne oa ket eur seurt den an Nath-ze pa oa kabiten ; kalz re droet oa ouz ar varzoniez ha traou all didalvez evelse. Red

eo beza bet ganet kabiten evit beza eur c'habiten mat ; ma n'eman ket an dra-ze, en ho kwad, eo didalvez d'eoc'h klask en em gaout, rak n'en em gavoc'h biken.

MALLT. — Bec'h am eus ho kredi an dra-ze, met hervez ar re goz avat eo red beza bet ganet barz evit beza eur barz mat.

PER. — Pebez sorc'henn ! Ar folla den a zo o vale a c'hell dont da veza barrek da renka e c'hერიou, e gwerziou, gant ma ne ray nemed an dra-ze, edoug an holl amzer.

MALLT. — N'it ket da lavaret an dra-ze, gand a reoc'h, dirak va eontr Nath.

PER. — N'oun ket ker sot-ze, rak me a oar vat eo buan a-walc'h da eontr Nath da vont droug ennan.

MALLT. — Hen a lavar, kouls-goude, eo c'houi an hini n'en deus tamm ludu ebet da c'holo e dan.

PER. — O ! ne dle ket beza kalz a gemm etrezomp ha neuze, an holl a oar peger gouez eo ar bleizi mor, met, va c'hredi a c'helles, n'omp ket evit derc'hel droug, pell amzer, an eil ouz egile, (*sellet a ra ouz e vontr.*) Asa ! asa ! met mall eo da Nath koz diskenn d'an douar adarre pelloc'h.

II

NATH — MALLT — PER

NATH *o tont en ti hag o sellet ouz Mallt gand eun doare goapaüs.* — Doue r'ho pennigo, Per ha c'houi ivez Mallt, bleunvenn gaera an ti-man. N'eus ket eur penn-kristen o c'hoarzin, war an hent, en abar-daez-man : re yen an holl eo an amzer da lakat ar fri er mész.

PER. — N'eus nemet tud koz, eveldoc'h c'houi, Nath, hag a gavfe e ve yen hizio; ar re goz n'int nemet koz traou skournet.

NATH. — Malltig paour, daoust ma'm eus gwelet holl borziou daou du an douar, n'em eus ket gwelet biskoaz eur verc'h, ker kaer ha te, rak ma'm bije kavet unan p'edon en oad da zimezi, biken ne vijen chomet da ober ar paotr yaouank koz, evel ma 'z oun. Breman ez eus daou ugent vloaz, em bije baleet diarc'hen, war an erc'h, evit gwelet eur verc'h henvel ouzit te!

MALLT. — A! ha! ba! ba! ba! Roit peoc'h d'am penn, sellit, gant ho stranerez; me breman a zo ivez

eur plac'h yaouank koz diazezet,
ha ne c'hoarz den ouz he gwelet.

Mont a ran befeg ar post, met, gand a reoc'h, n'it ket d'en em daga keit ha ma vezin oc'h ober va zro; taolit evez mat ho taou, war ar pez a lavaran, pe ho po da ziuall ouzin. (*Mallt a ya er maez*).

III

NATH HA PER

NATH. — Hounnez, sell, a zo henvel mat ouz he mamm.

PER (*a gendalc'h gand e labour*). — Daoust pe-gen henvel eo ez eus kemm etrezo.

NATH. — Eur vaouez dibabet etre mil oa Mac'harit, da wreg.

PER. — Hep mar ebet.

NATH (*O tenna e vantell hag ouz he lakat a-is-pilh ouz an nor. Kemeret a ra eur c'hornad butun diwar ar chiminal ha lakat a ra tan warnan, gouestadik*). — Gwelet a ran emhout o strani gand ar c'hoz bag-se, adarre!

PER. — Adarre! adarre a zo eur rebech; ne vezan ket atao warni; ne labouran nemet, gwech ha gwech, pa dro em fenn.

NATH. — Pa venn eun dra, abenn e teu atao, evel ar ganevedenn hag ar glao!

PER. — Petra leveres eus va labour?

NATH (*o lakat e lunedou a zell ouz al lestr evit kaout abeg ennan*). — Ne welan ket o klask ober petra 'n diaoul emhout aze?

PER (*droug enann*). — Eul lestr, na petra 'ta!

NATH. — Ya! ya! me a oar an dra-ze, brao bras, met bez ez eus kemend a listri dishenvel, war ar mor, hag a girri dishenvel a zo war an douar: kaout a raer kirri dre dud; kirri dre gezeg, kirri dre dan, bez ez eus ivez listri dre dud, listri dre oueliou, listri dre dan: bagou, yaktou, skounerou!...

PER (*o trouc'ha warnan a daol trumm*). — A! kre teod abegus ma 'z out; n'es ket da forani da avel, en doare-ze 'ta, heb ezomm; me a ouie, ervat, an hanoiu-ze, a-raok ma oa savet barvenn ebet d'it c'hoaz war stal ar mec'hi.

NATH (*o tenna e lunedou*). — Asa 'ta mat, perak ez a droug ennout evelse?

Te eo ez peus goulennet ouzin, da genta, barn da labour.

PER (*tomm d'ezan*). — Perak, genaouok, out aet da zellet outan, a-raok beza sur pe eul lestr, pe eur c'hanval e oa!

NATH (*hegaratoc'h*). — Ar c'hanval ? A ya ! hennez eo lestr trezou hir ha tomm an Afrik n'eo ket 'ta, Per ? (*Lakat a ra e lunedou adarre, war e fri, da ober eur sell all ouz al lestr*).

C'hoant am eus da lavaret n'eo ket graet gwall gaer c'hoaz da lestr ganez, rak n'oun ket evid anaout ennan, diouz eur gwel, ar penn a-raok diouz ar penn a-drenv.

PER (*garo*). — Ken aes eo koulskoude lakat kemm etre an daou benn-ze ha ma 'z eo lakat kemm etre da fri ha da helgez-te !

NATH. — Va fri-me, evelato, n'eo ket keit hag hini al lestr-ze !

PER (*det anezan e-unan*). — Ro peoc'h, d'am penn, pelloc'h, sell, rak skuiz ez an ouz da glevet ; derveziennou a vez ne c'heller tenna netra, eus da glo-penn, nemet bidanellerez, evel eus genou eur foll, er foar !

NATH (*o lakat e lunedou er voest*). — Ne fell ket d'in klask trabaz ouzit, en abardaez-man, met, ma res diouzin ec'h astenni, eun tamm, da wern gorn.

PER (*o lezel e gounnar da goueza*). — Komz a res hep c'hoarzin ?

NATH. — Ya ! ya ! ro d'ezl eur meutad c'hoaz, eur meutad mat.

PER (*o sellet ouz al lestr*). — Ya ! ya ! gwir a-walc'h a leveres ha goude ne vo ezomm gwern all ebet ken warnan. A ! mat ! a-walc'h em eus labouret hizio. (*Dastum a ra ar benviachou, war an daol vras, hag ec'h azes, gand e gorn-butun, e kichen Nath*).

NATH. — Sur a-walc'h e tle beza yen, war an mor, er pardaez-man.

PER. — Me gred ivez. Ne ouezes ket, Nath, ez eus ugent vloaz, er miz-man m'hon eus kuitaet ar mor hon daou.

NATH (*o prederia*). — Ugent, vloaz, ya ! gwir eo ! Koun a deu d'in eus a eun dra a zigouezas ganen pa oan o toñt eus a Hong-Kong evid ar wech diweza.

PER. — Ha me eus a Vuenos-Airus.

NATH (*o prederia*). — Ugent vloaz ! Pe oad ez peus te, Per ?

PER. — C'houezek vloaz ha tri ugent ; eur miz kosoc'h egedout.

NATH. — Doue ra viro an holl gwitibunan ! Kant hanter kant vloaz a reomp etrezomp hon daou ! E gwir ! oajet bras omp, paotr paour ! emamp war hor seuliou koz ! Mat e vije d'eomp klask louzou da bellaat an Ankou.

PER. — N'es ket da lavaret hano c'hoaz eus ar maro. A drugarez Doue, emamp atao war ar vourz, gand avel grenv, en hon dioukouarn ha c'houez vat ar mor en hon difron.

NATH. — Daoust hag hunvreal a res a-wechou er mor.

PER. — Pa hunvreal, peurliesia eo er mor eo ec'h hunvreal.

NATH. — Me, en dere'hent dec'h da noz em eus bet eun hunvre... spontus... Eur barr arnev a oa kouezet war va lestr, *ar Roue Arzur* ; hennez oa e hano, ma peus koun.

PER. — Eul lestr mat al lestr-ze, paotr paour !

NATH. — Ya, trei a rae em hunvre, gand an avel, evel eur gornigell ; evit trouc'ha berr, kaout a rae d'in edon, va-unan, o neunv war an tonnou c'houero, ha pa daly, pa zihunis, edon, dindan va gwele, war leur zero ar zolier.

PER. — Ar *Roue Arzur* oa al lestr diweza az peus sturiet?

NATH. — Ya! ya! n'es peus ket ankounac'haet an taol souezus a en em gavas ganen daou vloaz a-raok ma 'z is diwar ar mor?

PER. — War vourz ar *Roue Arzur* eo edos neuze?

NATH. — Ya! ya! da lestr-te, ar *Prins Albert* hag ar *Roue Arzur* a dremenas harp an eil en egile e kichen San Domingo.

PER. — Ya! ya! paotr paour, souezus bras oa an dra-ze, met kement-se a zigouezas e kichen Jamaïka evel ma ouezes da-unan.

NATH. — A! nann, avat, e kichen Sant Domingo eo!

PER. — Nann! a lavaran d'it; e kichen Jamaïka eo, Nath.

NATH. — Asa evelato, perak out ken t'er ha ma'z out? Al lec'h-se a zo chomet moulet em spered. Lakat a rafen mil lur e glaoustre eo e kichen San Domingo eo.

PER (*o tomma*). — Laka mil lur ma keres, met me a zo ker sur ha te eo e kichen Jamaïka eo e tosteas an daou lestr an eil ouz egile. Deus ha m'hen diskouezo d'it aman, war ar gartenn, ha ne vo ket pell an dale.

NATH. — N'her proui biken!

PER. — Ma c'hellan hen ober, war ar gartenn, e kredi, goudeze, michans? (*An daou goz a zav, pep hini war e gador, dirak ar gartenn hag a laka o lunedou*).

(*Da gendelc'her*).

YANN LOGONNA

Breman ez eus pemp kant vloaz, en amzer hon duk mat Yann V, e oa eun intanvez paour o chom e Logonna-Daoulas, gant he fennher. Ar paotroman, — triouec'h vloaz a c'helle beza ha Yann oa e hano, — a oa eur pikol pezh den; n'en doa tamm fallagriez ebet avat hag ar pezh a gared a veze gallet, rei d'ezan da gredi; gant an dra-ze e oa lezirek ar pezh ma c'heller beza ha ne rae ket eur seurt, na gant e gorf, na gant e spered: ar pezh a ouie da ober oa debri, eva ha kousket hag an dra-ze, hep gaou, a ouie da ober brao bras.



Ne droe ket eur vro-chenn, en tan, ha lezel a rae e vamm he-unan da labourat. Meur a wech, ar vaouez kêz he doa klasket e lakaat da ober eun dra bennak gant e bemp biz. Dre druez outan, pennou tiegez, eus a gichen, o doa bet kemeret Yann da baotr saout, met n'o doa ket gallet e zerc'hel, rak e lec'h ober e labour ec'h en em roe da

Ne droe ket eur vro-chenn, en tan, ha lezel a rae e vamm he-unan da labourat. Meur a wech, ar vaouez kêz he doa klasket e lakaat da ober eun dra bennak gant e bemp biz. Dre druez outan, pennou tiegez, eus a gichen, o doa bet kemeret Yann da baotr saout, met n'o doa ket gallet e zerc'hel, rak e lec'h ober e labour ec'h en em roe da

gousket, e traon eur c'hae bennak hag, epad an amzer-ze, ar chatal a yae da laerez.

Re bout a spered e oa ivez evit gellout deski d'ezan eur vicher ha tremen a rae e amzer pa ne veze ket o roc'hat, en disheol, en eun tu bennak, oc'h ober tro ar vro, anavezet ha lezhanvet gant an holl : Yann Logonna.

Kemeret oa gand an dud evid eur paotr berr a spered hag e roet d'ezan, en hanv Doue, aman diou, pe deir grampoezenn hag a-hont eur restad yod silet, gant eur skudellad laez tourgouilh.

Eur blijadur oa e welet o lounka ar pez a gin-niget d'ezan, rak atao e veze du, gant an naon, ha mall gantan kregi en eun tamm bennak.

Eun dervez e vamm, hag a oa red mat d'ezhi chom er ger, her c'hasas da foar Zaoulas da werza ar vioc'h ziweza a jome ganto. A-raok lezel ar paotr da vont en hent, ar vamm, hag he doa difizians anezan, a lavaras d'ezan : — Gant a ri, taol evez ouz ar varc'hadourien ; diouall ouz o c'hom-zou brao en aoun da veza tapet ganto ; ar veoc'h a dalv tri-ugent skoed ; arabad eo d'it rabati eur gwenneg war ar priz-ze :

— N'eo ket da d'eoc'h kaout aoun, a lavare Yann ; me a daolo evez ; da welet oun berr a spered, met da c'houzout oun ker barrek hag eun all. N'ho po ket da glemm ac'hanoun, gwelet a reoc'h.

Dres, p'edo o vont eus an ti, e vamm her galvas en dro :

— Torret eo hon trebez ; red e vo d'it prena unan nevez hag arabad d'it hen ankounac'haat, avat !

— Nann ! nann ! mamm, eme Yann, hag hen, en hent, mar gouie, gant e veoc'h.



En em gavet, e Daoulas, Yann a en em lakeas gant e vioc'h, en eul lec'h mat, hag a c'hedas ar brenerien. Tud a oa, ha trouz a oa ganto ; Yann a oa bouzaret, hen ha n'oa ket bet boaz, biskoaz, da zont e kêr. Hep dale, e teuas eur gall da varc'hata ar veoc'h ; evel ma komze kalz, Yann a lavaras ennan e-unan :

— Ar gwaz-man a zo o klask va laerez, hag e lavaras d'ezan :

— It da glask saout, el lec'h ma keroc'h, rak evit va hini-me ne vo ket roet d'eoc'h.

— Gwerzet eo ganez-ta ?

— An dra-ze ne zell ket ouzoc'h.

— Mestr out war da veoc'h, sur a-walc'h ! hag ar marc'hadour a yeas pelloc'h.

Eun all a deuas, eur paotr teodet mat ivez, evel ar c'henta, ha Yann a reas d'ezan an hevelep digemer. Re all a deuas hag hini anezo ne c'hellas dont a-beñn da brena beoc'h Yann. Dizale, an holl, er foar, a glevas hano anezan hag a deuas, dre wape-

rez, da varc'hata e veoc'h, ar pezh a lakeas Yann da gredi, muioc'h-mui, edont o klask tenna faoliou kamm d'ezan.

Sellout a rae outo gand eur mouz c'hoarz a venne lavarout:

— Komzit, kement ha ma keroç'h; me a zo barrekoc'h egedoc'h ha ne reoc'h ket d'in ar pezh ho po c'hoant.

Evelato ar foar a oa o kloza. Yann a jomas e-unan, gant e veoc'h, eun tammik nec'het:

— N'em eus ket bet a jans da werza va beoc'h, met va mamm ne vezo ket re a zroug enni, evelato, p'eo gwir den ebet n'en deus gallet va laerez.

Hag hen, en hent, da zistrei, d'ar gêr, gand e veoc'h; eur pennad eus kêr, e welas, daoust ma oa tenval an amzer, eur zant koz koad, war e jichenn, e lez an hent:

— Setu aman unan, emezan, hag a brenfe va beoc'h, marteze!

— He! Gwaz, emezan, c'hoant ho peus da gaout eur veoc'h hag a zo mat d'al laez; evit 60 skoed ho po hi. Grit a geroc'h.

Evel ma ne lavare netra ar zant koz:

— Henman, da vihanan, eme Yann, n'eo ket eur glabouser eo evel ar re all! N'her c'havit ket re ger? P'eo gwir ne livirit netra e livirit ya! Va beoc'h a zo d'eoc'h!

Ha Yann staga ar veoc'h ouz chichenn ar zant ha dao d'ar gêr, laouen bras.

En eun taol, e teuas, en e spered, en doa eun trebez da gas gantan. Tremen a rae dres, dirak eur c'hovell, hag e kichen an treujou e oa daou pe dri drebez laket eno da ziskouez.

Kemerout a eure unan anezo en eur lavarout outan e-unan:

— Mont a ran d'az kas ganen p'eo gwir n'emaet ket ar c'hiz, er vro-man, da baea ar pezh a brener.

An hini poumnera a oa deuet gantan hag, evel ma kerze dillo, e teuas buan da skuiza:

— Setu aman avat, emezan, eur benveg fentus, tri droad d'ezan ha c'hoaz n'eo ket gouest da vale; mat, gra a giri; deus war va lerc'h, mar keres, pe chom aze war an hent bras.

Teurel a eure an trebez war an hent bras ha dizale e tigouezas er gêr. E vamm a oa ouz e c'hedal:

— Gwerzet eo ar veoc'h, ganez, emezi.

— Ya!

— Pegement.

— 60 skoed, evel m'ho poa lavaret, met n'eo ket bet aes da werza, rak eur bern marc'hadourien a zo bet, war va zro, o klask va zapa; met taolet em eus evez outo, evel m'ho poa lavaret hag he gwerzet am eus d'eur prener ha ne lavare ket kals a dra.

— O! An dra-ze ne ra netra, gant ma vezi bet paeet mat gantan, eo ar pezh a renker. Digas an arc'hant d'in, breman, m'her gorrennin.

— Pe arc'hant?

— An 60 skoed 'ta ez peus bet.

— An 60 skoed, eme Yann; n'emaint ket ganen; n'ho poa ket lavaret d'in o digas d'eoc'h, hag an hini em eus gwerzet ar veoc'h d'ezan n'eus bet hano ebet gantan, ken nebeud eus an dra-ze. Me grede n'edo ket ar chiz, e Daoulas, da baea ar pezh a brener.

— O! paotr paour, eme ar vamm, en eur ouela, re zot en holl out; en taol-man ez peus va laket

war an douar noas. Nag a geuz am eus me da veza da gaset e kêr. Ne ouezes ket ober eun holl vad.

— N'it ket da fallgaloni, mamm; mont a ran da gaout an den-se hag e lakat a rin da baea ar pez a dle d'eomp!

Ha Yann, mar gouie, en dro da Zaoulas; en hanter 'n hent e kavas e drebez; n'en doa ket finvet eus al lec'h m'oa bet lezet. Eun taol baz a skoas gantan, en eur dremen:

— A! ta lezirek zo 'chanout! Ast afo; mantrus eo d'it kaout teir gar pa ne gerzes ket buanoc'h eged eur velfedenn!

Prest oa ar paotr Yann da zihalana pa en em gasas gand ar zant koz; ar veoc'h n'edo ket ken dre eno; unan bennak en doa he distaget hag he c'haset gantan. Yann a zaludas ar zant koz:

— Klevit 'ta, Aotrou, ankounac'haet ho peus va faea, bremaik; 60 skoed a dleit d'in evit va beoc'h!

Ar zant ne eilgerias ket.

— Ma n'am faeit ket, digasit d'in va beoc'h en dro, da vihana.

Ar zant a roas peoc'h adarre.

— A! en hent-se eo, amboubal; gortoz, bremaik, ez pezo diganen-me. Hag e tarc'haos eur mellad taol baz war skoaz ar zant kêz a gouezas d'an douar a-stok korf; Yann, soublet warnan a welas e oa kouezet, d'e heul, e touez ar geot, tregont pez aour a oa bet kuzet, diaes gouzout gant piou, dindan e dreid. Laouen bras e tastumas ar peziou-ze hag o lakas, en e c'hodell, en eur lavaret:

— A! laer daonet, kea, me a ouie a-walc'h e vijen deuet a-benn d'az lakat da restaoler d'in ar pez a dlies.

Hag hen raktal d'ar gêr. Pa welas e vamm an tregont pez aour a oa gantan e chomas sebezet. Kaer en doa he mab lavaret penaos en doa kavet an tenzor-ze, n'oa ket evit her c'hredi ha lakat a eure en he fenn en doa laeret eun tremeniad bennak evit kaout e arc'hant.

— E mae graet ganeomp, emezi; an archerien a deuio aze, bremaik, d'hor c'herc'hat hag e vezi krouget!

— Krouget! A! nann avat; n'eo ket red d'eomp chom d'o gedal.

— Gwir a-walc'h a leveres, eme ar vamm; d'eomp buan da guzat da goad Rosmorduc.

Hag o veza dastumet, d'ar red, eun nebeud difhad hag eun tamm bennak da zebri, ez aes er maez, en eur lavaret da Yann.

— Chach an nor, war da lec'h, ha d'eomp d'lo ac'han.

Yann hag a entente atao pik e lec'h bran a gredas en doa lavaret e vamm d'ezan kas an nor gantan, hen tennas eus he flas hag her sammas, war e gein. Heulia a rae e vamm, abell, rak houman



a oa ker strafuilhet ma kerze buana ma c'helle.

— Na pebez stultenn a zo deuet e penn va mamm,



eme Yann, evit rei d'in urz da zamma eur pez tamm dero ker pounner all war va c'hein ha ne vo gellet ober n'etra ebet gantan, er c'hoad, du-hont.

An deiz a oa o c'houlaoui pa zigouesjont gand gwez kenta ar c'hoad. Azeza a rejont ouz troad eur pikol gwezenn dero. Yann a en em lakeas da zebri eur peziad kig ha bara a oa deuet gand e vamm hag a en em roas da gousket epad an darn vrasa eus an deiz.

Pa deuas an noz, an intanvez hag he doa aoun rak ar bleizi a lavaras e rankjed pignat er wezenn da dremen an noz.

— Evid an dra-ze, mamm, eo ho peus lavaret d'in digas an nor aman ganen? .

— Nann! He serra hepken eo em oa c'hoant da lavarout d'it, met p'eo gwir eo deuet betek aman e talvezo d'eomp.

Yann a lakas an nor er wezenn, war daou skourr hag a lakas warni eur gwiskad kinvi ha deliou sec'h evid e vamm. Hen a bignas, war eur skour, hag o daou e oant en em roet da gousket pa voent dihunet gand eun trouz bras: dizale e weljont, eun den war varc'h, o tont a-diz, ha goude eun eil ha goude eun trede ha goude eur pevare. Pa voent en em gavet e harz troad ar wezenn zero e tiskennjont, diwar o mirchier, o stagjont ouz ar skourrou, ec'h azesjont war ar geot hag en dra ma oa unan oc'h ober tan, ar re all a zispake peadra da zebri araok gourvez eno da dremen an noz. Pa voe aozet ar pred, hen debrjont hag e lounkjont meur a litrad gwin d'her c'has d'an traon. Yann o gwele ha laouen e vije bet m'en divije gellet askoania ganto.



P'o devoe peur-c'hraet o fred ha lakket tan war o c'her-niel, unan anezo a lavaras d'an tri all.


— Mat, va mignoned, p'eo gwir emamp bodet aman adarre, evel m'ema ar c'hiz ganeomp d'hen ober, eur wech ar bloaz, eo koulz d'eomp lakat e boutin, ar pezh hon eus dastumet abaoe warlene hag evel mestr, me a rog al loden-nou.

Pep hini a skar-

zas e c'hodellou hag, ar yalc'h pounner a zouge stag ouz e c'houriz. Dizale e oa etre ar pevar laer eur berniad mat a aour, a arc'hant, a vein presius hag a vraoigou. Yann hag e vamm, o welet kement all, ne gredent ket tenna o halan en aoun da veza gwelet ha lazet gand al laeron, miet ar paotr yaouank trellet e zaoulagad gand ar binvidigez a wele dindannan a daolas e droad el lec'h ma n'oa ket dleet hag an daol a rinklas; Yann hag e vamm a c'hellas tapa peg er skourrou, met an daol a gouezas, a-fardigleo, d'an douar, war ar bern aour, en eur vouga letarn al laeron: ar re-man, strafuilhet, a dec'has ac'hano, evel ma vije bet krog an tan en o zu-a-drenv. Yann hag e vamm n'o doa netra da ober ken goudeze, nemet diskenn eus o gwezenn da zastum an tenzor a oa lezet ganto. Leun eur zac'h stag ouz dib unan eus ar mir-c'hier a oa a beziou aour hag arc'hant. Pa deuas an deiz, ez ejont ac'hano, da Rosmorduk, da gaout an aotrou ha da lavaret d'ezan ar pez a oa en em gavet ganto. Aotrou Rosmorduk, hag a oa eun den eün ha mat, a lavaras d'ezo o doa graet fall o vont d'en em gemerout ouz ar zant hag e c'hellent goude beza roet, eun draik bennak d'ar paour, derc'hel ganto an tenzor o doa diframmet eus a dre daouarn al laeron. Yann hag e vamm a yeas da jom d'ar Faou hag a lakeas sevel eno eun ti kaer e kichen ar c'ho-c'hu. Dre ma teuas en oad, ar paotr Yann ne oa ket ken nouch na ker genaouok; dimezi a c'hellas ha dont a eure da veza eur bourc'hiz pinvidik ha n'en doa tamm doare ebet ken da veza bet ar paourkez Yann Logonna ma oa kentoc'h.

G. P.

Feiz ha Breiz



Prezegenn an Aotrou 'n Eskob Duparc e oferenn ar "Bleun Brug"

Je suis heureux d'avoir à saluer le *Bleun-Brug* au Folgoët, et pendant la messe.

Est-ce que l'institution du *Bleun-Brug* n'est pas un pieux hommage à Notre Seigneur et à Notre Dame?

Vous venez de faire une évocation du passé. Les évocations du passé sont toujours réconfortantes, même les plus douloureuses, quand elles rappellent la fidélité à Dieu et à la Patrie.

C'est le sens que vous donnez à ce défilé, commémoratif du pèlerinage fait en 1428, par le duc Jean V et sa femme Jeanne de France, sœur de Charles VII, au sanctuaire du Folgoët, qu'ils avaient contribué à construire.

J'aime à vous voir offrir, en leurs personnes, l'hommage de vos deux Patries, la Bretagne et la France, à Notre Seigneur et à Notre Dame.

Le *Bleun-Brug* est qualifié pour accomplir cet acte religieux.

I. — Son premier but est d'entretenir et de développer la sève de la foi en Bretagne. L'âme bretonne vit surtout de son catholicisme, qui ne repose pas seulement sur un sentiment traditionnel, mais sur une foi précise.

Il ne suffit pas que cette foi éclate par les églises et les calvaires incomparables, qui font au pays tout entier un visage si pénétré de religion et de douceur. J'ai rencontré des monuments religieux aussi impressionnants par leur beauté plusieurs fois séculaire dans des régions de France où la foi ne vit plus.

Il ne suffit pas que cette foi vibre dans des poèmes et des « mystères » anciens inspirés de l'Évangile. D'autres provinces, aujourd'hui païennes, se glorifient de vieux chefs-d'œuvre littéraires d'esprit chrétien, qui ne traduisent plus leurs croyances ou plutôt leur incroyance actuelle.

L'âme bretonne, la mentalité bretonne, l'esprit breton, ne peuvent vivre et durer que par une foi précise, celle même dans laquelle Jean V et la Duchesse avaient été fortifiés par Saint Vincent Ferrier, celle que Dom Michel Le Nobletz et le Père Maunoir firent resplendir dans toute son intégrité, et que les héritiers de leur zèle essaient de garder pure et agissante dans les âmes d'aujourd'hui, par tout le mouvement d'apostolat catholique dont vous bénéficiez et auquel vous participez.

Le jour où cette foi s'éteindrait, l'esprit breton pâlirait, il s'éclipserait, et la Bretagne aurait perdu la ressemblance du Christ qu'elle porte en elle. Elle aurait changé d'âme ou plutôt elle serait un corps sans âme.

C'est le premier souci du *Bleun-Brug*, et voici le second.

II. — La foi est servie par la langue.

Toute langue doit être consacrée à Dieu. En principe,

elle ne doit être le véhicule que du vrai, du bien, du beau. Ça été longtemps le privilège de la langue bretonne de ne s'être jamais mise au service de l'hérésie ni du vice. Le P. Maunoir lui rendait ce témoignage enthousiaste.

Quand j'entends dire maintenant que le breton fléchit dans certaines paroisses, que les familles ne s'en servent plus parfois pour lire la Vie des Saints et l'Évangile du soir, qu'elles exigent trop souvent la substitution du catéchisme français au catéchisme breton, que l'enseignement public pousse délibérément nos enfants dans cette voie, j'en souffre comme évêque breton, et je m'unis à mes prêtres, à nos maîtres, à nos maîtresses catholiques, pour réagir contre un tel désordre, et je rappelle à tous ce que je disais un jour devant une assemblée savante: « C'est la langue qui révèle l'âme d'un peuple, qui garde sa personnalité, qui protège sa liberté, qui entretient son patriotisme, qui unit fraternellement les cœurs de ses enfants, qui enrichit son patrimoine intellectuel, qui traduit bien tout ce qu'il a de plus intime, ses convictions religieuses et ses affections de famille. Quand une langue a de tels titres de noblesse, et qu'elle possède des poèmes comme ceux du *Barzaz-Bréiz*, des chants populaires comme ceux des « quatre cantons » de Bretagne, et des œuvres religieuses, historiques, poétiques, dramatiques, comme celles qu'admirent aujourd'hui les juges les plus autorisés, elle devrait pouvoir entrer, la tête haute, dans tous les établissements scolaires. Elle y apporterait sa note d'équilibre et de vigueur, et ne nuirait en rien à la culture grecque et latine, car son style et sa pensée n'ont rien de nuageux, et la mélancolie qui parfois la caractérise n'a pas moins de charme pénétrant que celle d'Homère et de Virgile. » (1).

C'est la partie de son programme que le *Bleun-Brug* a jusqu'ici le mieux comprise. Je bénis les efforts qu'il fera pour sauver la langue bretonne des dangers qu'elle court et pour lui donner entrée dans l'enseignement primaire comme dans l'enseignement secondaire et supérieur de notre région.

III. — Mais vous ne sauverez pas la langue, si vous n'ap-

(1) Messe du Cinquantenaire de la « Société Archéologique ».

prenez pas au Breton à être fier d'elle. On la lui reproche comme un patois. Il se croit inférieur aux autres quand il la parle. Il faut lui rapprendre à être fier de sa langue. Pour cela, il faut lui enseigner son Histoire.

Cela peut se faire sans compromettre le moins du monde le lien indissoluble, sanctionné par la raison, par l'affection, par les sacrifices mutuels, qui unit la Bretagne à la France.

Beaucoup de Bretons ignorent tout de la Bretagne: son passé glorieux, ses grands hommes, son entrée libre et honorable dans la famille française, son apport intellectuel et artistique au patrimoine commun, sa réputation mondiale enfin.

Et ils soupçonnent à peine sa puissance actuelle au point de vue maritime, et à tous les points de vue économiques, et les titres chaque jour plus manifestes qu'elle a à voir mieux respecter ses libertés religieuses et ses intérêts matériels. Ils ignorent tout cela, parce qu'ils ne savent pas l'histoire de leur pays. C'est leur grande faiblesse.

La première chose à faire, c'est donc de leur apprendre l'histoire de la Bretagne, non pas dans de simples résumés scolaires, quoiqu'ils soient nécessaires, mais dans des conférences pleines de cœur, pleines de bon sens et pleines de vérité.

Quels beaux tableaux un conférencier, parlant devant des auditeurs de campagne ou de ville, pourrait dérouler à leurs yeux en leur exposant ce qu'ont fait et Duguesclin et Clisson et Richemond! En leur montrant que la mission de Jeanne d'Arc ne s'est réalisée dans sa plénitude que par l'intervention du connétable de Richemond! En leur résumant à travers les âges les exploits des marins bretons! Et quels nobles exemples on pourrait encore mettre sous leurs regards, quand on leur montrerait l'héroïsme avec lequel la Bretagne chrétienne a résisté à la tyrannie révolutionnaire!

La chaire de nos églises ferait écho à cet enseignement en faisant mieux connaître nos vœux saints. Nous distinguerions dans leur histoire ce qui est vérité certaine et ce qui est légende discutable. La légende a souvent un fond véridique. Il faut la respecter sans lui donner la même valeur qu'à l'histoire documentée et prouvée. L'his-

toire ne recherche que la vérité. N'ayez jamais peur de la vérité. La vérité est toujours une apologie de Dieu. En enregistrant les actes de sa Providence elle glorifie en Lui le Roi, le Père et le Juge. Et l'Eglise bénéficie toujours de la vérité, même quand cette vérité humilie ses enfants.

L'histoire religieuse de la Bretagne est aussi captivante que son histoire militaire.

Les moines, dont plusieurs étaient en même temps des évêques, les humbles saints vénérés dans nos campagnes, ont fait la Bretagne comme les évêques ont fait la France. Le récit de leur vie, *mêlé à l'exposé d'un point de doctrine ou de morale*, impressionnerait les âmes à la façon des paraboles de Notre Seigneur; ces instructions auraient une saveur d'Evangile.

Nous montrerions aux cultivateurs, les moines, dispersés à travers le pays, dans leurs abbayes et leurs prieurés, défrichant les terres dont nos agriculteurs retirent aujourd'hui des récoltes si abondantes.

Nous ne laisserions pas ignorer aux ouvriers que tous les métiers ont eu leurs meilleurs ateliers dans les monastères antiques, et que les arts renaissants y ont eu leur berceau, comme les lettres et les sciences, comme la Foi et la Charité.

Nous rappellerions aux familles chrétiennes que leurs vieux costumes, reproduction simplifiée des modes en usage dans les anciennes cours, progressèrent en grâce et en distinction, tant que la religion eut assez d'influence pour les soumettre aux lois de la pudeur et du bon goût.

Dieu fasse que dans toutes les écoles, même les plus élémentaires, on se passionne pour deux choses: pour l'étude de l'histoire de l'Eglise et pour l'étude de l'histoire de Bretagne, intimement mêlées à l'histoire de la Patrie française, afin d'en être fiers et de les bien défendre.

Je voudrais que le théâtre breton, le cinéma breton, les conférences bretonnes, la presse bretonne prissent à cœur cette éducation.

C'est le meilleur moyen de donner aux âmes bretonnes conscience de leur valeur et de leur mieux faire comprendre le devoir de reconquérir leurs libertés catholiques. Ces libertés tiennent à l'âme de la race. Jamais nous

n'y renoncerons. Nous aimons la France et nous lui sommes loyalement attachés par le sentiment du devoir chrétien comme par le cœur. Mais nous ne nous sentirons jamais assez libres tant que l'Eglise ne pourra pas chez nous et dans toute la France s'organiser selon sa constitution, avec ses congrégations fonctionnant sans entraves, avec ses écoles participant au budget de l'Etat comme leurs rivales, avec des lois qui ne compromettent ni la vie de la famille ni l'éducation de l'enfant.

Le *Bleun-Brug* demeurera fidèle à ce programme, le seul pratique, le seul réalisable, le seul capable de sauver l'esprit breton.

C'est pourquoi je félicite le *Bleun-Brug*, et je le bénis, en lui souhaitant un long et fécond avenir.

BLEUN-BRUG 1928

Ar brug, seul-vui ma vezont bet gwasket, gand ar goanv, ha seul lirzinoc'h e vez o bleun, pa deu an hanv; setu ar pezh hon eus gwelet splann, e Lesneven, d'ar 4, 5 ha 6 a viz gwengolo diweza: karanteziou a zo, e kalon an den, ha seul-vui e voustrer warno d'omouga ha seul-dounoc'h ez a o gwriziou ha seul uhelloc'h e sav o deliou, o bleunioù hag o frouez.

Bez ez eus bet tud o welout hor gouelioù breizek, evid ar wech kenta, er bloaz-man; sebezet int bet chomet; klevet o doa ano anezo meur a wech, met traou a zo hag a ranker da welet:

Kant klevet
Ne dalv ket eur gwelet.

I. — Baleadenn ar meurz

Tro Landevenneg, Morgad, Lagad-Yar ha Beg-an-Dawiou (lezanvet « *Pointe-des-Pois* » gand ar C'hal-laoued), renket ker mat gand an A. Gouriou ha laouennaet ker brao gant kanerien Rekouyrans ha biniaouerien Sant Yvi a zo bet dreist.

Na vad a ra pleustri douar bet pleustret gand ar zent ha kana o meuleudi el lea'h m'o deus bevet.

En dra ma tremenemp ebioù mein-hir Lagad-Yar a-strons o c'horf, meur a vil bloaz a oa, marteze, hag adsavet en hanv-man, e lavaremp e goueled hor c'hallon: « Penaos ne deufe ket ivez a venec'h da brena abati diskaret Landevenneg, — kalon Breiz, gwechall, — ha da rei d'ezan, a-nevez, eun ene breizat ha kristen! »

II. — Studiadennoù ar merc'her


An eil dervez, dervez ar studi, eo bet an dervez distera, e Bleun-Brug ar bloaz-man, nann, hep mar ebet, dre ar studiadennoù a lenned, hag a oa graet dreist ha traou a bouez bras enno, met, dre niver ar re o selaouet: 60 den a c'helle beza er studiadeg kenta ha 100, en eil; n'oa ket a-walc'h Keit ha ma n'en em jalo ket muioc'h ar Vretoned, eget ne reont breman, gand amzer da zont o yez, arabad eo d'ezo klemm ma vez breset he gwiriou, dre holl, evel ma raer. Ar yezou a gaser d'ar bez eo ar re ne vezont na komzet, na skrivet, na difennet ken, evel m'eo dleet.

Ar studiadennoù war « *Lezennou ar Varzoniaz* » a c'helle beza, marteze, uhel an ton anezi, met « *ar Brezoneg en ti* » hag « *ar Brezoneg er skolioù* » diskleriet ker fraez gand an Dimezell Mari a Gervenguy hag an A. Uguen a oa studiadennoù diouz doare an holl ha kement hini a oa eno en do lavaret, e goueled e galon, ar pezh a weled o doa c'hoant an daou brezeger

da rei da glevet d'ar re a oa ouz o selaou: « Lakomp brezoneg e kement lec'h m'hon eus c'hoant e vefe brezoneg ha raouezomp pelloc'h da c'hedal diouz ar re all ar pezh m'omp gouest da c'her hon-unan. »

III. — Gweladean dudies ar yaou

Estlammusa gweladenn hini ar yaou pa loc'has, d'an taol a 10 eur, Yann V ha tud e lez da vont eus a Lesneven da Follgoad, da bardona.



Cl. Fichoux, Lesneven.

An Duk Yann V o loc'hat da vont da Follgoad



Cl. Freurd, Brest.

An A. 'n Eskob o tigemeroù Yann V e Follgoad
eus a gleiz da zehou e weler : an A. Jancour, vikel vras, an A. Duparc, Duk ha
Dukez Breiz hag an Tad de Kerdane.

Taolenn dudies eus eun amzer dremenet ma ne oa nemet kristenien vat e penn Breiz ha ma welet an hini a zonge kurunenn aour hor Rouaned, o vont da bedi war beziou hor zent koz, o lavaret e « vrevier », bembdez, evel an dud a Iliz hag o c'hervel sant Visant Ferrer, steredenn lugernusa an Iliz, en amzer-ze, da c'her Tro-Vreiz, evit digeri d'hon tud koz hent ar baradoz.

XV^{vet} kantved, amzer ar proe'h, ar furnez, ar zan-telez, amzer ma ouied lakat enni an traou en o renk, traou ar spered a-raok traou ar c'horf, traou ar bed



Cl. Freund, Brest.

Tudchentil lez an Duk o vont d'an oferenn
all a-raok traou ar bed-man. Amzer binvidika Breiz,
e pep doare ha kantved ebet n'en deus lezet, war e
lerc'h, roudou ker kaer hag hen. Na vad a na klevet
ano ac'hanoc'h. Piou a oar?

Eus an traou a zo bet gwechall, ez eus darn ha,
daoust ma n'emaint ket breman, a c'hell beza gwelet
warc'hoaz!

IV. — Lesneven, mor a gan hag a c'hoari

D'al lun embannerien war varc'h a embanne e oa
digor ar goueliou... goueliou dishenvel diouz an holl
goueliou all... goueliou hag a dle unani an holl Vre-
toned, goueliou ene Breiz.

Epad tri dervez, e gwirionez, ker Lesneven a zo bet
eur mor a gan hag a emgleo.

D'ar merc'her da noz *Eun nozveziad reo gwenn hag*

E tal ar poull a voe kavet kaer kenan gand an holl ha
n'eo ket sousez, rak diaes eo kaout eur pezh da waska ar
galon ha da lakat an daerou da bignat anezi betek
an daoulagad evel pezh hor c'henvreur tramor an A.
Berry, ha n'eo ket Dik, — Henri Roudaut, — an hini
en doa ar roll herra eo a c'hoarias ar falla.

D'ar yaou, goude merenn, ar c'hoariadeg a oa e
porz ar retred; dal ma 'z aet ebarz e chomet sebezet
o welet kastell koz Lesneven gand e zor-borz ledan
hag e douribellou uhel, savet eno, koulz lavaret, en
eun nozvez, goude beza bet ijinet gand eul liver ya-
ouank, Yvon ar Floc'h, eus skol-veur a Arzou kaer,
e Roazon (1), hag ar c'hoarierien o c'hoari war e
zor-vint laket da ober leurenn ar c'hoariva.

War varc'h d'ar mor a voe diskleriet da genta, hag
evit digeri hent d'ezan, an dimezell F. Guillarmou, a
ganas poziou kaera *Klemmou mamm ar mortolod*
beuzet:

Va mab a zo bet kollet, war ar mor er bla-man;
Biken ken ne vo kavet, ha bepred her c'hlaskan!

C'houi 'poa, Gwerc'hez truezus, korf ho mab da bokat,
Hag eur bez ho poa ivez, 'n ho kichen d'hen lakat

Pa vin aet eus ar bed-man, va c'herent, me ho ped,
Na zougite ket va c'horf paour, e-unan d'ar vered.

O! dougite va c'horf d'ar mor, an deiz ma vin maro,
Eno, nag hir ye an hent, hon daou ni 'n em gavo

E pelec'h ho peus kavet komzou ker gouest hag ar
re-ze, — komzou an A. Moal — da deneraat kalon eun
den war stad kalet an Arvoriz?

Evidoun-me n'em eus ket kavet e nep lec'h nemet
e pezh Syng, *War Varc'h d'ar mor!* pezh brudet dre ar
bed-holl. E Lesneven, An Itron Inizan, eus a Blou-

(1) An « dais » a voe douget a-zioc'h an Duk hag an Dukez,
da vont da Follgoad, a oa bet savet gantan ivez penn-da-benn.

gerne, a reas roll ar vamm, brao bras; he c'homzou a voe lavaret evel ma oa dleet hag an daerou; anat oa, a oa en he mouez, evel ma oant en he daoulagad.

Ar pezh-se, hep mar ebet, koulz hag « *En o eil bugaleac'h* », c'hoariet dreist o daou, ma vijent bet diskleriet, en eul lec'h, e vije bet aes, d'an holl klevet ha gwelet ar c'hoarierien a vije bet kavet kalz kaeroc'h: Eur porz, daoust peger kloz eo, n'eo ket eur zal eo.

Etre an arvestou an dimezell Eyrault hag an dimezell Le Bourg, eus a Rekouvrans a ganas *Plac'h an triouec'h amouros* ha *Toutouik, la, la, va mabig*.

Jul Guernig, eus a Scaer, a ganas « *Ar Sitojan Morlarjez* » ha *Disul vintin* war eun ton brao ha nevez, n'eo ket bet moulet biskoaz.

Fanch Stephan, eus a Gastell-Paol, a c'hoarias, braokenan, *Yann, paotr ar gêr*.

Strollad kanerien Plouzeniel a ganas *Evit beva gant levenez* ha merc'hed bihan ar barrez-se, a ganas, en eur goroll, *Sav, Breiz Izel d'an nec'h da vannielou!*

Met ar pezh kaera a voe gwelet en abardaez-se eo Salud Breiziz Tramor da Vreiziz Breiz Vihan gand an A. John Dyfnallt Owen. Komzou Dyfnallt, anat oa, a oa komzou hag a deue eus ar galon hag an digemerlaouen a zo bet graet d'ezo a ziskouez n'eo ket ankounac'haet c'hoaz ar vamm gand ar verc'h, daoust d'ar pemzek kant vloaz disparti a zo etrezo.

Salud Bro Gembre Vreiz

Emaon aman a berz Bro-Gembre, va mamm-me hag ho mamm-c'houi, evit c'hoantaat vad d'he merc'h Breiz; na pegen henvel eo ar vamm hag ar verc'h: an hevelep mouezioù ha kouls lavaret an hevelep yez. Kaout a ra d'in emañ, er gêr, war an aoled, hag em eus ho kwelet hepred. Ganet omp bet diwar an hevelep gouenn hag hor gwrizioù a deu d'en em douezia dindan ar mor peurbadus.

An hevelep kudennou ivez hon eus da zirouestla hizio:

ar galleg eo an hini a venn mouga ho prezoneg-c'houi; ar saozneg, an hini a venn mouga hor brezoneg-ni. Daou harz ho peus evelomp-ni: en hanter-noz, ar mor; er c'huz-heol, ar mor; er c'hresteiz, ar mor: ar mor ne glask ober gaou ebet ouzoc'h; en tu all, er sav tieol, an harz eo ar yez hag ar yez a zo krenfoc'h eget kastell ha kleuz. Ar pezh hon difenn, c'houi ha ni, eo ar yez. *Buhez eur yez eo beza e labour*, eme eur c'hrenn-lavar iwerzonek. Red eo eta d'eomp-ni, Bretoned, komz hor yez, er gêr, war an hent, er marc'hajou ha goulenn ma vo desket hemdez er skoliou. Ra deuo Doue d'ho penniga, c'houi, bugale ar ouenn goz, a glask mirout evelomp, ez-vey, an tenzorioù kaera deuet d'eomp digant hon Tadou.

Cymru am byih!
Breiz da virviken!

Goude e brezegenn an A. Dyfnallt hag e bried, e verc'h Meirion hag e vab Geraint, a ganas evel ma ouezer kana e Breiz-Veur kanaouennoù kaera Bro-Gembre: *Klemmou ar vamm gaer, Ar prenn war ar brenn, Galv ar Gavriked hag all*.

An A. Cornic, Renner meur ar *Bleun-Brug* a embanas neuze ar prizioù hag a roas da anaout ar c'helou mat eman XIX^{vet} Gouel ar Bleun-Brug, er bloaz a zeu e Douarnenez.

Gwelet hon eus, e *Bleun-Brug* ar bloaz-man, en dro d'an Aotrou 'n Eskob Duparc ha d'an Aotrou 'n arc'heskob de Guebriant, tud eus pemp eskopti Breiz hag an dra-ze a ziskouez splann, daoust pegement a vrezel a zo bet graet da gement hini a labour da lakat ene Breiz da adsevel en e gaer, n'hon eus ket poaniet en aner ha ne jom ganeomp netra ken da ober nemet kenderc'hel:

Beza droug en neb a garo,
Ni vo Breiziz, beo ha maro.

Y. V. PERROT

Bleun-Brug 1928 - Lesneven

Kenstrivadeg kan ha lennadeg (evid ar Vugale)

- 1^{er} Priz Sylvie Guillou, Plouzeniel.
— Marie Bideau, Plouzeniel.
- 3^{es} — Auguste Abiven, Plouzeniel.
— Bernadine Guillou, Plouzeniel.
— Léontine Rouzic, Plouzeniel.
- 6^{es} — Françoise Urcun, Trégarantec.
- 7 — Antoinette Morizur, Plouzeniel.
- 8 — Marie-Joséphine Martin, Plouzeniel.
- 9 — Françoise Marc, Plouider.
- 10 — Alexandrine Bouniou, Plouzeniel.
- 11 — Marie Branellec, Plouider.
- 12 — Jeanne-Louise Kervengant, Plouzeniel.
- 13^{es} — Yvette Uguen, Trégarantec.
— Louise Stourm, Plouzeniel.
- 15 — Joséphine Lossec, Plouider.
- 16 — Charles Uguen, Plougerne.
- 17 — Brigitte Simon, Plouzeniel.
- 18 — Alexandrine Ladan, Trégarantec.
- 19 — Louise Jaouen, Plouzeniel.
- 20 — Louise Uguen, Trégarantec.
- 21 — Marguerite Bodennec, Trégarantec.
- 22 — Bernadette Pondaven, Plouzeniel.
- 23 — Antoine Simon, Plouzeniel.
- 24 — Jacques Créac'h, Plougoulm.
- 25 — Gabrielle Dantec, Plouzeniel.
- 26 — Marie-Louise Foricher, Plouzeniel.
- 27^{es} — Yves Abjean, Plougerne.
- 28 — Maria Tanguy, Trégarantec.
- 29 — Jean Tanguy, Plougoulm.
- 30 — Vincent Créac'h, Plougoulm.
- 31 — Françoise Morvan, Plouider.
- 32 — Alice Berthévas, Plouzeniel.
- 32 — Alice Berthévas, Plouzeniel.
- 33 — Louis Abjean, Plougerne.

- 34 — François Manac'h, Plougerne.
- 35 — Madeleine Bodennec, Trégarantec.
- 36 — Germaine Gourc'hant, Plouider.
- 37 — Yvonne Le Guen, Plouzeniel.
- 38 — Françoise Merret, Trégarantec.
- 39 — Maria Simon, Plouzeniel.
- 40 — François Féroc, Saint-Méen.
- 41 — Cécile Loaec, Plouzeniel.
- 42 — Maria Offret, Plouider.

Er bloaz-man adarre, Kenstrivadeg ar vugale a zo bet aet mat-tre da benn. Da 8 eur edo ar varnerien o c'hortoz o zud e skol ar Galon-Zakr. Barnerien gwiziek, leal-ha madelezeus ive — evel an aotronez Sparfel, Balcon, Lagadec ha Dantec, ne c'hellent nemet ober labour vat.

Epad ma lenne lod eus ar vugale, en eur zal, lod all a gane er zal e kichen, hag a-raok dek eur 60 bugel a oa bet entetet outo mat ha dillo. Eun dudi oa gwelout o vont hag o tont, prez warno, merc'hed bihan Tregarantec ha re Blouzeniel, gand o c'hoeffigon gwenn hag o chaliou a liou. Piou a vo da genta ? Peseurt parrez a yelo ar maout ganti ? Terzienn a oa, me lavar d'eoc'h. Ne voe embannet ar prizioù nemet d'ar c'hoariadeg vras goude merenn. Prizioù eus ar re goanta a zo bet roet er blâ-man : leoriou a briz-skeudennou, podou fleur-podou liou e priañ Kemper. Bennoz ha meuleudi d'ar veleien, d'ar vistri ha d'ar mestrezed skol o deus poaniet gand o bugale ha kenavo ar bloaz a zeu.

MELEGAN.



1428 - AN DUK YANN V E FOLLGOAD - 1928

Setu aman anioù ar re o deus bet an enor da vont da heul Yann V, da Follgoad, d'ar 6 a viz gwengolo diweza.

An daou vleiner oa :

An A. Amédée Bellec, Lesneven hag an A. 'n Hour, Kerannou, Plouzeniel.

An hini a rae an Duk Yann V oa an A. Gerard de Montfort, eus a vaner Kergoat, e Plouedern; e vamm, eun dimezell de Parcevaux, a ziskenn eus a lignez Aotrou Mezarnou, e Gwiniventer, a heulie Yann V, pa 'z aes da Follgoad, er bloaz 1428.

An hini a rae an Dukez Jann Frans, oa an dimezell Yolande de Dieuleveult, eus a vaner ar Meneg, e Follgoad; he mamm, eun dimezell de Tinteniac a oa o stourm e Emgann an Tregont, skoaz-ha-skoaz gant Jehan de Beaumanoir, mestr bras ar Vretoned.

Ar re a zouge an « dais » oa :

1. François Le Hir, Penarc'hoat, Lesneven.
2. Gabriel Ruellin, à Penarc'hoat, Lesneven.
3. Jean-Louis Bernard, à Penarc'hoat, Lesneven.
4. Joseph Appéré, rue Verdun, Lesneven.
5. Jean Lazennec, à Kergoniou, Lesneven.
6. François Simon, à Villaren, Lesneven.
7. Joseph Castel, à Mesmigoalen, Lesneven.
8. Louis Kervestin, Hôtel Le Roux, Lesneven.


Ar floc'hed bihan a gerze da heul an Dukez oa :

Joseph Guillou, rue N.-D., Lesneven.
Yves Le Goff, rue N.-D., Lesneven.
Emile Abautret, rue N.-D., Lesneven.

An dudchentil a gerze war varc'h da heul Duk ha Dukez Breiz oa :

An A. A. :

De Kermenguy, Guilers.
Césaire de Poulpiquet, Quéménéven.
Jacques Amyot d'Ynville, Roscoff.
De Rotalier, Brest.
Louis Croc, Plouzeniel.
Jean de Poulpiquet, Lokournan.
Jean de Kermenguy, Koat-Hir, Lokournan.
Goulven Berthou, ar Follgoad.
Jean Inizan, Feunteun-Véaz, ar Follgoad.
François Le Roux, Brézéchen, ar Follgoad.
Yves Le Rest, Traon-Doun, ar Follgoad.
Yves Grall, Kergolestroc, ar Follgoad.
Jean-Pierre Thomas, Kerzu, ar Follgoad.
Guillaume Boulic, bourg, Plouider.
François Guillerm, Lezdourduf, Plouider.
Yves L'Haridon, Kerdivez, Plouider.
François L'Her, Kerleven, Plouider.
Antoine Kerleroux, Dourmap, Plouider.
François Roué, Kerilien, Plouider.
Louis Sparfel, Dourmap, Plouider.
François-Louis Abjean, Kerleven, Plouider.
Jean Cornec, Coatmenec'h, Plouider.
Michel Dourmap, Dourmap, Plouider.
Francis Bihan-Poudec, Lanvrein, Goulven.
Jean Dantec, Kerjean, Saint-Nouga.
Biel Roudaut, Bourk, Plougerne.
St Boucher, Eneskadec, Plougerne.
Louis Loaëc, Kergasken, Plougerne.
Job, Cabon, Kergasken, Plougerne.
Jean-Louis Cabon, St-Kéan, Plougerne.



Yann V, e kichen ar grëaz ruz, o tizrei da Lesneven

Yves Loac'h, Kerferré-Vraz, Plougerne.
 François-Marie Loac'h, Gorrékear-Vian, Plougerne.
 Louis Grignou, Bourk, Plougerne.
 Louis Croc, Plouzeniel.
 Léon L'Hour, Plouzeniel.
 Job. Abiven, Plouzeniel.
 Etienne Abjean, Plouzeniel.
 Pierre Lichoux, Plouzeniel.
 Visant Barbier, Plouzeniel.
 Albert Kerlidou, Plouzeniel.
 Visant Abjean, Plouzeniel.
 François Roudaut, Trémaouezan.

*An Itronzed hag an dimezelled a gerze, war varc'h,
 da heul Duk ha Duhez Breiz oa :*

An I. Louis Croc, Plouzeniel.
 Marie-Thérèse de Kerdanet, Trégarantec.
 Ysabel hag Anna de Poulpiquet, Quemeneven.
 Yvonne de Kermenguy, Kastell-Paol.
 Madeleine de Kermenguy, Kastell-Paol.
 Félicie de Poulpiquet, de Brescanvel, Lokourman.
 Marguerite du Vergier de Kerhorlay, Keraouel, Gwinevez.
 Jeanne Le Roc'h, Lesneven.
 Simone Le Roc'h, Lesneven.
 An Itron Croc, Plouzeniel.
 An dimezelled: Geneviève L'Hour, Plouzeniel.
 Marie Abiven, Plouzeniel.
 Marie Sallaün, Pouzeniel.
 Anna Raguénès, Plouzeniel.
 Marie Berthou, Plouzeniel.
 Marie-Anne Gcuriou, Plouzeniel.
 Félicie Barbier, Plouzeniel.
 An dimezell: Améline Roudaut, Trémaouezan.
 Eugénie Thomas, Kerzu, ar Follgoad.
 Anne-Marie Le Roux, Brézec'henn, ar Follgoad.
 Marie-Yvonne Bellec, Kréver, ar Follgoad.
 Aline Sparfel, Dourmap, Plouider.
 Marie Dourmap, Dourmap, Plouider.
 Marie-Jeanne Thomas, Lezfretin, Plouider.
 Aline Marrec, Delfedan, Plouider.
 Jeannie Le Berre, Kersalomon, Trémaouezan.
 Marguerite Du Vergier, Keraouel, Gwinevez.
 M. Berthou, Kerlouan.
 Marie Cabon, Kerveogan, Plougerne.
 Marie-Yvonne Cabon, Kergasken, Plougerne.
 Marie Cabon, Castell-ar-Ram, Plougerne.
 Françoise Loac'h, Kergasken, Plougerne.
 Marie-Anne Loac'h, Kerferre-Vras, Plougerne.
 Philomène Uguen, Kerizoc, Plougerne.

Ar re a rae ar skouederien oa :

Augustin Salou, Plouzeniel.
 Allain Cabon, Plouzeniel.

Louis Abiven, Plouzeniel.
Joseph Guillerm, Plouzeniel.
Auguste Pondaven, Plouzeniel.
Visant Abhervé, Plouzeniel.
Guy Gouriou, Plouzeniel.
Auguste Roudaut, Plouzeniel.
Jean Kerfourn, Ménec, ar Follgoad.
Antoine Le Roux, Brézec'henn, ar Follgoat.
Baptiste Coat, Gare, ar Follgoad.
Emile Le Saint, Feunteun-Véaz, ar Follgoad.
Henri Donyal, Kergolestroc, ar Follgoad.
Yves Thépaut, Coatjunal-Vras, ar Follgoad.
E. Loaëc, Kerferré-Vraz, Plougerne.
Louis Loaëc, Gorrékear, Plougerne.
M. Nicolas, Kerelven, Plougerne.
Louis Talec, Bourk, Plougerne.
Yves Uguen, Bourk, Plougerne.
Job Simier, Enezkadec, Plougerne.
Jean-Marie Uguen, Kérizoc, Plougerne.
Léon Guéguen, Prat-Lanvaon, Plougerne.
Jean Abaléa, Dourmap, Plouider.
Jean-Louis Le Bras, Trégoaran, Plouider.
Pierre Guéguen, Runéven, Plouider.
Jean Habasque, Kervabon, Plouider.
Charles Le Verge, Kersantic, Plouider.
Yves Simon, Trégoaran, Plouider.
Jean Floc'h, Lanvrein, Goulven.
François Cardinal, Kerfraval, St-Nouga.
Jean Noël, Péleuze, Plounéour-Trez.

Ar re a rae ar flec'h oa :

Jean Dourmap, Dourmap, Plouider.
Pierre Bihan, Lezfretin, Plouider.
Pierre Thomas, Lezfretin, Plouider.
Yves Pennec, Kerailliz, Plouider.
Pierre Roué, Kersec'henn, Plouider.
Alphonse Abolivier, Kersantic, Plouider.
Louis Le Borgne, Kroaz-ar-C'heré, Plounéour-Trez.
Jean-Marie Dantec, Kerjean, St-Nouga.
Yves Pronost, Kerailliz, Goulven.

François Marrec, Plouzeniel.
Edouard Thomas, Plouzeniel.
Jean Abiven, Plouzeniel.
François Pouliquen, Plouzeniel.
Baptiste Morizur, Plouzeniel.
Yves Berthévas, Plouzeniel.
François-Louis Morizur, Plouzeniel.
Albert Barbier, Plouzeniel.

Ar re a rae ar zoudarded oa :

Joseph Postec, au bourg, Plouider.
Saik Postec, au bourg, Plouider.
Louis Pennec, Kerailliz, Plouider.
François Corre, Kerailliz, Plouider.
Jean Le Goff, au bourg, Plouider.
Yves Le Goff, Coatiginou, Plouider.
Jean-Baptiste Inizan, Grémidou, Plouider.
Ambroise Le Menn, Kersec'henn, Plouider.
Yves Marrec, Plouzeniel.
Fanch Huguen, Plouzeniel.
Louis Guéguen, Plouzeniel.
Yves Guéguen, Plouzeniel.
Job Toullec, Plouzeniel.
Joseph Marzin, Plouzeniel.

Ar re a deue warlerc'h en o dilhad seiz ruz oa :

Marie Abaléa, Enez-Inoc, Plougerne.
Marie-Anne Le Coz, Bourg, Plougerne.
Jeanne Guillermit, Bourg, Plougerne.
Marie Kerdraon, Kergonvel, Plougerne.
Rosalie Le Roux, Ti-Koz, Plougerne.
Donatienne Roudaut, Lanvaon, Plougerne.

AR SAC'HAD RE BOUNNER

N'eus ket keit-se c'hoaz e weled, harp en unan eus ar baliou a ya, diwar hent bras Lokournan da Witalmeze, da vaner Kergroadez, e parrez Brelez, eun tammig ti soul gand eul liorz, en e gichen. Meur a hini, eus ar re a dremené, a veze nec'het o klask gouzout perak edo al lochenn-se eno, rak diskar a rae ar vali. Setu amañ petra lavaras d'in war-ze, eun den koz eus ar vro a en em gavas gannen e kichen an tammou mogeriou a jom c'hoaz da verka e pelec'h edo gwechall chapel sant Charlez.

En ti soul-ze e veve gwechall eun intañvez paour ha n'he doa nemed eur verc'h, Enora, eur baotrezenn trizek vloaz, eus ar re wella. O diou e c'hounezent o bara o neza, keit ha ma veze gelled gwelet sklér, pe o werza kuchennou frouez ha patatez a gasant da varc'had Lokournan. Maner Kergroadez n'oa ket neuze ar c'hastell bras m'eo breman; an ti n'oa ket kalz kaeroc'h eged an tiegeziou all diwardro hag an aotrou a veve ennan a oa eun den didrouz a dremene e holl amzer gand e dud pe gand e verourien; mervel a eure goude beza dimezet e bennher gand eur bennherez pinvidik eus a gichen hag an daou zen nevez a lakeas raktal, en o fenn, freuza o maner koz da zével eun all, en e lec'h, hag a vije diouz o doare.

Karradou mein-ben a voe chalbotet eus an Aber-Ildut; mansonerien ha darbarerien a deuas hag a labouras epad daou vloaz da zével, en e blomm, an ti a welomp breman ker kaer ha p'edo nevez flamm, dre ma 'z eo bet nevezet, er bloaveziou tremen, gand an Aotrou Chevillotte ha n'eo ket anat ken ar gaou a oa bet graet outan gand an Dispac'h: goude kastell Keryann, hen oa kaera kastell a oa e Leon.

Met Fransez Kergroadez a lavaras, outan e-unan, n'oa ket a-walc'h d'ezan kaout eun ti kaer ha pinvidik, e oa red d'ezan ouspenn kempenn an adre-mez evit ma ne vije ket diskaret ar maner gantan. Hogen, betek neuze, ne oa, wardro eno, nemet parkeier labourer, eur vali voan pe ziou hag eun tammig koad fao ha dero: « Nevezi a rankan an traouze holl, eme an aotrou yaouank, rak ouz o lezel, evel m'emaint, e tiskarint va maner. »

Dont a eure labourerien a freuzas ar c'haeou tro-wardro, a gompezas an douar hag a zigoras baliou ledan a voe plante gwez a bep tu d'ezo.

Evel m'oa da aotrou Kergroadez an holl barkeierze n'oa bet trouz ebet diwar o fenn. Koulsgoude eun dachennig a oa ha n'oa ket d'an aotrou hag oa an hini m'edo warni ti soul an intañvez; unan eus ar baliou brasa a dlie tremen drezi. Fransez a gave d'ezan n'en doa ket a ezomm da veza



nec'het gand an dra-ze hag e vije a-walc'h d'ezan kinnig eur yalc'had vat a arc'hant d'an intañvez evit dont a-benn d'he lakat da werza d'ezan he zammig leve. Eun dervez, evelato, e lavaras, outan

e-uann, e oa mall d'ezan ober ar brenedigez hag ez aes da gaout an intañvez.

— Maouez kêz, emezan, ezomm am eus da ziskar da lochenn evit kaeraat ardremez va maner. Pegement ez peus c'hoant da gaout anezi ?

— Ne werzin ket ar pezh am eus bet digant va zud, nag evid aour, nag evid arc'hant. Va zi, Aotrou, n'eo ket kaer, met boaz oun dioutan ; m'her c'har, evel ma karit ho kastell nevez, hag youl am eus da vervel ennan.

— Selaouit, eme an aotrou, n'it ket da veza diskiant. Ho lochenn hag ho liorz etrezo o daou, ne dalvezont ket a 10 skoed ; kinnig a ran d'eoc'h 500, da lavaret eo peadra a-walc'h d'eoc'h da argourouui mat ho merc'h Enora. Graet eo ar marc'had, n'eo ket 'ta ?

— Nann, Aotrou. Diaes e kavan enebi ouzoc'h, met goude ma kinnigfec'h d'in 5000 skoed e lavar-fenn nann d'eoc'h c'hoaz. Va douar a zo d'in ha c'hoant am eus d'hen derc'hel. Grit ho pali el lec'h ma keroc'h, ha va lezit da vervel, en habask-der, en ti m'eo marvet ennan va zud koz.

— Eun ti kaer, e gwirionez, a c'hrosmolas Aotrou Kergroadez, hag a vefe diskaret gand eur zourradenn avel. Gwel, epad an noz, petra vo ar gwella d'it da ober. Warc'hoaz e kasin va mestr-mevel da c'houlenn ouzit da c'her diweza. Dalc'h koun e fell d'in kaout da di, kousto pe gousto, hag e rankan e gaout, dre gaer pe dre heg, hag en doare-ze, eta, ar gwella ez peus da ober eo ehana da ober da benn kalet evel ma res.

Antronoz ar mestr-mevel a yeas hag a voe respontet evel ma oa bet respontet ar mestr, en derc'hent ; kaer en devoe poanie ne deuas ket a-benn eus an intañvez. Dizrei a eure d'ar maner da lavaret d'an Aotrou penaos e oa tremenet an traou : henman a yeas droug bras ennan.

Demgoude m'o devoa debret o merenn, an intañvez hag Enora a oa o neza, war dreuz o dor, pa weljont Aotrou Kergroadez o tont daveto gand eun toullad labourerien.

— Er maez ! emezan, n'eo ket eun hanter follez eo a viro ouzin da ober ar pezh am eus laket em fenn. Ho lochenn a zo o vont da veza diskaret hag a-raok an noz ne vo ket anat ken e pelec'h e vo bet. Setu amañ eun digoll a roan d'eoc'h dre ma 'z-oun re vat.

Hag e stlapas eur yalc'had arc'hant war barlenn an intañvez koz strafuilhet a glaskas enebi ha goulenn pardon. Enora a glaskas unani he fedennoù hag he daerou gant re he mamm. Met an Aotrou, ken atapiet oa gand e labour, ma ne zelaoue netra. En eur c'hart eur an arrebeuri a voe tennet er maez ha laket, en eur c'harr bihan, d'o c'has pelloc'h. Edo ar vansonerien o vont da freuza ar mogerioù pa deuas eur zonz vat da Enora digaset d'ezi, marteze, gant he ael mat. Sec'ha a eure he daerou hag e lavaras gouestat d'al laer :

— O vont kuit emañ, Aotrou, p'eo gwir e c'hourc'hemennit, met, a-raok mont ac'han e karfen gellout ober ouzoc'h daou c'houlenn.

— Grit ho koulennou, eme an Aotrou, mezek eun tamm, da veza bet ker rust ouz an intañvez, rak eun den a galon vat oa ; livirit petra ho peus c'hoant da gaout.

— Da gentañ e karfen kas eur sac'had douar ganen eus va liorz.

— Kasit ganeoc'h eur zac'had ha daou hag ouspenn zoken, mar kirit.

— Gand eur zac'had am bo tra a-walc'h, eme ar plac'h yaouank he doa klasket eur zac'h lien hag eur bal hag a oa en em laket a-zevri da leuna he sac'h.

Pa voe leunet ganti e lasas ar zach hag e lavaras :

— An eil tra am eus da c'houlenn ouzoc'h eo ma rofec'h an dourn d'in da zamma ar zac'had douar-ze er c'harr bihan. C'houi hoc'h unan ha nann eun all eo a garfen gwelet o rei an dourn d'in.



An Aotrou ne gave ket kals al labour-ze, diouz e zoare, met p'eo gwir en doa roet e c'her ne gredas ket mont en e eneb. Soubla a eure da gregi er zach met pa glaskas e zibrada n'oa ket evit hen ober.

— Re bounner eo, emezan, en eur zec'ha ar c'houezenn diouz e dal.

— Ha koulsgoude, eme Enora, n'eus aze nemed eul lodennig vihan eus an douar a gemerit digant va mamm. Penaos eta e c'helloc'h dougen dirag Doue, hep krena dindan ho samm, pouez al liorz en e bez hag an ti.

Fransez Kergroadez a jomas sebezet. Eur

c'hristen mat e oa ha komzou ar verc'h yaouank a lakeas keuz da zével en e galon :

— Gwir a leveres, emezan, a-benn eur pennad, ha fall am eus graet o tont da derri ho penn d'eoc'h diarbenn an tamm douar-ze. Chomit ho tiou da véva war ho peadra. Keit ha ma vin beo, m'hen tou, den n'ho silapo ac'halese ; aotre a c'houlennan ouzoc'h, evelato, da lakat va bali da dremen tost d'ho ti. Bep wech m'her gwelin, he gwel hepken a lavaro d'in, oun bet tost, eun dervez da veza displeal, ma ne vije ket bet savet mouez eur paourkez plac'h yaouank da youc'hal d'in edon o vont da fazia. Dalc'hit va yalc'had arc'hant ; her



gounezet mat ho peus kemend all a drabas am eus graet d'eoc'h. Buan, emezan d'e dud, renkit an arrebeuri aze, adarre, evel ma oant ha d'comp ac'han.

Setu aze penaos e chomas lochenn an intañvez en he sav hag e c'hellas mervel enni, e peoc'h. Evit derc'hel koun eus an dra-ze hag her rei da anaout evel eur gentel d'e vugale, Aotrou Kergroadez a lakeas kizella, er vein, a-zioc'h dor vras e gastell, ar geriou-man: **SI : NON ; IN : TIMORE : DOMINI : TENVERIS : TE : INSTANTER : CITO : SUBVERTETUR : DOMUS : TVA.** da lavaret eo, e brezoneg: *Dal ma ne vezi ket ken e doujans Doue, emae da di o vont da goueza en e boull, hag ar skrid-ze a c'heller da lenn atao eno.*

G. P.

EURED VREIZAD

D'an 12 a viz Gwengolo eo bet benniget, e iliz Rochefort, e bro Wened, eured Kristian ar Part ha Germana Guenego: yec'hed hag eurveded d'an daou bried nevez.

DIVINADENNOU

Ho pedi a raer da zigas responchou divinadennoù Gouere hag Eost a-benn ar 15 a viz Here da: *M. l'abbé Guillou, vicatre, Plouider.*

RETRED LESNEVEN

D'ar 15 a viz Here, e tigo e Lesneven, eur retred evid ar baotred yaouank a dle mont da zoudarded e miz du a zeu. D'ar gerent eo kas o bugale d'ar retred-se.

Kevrenn ar Vugale

Kenstrivadeg Sent ar Vro

VA MIGNONED VIHAN,

Dont a ran hirio da rei d'eoc'h eun tammig anaoudegez eus ho labour, evel em oa lavaret d'eoc'h, er miz tremenet.

Trugarez d'ar re holl ac'hanoc'h o deus kemeret perz er genstrivadeg adaleg ar c'hosa betek ar yaouanka, eur botrezig eiz vloaz, eur pennad « bleomelen » d'ezi. Trugarez ive d'ar re holl o deus hoc'h aliet da staga gant al labour : tadou, mam-mou, renerien ar skoliou kristen, beleien pe dud all a volontez vat. Ra blij gant Doue ha Sent Breiz skuilh warnoc'h holl ar grasou ar puilha. Eur vandennig vras zo ac'hanoc'h holl. — Evelato, eus tachadou zo, eo deuet re rouez an holl, koulskoude, al labouriou d'eomp. Daoust ha ne vefe mui a vugale e parrezioù zo, pe aet int holl da vriz-gallaoued? Nag an eil nag egile. Met a benn ar bloaz a zeu, avat, kement hini en deus d'en em emmel eus ar vugale: ar vistri er skoliou, ar veleien er c'hatekiz, hoc'h alio stankoc'h ha startoc'h da ober al labour a vo goulennet ouzoc'h ober.

Kenta tra zo da ober eo, na petra 'ta skriva an dever e brezoneg. Unan pe zaou o deus her graet e galleg. Poaniit ive da glask geriou brezonek yac'h ha mat. Arabat lavaret an den « celebr », lavarit an den « brudet »! Na dit ket da gemeret skouer diouz ar briz-breizat-se, kos soroc'her, a lavare :

« Kemeromp ar geriou estren muia ma c'hellimp, gant ar bal-dol, hag hor bezo eur yez piividik ha kaer. » Ya, m'arvat! An dra-ze zo evel ma lavar-

fen: « Lakeomp peb a voutou torchou-foenn ha peb a galabousenn d'an holl lastez parizianed a deu ker stank an hañv war hon aochou hag hor bezo ganto eur ouenn Arvoriz yac'h ha krenv. » Lezomp muia ma c'hellimp, o yez gant ar re all ha dalc'homp mat d'hon hini. Pa vezo ezomm, kempennomp, kaereomp ha nevezomp hi, hervez he stumm en eur lakat da zavel geriou nevez diwar gwriziou ar geriou koz.

Arabat d'eoc'h ive, va bugale, ober ho labourou, ger evit ger, diouz al levriou a vezo ganeoc'h.

E kenver ar re o deus graet kement-se, omp bet strisoc'h ha frankoc'h omp bet e kenver ar re ac'hanoch o deus graet o labouriou anezo o-unan goude beza lennet o leoriou hag o serret goudeze.

Na rit ket ken neubeut o teveriou an eil diouz egile. Diskaret ez eus bet poentchou d'an deveriou a veze henvel-poch an eil ouz egile.

Setu ama ar respontchou d'ar goulennou.

I. Ar zent a zavas an eskoptiou a oa gwechall e Breiz eo: Sant Patern a zavas eskopti Gwened; S. Kaourintin, hini Kemper; S. Paol, hini Kastell; S. Tugdual, hini Treger; S. Brieg, hini S.-Brieg; S. Samson, hini Dol ha St-Malo, hini Aleth. (ar gerze a voe graet Sant-Malo anezi adaleg maro ar zant).

II. Ar zant a voe kaset da Rom da ginnig gourc'hennou an Duk d'ar Pab ha da c'houlenn aotre d'an Duk da zougen ar gurunenn a roue eo sant Konvoion, abad kouent Redon (gouel d'ar 5 a viz genver). An Duk oa Nominoe. Lakaet e voe d'ezan e gurunenn a roue e kêr Dol.

Meur a hini o deus respontet a dreuz-krenn d'ar goulenn-man. Unan a ya beteg skriva eo S. Per, abostol, eo a yeas da ober ar gefridi-ze da Rom. S. Per,

evit gwir, « a deuas da jom da Rom, hag a varvas eno. » Ar ger-ze eus ar c'hatekiz eo en deus lakaet spered ar paotr da drevalia. S. Per a oa maro tost da 800 vloaz a oa pa dremene an traou-mañ. — Taolomp evez petra da lavaret ha dreist-holl petra da skriva.

III. E buhez pe sant ez eus ano:

1) eus eur pesk a dalveze da vezur d'ar zant-se? E buhez S. Kaourintin.

2) Eus eur c'hloc'h kavet e genou eur pesk? E buhez S. Paol a Leon.

3) Eus eur morzol a lazas ar zant-se en eur goueza war e benn? E buhez S. Gouesnou.

4) Eus eur vozad zouar a droas en aour? E buhez S. Goulc'hen.

Ar goulenn-ze a zo bet respontet mat d'ezan gant an holl kouls lavaret. A-walc'h, avat, oa respont gant eur ger. Meur a hini o deus skrivet eur bajenn pe ouspenn evit displega an doare m'oa digouezet an traou-ze. Ne c'houlennet ket kement-se.

IV. An daou zant yaouanka enoret en eskopti eo Sant Melar (gouel d'an 3 a here) ha S. Tremeur (gouel d'ar 7 a viz Du).

Unan en deus respontet: S. Bruno!! Ha meur a hini all: S. Donasian ha S. Rogasian, patroned an Naoned. N'eo ket. An daou zant-ma a oa kouls lavaret tud yaouank pa voent lakat d'ar maro e lec'h S. Melar ha S. Tremeur ne oant c'hoaz nemet bugale.

V. Pehini eo ar zant breizat a garit ar muia, ha perak?

Ama n'oa nemet rei eur rezon, pe ziu, pe deir, evit lavaret perak e karit muioc'h eur zant breizat. eget ar re all.

Meur a hini o deus anvet sent ha n'oant ket breizat. Ar zant a garan ar muia eo, eme unan: S. Alar, patron ar c'hezeg. Eur pootr, evel just, eo en

deus kavet ar respont-se. Sant Izidor, patron al labourerien douar, eme eur pôtr all, eo va zant muia karet. Va zant-me eo « An tad Maner », ha va hini-me « S. Mikael an Nobletz ». — Ya, met an daou zen-man n'int ket c'hoaz diskleriet sent gant an Iliz. — Va zant-me, eme eun all c'hoas eo sant Per « abalamour ma talc'h alc'houeziou ar baradoz ». — Setu aze unan hag en deus c'hoant ober al lez da zant Per evit mont d'ar baradoz.

VI. Buhez S. Herve ha buhez S. Gwennole.

Goulennet oa ouzoc'h ober eun diverra eus buhezioù ar zent-se en 20 pe 25 linenn diwar benn pep hini. — Lod ac'hanoc'h o deus gret peder, pemp pajenn pe ouspenn, lod all peder, pemp linenn hebken.

Taolit evez!

Na re neubeut, na re

Er c'hreiz emañ ar furnez.

Taolit evez petra da skriva. E buhez S. Herve, unan a skriv : ar zant-mañ a « Ganas » e Gwitevede. Ar zant-mañ a zo bet ganet an hini eo. Setu amañ gwasoc'h : Sant Herve a yeas da ziaouail ar zaout hag ar bleiz a zebras an azen. Pe c'hoas e buhez S. Gwennole : ar zant-mañ a voe kaset da eur gouent anvet Budoc. — S. Budoc oa ano rener ar manati ma oa kaset ennan S. Gwennole d'ar skol ha nann ano ar manati. Taolit evez. Lavaret a vez grêt : « An traou a ya gant an avel hag ar bac'hadou a gouez war ar chouk. » Evelse ive ar c'homzou a nij kuit, met ar gerioù skrivet a jom.

Setu amañ ive eur ger koant dreist kavet en eun deyer diwar benn S. Gwennole : « e ene a jomas gwenn evel al lili a skuilh er maesioù pep c'houez vat. »

Ha brema, va mignoned vat, e lavaran d'eoc'h kenavo ar bloaz a zeu.

P. G.

Eun Nozveziad reo gwenn

(Kendalc'h)

ELIN. — Chomit a-zav eur vunutenn, Gwilhou; me gred beza klevet unan bennak o skei war an nor.

TAD. — Ne dleer ket distresa eul lennadeg evel-hen.

ELIN. — Re yen eo evit lezel unan bennak, er mêz, fenez, Gwilhou!

(Skei a raer, eun eil gwech, krenfoc'hik)

TAD. — Jann, gwell eo digeri an nor evelato; marteze, ar beleg, a go deuet er pardaez-mañ, elec'h dont warc'hoaz ar beure! (Jann a denn ar prenn hag a zigor an nor).

JANN. — Piou a zo aze?

DIK (o tont en ti, dre an nor, liou morlivet warnan, ha treut maro; bec'h en deus o vale. E vouez a zo garo ha dalc'h mat her c'hlever o pa-saat). — Jann!

ELIN (o sevel gouestadig war he zreid hag he mouez o krena). — Piou a zo 'ta, Jann? Va c'hez Dik? te eo a zo aze? lavar. Deus da gichen an tan, va mabig me, da domma da zaouarn skournet. Atao e vezes war va spered, epad an nozveziadoù reo gwenn evel houman.

TAD (trenk). — Elin, azevit ha n'int ket da vont er mêz ac'hanoc'h hoc'h unan evelse.

ELIN. — Gwilhou! Gwilhou! penaos n'her grafen ket pa welan Dik vihan deuet en dro goude kemend all a vloaveziou tremenet er maez eus ar gêr: « Va mab a oa maro hag eo deuet da adveva; kollet e oa hag eo adkavet! »

TAD (*c'houero*). — Gwreg! Mez a dlefec'h kaout o lavaret geriou sakr evelse diwarbenn eur c'hrouadur ker fallakr (*hen diskouez a ra gand e viz*) en deus hon diskaret dirak ar barrez a-bez hag hon tostaet ouz ar bez; pell a-raok hon amzer, ha ruziet gand ar vez, c'houi, e vamm ha me, e dad. Hag eur mab eo an hini en deus sanket an tachou e archedou e dud?

ELIN. — O, Gwilhou! va laza a reoc'h gant ho keriou ker flemmus ha ker kalet da glevet!

DIK (*a dosta gouestadik ha mezok ouz an daol hag a astenn e zourn d'e dad*). — Va zad, ha teurvezout a rafe ganeoc'h starda va dourn d'in c'hoaz?

TAD (*o tenna e lunedou hag ouz ho lakat er voest*). — N'her grin ket.

ELIN. — Gwilhou! Dik eo, ar mab unik hon eus ni!

TAD. — Va mab-me a zo maro c'houec'h vloaz a zo pa guiteas ar gêr, en eun doare mezus. Jann, mall eo d'it mont d'az kwele. (*Jann a enaou eur c'houlouenn hag an tad a zav poueziou an horolach*).

ELIN. — Chom, Jannig; Dik, me a zo sur, en deus naoun; aoz eun dra bennak d'ezan. Eun tamm bennak a zebri, n'eo ket 'ta, va faotr bihan?

DIK. — N'em eus ket a naoun, mamm; mont a c'helles d'az wele, Jann!

ELIN. — Asa! va faotr kêz, red eo d'it debri eun tamm bennak. Pegoulz ez peus debret evid ar wech diweza?

DIK. — N'ouzon ket! e gwir! n'ouzon ket! met evit breman n'eo ket digor va c'halon da zebri tamm.

JANN. — Mat neuze ez an d'an nec'h (*hag e ya, dre zor an dereziou, gand ar goulou*).

ELIN. — Tosta ouz an tan, va mabig-me. (*Ha Dik, war e zaoulin, a dosta ouz an tan, harp ouz daoulin e vamm a weler o kemeret e zaouarn da c'houzout ha tomm int*.) Doue ra viro pep hini! da zaouarn a zo yen, evel ar pri gwenn; en hanv Doue, tomm i, mat' diouz an tan ha kemer eur werennad the, Dik vihan, da ober plijadur d'in, pa ne ve ken.

DIK. — Nann! mamm, gwir; n'oun ket gouest, da gemeret netra, met karout a rafen gellout gourvez, war ar sofa-man, e kichen an tan, ma kav mat va zad her grafen. Skuiz oun, met me a dec'ho warc'hoaz kerkent hag an deiz, ma c'hellan gourvez aman fenez.

TAD. — Ma chomes aman fenez ne ri kammed ebet da vont eus an ti-man a-raok dilun veure. Torret ez peus lezenn ar zul epad ar bloaveziou diweza-man, met warc'hoaz n'her gri ket, en ti-man, pe mar d'eo an dra-ze eo a zo en da benn, gwella ez peus da ober eo mont en hent dioc'htu.

Gra eta da zibab: unan a zaou eo, pe chom aman fenez ac'han da zilun veure pe mont en hent raktal. Ha breman Elin, deuit m'ho skoazellin da vont d'an nec'h.

ELIN. — Ha n'ho peus ket eur gwele da Zik?

DIK. — O! me gousko war ar sofa-man, ma roit d'in eur pallenn pe eun dorchenn.

TAD (*o vont e dor an dereziou*). — Jann, taol aman d'an traon eur pallenn hag eun dorchenn.

ELIN. — Ha n'ankounac'ha ket teurel keuneud en tan, va mab-me ! E gwir, n'ouzon ket penaos e c'hellfen da lezel da unan er gegin-man.

TAD (*e kichen dor an dereziou*). — Red eo bet d'eoc'h e zilezel epad meur a gant noz, epad ar c'houec'h vloaz diweza-man, pa ne oa ket nec'het tamm ebet ganeoc'h hag eo sebezus nra ne c'hell ket chom, heb e vamm, aze e-unan, edoug an noz-man, breman (*dougen a ra eur pallenn hag eun dorchenn hag o stlepel a ra war an aoled*). Setu i aze ; breman, Elin, roit d'in ho prec'h ha me ho skoazio da bignat d'an nec'h.

ELIN (*o kemeret e vrec'h a zav en he sav*). — N'ez peus ket roet d'in eur pok hepken, Dik, goude beza bet keit all er maez eus ar gêr.

DIK (*o vriata e vamm*). — Set ' aman, mamm.

ELIN. — Me gav d'in eo dec'h eo e pokan d'it c'hoaz pa 'z laken en da wele; noz da d'it, va mabig ker ; O va Doue ! ne blij ket d'in al liou gwenn a welan war da zivoc'h, nag an doare a gemeres da basaat (*En em zistaga a ra diouz brec'h he gwaz hag ec'h azez adarre*). — Gwillhou, it d'ho kwele ; ne finvin ket eus an toull-man, er pardaez-man ; n'heller ket lezel Dik, aman e-uman, ker morlivet all ha ma 'z eo ; gwenn eo evel eur c'horf maro.

DIK. — Selaouit, mamm garet, ma na 'z it ket raktal d'ho kwele, me a zo o vont ac'han, dioc'htu, e kreiz ar yenienn vras ; it eta, gant va zad ; me a vo brao bras, aman, va-unan.

TAD (*o sellet piz ouz Dik*). — N'em eus ket da welet c'hoaz oc'h ober ker brao d'az vamm ha ma

res hizio (*sec'h*). Breman lavar d'eomp ha klanv out pe ne d'out ?

DIK. — N'oun ket.

ELIN. — Lavar ar wirionez, va faotr me ; pegeit a zo ez peus paz evelse ? Eur paz fall kenan a gav d'in ez peus !

DIK. — It d'ho kwele, mamm ; me a vezo seder evel an alc'houder, warc'hoaz veure... ma vezan beo !

TAD. — Breman, Elin, pignomp.

ELIN (*a zav sikouret gand an tad hag a gerz harpet, war e vrec'h, betek dor an dereziou ; en eun gavet e kichen an nor e tro he daoulagad warzu he mab*). — N'ankounac'ha ket lakat keuneud en tan ; leun eo toull ar geuneudog ; ni a vezo savet warc'hoaz araok ma tihuni. Noz vat, Dik vihan.

DIK. — Noz vat, mamm. (*Ha gant aoun*). Noz vat, tad.

TAD (*a dro warzu Dik, hep lavaret ger*). — Breman, Elin, taolit evez, aman, avat, o pignat an dereziou. (*Dik a zo e-unan, hag e weler eman o prederia ; sellet a ra en dro dezan, hag, en eun taol, e wel an almanag hag e kav e bortred kuzet dindan. Renka a ra e ballenn hag e dorchenn, gwella ma c'hell, hag e tosta ouz dor an dereziou da zelaou. Lakat a ra e dog war e benn hag e sav kolier e zae en dro d'e c'houzoug ha goude beza en em dommet eur pennadig e voug ar goulon hag e ya er mêz dre zor ar c'hraou, hag e ouel gouestadik hag e serr an nor, war e lerc'h, heb ober trouz ebet. Epad eur vunutenn ar gegin a jom goullo ha tenval. An tad a ziskenn eus ar zolier, hanter ziwisk ; war e vrec'h e toug pallennou ha linseliou, ha war e lerou, e kerz didrouz, warzu ar sofa ;*

lezel a ra an traou a zo gantan da goueza pa wel n'eus den ebet ken er gegin; enaoui a ra ar goulou hag e sell en dro d'ezan, sebezet; gervel a ra gouestadik: Dik, Dik vihan, e pelec'h emañ? O veza ma ne glev den o respont e red warzu an dereziou hag e c'halv: Jann, Jann, deus d'an traon dioc'htu. Endra ma teu Jann er gegin, an tad a wisk e voutou.

JANN (*o figouezout*). — Petra ' zo va zad ?

TAD (*strafuilhet*). — Dik a zo aet kuit. Ni a viro ar c'helou ganeomp, eur pennad, hep her rei da anaout d'az vamm ; a hent all e varvo.

JANN (*strafuilhet kenan*). — Dik a zo aet kuit ? Ha da belec'h ?

TAD. — Doue her goar ! met eun dra bennak a lavar d'in em eus gwelet e benn beo evid ar wech diweza. Me eo em eus graet d'ezan mont ac'han, er pardaez-man ; gwelet en deus ne oa digemeret nemet gand e vamm. Enaou ar goulou, Jann, ma 'z in d'ar c'hraou-zaout da velet. (*Jann a enaou al letarn tra ma laka hen ar vantell vrasa a zo a-ispilh ouz dor an dereziou*). Breman sav, e kichen an nor, gand ar goulou-ze, en dra ma c'houiliin ar c'hraou (*ez a an tad er maez ha Jann war an treuz a zalc'h ar goulou. A-benn eun nebeud munuten-nou e klever Elin o skei gant he baz*).

JANN. — Tad, deuit aman 'ta ; eman mamm ouz ho kelver. (*An tad a deu en ti, bervet*).

TAD. — Da vamm am galv ? Petra raimp-ni ? na pebez darvoud a zo digouezet ! Kerz da draon an dereziou ha gand a ri, atao, n'es ket da lavaret d'ezi eo aet Dik er maez ; ranna rafes d'ezi he c'halon.

(*Ez a Jann war dreuz an dereziou, nemed e chom a-wel d'ar zelaouerien*).

JANN. — Ouz hor gervel e oac'h, mamm ? (*Selaou a ra ar pez a lavar he mamm evit gellout hen lavaret d'he zad*). Emae o c'houenn ha fallaet eo Dik p'eo gwir omp diskennet hon daou. Petra livirin ? Respontit raktal.

TAD (*nec'hetoc'h eget biskoaz*). — Lavar ar pez a giri, gant ma ne liviri ket an traou war eun ; michans, e pardono d'eomp hor geier.

JANN (*ouz he mamm*). — Ankounac'haet hon eus, va zad ha me, premta an noriou, (*respont a ra d'eur goulenn all a ra outi he mamm*), Dik ? ya ! kousket mik eo ! (*Dont a ra diwar an dereziou da gaout he zad*). A ! ta ! va zad, petra raimp breman, rak n'hon eus ket a amzer da goñ ?

TAD (*azezet e benn harpet ouz an daol*). — Aoun am eus n'em befe lavaret ar wirionez d'az vamm. Va c'halon a ro d'in da anaout e kousk Dik ker kalet ma ne zihuno ket ken. O ! ne gredan ket mont er maez en aoun d'e gaout maro, dre aze, en eun tu bennak.

JANN. — Ma kirit ez aimp hon daou d'e glask.

TAD. — Nann ! chom, te, e kichen an nor gand ar goulou en da zourn ! Ha lavaret eman Dik, er mêt, dindan ar reo gwenn, bec'h d'ezan chom, en e zav, ken hejet eo gand e baz. (*Mont a ra er maez, eur wech all, gand al letarn, ha Jann a jom dirak an nor digor, gant he goulou. Dem goude e teu an tad en dro, gant daerou en e zaoulagad hag ec'h azez ouz an daol e benn etre e zaouarn*).

JANN (*he brec'h war gouzoug he zad*). — Va zad, n'ho kwelis morse ken trist-se ! ha mont a rin da glask Dik ?

TAD. — Nann ! kavet eo ! maro eo aze e kichen drav al liorz. Deuet eo, hep mar ebet, d'ar gêr, da vervel.

JANN (*strafuilhet a-grenn*). Maro! Dik a zo maro!

TAD. — Maro eo, a-raok ma 'm eus gellet starda e zaouarn, da ziskouez d'ezan eo ankounac'haet pep tra ha digor bras va zi d'ezan evelkent; diskennet e oan eus va gwele, a-ratoz kaer d'e bardoni, hag oun en em gavet re ziwezat, siouaz d'in, siouaz d'in! « O va mab Absalom, va mab, va mab, va mab Absalom, penaos n'em eus me ket gellet mervel evidout, Absalom, va mab, va mab!

Plougerne, 9 a viz Eost 1928.

Feiz ha Breiz

Marvailhou an Anaon

E pep bro, dreist holl e touez an dud diwar ar maez, e vez kavet kredennoù a bep giz, ha n'emaint ket holl er *Gredo*, pell ac'hano. An distera tra a vez gwelet pe glevet, ma n'heller ket dont abenn da c'houzout ervat petra eo, a vez laket dioc'htu e renk ar burzudou, an traou eus ar bed all. Ne gredan ket e vefe bro all ebet ker kredik hag hon hini war gement-se. Hag evel-se eo bet a viskoaz. Mont a ran da verka aman eur maread traou hag a veze kredet gant hon gourdadou a-raok ma voent kaset gant ar Zaouon eus Breiz-Veur da Vreiz-Izel, hag a vez kredet c'hoaz hirio gant tud ar c'hornig douar ma komzer ennan eur brezoneg dem henvel oud hon hini, ag a raer bro Gembre anezan. Al lodenn vrasa eus ar c'hredennoù-ze a vez kemeret evit kelc'ier a varo. An traou-ze n'int ket tennet ganen eus va fenn va unan : o c'havet am eus war léoriou saos.

Ar geherez

Pa vez unan bennak warnez mervel, alies e gement tosta a glev *keherez* (cyhraeth), da lavaret eo klemmoù truezus pe huanadoù. Mar bez klevet

ar c'hlemmou-ze e torr an aod, e tiouganont bagou kollet ha tud beuzet. Pa vezont klevet o tremen dre eur geriadenn, ez eus da gaout eur c'hlenved spegus el lec'h-se. Ma teuont eus eun ti, pe mar bezont klevet wardro an ti, unan pe unan a dud an ti a varyo heb dale. Peurlïesa ar c'hlemmou hag an huanadou-ze a vez klevet evel pa vije unan bennak oc'h hirvoudi a-hed an hent a gas eus an ti d'ar vered.

Daou bried a oa eun nozvez o vale dre eun hent distro. Abenn eun nebeud amzer, ar vaouez a glevas eur c'hlemm truezus, evel pa vije bet unan bennak o klemm e tal eur pont o doa da dremen drezan. « Ha n'oc'h eus ket klevet ? » emezi d'he fried. « — Klevet petra ? » eme heman. — « Klemm ha gouelvan er penn all eus ar pont; 'm eus aoun ez eus unan bennak klanv pe c'hlozet. » Ar gwaz a c'hopas : « Petra 'zo ? Piou 'zo aze ? » Hag evel den na eilgerie : « An avel o luskella ar gwez, » emezan. Wardro kreisdeiz, en deiz warlerc'h, ar vaouez a zigouezas adarre da dreuzi ar pont, hag adarre e glevas klemm, « evel pa vije bet unan bennak e poan vras » emezi. Eur wech all c'hoas e glevas an hevelep tra, hag en hevelep lec'h. Mat, teir zizun goude, he fried en devoe eur gwall dro, dres el lec'h m'he doa klevet ar c'hlemmou. Pa voe kavet, edo e poan vras hag e klemme, eun druez e glevet. An traou-ze holl a ziougane e varo, ha mervel a reas dizale.

Eun den a oa o tremen dre an hent bras, e biou eun hostaliri, hag a glevas klemm o tont eus an ti. Hag hen mont ebars, ha goulenn petra a oa anezez. « N'eus netra an holl », eme an hostiz. — « Koulskoude me 'm eus klevet unan bennak o

klemm » eme an amezeg. » — « Va gwreg he deus klevet ive klemmou, en ti, en noz tremenet » eme an ozac'h. « Mat, eun dra eston eo evelato ». Hag en eul lavaret an dra-ze, an amezeg a yeas d'ar gêr hag a lavaras d'ê wreg : « Me 'm eus klevet klemm ar maro. Kred mat e vezo ar maro en ti-ze abars pell. Neo ket an hostizez eo, p'eo gwir hi he deus klevet ive. » Tri devez goude, an hostiz a voe skoet gant ar maro.

A-wechou ar c'hlemmou a vez klevet o tont eus kampr eun den klanv ; ha ker splann e vez ma vije lavaret ema e gwirionez an hini klanv o klemm. « Me gav din em eus ho klevet o klemm p'edon o pignat en derez, » a lavare eur plac'h yaouank d'he mamm, a oa koz ha klanv. « Mat, eme houman, mar ac'h eus klevet klemmou, eo klemm ar maro ez oa, hag oun sur da vervel heb dale. » Antronoz e oa deuet he c'homzou da wir.

Ar Tolez

Ar *geherez* eta a vez klemmou, huanadou, gouelvan ; an *tolez* (tolaeth) a vez taoliou skoet buan war an nor pe war an arrebeuri, skrab, strons, trous-bale, ha traou evel-se.

Daou bried a oa o chom e Porz-Kaol. Eun nozvez e klevjont trouz evel pa vije bet eur rummad tud o tont dre al liorz. Eston e kavent e teuje tud d'o zi ken diwezat-se, pa edo aet pelloc'h an holl d'o gwele. Pa glevjont an nor o tigeri e krogas aoun enno na vije deuet laeron en ti. Selaou a rejont piz, ha dizale e klevjont unan bennak o tiloc'ha ar c'hadoriou hag ar skinvi, ha goudeze eun trouz evel pa vijed o tiazeza eun dra bounner war ar skabeliou. An trouz-se holl ne voe klevet nemet er gegin.

Mat, daou zevez goude, o mab ha n'o doa nemetan a voe beuzet; e gorf a voe digaset d'ar gêr war eur c'hrañ, hag e voe red diloc'ha ar c'hadoriou, dres en doare m'o doa e dud klevet ober.

Eun deiz, eur plac'h yaouank, he hano Gwenlian, a gemeras bragez he zad da zresa. P'edo oc'h ober ar stag kenta, e kavas dezi klevet skei teir gwech war an nor; hag hi da welet piou oa: den krouet ne oa wardro. Staga a ra adarre d'he labour; hag adarre taoliou war an nor. Beb gwech ma kroge en he labour e c'hoarveze an hevelep tra. C'hoant he doa koulskoude da beurober he labour abars ma teuje he zad d'ar gêr. Hogen he zad, o veza n'en em gave ket mat war e du en deiz-se, a deuas kentoc'h diouz e labour, hag ar bragez a voe laketa a gostez. N'en doe mui ezomm anezan: eiz dez goude e varvas.

Beza ez oa eur c'halvez hag a ouie atao pegoulz en dije eun arched da ober, diouz eun trouz krenv spontus zoken a-wechou, a gleve en e stal, pe diouz taoliou hag a veze skoet war dor an arbel ma lakae enni kement tra a vije red evit dougen eur c'horf d'an douar.

A-wechou e vez klevet en noz evel pa vije tud o tremen gant eur c'horf maro hag o vont gantan d'an iliz pe d'ar vered. Eun nozvez, n'eus ket gwall bell abaoe, eur plac'h a voe dihunet gant trouz eun interramant o tostaat oud he zi. Souezet bras e voe o welet tud ar c'hanv o chom a-zav e tal he dor. Abenn eur pennadig ez ejont larkoc'h. Komiz a voe etrezi hag eun amezegez divarbenn an draze; ne deujont ket avad abenn da c'houzout perag e oa chomet an dud dirag he dor. Eur pennad goude, eun interramant a deuas e kêr, hag hervez

m'en doa goulennet an den maro, an arched a voe diskennet da ehana, eun nebeud, e tal an ti-ze, ez oa bet o chom ennan epad meur a vloaz.

Ar Goulou-Korf

Ar *Goulou-Korf* (Ganwyll Corph) a zo eur sklerijenn vorlivet hag a vez gwelet o vont hed an hent ma tle dont eun interramant. A-wechou he gweler douget gant spez an hini a vez o vont da vervel. Peurliesia evelato e vez gwelet o vont he unan. Pa vez gwelet eur c'houlaouenn vras hag unan vihan en eur gichen, eo eur merk e varvo eur vamm hag he c'hrouadur; mar d'eo dister ar goulou, e varvo eur bugel; mar d'eo splamm, e varvo eun den yaouank; evit eun den koz, ar goulou a vez ruz; evid eur plac'h e vez gwenn. Ar goulou-ze a vez gwelet o tont eus an ti ma tle ar maro skei ennan hep dale, ha mont a ra hed an hent betek an iliz. Neuze ez a a-lammou da ober tro ar vered, hag ez a da bara war al lec'h ma tle beza toullet ar bez.

Eur zakrist koz a gustume lavarout e ouie eta e pelec'h en dije eur bez da doulla er c'henta tro: eur goulou-varo a deue bep tro d'hen diskouez dezan. En eur c'hogn eus ar vered edo bez daou bried koz. Den ne zoursie anezan. Eur mab, ha n'o doa nemetan, a oa aet kuit eus ar barrez pa edo c'hoaz yaouank flamm. Hanter-kant vloaz goude, ar zakrist koz a lavare eun deiz, en eur ziskwez ar bez-se, kuzet dindan ar geot glas: « Unan bennak a vezo bezieta, aze, hep dale. » — « Birviken! » a lavare eun amezeg, en eur heja e benn. » — « Eo, eo, eme ar zakrist, eur c'houlaouenn-gorf a zo bet o para aze en teir nozvez diweza. » Eiz devez bennak goude, e teuas ar c'helou e oa maro mab an

daou goziad, hag en doa goulennet beza laketa e bez e dad hag e vamm.

Eun itron a vro Gembre o tont d'ar gêr eus an iliz, noz du-pôd anezi, a welas teir c'houlaouenn-gorf e tal he dor. « Ar goulou-ze, emezi, a oa morlivet, melen-c'hlas; n'oant ket ker bras ha ker bras. Goude mont eus eul lec'h d'eul lec'h all epad eun nebeudig amzer, ez ejont da netra. » An itroun ne lavaras ger da zen; prediri he doa koulskoude. Diou pe deir zizun warlerc'h, tri eus he bugalé a voe paket gant ar *c'hroup*: daou anezo a varvas en eun nozvez, hag an trede en noz warlerc'h. O zri e voent beziet war eun dro.

Labous an Ankou

Eur c'helou a varo eo *labous an Ankou*. Lod a lavar eo eul labousig briz, ha n'en deus na plu nag eskell; hervez lod all en deus an eil hag egile: e blu hag e ziwaskell o deus liou an uzuilh. Diouz an doare anezan n'heller ket e gemeret evit labous all ebed. Dont a ra da gluja a-zioc'h toenn an ti, pe war stalaf prenestr ar gampr e tle dont ar maro enni. An dud a lavar ne vez gwelet morse nemet oud ar maro, ha ne c'hop nemet: Deuit! deuit!

Eur vamm yaouank a welas al labous-se o tont da gluja war stalaf ar prenestr, a zioc'h he merc'h daou vloaz, hag a oa o c'hoari. Eun taol a skoas en he c'halon o klevet al labous. Mat, n'oa ket tremenet ar zizun pa gouezas klanv ar plac'hig, ha bis-koaz ne bareas.

Eun den a glevas al labous a wall gelou en eur wezenn avalou hag edo e dad dindani. A-raok dek dervez ar paotr koz a oa maro. — Diou c'hoar her c'hlevas dindan toenn ti o breur: dindan eiz dez heman a oa maro.

Chas an Ankou

Chas an Ankou a leverer a vez gwelet e tal tiez an dud a zo da vervel hep dale. Eun aotrou koz a oa klanv. E blac'h, koz ive, a welas eur c'hi eus ar seurt-se. Eur pikol ki gwenn oa, emezi, daoulagad ruz-tan en e benn. En e c'hourvez edo war bazenn uhela an derez etre ar porz hag an ti. Ar plac'h oud e welet a reas eur skrijadenn hag e santas, emezi, evel pa vije bet dour sklas o redet a-hed li-venn he c'hein. Nebeut deizioù goude, an aotrou koz a varvas.

Peurliesà, ar c'hi a vez gwenn; a-wechou, koulskoude, diouz a leverer, e vez du. Mont a ra sioul hed an hent, eun druez e velet, hag ez a da c'hourvez e tal an nor, pe war dro an ti a zo ennan unan bennak hag a dle mervel hep dale. Lod a lavar: « Mar bez gwenn ar c'hi, an ene a yelo d'ar baradoz; mar bez du, an den a zo fall-fall e goustians, hag e ene a zo merket evid an tan a bado da viken. »

Louzaouenn ar maro

Louzaouenn ar c'halvez, pe mil-delienn, a vez graet *louzaouenn ar maro* anezi. Mar bez digaset eun tamm en ti, ez eo eur c'helou a varo evid unan a dud an ti, ha marteze ouspenn unan. Setu perag ne vez morse digaset en tiez; ha ma tigouez beza graet dre zievez, unan bennak a varvo, hep mar. A wechou ar c'houez diouti a deu en ti, hep ma ve anezi nag en ti, na wardro an ti. Neuze an dud, o klevet ar c'houez-se a lavar: « Ar maro ne zaleo ket da zont en ti-ze. »

Ma lavar unan bennak: « Me ' gleo c'houez an douar nevez-troet en ti-ze. » an amezicien a lavar

dioc'htu: « Eur bez a rankor da doulla evid unan a dud an ti. » Ar re goz a lavar e klevont ato c'houez ar maro a-raok ma tigouez: « Ar c'houez-se, emezo, n'oufed ket; da vad, lavaret petra eo. Bez' ez eo evel pa vije eur c'horf maro en ti. » Pa vez klevet ar c'houez e torr an aod, ez eo eur merk e vezo pense.

Gwent treid ar maro

Beza ez eus c'hoaz *Aezenn pe Avel ar maro (gwynt traed y meiru)*, eun aezen hag a c'houez war dreid ar c'horfou maro. A-wechou e vez klevet er vered gant unan a gerent an hini a zo da vervel; aliesoc'h war dro an ti, pe el liorz. « Eun avel eo hag a laka an dud da skrija, eun avel hag a ia betek mel an eskern, hag a laka an dent da strakal epad eur munut pe zaou. » Kavet e vez an aezenn-ze e kreiz gor an hanv, pa vez kaera an amzer, hag a-wechou el lec'h m'eo tomma an heol. Ma rank unan bennak krena e kichen eun tan bras, pe dindan an heol tomm e kreiz an deiz en hanv, an dud a lavar: « Emae an Ankou oc'h ho klask d'ho kas d'ar vered. »

Mar kleo eun den klanv eur musik flour ha kaer evel n'en deus klevet biskoaz, an dud a hej o fenn en eur lavaret: « Paourkez den, graet eo gantan ! » An hevelep tra a vez lavaret mar kleo an den klanv *tik-tak* orolaj ar maro en e gampr.

Eur c'hi o yudal, eur wezenn o vleunia pa ne vez ket ar mare, labous an ankou, gwelet pe glevet war dro an ti, a ziougan e varvo unan a dud an ti. Eur c'hilhog o kana divare a lavar heb fazi e tigouezo eur maro digustum er barrez. Klevet eun dra bennak henvel oc'h eur c'hloc'h, a zo kelou a varo evid unan eus ar gerent.

Teir noz ar sperejou

En eur ger goz, he hano Lanildut-Veur, e vez klevet kloc'h an tremenvan o seni anezan e-unan ken alies ha ma vez eur maro da zigouezout er barrez. Alies e vez keveta a zioc'h an ti ma tle an Ankou skei ennan heb dale. Diouz a lavar tud ar vro, er vered ma voe beziet enni sant Iltud e vez klevet ato trous ha strons kent peb interramant; hag ouspenn, mar en deus unan bennak nerz-kalon a-walc'h evit sellet en iliz dre doull an alc'hwez, da hanter-noz, en unan a deir noz an anaoun (*tair nos ysprydion*) e welo spesou ar re a zo da vervel epad ar bloaz. (Teir noz an anaoun eo noz kent gouel an Holl Zent, noz Nedeleg, ha noz ar Bloaz Nevez. En teir nozvez-se an anaoun o deus aotre da zont da ober eun dro war an douar).

Setu 'aze traou eleiz divarbenn ar maro. Mont a ran breman da verka eun nebeud kredennou all hag a zell oud ar vuhez-man: ar chans pe an dichans.

Lod a lavar e vez dichans pa gaver *arc'hant* en eun tu bennak. Lod all a lavar mar bez kavet arc'hant el lec'h ma kredfet nebeuta, gant a vezo graet, arabad hen diskuilh da zen, rag eur prezant eo eus a berz an « Tiegaz Koant », da lavaret eo ar C'horrigezed, ha na lakafent mui biken an distera arc'hant war hoc'h hent. Tud ar vro a lavar ar c'horrigezed-se eo eneou an dud ne vezont ket bet fall a-walc'h evit beza kaset da dan an ifern, na mat a-walc'h evit mont d'ar baradoz.

Derc'hel plu paün en ti a zigas dichans. « Keit ha ma 'z eus bet anezo em zi, a lavare eun itron, ez eus bet breut ha diezamant dalc'hmat. Taolet int bet kuit, — o devi a vije bet dichansus — ha ker-

kent eo bet ehanet an holl drabasou-ze. » — « Epad daou vloaz ma chomas plu paün en hon ti, eme eur plac'h yaouank, hor boe kollou bras hag alies; taolet e voent e mêz, hag an dichans a yeas kuit ganto. » — « Keit ha ma 'z eus bet plu paün en hon ti, a' lavare eur merour eus ar vro, an holl a oa nec'het ha troet da fallgaloni; kerkent ha ma voent taolet kuit an traou a zresas en eun taol. »

« Na zigasit ket bleunv *spenn gwenn* en ti, a lavar merc'hed Bro Gembre; digas a rafac'h ganto dichans pe glenved. » Ma tigaser bleunv *spenn du*, e teu aered war o lerc'h.

Terri eur benveg graet gant gwer a zoug dichans. Mar torrit eur *mellezour*, n'eus fors a be zoare, bras pe vihan, ho pezo dichans epad seiz vloaz; ha mar torrit eul lestr *pri* ez aio daou all d'e heul: Setu petra a lavar ar gwragez pennou-tiegez. Dichans ho pezo ma tigwez unan bennak ganeoc'h en *derez*, pe mar gwelit eun den lagad-treuz en deiz kenta ar bloaz, pe mintin mat n'eus fors pe zeiz; hag an dichans-se a bado a-hed ar bloaz, pe a hed an deiz, dioc'h ma vezo. Dichans ho pezo c'hoaz, mar *gwiskit* ho loar pe ho potez *kleiz* da genta.

Seiz ha *Nao* a zo diou niverenn hag a zo stag outo chans pe zichans. Evel-se e buhez an den ar bloaveziou hag a zo enno seiz pe nao eo ar re a zo ar muia da ziwall outo, ha dreist holl ar bloaveziou 21, 27, 35, 36, 45, 49, 56 ha 63. Heman eo ar gwasa, abalamour ma 'z eus ennan war eun dro seiz ha nao (7 × 9) — (E galleg e vez graet *année climatérique* eus ar bloaveziou-ze).


YANN KOSTARREUN.

Iliz Itron Varia ar Yeuc'h


Pa 'z it, eus a Gemper da Zouarnenez, eur wech treuzet ganeoc'h kompezenn Gwengad, e reidit, dre eun draonienn ledan, a bep tu d'ezi krec'hennou dem-henvel, koajou en o zraon, lann ha radenn war o diri ha reier louet war o c'herniou. An tren a **jom** a-zav, en eul lec'h anvet ar Yeuc'h, hag e keit-se e c'hellit gwelout, en ho tu kleiz, e touez glazvez ha tiez gwenn ar yourc'h, eun iliz dibradet ker brao ha tra a-zioc'h ar ster habask ha skler a ya da en em deurel er mor, en aod ar Riz, etre Ploare ha Kerlaz.

Ar pezh a vrudas da genta ar Yeuc'h oa he c'hastell a weled e vogerioù hag e douribelloù war an dosenn dosta d'an iliz. Breman ez eus kant vloaz e c'helled gwelet tammouigoù anezan c'hoaz en o sav, met hizio, a vec'h, ma kavoc'h eur pennad moger bennak kuzet gand ar geot hag ar strouez. Aotronez ar Yeuc'h a oa brezelourien kalonek ha kristenien vat. Unan anezo, war a leverer, Herve ar Yeuc'h, a heulias Per ar Mauclerc, Duk Breiz, e brezelioù ar groaz hag a yeas gantan d'an Douar Santel. Lezel a rae, er ger, e bried, Alienor Pont-Kroaz, hag a oa ker glac'haret, o welet he Aotrou o vont diouti, ma reas le da jom hep komz ouz den keit ha ma vije henman oc'h ober e dro.

Evit ne 'z aje ket a eneb he ger ec'h en em dennas e kampr vaen uhela an tour hag e chomas eno epad ar seiz vloaz ma chomas he gwaz, en hent. Eur parduez, koulskoude, henman, a zizroas eus an Douar Santel, yac'h pesk, hag a zonas da c'houlenn digor, dirak dor-vint ar c'hastell. An Itron a ziskennas raktal, eus he zour, da vriata gant teneredigez, an hini m'edo, keit all, ouz e c'hedal.



Tour ar Yeuc'h



Kastell ar Yeuc'h

Evit derc'hel koun eus eul le ker striz ha sevenet ker mat, — daoust ha kavet e vije eleiz a verc'hed da jom mut evelse epad seiz vloaz? — Aotrou ar Yeuc'h a gemeras evit ger: *La Non Pareille*, hag a lakeas war gern e skoued, e weled eul leon, en e zav, warnan, eun tour gand eur prenest, eun itron o sellet drezan er maez.

Eus tiegez Aotroned ar Yeuc'h e tiskennas unan eus Eskibien Kastell-Paol, maro er bloaz 1369, seiz eus kabitened Kemper, Konkerne ha kastell Tonkedeg, hag eleiz eus pennou brasa lez hon Duked.

Diweza hini a zougas ano an tiegez brudet-se oa Mari ar Yeuc'h, mestrez ar Yeuc'h ha Koetivy, a zimezas, er bloaz 1501 gant Tanguy, Aotrou ar C'hastell ha Tremazan.

Skoejou unanet an daou bried-se a weler c'hoaz, en unan eus prenecher chapel gaer Itron Varia Kerzevot, en Ergue-Gaberic. Goude beza bet d'ar Chastelled, kastell ar Yeuc'h a voe perc'hennet gand an Aotroned Gouyon, Rosmadec, Nevet ha Franquetot de Coigny. Leon ar Yeuc'h a weler kizellet war volz porched an iliz.

An iliz-ze a voe savet, da genta evit beza chapel ar c'hastell; goudeze e talvezas da iliz, evid unan eus trevou Ploare; wardro ar bloaz 1850 hepken e temas da veza iliz-parrez. Savet eo bet, an darn vrasa anezi, er XVI^{re} kantved. War ar c'hadran-heol a zo a-zioc'h an nor e lenner ar bloaz 1652 hag anioiu an Aotroned H. GVEGVENOV RECTEVR ha JEAN. KERSALE. CVRE. e kichen skoued Aotroned Rosmadec.

An tour a zo bet savet er bloaz 1700.

Gwaregeier ar vali greiz a zo uhel ha kaer. War brenestr bras ar c'heur e weler Hor Zalver stag ouz ar groaz, etre daou laer, etouez ar zoudarded hag ar Pharizianed. Gwer ar prenestr-se a zo koz hag o deus talvoudegez vras.


A bep tu d'an aoter vras ema Itron Varia ar Yeuc'h hag an are'hael Gabriel. Henman en deus eur skeudenn vras c'hoaz, er chapel kroaz.

Izeloc'h, e kavit eun aoter gaer bet savet eno, e maen, er bloaz 1705.

E tu kleiz an iliz ema diaoul ar Yeuc'h, eun diaoul brudet, mar deus unan; e skeudenn goz gwechall a oa spontus da welet, ken divalo ha ken drouk en doa doare da veza; an diaoul nevez, kaer en deus bet ar c'hizeller poania, n'eo ket ken heuzus hag an hini koz daoust ma 'z eus roet d'ezan karniou marc'h, kerniel taro ha diskouarn eur penmoc'h. Martoloded Douarnenez, Treboul ha Pouldavid o deus devosion d'an diaoul-se, emezo, ha pa deuont da bardona d'ar Yeuc'h e lakont d'ezan, en e c'henou, evel prof,

pennadou o sigaretennou pe o chikadou koz. Trec'het eo gand eur zant Mikael ha n'en deus ket a zoare da veza kals droukoc'h egetan daoust m'her gweler oc'h astenn, a-zioc'h e benn, eur c'hleze koad.

Hiz Itron Varia ar Yeuc'h, Itron Varia ar C'heioumat, a zo eul lec'h hag a zo darempredet kalz gand



Hiz ar Yeuc'h

ar bardonerien; ar vortoloded a deu di niverus. Er bloaz 1856, ar person, an A. Jossin a skrive d'an A. 'n eskob en doa gwelet eur mortolod, louet e varc, oc'h ober teir gwech an dro d'an iliz, war bennou e zaoulin noaz, o trugarekaat ar Werc'hêz, an daerou en e zaoulagad. Gwilhou Billon oa an den-se; eus a Zouarnenez oa; o tont eus a Aljer da Varseille edo

war eul lestr, leun a zoufr pa gouezas, e kreiz eur gwall varr-amzer, ar gurun war al lestr o lakât an tan gwall da gregi raktal er varc'hadourez zanjerus a zougent. Kerkent, ec'h en em voestlas, eun all hag hen, da I. V. ar Yeuc'h ha ne voe nemeto o daou hag a jomas beo ; ar re all holl a oa war al lestr a voe mouget gand moged flaerius ar soufr.

Gand eol ar chleuzeur a zeve dirak Arc'hael Gabriel iliz ar Yeuc'h eo e pareas Mikael an Nobletz hag an Tad Maner kalz tud. Sant Vaudez a oa ivez karet kalz ha pedet er Yeuc'h. E skeudenn goad n'ema mui en iliz, met miret a raer darn eus e relegou en eur relegouer arc'hant hag e gwer a liou ar prenestr bras e kaver atao e skeudenn.

G. P.



Buhez an Tad Julian Maner

Mision e Eusa ha Molenez, Mezeven-gouere 1641

Distro da Gonk, an daou Dad a lavaras da Vikael an Nobletz penaos oa tremenet an traou e Kastell. Mikael a voe laouen bras o klevet ez aent da brezeg d'an enezennou. Rak tregont vloaz a oa tremenet abaoe m'oa bet e-unan o prezeg enno. C'hoantaet en dije mont a-nevez, met n'en doa ket gellet. Lavaret a reas d'an daou visioner o sikourfe dre e bedennou.

Ret oa kaout nerz-kalon evit mont da Eusa. Ar mor a vez dies peurliesia; evel steriou a zo er mor endro d'an enezenn, hag ar steriou-ze a zo kas ganto; reier kuz a zo ive er mor, a wechou hanter-c'holoet, hag a ranker da anaout.

O veza m'oa dies mont da Eusa, eneziz a wele nebeut a dud eus an douar bras ha ne zeskent ket an droug gant re all. Kristenien vat, oant, santel; n'o doa ket ankounac'haet prezegennou hag aliou Mikael an Nobletz. N'oa ket a lamponed, a laeron en o zouez. Mat oant da labourat, ha ne vanke ket d'ezo peadra da veva.

Aer vat a zo, hag an dud a oa yac'h ha krenv. Hirio c'hoaz e vever koz e Eusa. N'eus ket pell, eun den a 90 vloaz a lavare d'an aotrou persoun: « O komans koza emoun, aotrou persoun. » E amzer an Tad Maner e vevent kosoc'h c'hoaz; meur a hini a bake kant vloaz hag ouspenn.

Ar wazed a dremene o amzer o pesketa; ar merc'hed a laboure an douar, evel hirio. Kalz chatal o doa. Met gwez, n'oa ket muioc'h anezo eget hirio. Aered n'oa ket ive, hag an Tad Maner a lavare en eur vous-

c'hoarzin: « Aman hor ma'am genta Eva ne vije ket kouezet. »

D'ober tan, tud Eusa a zeve bizin, taouarc'h, pe c'hoaz kaoc'h saout krazet. « Pep hini a ra gwella ma c'hell », evel ma lavare d'in, eur wech, eun trouc'her moudennou eus Beg ar Raz. Pa ne vez ket a geuneud, e ranker klask traou all d'ober tan.

Ar pezh a vanke d'ezo, oa anaout mat o relijion. Mikael an Nobletz en doa prezeget en enezenn, graet kalz vad d'an dud, desket d'ezo beva santel, met evit derc'hel krenv ha start ar gizioù santel, eo ret prezeg alies. Eur persoun ha daou gure a oa en enezenn, met n'oant ket o unan re zesket.

An Tad Maner hag an Tad Bernard en em gavas e Eusa d'an 28 a vezeven 1641, derc'hent gouel sant Per ha sant Paol; kerkent e lakjont embann e tigorfe ar mision antronoz.

An dud a ziredas, mall bras ganto klevet komzou Doue. P'en em gavas an daou visioner, da beder eur, oa leun a dud en iliz ha leun er vered. An Tad Maner a rankas lakaat eur gador-brezeg e dor an iliz, evit beza klevet gand an holl, er vered hag en iliz.

Ar brezegenn genta o gounezas. Chom a raent evel souezet. Ar misioner a oa diskennet eus ar gador, hag an dud ne finvent ket; evel c'hoant o doa en dije c'hoaz an Tad kendalc'het da gomz d'ezo. Goude an oferenn bred e prezegas adarre hag e voe selaouet gand ar memes evez. A-raok ar gousperou, e reas katekiz, met hini ebet ne grede respont, nag ar re vras nag ar re vihan. Ar vugale n'o doa morse gwellet lean ebet, hag a guze o fenn gand o daouarn. Mez o doa o respnt. Goude ar Gousperou, an Tad Maner a bignas eur wech all er gador. Komz a reas war levenez ar Baradoz, poaniou an ifern, war ar pec'hed, ar zan-telez. An dud a voe skoet o spered, hag en eur lenva e lavarent: « Gwall-eürus ma z'omp! Beteg-hen hor eus bevet evel loened; poent eo beva e kristenien. »

O welet o feiz, an Tad a lavaras da dud Eusa digemeret ar grasou kinniget d'ezo, hag e renkas an traou evid ar mision. — Ar visionerien a veze bemdez en iliz a-raok peder eur, hag er gador-govez, pa ne vijent ket o lavaret o oferenn pe o prezeg. Diouz ar mintin, ar pedennou a veze lavaret en iliz da bemp eur; da eiz eur, eur brezegenn. Goude kreisteiz, e vije graet katekiz epad eul lodenn eus an amzer, ha, da c'houec'h eur diouz an noz, ar pedennou evit kloza an dervez.

Evelse e tremenas an traou en deizioù kenta. Met ar visionerien a welas buan o doa ezomm tud Eusa, a-raok pep tra all, da zeski o c'hatekiz. War o goulenn, Mikael an Nobletz a zigasas d'ezo, eus Konk, Janned ar Gall, eur vaouez mat d'ober katekiz ha da gana kantikou brezonek.

P'en em gavas e Eusa, war zigarez gwellet kerent, e teuas d'an iliz, epad ar c'hatekiz, etouez ar merc'hed all. An Tad Maner a reas outi goulennou. Janned a respontas brao ha sklear, « Mat eo », eme an Tad Maner, hag e roas d'ezi eur chapel. Ar merc'hed all a c'hoanteas ive deski o c'hatekiz, ha deuet er maez eus an iliz, ez ajont endro da Janned, da zeski ganti peñaos respont. Janned en em lakeas ganto, ha buan ar merc'hed youank a zeskas o c'hatekiz, hag e veze lorc'h enno o respont en iliz d'ar goulennou.

Ar wazed a reas henvel, hag-abenn eur pennad, an holl, gwazed ha merc'hed, a responte gant joa ouz goulennou an Tad.

Ezomm a oa d'o c'heleñn, rak dizesk bras oant, daoust m'o doa dalc'het d'o gizioù santel. Pa veze goulennet diganto pet Doue a zo, lod, a lavare pevar, lod pemp. Evid ober d'ar gwirionezioù diskenn en o fenn, ar c'hantikou a voe talvoudus bras, rak er c'hantikou-ze e oa laket e brezoneg, eun diverra eus ar relijion. Unan eus beleien an enez o deskas hag o c'hanas en iliz gand an Tad Maner. Ar vugale hag ar

re vras o deskas ive, hag e voe klevet Enez Eusa o tregerni gant kan ar c'hantikou.

Entanet o c'halonou gand ar Spered-Santel, an dud a zirede gant mall da zeski o relijion; ret e voe ober katekiz d'ezo er maeziou. Kovez a raent o fec'hejou gant keuz bras, ha da deir eur diouz ar mintin e ranké ar visionerien beza er gador-govez, hag o deze labour beteg eiz eur ha nav eur diouz an noz.

Evit sevel buanoc'h, an daou Dad a gouske war ar c'halet. Selaouomp an Tad Maner e-unan o konta an traou: « kaer hor boa kemeret buan hor prejou, e kavemp ato re hir an amzer tremenet ouz taol. Henvel oamp ouz marc'hadourien, leun a dud endro d'o stal. Ker mat ez ae an traou evidomp, ma ne zantemp ket ar skuizder. Kement a frouez a gutuilhemp, m'oa anat edo dourn Doue ganeomp. — Eun deiz, araok mont ouz taol, e santis evel eun dra bennak oc'h va gervel da vont d'ar gador-govez. Mont a ris, hag e kavis eno eun den o c'hedal, abaoe pemp dervez, e dro da govez. Paet e voen evit beza gedet a-raok debri va fred. — Evit gellout kovez an holl, ne raemp breman nemet eur brezegenn bemdez, hag eur wech katekiz. Goude kovez, e teskjomp d'an dud kommunia, rak meur a hini a gommunie evid ar wech kenta. Eurus oamp o welet peger bras karantez a ziskouezent evid o Doue.

« Poania a rajomp ive da zisc'hwrienna ar gizioù fall a rae droug da lod eus an dud, evel ar vezventi hag an dansou noz e kichen chapel sant Per.

« Prometi a rajont dilezel o gizioù fall, hag e gwirionez, epad eun eured a voe graet p'edomp eno, den ebet ne zansas, den ebet ne voe mezo.

« Da fin ar mision, e tiskouezent o anaoudegez vat en hor d'henver e pep giz. Kaer hor boa lavaret n'oa nemet Doue da drugarekaat, eneziz hor meule en eun doare souezus. D'an Tad Bernard e lavarent: « Petra! D'hoc'h oad, epad pemzek dervez kovez ouspenn

c'houezek eur bemdez, kemeret hepken peder eur d'en em ziskuiza, kousket war eun daol, debri ar boued a zebromp! Tad santel! »

« Mez hor boa o klevet kement a veuleudi, met n'hellemp ket en em denna eus o daouarn. Digas a raent d'eomp o zud klanv, hag hor pedent d'o farea. Daoust ma anavezemp hor zempladurez, ec'h astennemp hon daouarn warno, ha meur a hini a voe parfet gant Doue.

Ar c'hreunenn venniget a bareas ive re all, en o zouez eur plac'h yaouank, dall daou vloaz a oa.

« Ar mision a voe klozet dre eur brosesion gaer evel e Douarnenez. An aotrou persoun a zouge ar Zakramant. Mont a rajomp beteg eur chapel peñ eus an iliz-parrez. Eno, e kreiz ar maeziou, e ris ar brezegenn ziweza da dud Eusa. Pevar mil bennak e oant oc'h va selaou.

« Pa zeuas ar mare da guitaat an enez, e voe klevet kri ha lenv. An holl a zeuas d'hon ambroug beteg ar porz, ha digaset e veze c'hoaz d'eomp tud klanv. Doue a ziskouezas adarre e vaadelez e kenver meur a hini anezo.

« Edomp er vag a dlie hor c'has da Volenez, ha tud Eusa a c'houlennas eur wech all c'hoaz hor bennoz. Senti a rajomp evid ober plijadur d'ezo, o pedi Doue da skuilh e vennoz varno.

« Fizians am eus e vezo karet ha servichet Doue en enezenn eur pennad mat a amzer. »

Setu petra voe mision Eusa, eur mision kaer meur-bet.

Eus Eusa da Volenez, n'eus nemet teir leo. An daou visioner a lakeas div eur da dreuzi. Molenez a zo eun enezenn vihan. N'oa enni, d'an amzer-ze, nemet eur pemp kant den bennak.

Ar mision a voe kaer evel hini Eusa. An daou Dad a voe sikouret en o labour gant bugale eus Molenez, a oa bet e Eusa epad ar mision, hag o doa desket ar

c'hantikou ha klevet ober katekiz. Deski a rajont ar c'hantikou d'o c'henvroiz hag ive an doare da respont d'ar goulennoù katekiz.

Abenn eiz dervez mision, Molenez a voe gounezet holl hag an dud troet holl ouz Doue.

Y. U.



Kemper

EN O EIL BUGALEACH

NATH. — Gortoz, ma tiskouezin d'it, Per; ar *Roue Arzur* a rede gand avel mervent grenv, aman en-d-eeun (*gand gar e gorn e tiskouez al lec'h*). — O tont eus a Guba edon, el lec'h m'oan bet o karga marc'hadourez. Setu aman pelec'h e oamp pa oamp tosta da Zan Domingo.

PER. — Gortoz ma tiskouezin d'it d'am zro. Edon oc'h ober hent gand eur gargad chatal eus ar Patagonia. Ioul am oa da welet Jamaïka pa zigouezas gand ar *Roue Arzur* ha va *Frins-Albert* beza ken tost an eil d'egile, ma c'helled strinka eur maen eus an eil en egile, aman, el lec'h m'eman va bizme, e Jamaïka.

NATH. — Anat eo e kolles da spered vat, paour kez koz!

PER (*droug ennan*). — Daoust ha gouest out da c'houzout hepken petra lavaran.

NATH (*ken drouk ha Per*). — Te eo da vihanan a zo aet e belbi.

PER. — Evelato, diouall ouzin, ma kendalc'hes da lavaret gerioù flemmus, evelse, din! (*Diskenn a ra diwar e gador*).

NATH. — Te eo a vez atao da genta o karza da gornañhenn abaoe ma 'z anavezan ha goudeze e

klemmes c'hoaz ! Pren eur westegn vat 't da westegna da wal imor. (*Diskenn a ra ivez d'an douar diwar e gador*).

PER. — Va gwall imor ? va gwall imor ? ha da hini te 'ta ? a zo evel ki eur fuzuilh a gouez hag a lak an tan er poultr d'an distera mouch-avel a c'houez warnan. Daoust pegement a zroug a zo ennout n'em eus ket a aoun o lavaret d'it eo e kichen Jamaïka eo ez edomp.

NATH. — Ha goude ma youc'hfes Jamaïka Jamaïka, epad bloaz, an dra-ze ne viro ket e oamp e kichen San Domingo. Gwasa pezh a zo pa ya eun dra benniak, en da benn te, out diaesoc'h da loc'hat eged ar Pol Nord. A ! kre ! penn kalet, keat

PER. — N'eus fors pegement e youc'hi, me eo kabiten ar vourz-man hag e vin ! (*Diskouez a ra leur ar zolier gand e zourn*).

NATH. — Dalec'h da vourz ganez evid atao ha p'eo gwir eman an traou evelse n'ez pezo ket a ezomm ken da skuba da di war va lerc'h-me, klevet a res ! (*Mont a ra warzu an nor da wiska e vantell*).

PER. — Me a en em grougfe ma 'm bije ker gwas imor ha ma 'z peus te !

NATH (*o tigeri an nor*). — Sell 'ta, te n'out ket bet aet biskoaz d'en em grouga daoust ma 'z peus eun imor mil gwech gwasoc'h eget va hini me. (*Dres p'ema o vont er maez, Mallt hen chach en ti en despét d'ezan*).

IV

MALLT, PER, NATH

MALLT. — N'ho peus ket a vez, ho taou ? Daou genderv, bet troet atao, mantrus, an eil ouz egile, o vont d'en em randaelat, diwar netra, evel daou iwerzoniad. Gand ar vez, da vihanan, ehanit da vouzat an eil ouz egile, daou zen koz eveldoc'h, o tenna war o fevar ugent vloaz.

NATH (*o tont ernan e-unan*). — Pevar ugent ? Gedit ma vezin c'houezek ha tri ugent, da genta, da vihanan, merc'h paour ?

PER. — Gwelet a res, Mallt, o lavaret edo e oamp e kichen San Domingo !

NATH. — Nann ! nann ! hen eo a lavare edomp e kichen Jamaïka.

MALLT. — Na'o doubl ouffit d'eoc'h ho taou ! Azevit war an diou gador-ze. (*An daou gêz koz a azez hag evel eur medisin Mallt a gemer azourn Nath da welet penaos e kerz ar gwad*). — Breman ho kwad a vale dresoc'hik. (*Ober a ra kemend all da Ber*). Hoc'h hini c'houi a sko c'houezek taol ha tri ugent bep munut.

NATH. — Da lavaret eo e sko, evit pep hini, hervez e oad.

MALLT. — Mat ! lezomp Sant Domingo ha Jamaïka el lec'h m'emaint ha p'eo gwir eo sioulaet ar mor, breman, e sonin, d'eoc'h, eun ton pe zaou, war ar piano, a habaskaio an holl sperejou rak ezomm o deus. (*Mont a ra d'ar piano hag e c'hoari « HELA 'R YSGYFARNOG » ; an daou goz, war o azez, a zelaou en habaskder ; pa c'hoari Mallt an ton e weler Nath oc'h ober an neuz d'her c'hoari ivez gant e droad*).

Hela 'r Ysgyfarnog

Buan.



Dowch i'r hel-la, mae'r ud-gyri yn ca-nu, Yr haul ly-ga-da dros




ys-gwydd y bryn; Draw i'r dar-ren mae-pauh yn ym-dy-reur



A'r ad-sain ddef-fry dan-velwch y glyn: Hel-wyr a hel-gwn a



hel-feirch af-flo-nydd. Ha, ha, mae yr awyr yn blawn o fl-vyn-had,



clywch mae'r cwn we-di ta-ro y try-nydd, Mae'r hen fy-tenad yn ar-wain y gâd

NATH. — An ton-ze, Mallt vihan, am yaouanka eus a dri ugent vloaz hag am laka da redet e liorzou hag e maeziou Trewern.

PER. — War a welan e skoës an ton gant da droad, hep gouzout d'it.

NATH. — N'ës peus ket ankounac'haet c'hoaz Nel an Ti-meur ha Sara ar Wern? N'o doa ket o far evit lakat laouenedigez er panteou ma vezent enno. Ar ganaouenn-ze a deue ganto alies.

PER. — Ankounac'haet? Met biken ne c'hellin ankounac'haat an amzer-ze; Mallt, c'hoari 'ta, an ton-ze eur wech all c'hoaz! (*Mallt a c'hoari hag an daou goz a sko an ton gand o zreid*). E pelec'h eman Nel fenoz?

NATH. — D'an Amerika oa aet ac'hanen. Sur a-walc'h e tle beza dindan eun dawarc'hen bennak, ar reuzeudik zo anezi! meur a vloaz a zo! E feiz! hounnez a ouie an tu da jacha warni sellou holl yaouankiz ar barrez-man.

PER. — Sara hag hounnez a oa diou hebrenn.

NATH. — Ha lavaret em eus bet d'it, eun dro bennak, em oa gwelet Sara, warlene, e Feunteuniou?

PER. — Ya! ya! hag ez poa he c'havet kosaet kalz.

NATH. — Ouspenn daou ugent vloaz a oa abaoe ma n'am oa ket he gwelet; deut eo breman da veza treut ha goulou he daoulagad a oa gwechall kel laouen ha diou steredenn a zo hanter-varo, breman, en he fenn; he bleo du rodellet ker kaer a zo gwenn ha tano. Ker mut ha kloc'h ar glaz e teuis da veza pa welis dirazon Sara ar Wern, ar verc'h kunv evel laez ha glan evel erc'h, a zo bet diframmet diganti he holl gened gand an amzer, al laerez koz zo 'nezi.

PER. — A! paourkez Sara; me gred eo dec'h eo em eus he gwelet hi ha Nel, o...

NATH. — Per vihan, n'ës ket da zigeri beziou an deiziou tremenet (*huanadi a ra*). Pegen berr eo ar vuhez zoken an hirra ha p'en em gav an den war dreujou e bevar ugent vloaz, en aner eo e klask laouenedigez e yaouankiz:

Ar yaouankiz 'zo eur boked

Ar c'haera 'zo er bed!

met peger buan e teu da voenvi!

PER. — Mallt c'hoari d'eomp breman ar « *Gwiniz Gwenn* », eur wech c'hoaz, rak, ma ne garomp diouall, da contr Nath a zo o vont da goueza, war e benn, e poull ar velkoni. (*Mallt a c'hoari ton ar werzenn genta*).

Dioualler ar gwinniz gwenn

(Buñeléo 'r gwennith gwinn)

Gouestat ha gant kalz a galon.

Andante

Me zo eur paotrig yaouank foll, Di-
 bre-der, war va-méno, Di-ouall a ran ar
 gwinniz gwenn, Met eun all eo o médo. Pe-
 rak ne deufec'h ket d'am beul a greiz kalon ho
 ka-ran, Rak seul-vui m'ho tarempredan, Glan-
 noc'h glan-na ho ka-van.

NATH. — An ton-ze, evel holl doniou Kembre a laka hor spered da nijal warzu douar kunv hor c'havell hag hentchou mel hor c'hammejou kenta.

PER. — Gwechall, pa oas e barr da vrud, e vezes klevet alies o kana ar « Gwinniz Gwenn », en eistezfodou, met breman ne vezes ket gwelet ken o tigeri da c'henou.

Kan d'eomp eul linenn bennak !

NATH. — Doue r'hor miro holl, va zud vat, met va mouez me, ne oar nemet gwigourrat evel rod eur c'har ha n'eo ket bet lardet pell a zo.

MALLT. — Va eontr, grit eun esa atao, da welet.

NATH. — Ya ! ya ! poz kenta ar « Gwinniz Gwenn » ; met taolit evez ha n'it ket re vuan en aoun na zihalanfen : *four knots an hour*.

MALLT. — Stagit, da genta, dal ma 'm ho roet d'eoc'h an notenn genta, (*hag e c'hoari*).

NATH (*diwar e azez a gan gant mouez gwan eun den koz*) :

Me 'zo eur paotrig yaouank foll
 Dibreder, war va meno,
 Diouall a ran ar gwinniz gwenn
 Met eun all eo o médo.
 Perak ne deufec'h ket d'am heul,
 A greiz kalon ho karan,
 Rak seul-vui m'ho tarempredan.
 Glannoc'h, glanna ho kavan.

PER. — Braoik e teu ganez c'hoaz !

NATH. — Nann ! Ar vegin ennon a zo devet, e c'heller da lavaret, Per goz !

MALLT. — Breman, va-zad, d'eoc'h choui eo kana an eil poz.

PER (*skiltr hag o krena*) :

Tra ma vo sall an dour er mor,
 Tra ma vo brug er menez,
 Ha tra ma vo kalon em c'hreiz
 Az karin, va fennherez
 Lavar d'in an traou holl, war eun,
 Ha n'am lez ket da zounna,
 Pe me pe eun all eo a zo
 En da galon an dounna ?

NATH. — Mat, paourkez, m'hon divije graet peb a zolo, n'hon divije ket bet gounezet ar priz : eur solo kaer, met kanet fall.

MALLT. — Mall eo d'in breman mont da aoza eun dra bennak da goan evit Sim Reeves hag Eos Morlais. (*Mont a ra er maez*).

V

NATH HA PER

NATH. — E fec'h, n'ouzon ket petra am eus, er pardaez-man, met gwelet mat a ran eo Mallt portred beo he mamm Mac'harit.

PER. — E c'hell beza ! Me ne welan ket an henedigez-ze koulz ha te, dre m'emaoun bemdez o vevañ en he serr.

NATH. — Gouzout a res, Per, me a rofe va holl vadou evit kaout eur verc'h, evel Mallt, da zerc'hel urz em zi.

PER. — N'ouzon ket perak, neuze, n'out ket bet dimezet pa oas yaouank eveldon ! Henvel out ouz pelikan ar gouezeri, atao e-unan, hep den tostoc'h d'it egedoun ha Mallt. Ne'z peus nemet diavezidi en dro d'it. N'ouzon ket perak n'out ket bet dimezet pa oas yaouank eveldoun !

NATH (*o pleustri*). — Brao eo d'it komz evel ma res; daoust m'emp bet mignonet vat a-holl viskoaz, ne ouezes ket pep tra diwar va fenn.

PER (*goude beza chomet sioui eur pennad*). — Ne ouezan ket petra ez peus c'hoant da lavaret.

NATH. — C'hoant am eus da lavaret ne ouezes ket perak oun chomet dibried.

PER. — Penaos e oufen ? N'eus droug ebet, goude m'her c'hlevfen ?

NATH. — Nann ! ha koulsgoude em boa laket em spered n'em bije biken diskuliet ar c'huzulig-ze da zen. Klev ganen; biskoaz n'em eus graet al lez nemet d'eur verc'h yaouank hag, en toull tosta, oun bet da gaout he ger.

PER (*o selaou evel unan hag a oar ar respont emañ o vont da ober d'ezan*). — Piou e c'hellfe beza hounnez da vihanan ?

NATH. — Mac'harit, da wreg (*rei a reont peoc'h*).

PER (*gorrek*). — O klask he c'haout edos ivez 'ta neuze, pa zimezis-me ganti ?

NATH. — Ya ! ya !

PER. — Mac'harit a ouie her c'haries ?

NATH. — Hep mar ebet, p'eogwir her goulennis da zimezi.

PER. — Ha neuze ?

NATH. — Re zivezat e oan en em gavet; daou zervez a-raok he doa roet he ger dit.

PER. — Ha n'he deus lavaret netra ebet d'it diwar va fenn ?

NATH. — Kempennik em eus bet va sac'h diganti; gouezet he deus trei brao bras he c'homzou evit rei da c'houzout, hep va feuki, e oas an hini a oa en he goulou ha me an hini... ne dalveze netra !

PER (*goude beza chomet sioul euz pennad*). — Sell, stard va dourn, Nath; bel an amzer e vez tabut ganeomp p'en em gavomp hon daou, met hivi-ziken, ne zavo trouz ebet ken etrezomp; ni a en em garo gwelloc'h eget biskoaz.

NATH. — Breman, sell, e ouezes kement tra a c'heller gouzout diwar va fenn. Met, en han Doue, komzomp eus eun dra bennaek all en aoun ne deufemp da veza henvel hon daou ouz eur c'hoz torch gleb. Deomp da c'hoari eur pennadik, ma keres, Per?

PER. — Ya! greomp eun taol pe zaou da c'hortoz koan. (*Renka a reont an itronezed war an daolenn vriz; azeza a reont unan a-bep tu d'an daol, an eil dirak egile; lakat a reont o lunedou o kemeret o amzer hag e weler Mallt o sellet outo, diwar dreujou he c'hegin, hep lavaret ger*).

NATH. — Pet gwech omp bet hon daou oc'h ober ar c'hoari-man abaoe ugent vloaz m'omp deuet da veva diouz hon danvez?

PER. — Meur a gant gwech, da nebeuta!

NATH. — Eur c'herse eo e teufemp da gosaat, evel ma reomp; dizale e stoko va fri ouz va helgez. D'in me eo ar re zu ha d'in me eo ar c'hoari genta.

PER. — Nann! nann! nann! Te, — me n'em eus ket hen ankounac'haet, — eo ez poa ar re zu, en derc'hent dec'h, hag a c'hoarias da genta (*Mallt a deu harp enno hep beza gwelet ganto*).

NATH. — A! nann, avat, Per; te eo a c'hoarias da genta ha d'in me eo hen ober en abardaez-man.

PER. — Fazià a res, hep mar ebet.

NATH. — N'eo ket me eo a fazi; te eo her gra! Meur a dra a zo hag a nij evelse, diwar da spered, dillo!

PER (*tommet d'ezan*). — Petra, fe ez pefe c'hoant de lavaret eo divouedet va fenn! Mat, n'eo ket

c'hoaz, a drugarez Doue, ha te eo an hini a ankounac'ha an traou, kalz muioc'h egedon-me.

NATH. — Mar deo evelse eo e c'hoarvez, perak 'ta ne ouezes ket eo d'in me da c'hoari da genta, fenz?

PER (*droug ennan*). — Perak e rankes lavaret henvel atao, evel eur ran; en hent-se e edos ivez bremaik gant da Roue Arzur ha da Zan Domingo; n'out nemed eun torpenn...

NATH (*entanet ivez*). — ha te? Te a zo evel eur voutailhad gwin Champagn a rank tarza d'an distera tra a stoker outi. A! ya! Mont a ran ac'han gand ar gounnar.

MALLT (*en he sav, hep ma vijed ouz he gortoz da gomz*) Gortozit! gortozit! kabiten Nath.

NATH (*o sevel buan, eun tamm spontet*). — Va sponta ez peus graet, avat, en taol-man, Mallt!

MALLT. — Penaos 'ta?

NATH. — N'edon ket ouz da c'hedat aze ha kouls-goude pa 'z klevan e kav d'in e klevan mouez da vamm pa oa plac'h yaouank.

MALLT. — Met n'eo ket an dra-ze hepken eo; aze eo dare koan; kabiten Nath it, dre aman, d'ar gegin ha c'houi kabiten Per, troit ho stur warzu ar gwalarn.

(*An daou gabiten a ya er maez ha Mallt d'o heul, en dra ma kouez ar gouel*).

Plougerne, 7 a viz Eost 1928.

Pez, en eun arvest, savet, e kembraeg gant R. G. Berry geraint dyfnallt owen, e testeni eus an unvaniez striz a zo ha troet, dioutan, e brezoneg, gant Y.-V. Perrot ha etre Kembre ha Breiz-Izel.

Eun nozvezriad Reo Gwenn, peur-embannet amañ, er reiz tremen a oa bet savet gand an hevelep skrivagnerien.

Keleier ar Miz

An A. Gouraud, Eskob Gwened

An A. Gouraud, giniidk eus a Vieillevigne, e. eskopti an Naoned, hag a oa eskob e Gwened abaoe ar 25 a viz C'houévrer 1906, a zo marvet en eskopti d'an 2 a viz Here diweza.

E gorf a zo bet sebeliet en e iliz-veur hag e galon a zo bet laketa e Keranna tost d'ar bez meur en deus laketa sevel eno d'an 250.000 breizad maro evid ar Vro.

Eur breizad e oa e-unan an A. Gouraud, daoust ma ne ouie ket a vrezonég ha ne ankounac'haïmp biken an digemer laouen a reas d'ar Bleun-Brug, e Santez Anna Wened, er bloaz 1926.

Doùe r' e bardono.

An « Nouvelliste de Bretagne »


Ar gristenien ne harpont ket o c'hazetennou kristen ha setu perak ez eus e Frans eiz gwech muioc'h a gazetennou fall eged a gazetennou mat; ar Vretoned ne harpont ket o c'hazetennou brezonek ha setu perak o gweler o ver-vel an eil goude eben!

Ha koulskoude, evel a lavar Eskibien Breiz, en o lizer da harpa an « *Nouveliste* », a zo gwir: Red eo kaout, e Breiz, eur gazetenn gatolik hag a vodo en dro d'ez e ar gatoliked, evel en dro d'o banniel, hag o lakaio da anaout skleroc'h ha da zifenn gwelloc'h o gwirioù a gatoliked.

Dre lenn kazetennou dizoue eo e teu an dud da veza dizoue; dre lenn kazetennou katolik eo e teuint da veza katolik ha dre lenn kazetennou brezonek eo e teuint da veza Bretoned.

N'eus e Frans nemet traou kristen dismantret, a gleiz hag a zehou, dre ma ne lean an dud nemet kazetennou digristen.

N'eus e Breiz nemet traou breizat dismantret, a gleiz hag a zehou, ken nebeud, dre ma ne lenn an dud nemet kazetennou divrezonég.



An A. Gouraud, Eskob Gwened

En deiz ma welo ar gatoliked e tleont harpa ar c'hazetennou kristen, ha nann ar re zigristen, evel ma reont breman; e vezo nevezenti e Frans, en deiz ma welo ar Vretoned e tleont harpa ar c'hazetennou brezonek, ha nann ar re zivrezonek, evel ma reont breman, e vezo nevezenti ivez e Breiz... met, siouaz...

Ar Vretoned a zo kousket...

Ped eus ar re am lenno, a glasko, er goanv-man, eul lenner nevez da *Feiz ha Breiz*?

Ar Vretoned a zo kousket... hag endra m'int kousket, e tismantrel d'ezo o bro, tamm ha tamm ha dizale ne jomd netra ebet ken anezi en e zav nemet an Aotrou Doue a deufe, war bedeni hor Zent koz, da zellout a druez ouzomp.

Tadou ha Mammou

Kerent kristen, d'ho pugale a zo o vont da zoudarded, er miz-man, lakit kas, raktal, *Feiz ha Breiz*, en eur skriva, evit-se, d'an A. *Georgelin, Administrateur, 4, Rue du Château, Brest, C/C 44.40 Rennes*; c'houez vat ar Vro a glevint gantan hag ouz e lenn, bep miz, ne ankouna: c'hañt ket hent ar gêr nag hent an iliz.

Ar muia tud dizek

Ar yro, en Europ, ma 'z eus enni ar muia tud dizek eo ar Frans; 44 dre 100 eus soudarded yaouank an Auvergn ne ouezont na lenn, na skriva.

Ar Morian hag an Hini Goz

Eus eul lizer a skriv d'in an Tad Quinquis a zo du-hont, e Verulam, e bro Natal, e traon an Afrik, e tennan ar pen-nad plijadurus-man :

Brasa plijadur ar gwir Vreizad eo lenn *Feiz ha Breiz*. Bep miz e teu betek ennoui ha ne c'hellan ket morse mont da gousket hep beza e lennet, eus ar bajenni genta betek an diweza... Va eil kure, a zo eur misioner dispar, ha teodet mat; lesanvet eo an Tad Polyglotte. P'en em gav ganen *Feiz ha Breiz* e vez mall gantan hen diframma diganen. Ganet eo bet e Plouian, e kichen Montroulez; e

ano eo an Tad Alan Tanguy ha lavaret a ra d'in ober d'it e c'houre hemennou.

Me garfe da welet o font da brezeg, dre amañ; ar Vorianed, evelato o defe bec'h ouz da entent.

Unan hepken am eus kavet, en o zonez, hag a ouie kana *an Hini Goz* ha dansal ar gavotenn; p'edo yaouank ez aes da vortolod war eul lestr marc'hadour hag eun dervez al lestr a zigouezas en Oriant. Petra reas ar Morian?

Eur martolod eus kostez Lokournan a oa o vont da frikota da Lamriouare hag e c'hellas mont gantan; ar friko a badas eiz dez hag ar Morian a zeskas kana *an Hini Goz* ha dansal e giz hor bro: abaoe ez eus 60 vloaz.

Gouel Strollad « Breiz »

Renerien ar gazetenn « *Breiz* » o deus savet, e Lann-dreger, d'an 20 a viz gwengolo diweza, eur gouel evit harpa o c'hazetenn nevez, ar gazetenn *n'eus nemeti hag a vefe moulet penn-da-benn, e brezoneg*, hag a venn beza mouget, en he c'havel, gant ar berniou paperennou gant a ziskarg bemdez an treniou hag an autoiou, e holl barvezioù Breiz-Izel.

An A. Trehiou, vikel vras, a oa e penn ar gouel.

An iliz-veur d'an oferenn-bred a oa kel leun ha da bardon bras sant Erwan ha d'ar pred warlerc'h e oa eur c'hant bennak a dud ouz taol. An Doktor Gueut, rener strollad ar gouel, eun Aotrou, nevez desket gantan ar brezoneg, a zavas da fin lein da drugarekaat kement hini en doa roet skor en deiz-se d'ar brezoneg:

Red e oa d'an A. Lec'hvien bezan goeloard evit klask eur paotr eus Sant Brieg, kollet e Bro Dreger, da gaozeal, ouz tud bro sant Erwan, en o yez koz.

Martez eus deus bet c'hoant da ziskouez d'eoc'h penaos, gant pell amzer, em eus desket eun tamm brezoneg fall... a ray d'eoc'h c'hoant da c'hoarzin.

C'hoarzit a galon vat; me a c'hoarzo ganeoc'h.

Breman 'ta 'rin an dever eus va c'harg hag e trugarekañ an A. Vikel vras c'halvin « Eskob ar Bleun-Brug » da c'hortoz ar blijadur d'her saludi Eskob e Breiz-Izel.

En deiz-se, e vezimp holl evurus, nemed an Aotrou Vikel vras; met red e vo d'ezan ober neuze eveldon ha ke-

merout, a galon vat, ar pezh n'halla ket diarbenn. Goulenn a-raimp digantan e vennoz kenta evid ar Bleun-Brug.

Saludi rran ivez an holl veletien hag an holl gamaraded unanet aman hizio evit harpa o relijion ha mstrout karan-
tez o bro.

D'ezo holl e livirin :

Bezef sonj eus ho tud koz hag eus an amzer dremenet a zo bet ker bras; mirit start, en ho touez, yez ho tadou, o gwiskamanchou kaer hag holl gustumanchou o bro...

Goude merenn e voe c'hoariet daou bez nevez, e bre-zoneg: *Helena* ha *Santez Koupata*.

Relegou sant Tugdual ha sant Erwan o do tridet, en deiz-se, e goueled o beziou, e iliz-veur Lanndreger.

Y.-V. PERROT,

Faziou ar "Feiz ha Breiz" diweza

P. 363, 12^{es} linean, e lec'h « e skol veur a Arzou kaer » lennit, na petra 'ta « e skol-veur an Arzou kaer. »

P. 314, tost da draon ar bajenn, e lec'h « *Salud Bro Gembre Vreiz* », lennit « *Salud Bro Gembre da Vreiz* ».

P. 368, ez eus bet tremenet eul linenn penn-da-benn hag e lec'h « he mamm, eun dimezell de Tinteniac a oa o stourm e Emgann an-Tregont » e ranker lenn « he mamm, eun dimezell de Tinteniac, a zo eus a lignez uhel an Aotrou de Tinteniac-ze a oa o stourm e Emgann an Tregont ».

P. 371 ha 373, ez eus bet ankounac'haet unanik bennak eus ar re a oa oc'h heul Duk ha Dukez Breiz; evelse, F^{es} Roudaut, Kergenvel, Plougerne, a oa ivez war loen; Yc. Boucher, J. M. Lagadec, M. Ivin, eus a Gernoues, M. Toullec eus a Lesneven, F. Le Vern, ha Bernard eus a Dregarantec a oa ivez etouez ar skouederien; Andrée Breton, Guelneur, Julienne Abivin, Douarnevez; Denise Guillarmou, Yvonne Gourvennec hag Angèle Cabon eus a Blougerne a oa ivez, oc'h heul Yann V, en o dilhad seiz ruz.

Skeudenn ar bajenn 378 a zo bet tenaet gand an A. Fichoux eus a Lesneven.



O deus bet evit Divinadennou Gouere hag Eost

200 poent

A. ar B., Sant-Nic.

190 poent

Louis Daquelou, Plomeur.

F. M., Lanhouarne.

180 poent

Potred Sant-Magloar, Malhalon.

160 poent

P. Ségalen, Gouesnou.

Tanguy Creignou, Cléder.

Jean Pinvidic, Gwikar.

J.-F. Diverrès, au Tréhou.

Francine Pouliquen, Sant-Thégonnec.

Fanch ar Furcher, Orphelinat d'Elancourt, par Trappes (Seine-et-Oise).

140 poent

Mari Cabon, Gwiseny.

F.-L. ar Bihan, Cléder.

Angèle Nédélec, Cléder.

Mari Baour, Gwikar.

Unan, Plouzane.

N. B. — E Feiz-ha-Breiz miz Kerzu e vezo embanet anioi ar re o devez gounezet prizioù divinadennou ar bloaz-man. O frizioù a vezo kaset d'ezo evit o c'halanna.

Respontchou divinadennou Gouere hag Eost

GOUERE


1. L
T O K
L O G O D
K O Z
D

2. Ma komzit gant an Aviel,
 Me responto didroidel
 Penaoz Jezuz a gentelias
 An doktored d'e zaouzek vloaz.
 Mar d'eo kentoc'h evit c'hoarzin
 E rit ar goulenn-ze ouzin
 E livirin berr ha dichek
 D'e zaouzek yeas en e drizek.

3. — An tad-koz, an tad, ar mab. — An tad-koz hag
 an tad: ar pezh a ra daou dad. — Ar mab hag ar
 mab-bihan: ar pezh a ra daou vab.

4. — Ar marc'h-houarn.

5.



EOST

1. — Ar c'houlouenn. — 2. — An daoulagad. —
 3. — 19 gad, 1 glujar, 80 morzevelleg.

4. — Mor Landerne a vez leun diou wech bemdez
 hag al loar ne vez leun nemet eur wech ar miz.

5. — An eil hag ar bedervet a dreuz da genta. Ar
 bedervet a zistro gant ar vag. Ar genta a dreuz he-
 unan neuze. An eil a zistro da gerc'het ar bedervet.
 He lezel a ra e kichen ar genta. Dizrei a ra gant ar
 vag. An drede a dreuz he-unan evel ar genta. Ar be-
 dervet a ya neuze da gerc'het an eil.

Feiz ha Breiz



DEIZ AN AOTROU

Ha Doue a lavaras da Adam : Debri a c'helli
 cus holl frouez ar baradoz. Met arabad e vo d'it
 debri frouez gwezenn gouiziegez an droug hag ar
 mad.

En deiz ma 'z po debret anezo.

Ar maro az lazo (1)

Ha Doue a gomzas ouz Moysez hag a lavaras :
 Komz da yugale Israël ha lavar dezo :

Taolit evez en aoun na virfec'h ket deiz an ehan
 rak hennez eo ar merk etrezoc'h ha me, eus an
 eil rumm d'egile, ma ouezoc'h, ez oun an Aotrou,
 an hini ho santela.

Mirit deiz an ehan, rak santel eo, an hini hen
 torro,

Ar maro hel lazo (2)

(1) Gen. II. 16. 17.

(2) Ex. XXXI. 13. 14.

An daou c'hourc'hemenn-ze a zo graet gand an hevelep gerioù :

Ar maro az lazo.

Ar maro hel lazo.

Ha Doue a gendalc'h da boueza : Labourat a reoc'h, c'houec'h dervez. Ar seizvet a zo da ziskuiza ha da veuli Doue.

An hini a labouro, en deiz-ze,

A varvo

Ar varnedigez kenta a zo bet douget a eneb Adam hag e vugale ha n'eo ket hepken hor gourdrouz eo a zo bet graet, met ivez hor c'hastiza. Hag an holl a zo bet kastizet ha kastizet spontus hag ar c'hastiz a bouez poumer war hon diouskoaz.

Hogen an hevelep barnedigez a zo bet douget gant an hevelep gerioù, eur wech all hag an dud n'o deus ket taolet evez e kouez an diou varnedigez-ze eus an hevelep genou.

An den en deus toueziet ar Zul gand an deizioù all evel m'en doa Adam toueziet frouez gwezenn ar c'holl gant frouez ar gwez all.

Hag ar c'hastiz kenta kouezet war an den n'en deus ket e laket da zigeri e zaoulagad pa gleve an eil gourdrouz...

Doue en deus gourdrouzet a-benn diou wech.

An den, en e follentez, en deus kemeret lezenn ar zul evid eul lezenn goz, prenvedet ha didalvez, douget gand unan ha n'en doa nerz ebet ken evit kastiza ar re a zientje outi...

Gwaz a-ze d'ar re a gred lakat o dourn war ar pez en deus miret an Aotrou evitan e-unan.

... Balthazar n'edo ket, m'oarvat, oc'h ober e gammejou kenta, war hent an ifern, met eun nozvez ec'h evas gand al listri sakr hag en nozvez-se :

Apparuerunt digiti.

Bizied a voe gwelet.

Tri ger a voe skrivet war ar voger.

Mane, thecel, phares.

Ema graet ganez.

Al listri aour hag arc'hant-ze a oa bet laeret e templ Jerusalem : traou oant hag a oa miret gand an Aotrou evitan e-unan.

N'eus lezenn ebet hag a vefe graet evid an holl.

Gounid a ri da vara gand ar c'houezenn diouz da dal. Lezenn galet hag a zo teneraet gant lezenn ar zul.

Ar re a grede en em ziskouez d'ar roue Assuerus, hep beza galvet gantan, a veze barnet d'ar maro.

Met Assucrus a astenn e walenn-aour da Esther strafuilhet hag a lavar d'ezi :

« Al lezenn-ze a zo graet evid an holl, met n'eo ket graet evidout-te. »

Lezenn ar c'houezenn a zo graet evid an deizioù pemdez, met n'eo ket graet evid ar zul.



Er baradoz zoken, diwezatoc'h, e vezo traou hag a viro Doue evitan e-unan traou ha Doue n'o ranno ket gant ar zent, na gant an elez, traou hag a vezo e draou, d'ezan E-unan.

Seul-vui eo lemm ha sklêr lagad an den ha seul-vui e oar lakât kemm etre ar pez a zo aotreet hag ar pez a zo difennet gand al lezenn.

Seul-vui eo fall ha brein ha seul-vui eo douget da lakât, en eun douezenn, ar pezh a zo aotreet hag ar pezh a zo difennet. Seul-vui eo dall an den ha seul nebeutoc'h e chom anat ar Zul dirazan.

Merk dourin Doue war eun dra ne c'hell beza gwelet nemet gand eul lagad hag a zo sklêr.



Ar zul eo Alleluia ar bed-holl. En dervez-ze, eo e c'heller klevet, e kreiz ar zioulder, ar bed-holl o tenna e halan, evit kana meuleudi an Aotrou Doue.

Met e pelec'h eo red mont evit kaout ar sioulder-ze e klevet enni eun hevelep tra?

Red eo mont pelloc'h eged al leon a dreuz ar gouzeri, pelloc'h eged an êr a dreuz an oablou, pelloc'h eged ar sonerez, hag ar sklerijenn a dreuz boaeou an nenv; red eo treuzi an enezennou pella hag ar maeziou ha n'eus bet den enno biskoaz.

Pelloc'h oun aet eged al leon, pelloc'h eged an êr a dreuz an oablou; ar zonerez hag ar sklerijenn ha ne ra nemed pemzek mil leo ha tri ugent bep sekondenn a zo chomet pell, war va lerc'h, ha ne glevan ket c'hoaz ar bed holl o tenna e halan.

Kerz pelloc'h, pelloc'h... Hag ez an pelloc'h, pelloc'h, pelloc'h, ha n'oun ket gouest c'hoaz da glevet ar bed-holl o tenna e halan.

Evit klevet ar bed-holl o tenna e halan eo red mont pell, pell, ken na c'helli klevet trouz ebet ken. Aet oun keit ma ne glevan trouz ebet ken ha koulskoude ne glevan ket c'hoaz ar bed-holl o tenna e halan. Kerz pelloc'h c'hoaz; evit klevet ar bed-holl o tenna e halan eo red mont keit ma ne zalc'her sonj ebet ken eus hini eus trouzou ar bed-man.

Aet oun keit... keit ma ne zalc'han sonj ebet ken eus hini eus trouzou ar bed-man ha koulskoude ne glevan ket c'hoaz ar bed-holl o tenna e halan.

Kerz pelloc'h... pelloc'h c'hoaz. Evit klevet ar bed o tenna e halan eo red mont keit... mont keit... ma ne glevi ket mui trouz da dreid.

Aet oun keit, ma ne glevan ket mui trouz va zreid, ha daoust da ze ne glevan ket c'hoaz ar bed-holl o tenna e halan.

Kerz pelloc'h c'hoaz neuze... Kerz beteg ma ne glevi trouz ebet gant da eskell o nijal...

Aet oun keit ma ne glevan trouz ebet ken gant va eskell o nijal ha daoust da-ze ne glevan ket c'hoaz ar bed-holl o tenna e halan.

Kerz pelloc'h... pelloc'h... red eo ez pefe ankounac'haet a-grenn petra eo an trouz.

Mat, ankounac'haet a-grenn em eus petra eo an trouz ha daoust da-ze ne glevan ket ar bed-holl c'hoaz o tenna e halan.

Selaou mat...!

E kreiz sioulder an noz ankounac'haüs... an Aotrou Doue a zo aze o lakat da galon da lammat...

Breman e klevan ar bed-holl o tenna e halan

Alleluia! Alleluia!

ERNEST HELLO.

Kaera spered den ha kristena skrivagner a zo bet e Breiz en XIX^{me} kantved, Ernest Hello a zo bet ganet en Oriant 100 vloaz a zo bet, er miz tremen; mervel a eure e bro e gavell d'ar 14 a viz gouere 1885. Dleet e vije kaout, e brezoneg, eun dibab eus e oberou.

Mell ha "Foot-ball"

Daoust ma 'z eo ar zul da Zoue, evel m'hel lavar ker splann, uheloc'h, Ernest Hello, ha daoust peger striz eo Doue e kenver ar re a lamm e zervez digantan, e kaver, zoken en hor Breiz, — gwechall bro ar zent, — tud, reuzeudik a-walc'h, eyit dizouea ar zul hag ober eus an dervez-se; eun dervez henvel ouz ar re all hag e c'hell peb hini ober ar pez a gar gantan.

Holl zuliou an hanv kouls lavaret a zo perc'hennet gant goueliou distrustell pe gant redadegou disasun: redadegou kezeg pe redadegou tud, traou diouz doare ar re a gar gwelet ar gwad o redet, al loened, e kreiz o nerz, o koueza, a-strons o c'horf, war an hent, maro-mik, hag an dud, lorc'h enno, oc'h en em laza, evit gounit eun dournadig arc'hant ha kaout o ano war ar c'hazetennou; c'hoariou gouez, an darn vrasa anezo, hag oun souezet o gouzanvjed, evel ma raer, en hor bro gristen: nag a grisder a dle beza c'hoaz e kalonou tud a zo pa redont, gant plijadur, evel ma reont, da welet hevelep arvestou.

**

Betek-hen, suliou ar goanv, da vihanan, a veze lezet, braoik c'hoaz, gand o ferc'hen, met, e meur a barrez, zoken, war ar maez, e saver breman, etre paotred yaouank, c'hoariou « foot-ball » hag ar c'hoariou-ze, *nemet reizet mat dreist e vefent*, gwella ma 'z int eo da laerez e zervez digand an Aotrou Doue. Evel m'hel lavar pelloc'h unan eus hor c'henlabouerien, ar « foot-ball » eo mab bihan ar vell, — « la soule », e galleg, — eur c'hoari hag a oa brudet bras, e Breiz a-bez, gwechall goz.

Ar vell a oa eur volod ler, bras kenan, leun a vrenn pe a foenn hag a veze stlapet etouez an dud,

gand unan eus pennadureziou ar barrez; an hini ma veze gantan da guz-heol eo a c'houneze priz ar c'hoariadeg. Adalek an XIII^{vet} kantved ez eus bet melle-rien, e Breiz; hon tud koz, avat, ma raent ar c'hoariou-ze, n'her graent nemed eur wech m'o deveze sante-laet ervat ar zul, dre an oferenn-bred hag ar gousperou ha da gloc'h an noz, pep hini a en em jache da vont d'ar gêr.

Eur c'hoari blijadurus a-walc'h e oa ar vell, met eur c'hoari danjerus e oa ivez, n'eo ket hepken evid ar vellerien, rannet e diou gostezenn, met zoken evid ar re a veze o sellet outo ha setu perak eo bet red he difenn hag eo bet dilezet a-nebendou. Setu aman, war-ze, petra lavar Cambry, eun dispac'her hag eun digristen a zen, en e levr « *Voyage dans le Finistère où état de ce département en 1794 et 1795* » :

La soule était jadis un jeu commun. On le pratique encore dans quelques contrées de la Bretagne; le seigneur ou notable d'un village jetait au milieu de la foule un ballon plein de son que les hommes de différents cantons essayaient de s'arracher. Celui qui parvenait à le cacher, à le dérober aux poursuites des assaillants, jusqu'au moment du coucher du soleil, gagnait le prix fourni par la générosité de celui qui proposait, qui donnait au public cette fête dangereuse.

On a vu quelquefois des hommes suivre la soule dans la mer et se noyer en la cherchant. J'ai vu dans mon enfance un homme se casser la jambe en sautant par un soupirail, dans une cave, pour la saisir: ces jeux entretenaient les forces, le courage: mais, je le répète, ils étaient dangereux. (*Voyage dans le Finistère*, p. 110).

La soule est proscrite depuis que plus de quarante hommes, en la poursuivant, se noyèrent dans l'étang de Pont-l'Abbé. (*Voyage* p. 346).

An A. de la Borderie, en e Histoire de Bretagne, tome III, p. 126, a skriv:

La soule était un ballon de cuir, quelquefois une boule de bois, lancée par le seigneur ou son représentant et que les hommes de la seigneurie formés en deux partis — les hommes mariés d'un côté, les célibataires de l'autre — se disputaient avec acharnement et souvent avec de grandes violences.

Peurzilezet e oa ar vell gant Breiziz tost da gant vloaz a oa p'hon eus he gwelet, graet eun dro hir

ganti, e Bro-Zaoz hag en Amerik, o tizrei davedomp dindan an ano saoz a « *foot-ball* ».

Ma oa eur c'hoari danjerus, gwechall, eo ken danjerus all, breman, ma n'eo ket danjerusoc'h. En Amerik, er bloaz 1925, 20 c'hoarier a en em lazaz oc'h ober ar c'hoari-ze; er bloavezh 1926 e voe 9 lazet, 200 glazet hag 50 gwall vac'hagnet p'eo gwir ez eus bet ranket trouc'ha d'ezo pe eur vrec'h pe eur c'har. Daou eus ar re a oa o sellet c'hoari hepken o voe lazet, e Suzon, d'an 10 a viz du 1926 ha nag a bed dousenn all a vije kavet c'hoaz ma karfed koll amzer da zellet piz ouz ar c'ha-zetennou.

Ma ne vefe nemet danjerus (1) ha ma rafe eur vad bennak e vefe gellet he gouzany, met siouaz, ar vad a ra n'eo na skiêr nag anat.

An ofiser Hébert, en e levr « *Le Sport contre l'éducation physique* » a ziskouez d'eomp zoken e ra ar c'hoariou-ze hag ec'h en em skuizer, re en holl enno, muioc'h a zroug eged a vad d'ar c'horf, p'eo gwir, emezan, war 100 den yaouank galvet da welet ha mat e oant da vont da zoudarded, — breman pa oar ken troet ha ma 'z oar ouz ar « *sports* », — ez eus 53, ya, *tri hag hanter kant* ha n'int ket gouest, d'o 20 vloaz, da vont dindan an armou; 53 war 100 hag a zo « *inaptes au service armé* »

Antronoz eur c'hoariadeg evelse, ar re a vez bet enni a vez torret o c'horf outo gand ar skuizder; pe seurt labourat a raint neuze pa 'z aint d'o dervez?

Lavaret a raint eo red d'ezo c'hoari, ma wellay o izili. An neb a zo o labourat, pe war ar c'hoad, pe war an houarn, pe war al ler, pe war ar mezer, pe war ar maez, pe war ar mor, en devez tro a-walc'h, epad c'houec'h dervez ar zizun, da zouplaat ha da wellaat e

(1) Bez ez eus tud diboell, eme G. de Lafrête, « des snobs, des névrosés ou des « piqués », ha ne garont nemet ar c'hoariou danjerus, et lec'h ma vo pennou da faouta ha divesker da derri.

izili, hep m'en defe ezomm d'en em lakât en hanter-noaz, da zul, da redet ar vell, dindan peb amzer, en eur park lêton digor d'ar peder avel.

Nag a bed paotr yaouank hag a dap klenvejou, en doare-ze, diwar domm ha yen hag a gavo divezatoc'h poaniou hag o do chachet war o c'hein, oc'h en em skuiza, re en holl, gant o c'hoariou, o redet en tu all d'o nerz, warlec'h ar vell p'edo daoulagad ar zellerien o para warno hag ouz o lakat da vont anezo o-unan ha da ober traou dreist o galloud?

Mat eo c'hoari, goude ma vez bet labourer hag evit gellout labourat gwelloc'h goudeze.

Red eo plijadur a-wechou. Mat eo en em lettri er c'hoariou a rae en hor raok hon tadou; mat eo gwellet piou a lammo pella, a redo buana ar c'hilhog, a daolo ar pouez uhela, a valo kerc'h munuta; a zavo gwella ar gifien, a denno, braoa, an tousog eus ar voger, a denno trumma d'ar gwalenn, a c'houreno, gwenva, met ober neuze c'hoariou hag e lec'h ober gaou a ra vad d'ar yec'hed.

O klask ober vad d'ho korf emaooc'h, war ho meno, haleit eta neuze, war ho troad; n'eus c'hoari ebet hag a rafe kement a vad d'ar c'horf hag ar bale.

Gant c'hoariou « *foot-ball* », bep sul, lakomp zoken e rafec'h eur vad bennak d'ho korf, met pe seurt vad a reoc'h d'hoc'h ene ?

N'eo ket hepken eur c'horf ha n'eo ket hepken eun ene eo ho peus da zavel, met eun den en e bez. Arabad eo eta d'eoc'h pleustri gand an hanter hepken anezan hag ankounac'haat an hanter all. Red eo o lakaat da wellaat o daou evel daou loen starnet, kenver ha kenver, ouz an hevelep kar.

Paotred yaouank a zo ha n'int atapiet ken nemet gand ar « *Sports* ».

Gouzout a raint petra deu da veza ar gall Carpentier hag ar morian Johnston, piou en deus kollet er c'hro-

gad-man-krogad ha piou en deus gounezet du-hont; lavaret e vefe graet, ouz o c'hlevet, n'eus mui nemed an nerz o ren ar bed...

Sperejou goullou, prest da vervel gand an naon...

En hanv e tastumer boued-korf a-benn ar goanv, met, er goanv, iver, eo dastum boued-spered a-benn an hanv; ma n'her grit ket o lenn, o skriva, o kana, hag oc'h heulia eur c'helc'h-studi; pe goulz her greoc'h?

Ho sperejou a varvo gand an naon.

Kaeroc'h a zo. N'eo ket hepken eun den eo ho peus da zével, met ivez eur c'hristen hag, evid eleiz a baotred yaouank, ar zul n'eo mui ar zul, ar zul n'eo mui dervez an Aotrou Doue, ar zul eo dervez ar « football ».

Eun oferenn a vo klevet, marteze; da vihanan, darn her graio, met arabad d'ar beleg hen lavaro beza eun dever goulou; ar berra ma vo eo ar gwella; ar spered n'eman tamm ebet en iliz; aoun a zo da veza re ziwezat er c'hoariadeg a dle beza graet, alies, 20 leo pe 30 leo diouz ar gêr. Ene Gargantua, marlonk bras Rabelais, a oa en e gegin; ene ar meller a zo en e c'hoari. Lavaret a c'heller, hep fazia re, an hanter eus ar zul a dremeno war dachenn ar c'hoari; an hanter all oc'h en em gempenn da vont di hag an hanter eus an noz warlerc'h en ostaleri, oc'h eva glaourenn, falloc'h, alies, eged an dour eus a bod ar gwel-lienn.

Ha petra eo eur zulvez tremenet evelse?

Eun dervez miret gant Doue, evitan e-unan, ha laeret digantan.

Paotred yaouank, gwelloc'h eged an dra-ze ho peus da ober pa 'z eus gwad breizat yac'h ha gwad kristen birvidik, en ho kwazied hag eo dibad, etouez c'hoariou Breiz, ar re a roio d'eoc'h ar blijadur uhela hag ho lakaio da zével ho spered warzu ar wirionez hag ho kalon warzu Doue.

Y. V. PERROT.

René SKORDIA eus a Skaër

(Mestr bras gourenerien Breiz)

Lavaret ez eus bet ne blij d'ar Breizad nemed an aër vat hag ar mæziou; eno hepken e kav ar yec'hed hag al laouenedigez evel ar pesk en dour. An aër vat da genta evit labourat er parkeier hag er c'hoajou pe war donnou zishual ar mor bras; tiez-labour divent ar c'hêriou, elec'h ma vez berniet ar vicherourien, ne deont ket d'ar Vretoned; o skevent n'int ket evit gouzanv pell amzer huchenn kontammet ar seurt le-c'hiou; o daoulagad zo graet evit gwelout diskoilh bolz kataret ha koumoulnet oabl o bro hag an dud paour divroet a zeu d'ezo buan kaout kerse ha keuzi d'o labour a-wechall. An aër vat ive evid en em zidui ha kemerout o flijadur; d'ar re all ar c'horollou etre peder moger hag ar c'hoariou e goudor an toennou; ar Breizad a blij d'ezan beza er mæz; koroll a ray war an hent bras, pe war al leurenn-foar pe war al leur nevez; c'hoari a ray boulou er vilar da zul, c'hoari a rae gwechall ar « zoul », tad koz ar « football »; gouren a ray war ar prajeier; holl c'hoariou yac'hus d'ar c'horf ha d'an ene, gwelloc'h eged evadegou jistr an tavarniou; holl c'hoariou diriskl e pep doare, dreist-holl ar c'horollou e-giz ar vro; gavotenn ha jabadao, plijadur an daoulagad, festou ar gened, hag ar gourenou, roue ar c'hoariou-broadel, festou an nerz hag an ijin.

Ha setu a-greiz pep kreiz eun darvoud spontus zo degouezet: René Scordia eus a Skaër, mestr bras gourenerien Breiz a zo kouezet, war al « lis », hag e varo en deus kavet eno.

Maro eo Skordia! ar c'homzou-ze ne reer ket kalz a van ouz o c'hlevout e Bro-Leon, abalamour Bro-

Leon he deus kollet eun tammig a zo an envor eus gourenerien an amzer goz, eus ar gaer a-begadou gouren e veze graet war leurenn vlot ar prajeler da vare ar foenn pe da vare an east. Bro-Leon miret ganti hec'h yez met kollet ganti kentoc'h eget gant Bro-Gerne hengouniou hor gouenn evid ar pezh a zell ouz an didui, ouz ar blijadur.

Maro eo Skordia! ar pozou-ze a zo bet lavaret hag aslavaret war eun ton doanius e Bro-Gerne, Bro-Wened ha Bro-Dreger. Da genta du-ze eur vamm vat, gant he bugale, he deus ouelet he mab kollet ganti en eun doare ker kriz hag he deus pedet c'houek evid e ene. Sonj a zeu d'in eus komzou Y.-P. Kalloc'h « Jezuz oer dihez mammeu ». E Skaer ive ar c'helou en deus mantret eur bochad tud, rak ma n'oa ket gant e Skaer, René Skordia a oa o chom e Skaer; kemeret en doa Skaer evid e vro; ne vern e pelec'h ez ae da c'houren e lakae bepred beza eus a Skaer, ha diouz o zu pôted Skaer o doa e gemeret evel unan eus ar barrez, ha ouelet eo bet e Skaer gant meur a hini. — Met brud Skordia a oa aet larkoc'h, René Skordia a oa lorc'h ar vro, ar gwella eus ar botred yaouank a oa en em roet d'ar gourenou. E pep lec'h en deus tremenet, e pep « lis » en deus trec'het eus a Benmarc'h da Hembont hag eus a Gonk-Kerne d'ar C'hastell-nevez; Skaer, Gwiskriff, Bannaleg, Langoen, Spezet, Pleven, Gourin, Faouet, Arzano, Plouay, Meslan, Inguiniel, St-Goneri, Bubri, Priziag, Elliant, Penharz, ar Forest-Fouesnant, Fouesnant, Benodet, Kemperle... ha me oar... E pep lec'h en deus trec'het, gwella gourenerien Breiz o deus en em glasket outan ha netra nemed o anoiou a ray plijadur da vignoned ar gourenou: ar Jaffré teo eus a Verne (4 lur en tuman da 200); ar C'hloareg bihan eus ar Menez e kichen Lokrist — ar gwella bremañ, hep douetans, eus ar re a jom; — ar Skouarneg eus a Blouay; Jegousse eus a Lokrist — barner ar gourenou en Hembont en



RENÉ SKORDIA

dervez m'oa bet pistiget Skordia; — an daou vreur Jubin, eus a Inzinac; an daou vreur Miniou eus a Wiskriff, holl pôted ar Morbihan; an daou vreur Berrou eus a Venodet; an daou vreur Philippe eus a Zant-Oazeg pe Spezet; ar Skaveneg hag ar Salaün

eus a Vannaleg; ar Bourhis, an Dez, Toulgoat, Navellou eus a Skaër, hag an « Avenir », mestr gourenerien Bro-Dreger, hep konta c'hoaz Fish ha Gregorey eus Breiz-Veur. Rak n'oa ket a-walc'h enebi ken etrezo, potred hor bro; ar gounid e ranke beza diji-pot; beza oa c'hoaz du-ze, en tu all d'ar mor, e Kerne-Veur gourenerien dispar, breudeur d'comp-ni; ar memez tadou o deus desket d'ezo ha d'comp-ni c'hoari gand an taol bez-troad ha gand ar c'hliked, hag evel-d'omp miret o deus en o bro ar gourenou. Er bläman, evid ar wech kenta int bet pedet da zont da Vreiz-vihan, da Gemperle d'en em bega gant tud o gouenn evid ar maout. Deut int hor breudeur tra mor ha start eo bet an abadenn: tri rummad a voe graet eus ar gourenerien hervez o fouez; ar botred skanv, ar re hanter-bouez hag ar re bounner. Da genta, tro ar botred skanv, René Skordia a oa dibabet evit difenn an herminig du war an dachenn ha ne voe ket eun netra evid ober e « jeu » ouz potr tramor, ouz Fish, graet en dije butun gantan egiz ma lavare va zad koz gwechall, e korn an tan. Pa voe echu ar pegadou dre bouez, e voe graet eur pegad all evid an holl ne vern peseurt pouez ha Skordia a zavas adarre da vont ouz Gregorey, 156 lur; an trec'h a jomas gantan ha pebez lorc'h en dud gwelout Skordia o c'hen-vroad o sevel uhel banniel ar gounid hag oc'h ober tro ker goz Kemperle war eur c'har-dre-dan dizolo, war e vruched hag endro d'e groaz-lez gourizou am-liou ha marellet an trec'h! gouriz ar botred skanv ha gouriz ar botred neus forz peseurt pouez. Gwechall, pa veze gounezet ar maout e gourenou bras Skaër e veze lorc'h e potred Skaër o welout ar maout o chom er barrez; pebez poan-galon avat, evesaat ouz potred Gwiskriff o vont eus eun davarn d'eben da heul o fabor, gantan ar maout. Amañ oa ar memez tra: ar maout a jomas en tu-mañ d'ar mor: meuleudi da Rene Skordia!

Ha goude Kemperle e tizroas da Skaër war e labour pemdeziek, eun tammig gouel a voe graet gand e vignoned evit kinnig d'ezan o meuleudi hag o gourc'hemennou. Evit gourenou fest pardon Skaër e roas lamm d'ar Berrou bras, n'en doa ket het tro da gregi ennan e Kemperle; gouren a reas c'hoaz e Gwiskriff hag e Hennbont.

Ganet eo bet e Langolen breman ez eus 22 vloaz en eun ti kristen mat. N'oa ket gourener, dre vicher, nemet dre blijadur; savet war ar maez, oa plijet gantan abred klask e merz hag e ijin o c'houren ouz kamaladed eus e oad pa veze oc'h evesaat al loened hag abred ive e tiskouezas beza eur mestr. Kemerout a reas ar vicher a voulanjer hag amañ c'hoaz, boaz da jench penn e-lec'h penn d'an daou-chant-luriou bleud e savas outan divrec'h ha kroaz-lez dibaot. Deut da veza gwaz a-walc'h e voe gwelet o redek lisou Bro-Gerne ha Bro-Wened n'eo ket avat evit gounid arc'hant, nag evit gwaska den, met evid ar blijadur da lakaat e nerz da labourat, da zont a-benn dre ijin eus krenvoc'h egetan ha da welout troet warnan daou-lagad potred ha merc'hed e vro.

Ya! tenna e rae warnan sellou an dud hag o c'hallonou ive, abalamour m'oa eur gourener brao hag eur gourener « fran »; mistr ha gwanv n'oa ket pounner an tamm enezan: 124 lur, soupl ha skanv oa a gorf hag eur blijadur oa e welout, war al lis, a bep eil o c'hoari lamm choug e benn etre daou begad hag oc'h en em reuda ouz potred nao ugent lur hag o rei lamm d'ezo, hep fallagriez, skanv evel eun heizez ha krenv evel eun eujenn.

Gand an dra-ze eun dremm hegarat dous ha tamm otus ebet, mezek zoken eun nebeudig, nemet war al lis; lezet en deus e pep lec'h war e lerc'h priz ha karantez etouez an dud hag e varo en deus skoet meur a galon er vro a-bez. En dervez all e oan bet en

eun ti war ar maez hag eno ive, evel e kalz tiez all, e kavis skeudenn Rene Skordia: « A! eme-ve, c'houi peus prenet skeudenn Rene Skordia? » eun den koz a zizroas ha hen d'in: « Ya, aze emañ er plas a enor skeudenn hor gourener bras, par hep mar ebet, d'ar re wella a zo bet a-raok ar brezel e Skaër hag e Gwis-krieff, par d'ar C'hristen koz, par d'an Toupard, par d'an Nihuellou; e hano a jomo... na pebez maro digonfort!... n'oun ket evit sellout outan hep ma teufe va c'halon bihan, »

Eun den tre oa, eul labourer dispar, gwelet mat gand e vestr boulanjer, an Aotr. Yaouank ha n'en deus nemet meuleudi da ober anezan; fur ha kempenn ne veze ket gwelet o redek an tavarniou nag ar zaloudans. Kristen mat oa ive, aketus d'e zeveriou. Pa gomzer diwar benn eur gourener e sonjer dioustu en eun den krenv ha kriz, digalon ha briz, met ar c'hrenv a zen m'oa Rene Skordia en doa er memez amzer eur galon dener ha d'ar zadorn, derc'hent gourenou Hennbont edo c'hoaz o farda bokedi roz, graet gant paper seiz, evit ficha iliz-parrez Skaër en enor d'al leamez santel Tereza ar Mabig Jezuz.

Gourenou Hennbont a zeu bep bloaz da gloza ar Bloavez ha Skordia a yeas di laouen ha dizoursi. Paka a reas eul lamm fall; koueza a reas war gern e benn ha livenn e gein a voe torret e kichen choug e gil. Chom a reas eur pennad, war al leurenn (eul leurenn goad goloet a vrenn-eskenn), ha goude e voe kaset d'eun ospital eus an Oriant e leac'h ma varvas d'ar merc'her vintin 19 a viz Gwengolo 1928. E varo a voe kristen evel e vuhez ha goude beza resevet e zakramanchou, e gomzou diweza a voe komzou a bardon: « Na damallit va maro da zen emezan; m'emaoun o vont da vervel, warnon va-unan eo koueza. »

E gorf a voe digaset da Langolen ha beziet e bered e barrez e kichen relegou e dud aet da anaoun en e

raog; kalz eus e vignoned a oa deut da bedi evit dis-kuiz ha peoc'h e eme ha pevar gourener eus e vro o doa goulennet evito an enor d'hen dougen d'ar bez.

Gourenou Breiz a oa morgousket abaoe ar brezel, Rene Skordia a oa e penn ar strollad tud yaouank a oa sonj adsevel hor « sport » broadel hag an traou a yae bep bloaz war well. Er bla-mañ dreist-holl ar gourenou o doa kemeret eun hent nevez gant gourenou Kemperle; an diou Vreiz ne raent ken nemed unan hag er bloavez 1929. René Skordia a dlee mont da Gerne-Veur, da Gerne-Tramor, gantan banniel herminiget Breiz-vihan; difennet mat e vije bet hor banniel! Met sevel a ra re all da gerzout war e roudou ha da lakaat, en o renk, en hor bro, gourenou yac'hus hon tadou hag abenn eun nebeud bloaveziou marteze Bro-Leon ivez a zihuno hag a gavo endro eun tamm eus herez Breiz ha Kog Kerne ha Kilhog Leon en em bego er gourenadegou meur.

Eun eus mignoned Rene Skordia.

Da zerc'hel sonj eus Rene Skordia emañ staget da zastun arc'hant evit sevel war e vez e Langolen eur maen-koun en e enor. Kalz o deus roet o frot abenn bremañ hag evit ma vo kaeroc'h ar volz, pe ar groaz, pe an delven, evit ma vo din eus ar gourener prizet, ken hegarat, e vignoned eus Kerne-Tramor o deus ive astennet o dorn en o bro, evit Mestr bras Gourenou Breiz.


Lennerien ar pennad-mañ a garfe marteze kaout en o zi skeudenn o c'henvroad brudet; he c'haout a raint e ti Burel, photographie, Skaër. — Gwerzet e vez 6 real ar pez, evit sikour sevel ar volz-envor.

M'hen defe unan bennaek c'hoant rei e brof, skriva d'an Aotr. Yaouank, Skaër; hen a ouezo da biou kas an arc'hant.

Buhez an Tad Julian Maner

An drouk-spered o klask laza ar misionou

Edo mision Molenez oc'h echui, pa zeuas kelou eus an douar bras da zigas da Gonk ar vugale hag an dud yaouank n'o doa ket bet c'hoaz sakramant ar Gonfirmasion.




PLAS-KER KONK

An drouk-spered en em lakeas ive neuze da glask trabas ouz ar misionou, ne blijent tamm d'ezan. Lakaat a reas tud fallakr da skriva da Rener skolaj ar Jezuisted e Kemper, an Tad Launay, da damall an Tad Maner: « Lore'h enna, abalamour d'ar vad o deus graet, o deus kaset d'o heul yaouankizou an diou enezenn, lezet da zansal ha danset ganto en eur

gana kantikou. » Petra n'hell ket an teodou fall, binimus? E peb amzer e vez kavet eus an dud-se n'o deus ken micher nemet dispenn ar re a ra eur vad bennak.

An aotrou Kupif, eskob Leon, en em gavàs e Lokrist evit rei ar Gonfirmasion. Pep seurt traou a voe lavaret d'ezan enep Mikael an Nobletz. Kure Eusa a damallas ive Janned ar Gall da veza prezeget en enezenn, en desped da lezennoù an Iliz. N'he doa ket prezeget, met



ABATI LOK-MAZE

hepken, hervez an aotre roet d'ezi gand ar vikel vras, respontet d'ar goulennou a rae an daou visioner. An eskob a c'houlennas ma vefe diskouezet d'ezan an taolennou. Mat o c'hasas. Met, evel ne anavezete ket ar brezoneg, e koundaonas ar c'hantikou, hag e tifennas o c'hang dindan boan a eskumunugenn.

Antronoz e tigoueze e porz Liogan hagou bras, enno tud yaouank eur Eusa, a zeue da Gonk evit beza

konfirmet. Eur mil bennak oant. Diskennet war an douar, ec'h en em lakjont e renk, daou-ha-daou, evel e prosesion, en eur gana kantikou an Tad Maner. An dud a zirede d'o gwelet. Met, o klevet kantikou an Tad Maner, e lavarjont d'ezo: « Roit peoc'h, pe e vezot eskumunuget. » Met kana a raent krenvoc'h krenva. « Emichans, a lavarent, ne vezimp ket eskumunuget evid kana kantikou desket d'eomp gand an daou Dad misioner. »

Dre eurvat e tigouezas var al lec'h eur beleg, an aotrou a Bentrez, unan eur chalonied iliz Folgoat, a oa gand an aotrou 'n eskob epad e dro. An aotrou a Bentrez a ouie brezoneg, hag a welas n'e ket kanaouennou fall a veze kanet, hervez m'oa bet lavaret dre c'haou. Goude beza klevet an aotrou a Bentrez, an aotrou Kupif a roas urz da ziskleria er gador oa bet faziet var Vikael an Nobletz hag ar c'hantikou. Benniga a reas ar c'hantikou nevez, ar re o doa o graet hag ar re o c'hane.

An daou visioner, o tont eus an enezennou, a voe digemeret mat gand an aotrou'n eskob. Heman a lavaras d'an Tad Maner: « Goude Pask e teuot adarre d'am gwelet, hag e teskoc'h d'in ar brezoneg; » hag, en eur vourc'hoarzin, e kendalc'has: « Ha gwaz aze evidoc'h ma n'her grit ket; rak adarre e c'hellfen koun-daoni ho kantikou. »

Y. U.

Landudal hag he diou iliz

Ma heuliit hent bras Kemper da Vrieg epad teir leo ha ma kemerit neuze an hent bihan a gavit, en ho tourn dehou, e kavoc'h en tu all d'an draonienn c'hlas a zo eharz ho treid eur vourc'h vihan sioul, gant nao pe zek ti hepken, hag e chomoc'h sebezet o welet ez eus enni diou iliz, harp-en-harp, hag unan anezo kaer a-walc'h evit beza iliz-parrez e pinvidika kêr a zo e Breiz.


Ar vourc'h-se eo Landudal ha kals a gred eo an drev-se an *Drev-Bug-Dual* roet gant ar roue Gralon da abati Landevennec goude maro e vab Rioualen, rak unan eus he ilizou he deus evit patron sant Tuduel pe Dudual, ha war baperiou koz, ar vourc'h a zo anyet *Lan-Tuduel*.

Beteg ar bloaz 1825, Landudal n'oa nemed eun drev eus a barrez vras Brieg; er bloavez-se e voe distaget ha graet parrez anezi; adalek neuze an ofisou, e lec'h o ober e iliz sant Tugdual, a voe graet en iliz all, e kichen, a oa kaeroc'h ha pinvidikoc'h ha konsakret da Itron Varia de Populo, eun ano hag a zo douget gand unan eus ilizou brudeta Rom.

Koulskoude, war a leverer, n'eo ket unan bennak bet o pardona e kêr-benn ar bed kristen eo en deus laket sevel an iliz-se; savet eo bet, war al lec'h, ma tigouezas ennan eur burzud, e amzer brezelioù ar groaz.

An hini a oa bet graet ar burzud en e genver a oa eun aotrou eus a Gistinit, eur c'hastell koz hag a zo e tu an hanter-noz d'ar vourc'h hag e weler c'hoaz e vouldenn en he sav gant douveziou tro-war-dro d'ezi. An Aotrou-ze a ziskenne, da gredi eo, eus a lignez an hini a lezas e chas da laza beoc'h sant Ederñ, ma rankas ar zant-man ober eur burzud evit

lakat ar vuhez da zizrei enni a-nevez. E lec'h beza eun enebour d'ar gristenien vat, evel an Aotrou kozze, an hini e komzomp anezan a oa aet, gand ar groaz ruz war e skoaz, da welet ha diframma a c'helljed bez ar C'hrist eus a dre krabanou ar Vuzulmaned. Unan oa, m'oarvat, eus pemzek mab tiegez Kelen a yeas d'an Douar Santel, da stourm ouz enebourien o feiz hag a voe sebeliet holl, koulz lavaret, dindan leurenn chapel Tadou sant Fransez Kemper.



AN ARC'H ER MOR

An aotrou Kistinit-man eta a gouezas, eun dervez, hen hag e skoueder, etre daouarn an Durked; hel lakat a rejont en eun arc'h, d'her c'has d'o roue a oa o chom en unan pe unan eus kêriou-mor ar Syri. Endra m'edont o vont di, eul lestr kristen o gwelas

hag a redas, war o lerc'h; evit gellout tec'het buanoc'h a-ze e stlapjont o arc'h er mor hag an dioualler, kement a aoun en doa da goll an daou zen a oa ennan, a en em daolas ivez warni. Aotrou Kistinit o welet edont o vont da veza beuzet a reas le da zével eur chapel, d'ar Werc'hez, en e barrez ma c'hellje en em zavetei ac'hano. Raktal an arc'h a stokas ouz an douar. Ne oa trouz ebet en dro d'ezo nemet, dizale, e voe klevet eur c'hilhog o kana ar pez a lakeas laouenedigez vras e kalon ar skoueder: « Va mestr, emezan, me gred eo kilhog Kersaviou el lec'h m'oun ganet eo a zo o kana. »

Dem-goude an daou brizonier a glev tud o vale hag o chom a-zav e kichen an arc'h; klask a reont komz gand an Turk, met o veza ma n'oant ket evid en em glevet e savas freuz etrezo ne voe ket pell. An daou a oa en arc'h a skoas neuze hag a gomzas hag e voe digoret d'ezo da zont er maez.

E Landudal e oant, e kichen maner Kistinit, digaset di, en eun doare burzudus gand ar Werc'hez. An Turk o veza m'en doa glazet daou pe dri den a voe lazet gand o amzeien kounnaret; laket e voe e gorf, en douar, dindan eur groaz a weled c'hoaz breman ez eus hanter kant vloaz, war hent Brieg; *Kroaz-an-Turk* a veze graet anezi ha, dre zismegans evit kelennadurez ar C'horan, den n'her salude.

N'eo ket e kichen e vaner, met e-kreiz ar voure'h eo e falvezas gand Aotrou Kistinit sevel e iliz ha d'ar re a glaske hen diarbenn e lavare: « Pa vo gwelet diou iliz aman, en eur gichen, e vo anetoc'h a-ze eo savet va iliz tra ken nemed evit ma ne vo ket ankounac'haet ar burzud en deus graet ar Werc'hez em c'henver. »

O veza ma en em gargas eus an holl vizou e voe lezet da ober e benn ha setu penaos eo bet savet chapel Itron Varia de Populo, e c'helled lenn gwechall, a-zioc'h he or-dal, ar geriou-man, e latin: Mari,

mamm ar c'hras, hon diouallit diouz an enebour.


An arc'h m'oa deuet Aotrou Kistinît enni d'ar gêr a voe staget a-ispilh ouz moger ar chapel hag a jomas eno meur a gant vloaz; unan eus personed Briec, wardro ar bloaz 1850, dre zallentez, a lakeas he devi.

Daou skrid a verk anoiou diazeourien ar chapel; ar c'henta a lavar:

Jehan seigneur de Quelen et du Vieux Chastel et damoeselle Marie de Kergoët sa compaigne ont fait faire cette chapelle en l'honneur de N. D. de Populo l'an 1539.

Ar chapel genta a goueze, en he foull, e bloaveziou kenta ar XVI^o kantved, ha setu perak eo bet adsavet er bloaz 1539; an Aotrou Yann a varvas er bloaz 1548 a-raok beza gellet peurgas al labour da benn, met eun eil skrid a verk e voe peure'hraef gand e vab, an Aotrou Fransez hag e verc'h kaer Anna 'r Gellenec.

E diabarz ar chapel e weler skeudenn Itron Varia de Populo, hini sant Erwan, en e zilhad barner hag




ILIZ SANT TUGDUAL

hini sant Gurloes, gwisket e manac'h, a ziskouez ar gouli a zo en e c'hlin.

E iliz sant Tugdual, savet ivez er XVI^o kantved, e kaver eur skeudenn vaen, kaer kenan, eus ar zant patron, gwisket en eskob, o rei e vennoz gand e zourn dehou, endra ma talc'h, en e zourn kleiz, eur groaz pabek, evit diskleria ar pez a lavare ar re goz e oa bet aet sant Tugdual da Rom hag e oa bet anvet da bab, met kement a geuz en doa da Vreiz ma tizroas da Landreger war eur marc'h askellok.

En iliz-se ez eus eun toullad sent koz met en o zouez ne 'z eus nemed eur zant breizat: sant Herve gand e vleiz ha Gwiharan, troet n'ouzon ket perak e sant Herbot.

Itron Varia ar Rozera Landudal eo kosa Itron Varia ar Rozera a zo en eskopti Kerne.




CHAPEL SANT YOUENN

War eur puns e weler skoued Kelenned Kistinit unanet gant hini ar re-man Kergoet.

War jichenn ar groaz a zo e kichen iliz sant Tugdual emma sekudenn Hor Zalver laket er bez.

Ar re a gar sent Breiz arabad eo d'ezo treuzi Landudal hep mont da Drevareg da bedi, en e chapel, ar brasa anezo: sant Youenn. Er chapel-ze e virer unan eus bizied meud ar zant, eun enor ha n'en deus iliz all ebët nag e Kerne, nag e Leon, nag e Gwened.

Epad an Dispac'h ar releg prisius-ze a voe kuzet e Kerveal, en tiegez tosta hag ar chapel dilezet a venne koueza en he foull, met nevezet kaer eo bet er bloaz 1857 hag abaoe e vez renket ha kempennet dreist gand an Aotronez de Pompery a zo o chom e maner Trevareg el lec'h ma voe ganet, er bloaz 1734, an Aotrou



MANER TREVAREG


Kerguelen, reder moriou ar C'hreisteiz el lec'h ma 'z eus eun toullad enezenou hag a zoug e ano. Etouez skeudennou ar chapel-ze e kaver eur zant Berthele e groc'hen gantan, war e skoaz, e beg eur vaz; bez

eman ivez sant Erwan e kreiz etre ar paour hag ar pinvidik. Ar paour a zo gwisket gant eul lostenn, toull, war he daoulin, a gouez betek ar boutou ler bras a zo en e dreid. Dougen a ra eur hisac'h war e vrec'h, eun tok pladet war e vruched ha doare druezus en deus kenan.

War a lavare ar re goz tud Landudal n'oant ket brokus evel m'int breman ha gwelloc'h oa ganto lakat o arc'hant e evach eged o rei d'an iliz:

E Landudal n'allumer ket
A c'houlou-koar en ofern-bred,
Ar mel a lipomp
Ar e'hoar a werzomp
En ostaleri yeont ganeomp.

G. P.



Bodonou ha Koatenez

I. — Bodonou

E lez an hent koz a ya eus an Dreinded da Lokournan e kaver, a-zehou, chapel Itron Varia Vodonou, kollet etouez eur boaead lanneier, brous-koajou ha geuniou e weler dispak enno eur chapeledad lennou bihan.

Ar chapel-ze a zo stag ouz Plouzane. Nebeud a dra a ouezer diwar he fenn. Gouzout a raer hepken eo bet savet gant Kastelled Tremazan, aotroned vras hag a oa ginidik o zud koz eus a Bont-ar-C'hastell, duze, e kichenik Pont-an-ospital, harp en hent a ya eus a Lokournan da Gonk.

Er bloaz 1505 ar chapel-ze a veze graet chapel Botgoueznou anezi c'hoaz (da lavaret eo chapel koadig sant Goueznou), met an dud, gand an amzer, o deus mac'hagnet ar ger-ze ha graet Bodonou anezan evel m'o deus graet Lokournan eus a Lok-Ronan.

Patron kenta ar chapel-ze eta eo sant Goueznou, eskob Leon, hag ar skeudenn eskob, koz tri c'hant vloaz, a weler enni c'hoaz a dle beza skeudenn sant Goueznou; met adalek ar bloaz 1642, ar Werc'hez oa patronez kenta ar chapel hag an Tad Kyrill ar Pen-nec hen Jaka war roll chapeliou Leon konsakret d'ar Werc'hez.

Ar chapel a weler breman a zo bet savet er XVI^{vet} kantved ha souezus a-walc'h eo da welet gant he daou dour met pa zeller piz outi e weler ne jom mui, en e zav, nemed an hanter eus ar chapel goz. Houman a oa dilezet epad an Dispac'h hag hanter gouezet en he foull. Pa voe meneg d'he renka, a-nevez, er bloaz

1828, e voe diskaret ar vali greiz penn-da-benn, kaset an aoter vras e tu an hanter-noz, daoust m'eman ar c'hiz d'hel lakat, peurliesha, e tu ar sav-heol ha laket penn-an-nec'h ar chapel da benn-an-traon. Dirak dor an tu dehou ez eus eur maen kizellet hag a dle beza bet oc'h ober kef gwechall.

E diabarz ar chapel e kaver skeudenn gaer Itron Varia Vodonou, aroueziou a anaoudegez vat e-harz



CHAPEL BODONOU.


he zreid. Ar skeudenn vras-ze a zo e maen; livet eo bet; dougen a ra ar Mabig Jezuz eur zae hir gantan ha boul ar bed en e zourn. War ar jichenn eo bet kizellet rod santez Katell hag ano Yvon Guilbignon, aotrou Koatenez, a zo harp e Bodonou.

Izeloc'h, ez eus eur pinsin gant eur skoued bet torret d'an Dispac'h (teir houadez warnan), hag eo skoued ar Garoed, aotroned Keredec, eur maner all harp e Bodonou. War ar pinsin-ze ez eus ivez eur c'ha-

lur yand al lizerennou-man: Y. V. P. War jichenn eur zantez, unan bennak en deus bet ar skiant da lakat: *Sant-Yann!* En tu dehou eman Santez Barba harpet war he zour ha Sant Joseph, eul lilienn en e zourn.

En tu kleiz eman ar zant Goueznou am eus lavaret ano anezan uheloc'h hag eur zant all, gwisket e manac'h hag a zo eur vaz en e zourn, eur groaz en he fenn. War c'horre an aoter ez eus eur Werc'hez all gand ar Mabig Jezuz.

E traon ar chapel ez eus eur pinsin all gant skoued Aotronez ar C'hastell, hag eur c'halur gand al lizerennou-man hag an ano-man: L. MAIX.



MANER KERREDEG

Eur c'hard eur bale diouz ar chapel eman maner koz Kerreded; war an hent a ya d'e gaout ez eus eur groaz, warni skouejou unanet ar Garoed hag ar Ger-vorvaned. Eur porz kloz a zo en dro d'ezan. An ti-brasa a zo bet savet er XVI^{vet} kantved; an nor da vont ebarz, kizellet kaer, a zoug ar skoued a zo war ar groaz; e brenecher a zo bras gant kroaziou mein enno. A-dre kein ez eus eus douribell hag a vraoa e stumm.

II. — KOATENEZ


Eur maner all a zo c'hoaz, e kichen Bodonou, hag en doa muioc'h a dalvoudegez eget hini Kerreded hag eo hini Koatenez, savet e kreiz ar gouezeri; e dud-chentil a gare kals chapel Bodonou.

An nor da vont er maner-ze a zo graet en eur pezh tour uhel hag a bep tu d'ezi ez eus tarzellou da denna war ar re a deufe da glask laerez pe da glask trabas. Eus ar maner koz-ze, ne jom mui netra hag a dalvesfe ar boan nemed an tour hag eun nor godek.

An tour a zo galvet dre ar vro *kastell an diaoul*. Paol Gorniok a oa, war a leverer, o chom eno gwechall ha, bep noz, e veze eun trouz spontus gantan. Eun abar-daez, eur paotr yaouank, eus an ardremez, ha n'en doa aoun rak netra a lakeas en e benn mont da welet Satan d'e vaner. Betek hanter-noz ne welas, na ne glevas netra, met dal ma voe sonet an daouzek taol e iliz Plouzane, ma voe klevet eun trouz estilammus, gant eun dra bennak o koueza dre doull ar chiminal, ha raktal ar paotr dispont a welas dirazan eur pikol pezh kanfart, baro hir, gwisket gand dilhad an hanter anezo rus hag an hanter anezo du, daoulagad lugernus evel daou gef tan, en e benn ha kroaziet gantan e zivrec'h. Goude beza sellet piz ouz an den yaouank, eur pennad, hep lavaret ger, paotr e varo hir a lakeas eun daol e kreiz ar zal, gand eur c'houlouenn warni, a enaouas o kregi hepken, en he mouchedenn, gant pennou e vizied. Kemerout a eure diou gador ha goude beza azezet war unan e kinnigas eben d'an yaouank hag e lavaras d'ezan

— « Mat eo, va faotr; te, da vihanan, n'eo ket eur c'hrener out ha laouen oun ouz da welout. Azez aze eta; eur re gartou am eus hag e c'hoarümp hon daou, da dremen hon amzer, betek ma kano ar c'hilhog.

Ar paotr yaouank a c'hounezas ar c'hoariou kenta. Egile a denne aour hag arc'hant eus e c'hodellou, a grabanadou, hag evelato, daoust pegement e kolle, e kendalc'he da vouse'hoarzin. Dizale, ar breizad dis-pont en doa dirazan eur berniad peziou aour hag arc'hant; biskoaz n'en doa gwelet kement all a binvidigez; ennan e-unan e lavare n'en divije ket a ezomm da labourat ken hiviziken hag e c'hellje mont da veva diouz e zanzez, dal ma vije distro d'ar gêr, met en eun taol e teu da goll ha ne zaleas ket da goll kement pezh en doa gounezet. Dal m'en devoe kollet e bez diweza, an diaoul, — rak hen oa — en eur floura ar peziou en devoa gounezet a lavaraz d'ezan:



KASTELL KOATENEZ

— Paotr paour! dichans ez peus bet! Eur gwall goll eo evidout rak biken ne weli kemend all a beziou.

aour. Peadra ez poa aze da brena brasa tiegez a zo e Plouzane ha da zimezi gand ar plac'h yaouank a gares hag a zo miret outi gand he zud da vont ganez dre ma 'z kavont re baour diouz o fennherez; n'eo ket gwir?

— Siouaz, eme egile, re wir eo.

— Mat, truez am eus ouzit hag eun diaoul mat em eus c'hoant da veza. Ma keres e raimp marc'had an eil ouz egile. D'it te va holl arc'hant ha d'in me nebeud a dra, *ar pezh a zouges ennout* ha netra ken. Satan en devoa c'hoant da gomz eus ene an den yaouank, met ne felle ket d'ezan lavaret ano anezan en aoun d'her spounta.

Ar paotr, diouz e du, n'eo ket eur glapez oa ha klask a eure raktal an taol da virout, war eun dro, e ene hag e arc'hant; eun tamm poan gof en doa, eur pennad a oa, ha gwelet a rae edo ar pezh a oa ennan o klask an nor da vont er maez. Eur prof evelse a oa mat a-walc'h diouz doare Paolig.

— Mat! graet eo ar marc'had, emezan, goude beza pleustret war gement-se.

— Gwella-ze, eme an diaoul, lorc'h ennan. Ar bern aour hag ar bern arc'hant-man a zo d'it hag ar pezh a zo *ennout* a zo d'in. Met, amzer az peus ha gedal a c'hellan dek pe ugent pe drégont vloaz.

— Gedal? Ne dalv ket ar boan? hag evidoun-me a zo o vont da rei d'it dioc'htu ar pezh a c'hortozes. Sell! sell! kas hen ganez ha chans vat d'it gantan.

Hag ar paotr ha diframma e dok du pluennet diwar benn Paolig, ober ennan e ezommou ha kinnig ar prof flaerius-ze da Zatan.

— N'eo ket an dra-ze eo a c'houlennet ouzit, kristen lous, eme an Drouk-Spered e kounnar; bez din ec'h, me az tapo, abred pe ziwezad, hag az lako da rosti. Ha va arc'hant, dalc'h hen ganez! her rei a ran d'it ha lak hen da dalvezout, mar keres!

Hag ez eas ac'hano en eur ober eun toull, er voger, ha n'oar ket bet gouest da stanka abaoe. Ar paotr yaouank a ziskennas da glask eur zac'h da lakat e beziou, met, pa bignas, ne gavas eno, e lec'h ar peziou aour hag arc'hant, nemed eur berniad deliou kras a veze laket da drei, gand an avel, war leur ar gampr.

War a leverer an diaoul en doa ivez eur picher arc'hant da eva dour eus ar feunteun ha stag oa ouz ar feunteun gand eur jadenn arc'hant ivez. Kals eus ar re a dremene dre eno a groge c'hoant enno da gas ganto ar picher arc'hant-se, met, labourat, en aner, a raent holl, rak dal ma wele e veze bet laeret, Satan a rae tro an tiez diwardro da zellout ouz daouarn ar gouskerien ha diouz al *liou ifern* a jome war daouarn ar re o deveze kemeret al lestr ne veze ket pell evit koueza war an hini en deveze e laeret.

Mouget e veze gantan d'her c'hastiza hag e tizroe d'e gastell gand e bicher presius. Eun dervez koulskoude, eur c'houer, speredekoc'h eged ar re all, a c'hoarias eun taol kamm da Baolig. Terri a eure ar jadenn arc'hant hep kregi enni, ouz he gwaska etre daou vaen hag e kasas gantan ar picher, hep kregi ennan, o lakat eur skour spern-gwenn en e skouarn.

Digouezet er ger, e kuzas e denzor e traon eun armel, e tevas e skour spern hag e stlapas e ludu er peder avel. O veza ma ne jomo merk ebet ken d'ezan da c'hellout en em hentcha, Satan ne c'hellas ket kaout e bicher ha setu aze perak e ranker, abaoe, eva dour gand an daou zourn pa 'z aer da feunteun Koatenez.

G. P.

KELEIER AR MIZ



Cl. de Dieuleveuit.

Teatr ar Bleun-Brug, e porz Retred Lesneven

(6 a viz gwengolo 1928)

Priziou ar Bleun-Brug

I. — *Kenstrivadeg ar brezoneg*

1. An dimezell Youenou, Douarnenez.
2. Yann Courtet, Penquesten.
3. Frederic Tallec, Plouhinec.
4. Felix Collet, Meriadec.
5. Albert ar Bail, Mendon.
6. Desire Audic, Keranna.
7. Dominik ar Fay, Riantec.
8. Mathurin ar Mentec, Quistinic.
9. Joseph ar Penuen, St Yann Brevelay.
10. J. M. al Lan, Crac'h.
11. Yann Morvan, Milizac.

II. — *Komz plen.*

Yann Morvan, Milizac.

II. — *Kenstrivadeg an A. Roudot*

1. Fransez Jaffres, ar Folgoat.
2. Per Bourdelles, Serval.

IV. — *Strolladou kanerien.*

1. Priz Plouzeniel.
— Sant Thegonnec.
2. Priz ar Folgoat.
3. Priz Plougerne.

Kanerien a-unanou

Soprano : Theresa Picard, St-Thegonnec.

Alto: Alina Ferec, St-Thegonnec; Franseza Corre, Plouider; Yvon Jugeau, Plougoulm.

V. — *Displegadeg*

1. Mari Herry, ar Folgoat.
2. Stephan Boucher, Plougerne.
3. Josephina Martin, ar Folgoat.
4. M. Yv. Bellec, ar Folgoat.
5. Yann Morvan, Milizac.
6. Joseph Simon, Gwiniventer.
7. Yvon ar Goff, Gwiniventer.

ESKIBIEN BREIZAD DA VREIZIZ

War golo DIHUNAMB miz Kerzu e lennomp :

E eskopti Gwened ez eus ousspenn

500.000 kristen !

Ma teu eun Eskob d'eomp hag a ouezo brezoneg, e e c'hello komz gant.

e holl vugale;

Ma ne oar ket a vrezoneg ne vo ket evit komz ouz,

250.000 anezo

Hag e diabarz DIHUNAMB, p. 173, e lennomp :

Goude beza lennet ar pennadig am boa laket e DIHUNAMB miz du evit lavaret pegen dereat oa rei d'eomp

eun eskob nevez hag a outje brezoneg mat, ez eus tra gaer eus hor mignoned hag o deus skrivet d'in pe a zo deuet d'am gwelet evit va zrugarekat da veza lavaret ar pezh a zont eleiz. Goulenn a raent ouzin petra hon doa sonj da ober evit ma vije anavezet c'hoant katoliked Bro-Wened.

N'hon eus ket a du da zisplega aman ar pezh hon eus graet hag ar pezh hon eus sonj da ober c'hoaz.

Gouzout a raer splann, evid ar wech kenta, m'oarvat, e Gwened, e Paris... c'hoant bras ar Vretoned.

D'hor mignoned da bedi breman santez Anna evit ma kaso d'eomp eun eskob hag a c'hello komz ouz holl e vugale ha nann hepken ouz lod anezo.

Gouzout a ran ez eus Gallaoued ha zoken tud a ger hag a zo nec'het ouz hor gwelet o c'houlenn eun eskob brezonegour. Bezint dinec'h ! Er wech-man c'hoaz atao e vo sur a-walc'h anvet eun eskob hag a ouezo eun tammig galleg bennak!..

N'emaomp ket o klask ma vo graet ken divalo outo evel ma 'zeus bet graet ouzomp-ni betek vremen.

Loeiz HERRIEU.

Kanvou

Erbedi a raer d'ho pedennoù an I. A. Chevillotte, maro e Brest d'an oad a 93 bloaz.

Mamm oa d'an A. Julian Chevillotte, perc'hen maner Ker-groadez ha mamm goz d'an A. O. Chevillotte, hor c'henlabourer mat.

Y.-V. P.

DIVINADENNOU

Setu amañ anioù ar re o deus gounezet prizioù evit ar bloaz 1928 :

1. Loeiz ar Floc'h, Plomeur.
2. Loeiz Diquelou, Plomeur.
3. Paol Ségalen, Gourin, Gouesnou.
4. Pôfred Sant Magloar, Mahalon.
A. ar B., Sant-Nic.
6. Fransoaz Masson, Ponteilet, Lanhouarne.
7. Fanch ar Furcher, Orphelinat d'Elancourt, par
Trappes, Seine-et-Oise.
Angèle Nédélec, Cosquer, Cléder.
F.-L. ar Bihan, Cléder.
Mari Cabon, Guiseny.
11. Herry an Arvor, Meilars.
12. Mari Rosec, Plouzeniel.
13. Francine Pouliquen, Sant-Thegonnec.
J.-F. Diverrès, Quillévenec, Tréhou.
15. Yann Binvidik, Gwikar.
16. Mari Baour, Gwikar.
Tanguy Creignou, ar Vourn, Cléder.
Skol Gristen ar Merc'hed, Plouzeniel.
Unan, eus Plouzane.
Visant Prigent, skolach Kastel-Paol.
Yann Perrot, Gardalaz, Rosko.
Yann Cadiou, skolach Kastel-Paol.
23. Mari Laurent, Gwipavaz.
24. J.-M. Salaün, Leuzeuregan, Tréhou.
25. Per Dantec, Beleac'h, Plouzeniel.

Ar c'hounideien a vo kaset o frizioù d'ezo e kerz miz kerzu.

Trugarez d'ar re holl o deus labouret er bloaz-man war an divinadennoù ha kenavo ar bloaz a zeu.

TAOLENN 1928

KENTELIOU

PAJENN

134 vloaz goude, <i>gant Y.-V. Perrot</i>	2
Eus an eil emgleo d'eben, <i>gant Sebastian Viol</i>	86
Pi XI ha yezou ar bed, <i>gant Y.-V. Perrot</i>	153
Menec'h breizat, <i>gant Y.-V. Perrot</i>	193
An A. Cardinal, <i>gant Y.-V. Perrot</i>	233
Banniel Breiz, <i>gant Y.-V. Perrot</i>	301
Prezegenn oferenn ar Bleun-Brug, <i>gant an A. J'n</i> <i>Eskeb Duparc</i>	353
Deiz an Aotrou, <i>gant Ernest Hello</i>	435
Mell ha « Foot-ball », <i>gant Y.-V. Perrot</i>	440
Rene Skordia, <i>gant eun eus e vignoned</i>	445

ISTOR

Berven, <i>gant G. P.</i>	21
I. V. Mene-Hom, <i>gant G. P.</i>	48
I. V. Gerineg, <i>gant G. P.</i>	133
I. V. Gergoat, <i>gant G. P.</i>	163
Chapel Sant-Tujan, <i>gant G. P.</i>	203
Chapel Sant-Sebastian, <i>gant G. P.</i>	254
Stourmad sant Albin, <i>gant G. P.</i>	262
Yann V e Follgoad, <i>gant G. P.</i>	302
Centenaire de la Borderie.....	311
Abati ar Releg, <i>gant G. P.</i>	326
Iliz I. V. ar Yeuc'h, <i>gant G. P.</i>	403
Landudal hag he diou iliz, <i>gant G. P.</i>	455
Bodonou ha Koatenez, <i>gant G. P.</i>	462

MARVAILHOU

Ar zantig du, <i>gant G. P.</i>	11
Eun tenzor, <i>furnez ar re goz</i>	41
Ar walenn Gollet, <i>gant G. P.</i>	61
Miliner c'houec'h founn ar waremm, <i>gant C. C. C.</i>	97
Yann an dichans, <i>gant J. R.</i>	104
Manac'h tosenn sant Gweltas, <i>gant G. P.</i>	119
Marvailh ar soner, <i>gant G. P.</i>	171
Alanig hag an daou ramps, <i>gant G. P.</i>	214
Teir merc'h ar baraer, <i>gant G. P.</i>	242
Aze emaut, <i>gant Nialmor</i>	281
Prinsezig he bleo aour, <i>gant Nialmor</i>	284

Ar Mengleuzier, <i>gant Nialmor</i>	295
Yann Logonna, <i>gant G. P.</i>	343
Ar sachad re-bounner, <i>gant G. P.</i>	374
Marvailhou an Anaon, <i>gant Yann Kostarreun</i>	393

SONIOU HA GWERZIOU

Mona, <i>gant F. V. an Uhel</i>	32
An Hada, <i>gant J. L'Helgouac'h</i>	42
Ar Mab, <i>gant Gwenedour</i>	96
Netra da ober, <i>gant J. L'Helgouac'h</i>	131
Beg al laouenanig, <i>gant Melegan</i>	180
Kavellou goulo, <i>gant J. L'Helgouac'h</i>	182
Antronoz miz mae, <i>gant J. L'Helgouac'h</i>	195
Gavrig an hanv, <i>gant H. Guillerm</i>	225
Ar c'hi en dienn, <i>gant H. Guillerm</i>	253
Kalon rannet, <i>gant J. L'Helgouac'h</i>	258

PEZIOU-CHOARI

Eun nozveziad reo gwenn, <i>gant R.-G. Berry</i> , 319,.....	385
En o eil bugaleach, <i>gant R.-G. Berry</i> , 335,.....	415

BUHEZIOU TUD SANTEL

Buhez An Tad Maner, <i>gant Y. Uguen</i> , 7, 44, 81, 114, 156, 197, 239, 273, 409,.....	452
---	-----

MEDESINEREZ

Wardro ar re glanv, <i>gant ar Medesin</i>	59
--	----

AL LABOUR-DOUAR


Kenteliou, <i>gant O. Chevillotte</i>	101
---	-----

YEZADUR

Pajennad Breuriez-veur ar brezoneg, <i>gant F. Vallée</i> , 30, 77, 100, 231, 260,.....	298
Kenteliou d'ar barz yaouank, <i>gant J. Kerrien</i> , 56,.....	143

BLEUN-BRUG

Kenstrivadegou 1928.....	79
An displegadeg.....	141
Bleun-Brug Lesneven.....	305
Yann V e Follgoad.....	313
Reolenn XVIII ^{vet} gouel ar Bleun-Brug.....	314
Bleun-Brug 1928, <i>gant Y.-V. Perrot</i>	358



Archives et bibliothèque diocésaine de Quimper et Léon

Document numérisé

Source : <http://catholique-quimper.cef.fr/diocese/bibliotheque-et-archives.html>

2011